

BUEZ

38340

DOM MICHEL NOBLETZ

MISSIONNER

HAG ABOSTOL BRAZ BREIZ-IZEL

SCRIVET

GANT AN AUTROU A. DRÉZEN

BELEG



—
PROPRIÉTÉ
—

BREST

J. B. HAG A. LEFOURNIER

Leorierien, ru Yras, 86.

QUIMPER

E TI J. SALAUN, LEORIER

56, ru Kereon, 56

APPROBATION

Nous, Evêque de Quimper et de Léon,
sur le rapport qui nous a été fait par
M. l'abbé GUILLOU, recteur de Penmarc'h,

Nous autorisons l'impression de la *Vie*
de Dom Michel Le Nobletz, par M. l'abbé
DRÉZEN, prêtre de notre diocèse.

Quimper, le 28 Juillet 1879.

† D. ANSELME,

O. S. B.

Evêque de Quimper et de Léon.

Voici le rapport :

Penmarc'h, 12 Juillet 1879.

Je trouve le travail de M. DRÉZEN, sur
Michel Le Nobletz, riche de pensées et de
style.

La doctrine est pure.

GUILLOU,

Recteur de Penmarc'h.

EUR GER

Divar beann Buez Dom Michel Nobletz

MISSIONNER BREIZ-IZEL

Sonjet am euz scriva buez Dom Michel Nobletz, missionner Breiz-Izel. An den santel-ma eo en deuz renevezet Leon ha Kerne, hag eul loden euz escopti Sant-Briec. Pa zeuas hema var an douar, an devalijen an teva a c'holoe hor bro. Rouez a ioa an dud a anaveze al lezen gristen, ha rouessoc'h c'hoaz ar re he mire.

Dom Michel a ioa ginidic a Blougerne, en escopti Leon. He vuez hed-ha-hed a zo eur vuez burzuduz. Ar Verc'hez Vari he-unan, dindan furm eun Intron vraz, eo he vleigne dre an dorn beteg chapel sant Clauda, gant aoun na vije c'hoarvezet eun drouc bennag ganthan.

Ne velas mui goude, evit guir, he Intron, mes pa vezo tostic-tost d'en em goll var mor didruez ar bed, e clevo c'hoaz he mouez dous, ha Michel, heb marc'hata, a lezo a gostez an enoriou, evit en em roi corf hag ene dezhi.

Dom Michel, silaouit lenner, en deuz bet calz da c'hourin evit chom var ar mad. Mes anaout a rea he du goag, he du kizidic, hag atao e veze var evez. Marteze o lenn he vuez, e tescoc'h ive anaout ho tech, ha stourm outhan beteg ar maro.

Dom Michel a oa eun den habil ha gouiziec. Anaout a rea al latin, ar grec, an hebre. C'hoaz yaouanc e reas eur verz hirr-hirr e langach grec. Ouspenn, gouzout a rea e grec ar Scriptur-Zacr penn-da-benn dindan evor. Dom Michel ne oa ket c'hoaz beleg, ha gouscoude ez oa dija an desketa, ar gouzieca den euz Breiz, cme unan euz he brofessored. Netra souez eta, pa lakeas he zorn en alar, ma'z eas doun ar gontell en douar, ha ma jomas an troc'h pell var he lere'h.

Hor bro a vev c'hoaz divar goust gouiziegez ha kentelliou Dom Michel. Hen eo en deuz digasset ar c'hiz da gana canticou er missionnou, hag ar c'hanticou-ze a veze canet goude en tiez var ar meaz hag e kear, er parkeier, var an henchou, var vor, e peb lec'h. Hen eo en deuz pouezet kemend ha ma helle evit deski d'ar c'hrouadur yaouanc ar pezh a zell ouz Doue. Pa vez ar blanten tener, neuze eo an casa he flega. Plijadur Dom Michel a oa ober catekiz d'ar vugale. Ar re-ma ouz ho c'hostez o doa plijadur oc'h he zilaou. Bugale Kemper, bugale Conc-Leon ha bugale Douarnenez, a rede var he lerc'h, ha ne badent ket gant ar c'hoant d'he ghevet. Dom Michel, o velet ne oa nemet bugale en dro dezhan, a rea catekiz d'ar vugale vraz coulz ha d'ar re vian, o pasca munutoc'h, tanooc'h d'ar re a oa an nebeuta digor a spered. Dom Michel eo en deuz digasset en hon touez an taolennou misteriuze-se a oa lennet en eun taol-count gant ar re ne ouient

netra. Hag hirio c'hoaz ar pezh a ra ar muia vad d'an dud dizese eo an doareze da brezeg. Bez' ez euz re all deut var he lerc'h, hag a zalc'h he blas en hon touez. Ar re-ma, var digarez farsal hag ober c'hoarzin, a oar, ker brao ha tra, sila en eneoù guirionesiou ar feiz, ha planta kentel gant ar re ho zilaou. N'e ket tout, al labourerien douar a zalc'h sonj euz an depeignouze. Diouz an noz er c'horn, e vez comzet anezho; ar pezh a vag ar feiz hag ar garantez.

Dom Michel a oa eur zant var an douar. He vuez a oa henveloc'h oc'h buez eun eal eget oc'h buez eun den. Ar guel anezhan a oa dija eur brezegen gaer, he gomzou, tommet ma'z oant gant tan carantez Doue a zeve he galon, a goueze bero var ar re he zilaoue. Ha red e vije bet m'o divije tri gouchad scorn en dro d'ho c'halon, ma n'o dije ket santet an domder ar grouez o vont beteg ar voazien bella.

Dom Michel a roe aliou mad d'ar

veleien all he genvreudeur. Ar spere-dusa, ar gouizieca en ho zouez, e vele pelloc'h ha guelloc'h evitho. Diskuez a rea dezho ar pleg mad hag ar pleg fall en eur barrez, hag an doare da eüna ar pezh a oa camm pe ne oa ket compez aoualc'h.

Dom Michel, leun a garantez evit he vestr, a vele Doue a zindan truillou ar paour. Ar poaniou, an trubuilhou, an naoun, ar zec'hed, a rea dezhan gouela evel pa en dije ho gouzanvet he-unan. He blijadur a oa dousaat ho foaniou, o roi da zibri d'ar re o devoa naoun, da eva d'ar re o devoa sec'hed, o visca ar re a ioa en noaz, o voalc'hi gant eol ha gant guin calonou gouliet an dud reuzeudic. « An aluzen, emezhan, a dal hirroc'h eget an oll denzoriou euz an douar. Bennoz ar paour pa vez torret dezhan he naoun, bennoz ar re a c'houzanv pa vezont bet diboaniet a zo eur c'han dudiuz meurbed evit diousscouarn eun den a galon. »

Dom Michel en doa bet he lod euz ar

c'hroasiou da zougen var an douar. Gouzanv a reas gouscoude peb seurt dismegans heb en em glemm, o c'houzout ervad eo an hent surra evit mont d'an Env. Ar zonzj euz croaz hor Zalver a ioa ato en he spered, ha ne veve nemet dreizhi.

Dom Michel a reas burzudou keid ha ma veve, ha goude he varo en deuz great nousped miracl. Ne vanc eta dezhan evit beza eur zant da lacaat var an aoteriou, nemet beza discleriet sant gant hon Tad santel ar Pab. Plijet gant Doue e teuio buan an devez-se ma vezo anavezet evel sant gant an Iliz, Dom Michel Nobletz, missionner hag Abostol Breiz-Izel ! Evel-se beza great.

DRÉZEN.

BUEZ

DOM MICHEL NOBLETZ

KENTA LEOR

KENTA KENTEL

Michel e ti he dud

D'ar mare ma oa an devalijen o c'holoji ar bed oll, e teuas mab Doue var an douar da bara evel eur sclerijen. D'ar mare ma oa an devalijen an teva var hor bro, e teuas ive Dom Michel Nobletz da sclerijenna hon tadou coz. Doue ne bermet morse e teuffe an drouc d'en em zila e goazied ar bed, heb na lacañe ker buan

ar remed e kichen. Setu perag e tigassas var an douar an den santel ma comzan anezhan ama, evit rei skuer d'an oll.

N'euz bro ebed e lec'h m'o deffe an dud a renc'huel, an noblans, muioc'h a galon, an dud divar ar meaz muioc'h a feiz evit e Breiz-Izel. Mez siouaz ! d'an amzer-ze oa nebeut desket an dud var ar pezh a zell ouz ar zilvidigez ; hag oc'h heul an denvalijen oa ar superstisionou, an dansou, an ebatou, ar festou noz, hag an techou fall a zeu ker stanc er c'halonou, hag al louzeier fall er guella douarou. A boan ma vije cavet, eme eur scrivagner euz an amzer-ze, er brasa parresiou eur pemp pe c'huec'h desket aoualc'h, var ar pezh a zo red evit tostaat ouz Doue e Sacraman t an aoter, meulet ra vezo !

Calon Doue a zeuas da deneraat e kenver tud ken din a druez, ha setu perag e tigassas en hon touez ar brasa missionner a oa bet abaoe sant Visant Ferrier.

E paperiou Dom Michel, ez euz hano euz ar grasou puill a skuillas Doue varnhan. Unan euz ar brasa faveuriou a ouffet da gaout er bed-ma, emezhan, eo beza crouadur da eun tad, da eur vamm a zoujans Doue, beza bet savet gant eur

vagerez a ro da heul he lez magadurez an ene, beza bet scoliet ha kentelliet hervez al lezen gristen. Ne vaukas hini ebed dezhan euz ar gondisionou-se evit sevel an ti huel a c'hraz hag a zantelez a zo bet ken meulet gant eur c'halz epad he vuez, hag a zo ken enoret gant an oll goude he varo.

Dont a reas var an douar d'an nao varn-ugent a viz guengolo 1577, e maner Kerodern, e parrez Plougerne, en escopti Leon. Herve Nobletz he dad, galvet an Autrou de Kerodern, euz hano he vaner, a ioa euz eur ouenn goz, brudet dre he onestiz hag he enor. Bez' e oa unan euz ar pevar noter public a rea neuze afferiou d'ro Leon.

Petra bennag ma oue red dezhan taoler evez en he zispignou, e roe gouscoude eul loden euz he zanvez d'ar beorien, ha ne esperne netra evit roi d'he vugale eun descadurez hervez ho stad. Rag evithan da gaout uneg crouadur e roe bep bloaz cant scoed evit scolia peb hini anezho, ar pezh a oa an hirra d'ar mare-se evit descadurez eur c'hrouadur.

He vamm Franseza de Lesvern, a ioa euz unan euz ar familliou an huela hag

ar brudeta euz ar vro. Ober a reas ive he galloud evit ma vije desket mad he bugale, hag he femp paotr a zeuas da veza habil ha gouiziec.

Teir euz he merc'hed a zimezas da dud chentil euz ar vro; unan a varvas yaouanc-flamm; evit an diou all, bleignet gant ho breur, a zavas buan beteg an huella pazen eur ar zantelez.

Dom Michel, en he baperiou, a drugareca Doue da veza bet ganet da c'houel sant Mikeal, protectour an Iliz, ha da veza resevet he hano var mean-font ar vadi-ziant.

A vec'h m'oa eat euz divrec'h ar vaouez santel a renas he vloavesiou kenta, ma tiskuezas e ti he dud mercou a zevosion hag a roas da anaout ar pezh ma tlee beza da c'houde.

Bez' e oa guechall e kichen Kerodern eun iliz savet en enor da zant Clauda. N'oa evit mont di nemet treuz eul lenn vraz. Hor c'hrouadur a venedicsion, petra bennag n'en doa nemet pevar bloaz, ne denne penn euz ar chapel. Ma c'houlenne he vamm digañthan a be du e teue, e responte ingal, euz ti Doue.

Eun Intron, emezhan, he gasse dre an

dorn, hag a zeske dezan pedi. Eun devez he vamm, gant aoun na vije couezet el lenn ha heuzet, a zeuas d'he lacaat en eur gambr, alc'huezet-cloz an or varnhan. Souezet braz e oue oc'h he gaout dioc'h-tu er memes chapel o pedi var he zaoulin, ec'hiz eur zantic. Ar bugel a gontas d'he vamm, oa deut ar memes Intron, caer evel an heol, da zigori an or dezhan, ha d'he gass beteg an iliz evit deski dezhan gant pegemend a zevosion eo red en em strinca dirag an Doue teir guech santel. Goude tout, a lavare ar c'hrouadur, ne ouie na piou oa an Intron-ze, nag a belec'h oa deut, na da be du oa eat.

Netra iston e kement-ma. An hini a garie kemend ar vugale, hag a ziskuezas dezho kemend a garantez pa veve var an douar, en deuz digasset he vamm zantel da zeski an hini a dlle dalc'her he blas e Breiz-Izel.

EIL KENTEL

Kenta studi Michel Nobletz

D'an oad a zeiz vloaz e oue casset da studia da di he dad coz. An autrou de Lesvern en doa c'hoanteat caout Michel en he gichen, evit hallout he instrui assambles gant he vugale-vian all, scoliét gant an autrou Thomas Cozic, beleg leun a furnez; ar c'hrouadur-ma a gendalc'has da roi an oll mercou euz ar vrasa sante-lez a ouffet da velet en oad-se.

Na pebez doare modest gant he genitervezed a ioa euz ar memes oad ganthan! Morse ne iea en ho c'hambr, morse ne gomze outho nemed ouz taol dirag ho zad coz. Ar pez a ziskueze splamm d'an oll, e oa eur mestr all oc'h he gelen, calz gouiziecoc'h eget an hini a rea scol dezhan var al lenn ha var ar scriva.

Eun nebeut bloaveziou goude, e varvas an autrou de Lesvern. Neuze tad Michel

a c'halvas anezhan d'ar gear evit he lacaat adarre etre daouarn eur mestr scol all. Mes o sonjal eur c'hrouadur he-unan ne boagn ket coulz d'al labour ha pa vez bugale all oc'h he vrouda dre ar guel hag ar skuer, ouspenn, caër en deuz eun tad taoler ar muia evez, ne hall ket aliez miret ouz ar c'hrouadur da gemeret ple-gou fall an domestiked; setu aze perag e c'avas mad cass anezhan d'ar scoliou public, e lec'h ma'z euz bugale all.

Aliez abaoue, Michel Nobletz en deuz trugarekeat an Autrou Doue ma oa deut e speret he dad ar zonj d'he gass d'ar scoliou-ze.

Daou vreur beleg, tud a vouiziegez hag a furnez, a gemeras soursi ouz ar blanten lakeat gant Doue en ho liorz.

An antronez, carget da instrui ar vugale ha da ober tud anezho, a gaffe da zeski e doare an daou veleg-ma. Da genta, e clas-kent gant dousder gounit calon ar re a veze lakeat etre ho douarn, hag eur vech mestr euz ho c'halonou, è reant ar pez ma carent anezho. An aliesa ez eer dezho gant ruster, hag er c'hiz-se e prennner cloz ho spered hag ho c'halon da gement sclerijen ha da gement tra vad. Rag ne vez

mui dirazho nemet gourdouz ha guialen. Michel, leun a fisians en he vistri hag a garantez evitho, a zigoras franc he ene c'hoaz tener d'ho c'hentelliou. Diouz ho c'hostez, oa barr ho c'halon a joa, o velet ar profit hag ar frouez a denne euz he studi. Burzud oa, gueleit eur c'hrouadur a zeg vloaz o vont hag o tont evel cun den braz; hag e hellet lavaret anezhan ar pez a lavar ar Scritur-Zacr divar benn Tobias : c'hoaz en he vugaleach, ne vele den netra a grouadur en he oberou.

Mont a reas goude da studia en eur barrez tost da Lesneven, didan eur mestr brudet tro-var-dro dre he vouiziegez. Chom a reas eno c'huec'h vloaz evit brasa mad ar barrez-se, e lec'h an dud a oa ker groz ha ker gouez hag e coajou an Americ. N'oa kemm ebed etrezho nemet dre ho badiziant ha dre ho dillad, eme eurscrivagner euz an amzer-ze. Eno Doue a roas dezhan da danva an dousder ma'z eo custum da rei da zantout d'ar re a ziles peb tra evit en em roi d'he zervich. He galon a oa evel beuzet en eur mor a joa, ha ne gave netra c'huero na diez euz ar pez a zelle ouz gloar he vestr.

Ne oa neuze nemet pevarzeg vloaz, pa

blijas gant Doue digass dezhan unan euz ar c'hrasou dreist-ordinal meurbed ne ro nemet d'he zervicherien ar fidela a dle digouezout en huela pazen euz ar berfection. Hor Zalver Jezuz en em ziskuezas da Zom Michel gant he gorf gloriuz hag he c'houlou sacr, ha dezhan eunear a vadelez ar c'haera a ouffec'h da zonjal. Euz a gement-ma n'euz hano ebed en he baperiou, hen he-unan eo a teuaz da roi anaoudegez d'an Tad Maner ha da eun demezell santel euz a Locronan. Neuze e ias doun en he galon ar zonch ma : « Evit plijout da Zoue ha kemer skuer outhan, eo red caout caz oc'h traou ar bed, ober fae varnho hag en em drec'hi hon-unan. » Ar zonch-se a c'hrisiennas e diabars ennan, a sclerijennas an hent en doa da ober hag a jomas en he spered beteg ar maro.

Ker buan e commansas ar brezel. An drouc-spered, ato oc'h ober an dro d'an den evit hen discara hag hen dispenn, a nascas en eun doare scrijuz da Zom Michel. Bez' e oa en oajou-ze ma zant an den, ama var an douar, tan ar ioulou fall o tevi he c'hoazied. Ne varc'hatas ket gouscoude evit gourin ouz enebour touet

hon eneou, ouz an diaoul, m'hen argars. A fors d'en em zastum ennhan he-unan, e teuas da anaout pegen dister ha pegen bresc oa. An difisians-ze anezhan he-unan eo a viras outhan da vont da goll. Setu perag e couske var an douar-ran, ne gemere plijadur ebed, hag e pratike ar pini-jennou ar rusta.

Eun devez m'oa eat en eur c'hoat, evit halloud guelloc'h sevel he spered var zu Doue, ha silaou he gomzou ken dous d'ar galon, e zaillas varnhan an diaoul impur. Neuze, o veza deut sonj dezhan euz ar pez o doa great guechall ar zent brasa evit mougla flammou an impurete, e tiviscas he zillad, hag en em daolas en noaz e creiz an drez hag ar spern. Euruz da veza trec'het adversour he ene, var bouez skuilla he c'hoat, a ginigas gouscoude da Jezuz ha d'he Vamm zantel.

Eur vech all en em stlapas e creiz an erc'h en noaz, hag e chomas eno, var dro teir heur, hanter varo gant ar yenijen. Epad an amzer-ze, he galon a zeve gant ar garantez divin en doa Doue c'huezet ennhan. An dud calonec o deuz harpet en dra hellent a enep an droug-spered a oar, eur vech m'o deuz gounezet ar

victor ha trec'het ho zech fall, pegemend a c'hrasou a skuill Doue varnho. Lusifer, pa vez bet discaret ouz torgen, a vez essoc'h goude rei lam m dezhan. Rag-se ive ar boan a gemeras er penn kenta Dom Michel evit en em viret da bec'hi, ne jomas ket pell heb beza digollet mad. Doue a roas dezhan ar vertuz a burete a zalc'has caer ha flamm epad ar rest euz he vuez.

En amzer-ze eo e commansas da brezeg an aviel gant eur feiz, eur garantez, eur basianted ar vrasa. Da zul, er vered, araog ha goude an offis, Michel a rea catekiz d'an dud divar ar meaz, a esplike dezho ar guirionesiou euz ar relijion. Mes siouas! aliez n'en doa evit recompans nemet goaperez ha comzou difoutre.

TREDE KENTEL

Dom Michel o studia e Bourdel

Goude conversion ar Roue Herri IV d'ar guir relijion, ar Spagnoled a jome c'hoaz mistri e porz Craon, e Breiz-Izel. O veza n'oa den en assurans var vor, ar marechal d'Aumont a stourmas outho hag a reas dezho plega ha kemer buan an tec'h. Neuze e pignas Michel en eul lestr, evit mont da Vourdel gant he vreudeur da studia, dindan mistri braz hag euz ar seurt ne oa ket er vro.

A boan ma oa er meaz a vel a zouar ma zeuas an amzer da deelaat. Ar mor a zaille a bep tu hag a ginnige he lonca. Diou vech e oue bet e tal da goll he vuez da veza goueledet, ha diou vech dorn Doue he dennas a zanjer.

Muioc'h a zanjeriou e cavas c'hoaz var zouar oc'h heul ar gompagnunesiou ma'z oa cazi red dezhan darempret. Guelit

ama, m'ho ped, pegen diez eo da eur seurt tud ober ho zilvidigez. Setu aze eur c'hrouadur a venedicision; Doue he ren adaleg he vloaveziou kenta cazi dre an dorn. Digass a ra he vam'n zantel da zeski dezhan pedi, en em ziskuez a ra da Vichel gant he gorf hag he c'houliou sacr. Mad! ma ne vije ket deuet Doue dre eur burzud d'hen diouall, e oa collet evel eur c'halz re-all.

A viscoaz ar Vretoned o deuz caret ho bro hag en em garet etrezho. Evitho, ho bro eo ar c'henta a zo dindan an heol. Goaz aze 'ta evit an bini en dije bet affer oc'h unan-bennag anezho, n'en doa nemed ar maro da c'hedal, pe da viana goad a dlee ruzia an dachen. Evit-se e teujont da gemeret unan euz ho zouez da vestr. Henez oa hanvet gantho tad priol ar Vretoned: henez ho c'hasse araog pe a rea dezho chom a dren, dioc'h ma c'houlenne, var he veno, enor ar vro. Breur coz Michel o veza bet hanvet tad priol pe vestr ar Vretoned, Michel a gredas o red dezhan deski c'hoari gant an armou evit hallout sicour he vreur pa vije bet en izomm. Ker gouiziec e teuas da veza en

armou ma oue hanvet, var lerc'h hema, mestr priol ar Vretoned.

Neuze e velas edo var bord ar puns islong, ha tostic-tost da vont da goll. Nag e trugarekeas Doue ar rest euz he vuez da veza he dennet euzeun hevelep danjer ! Oblijet oa, abalamour d'he garg a vestr ar Vretoned, da zarempret bep seurt compagnunesiou, da zifen bep seurt afferiou fall ha mad, ha da denna he gleze.

Eun devez ma oa o vont da dreuzi corf eun den a glaske laza he vreur iaouanc, e clevas eur vouez o lavaret : « Chom, chom, silaou ar pezh a lavar Doue en da galon, heuil-an hent en deuz great, o veza humbl, dinam, distag a bep tra, ha leun a fae var traou ar bed. »

Anaout a reas dioc'htu mouez dous an Intron a iea guechall ganthan dre an dorn da japel Kerodern. Ar vouez-se a dizas eun beteg beo he galon hag a reas dezhan dont var he giz. Coueza a reas d'an daoulin, hag o veza stlapet pell outhan he gleze, e touas d'an Intron e vije bet hivi-ziken he bugel, ha n'en dije mui great brezel nemet dindan banniel he mab divin.

N'en doa ket a vec'h great ar bromessa-ze, ma teuas he galon da veza barr gant ar garantez evit gloar he vestr, hag he spered leun euz sclerijen Doue. Neuze e santas an taol euz ar c'hras, ar scrijaden santel-ze a ra da eun den chench a bez, hag a ra outhan eur benvec dibabet gant Doue evit he vrasa servich.

Eur joa vraz a oue evithan clevet e oa e kear Ajen relijiuzed euz compagnunez Jezuz. Ar re-ma, hervez ho c'hiz, a rea d'an descadurez christen mont da heul descadurez traou ar bed. Guelet a reas splamm e oa di eo a c'houlenne Doue ma vije eat da staga he vagic ha da daoler he heor.

PEDERVED KENTEL

Dom Michel eat da studia d'ar gear a Ajen en em ro a grenn da zervich Doue.

Michel Nobletz a zigouezas er gear a Ajen da viz here 1597. Caout a reas ar pezh

ma oa eat di da glasc, da lavaret eo, eun descadurez hervez ar bed hag eun descadurez christen. En em blijout a reas kemend eno, ma lavare goudeze ez oa bet an amzer-ze evithan bloavesiou alaouret.

Poania a reas calonec da labourat skianchou ar bed, dre ma ouie pegemend o divije talvezet dezhan evit gounit eneou da Zoue.

Er bloavez kenta e teuas da c'houzout troi e gallec levriou grec ha latin. Commans a reas zoken da ober rimadellou grec ha n'oant ket euz an divaloa. Goudeze, o veza croget en he delen alaouret, e compozas eur verz hirr e langach grec. Guelet o pije ar missionner cozz, oajet a zaouzeg vloaz ha tri-ugent, guen cann he vleo gant ar bloavesiou, croumet gant he labouriou, o lavaret dindan evor ar verz great a bez ganthan he-unan, guechall p'edo e Ajen.

Ober a reas he rhetoric hag he philozophi gant ar vrasa gloar ha gant ar vrasa meuleudi.

Setu aze evit ar pezz a zell oc'h descadurez traou ar bed.

Poania a reas c'hoaz muioc'h da veza eun den vertuzuz hag eun den santel. Ar

zonj eus he bec'hejou, ar spont rag an ifern, barnedigesiou Doue bepred dirag he zaoulagad, ar pezz a lenne, ar pezz a gleve e touez mignoned Jezuz, an oll draou-ze a greske an tan euz he garantez.

Goulen a reas ma vije resevet e breuriez ar Verc'hez Vari. Ar vreuriez-ma a oa bet savet gant tadou Compagnunez Jezuz, evit miret ar burete e touez ar scolaerien, ha dalc'her ar skuer vad er scolachou. Ken izel oa a galon, ma c'hoanteas beza carget da zigori ha da zerra an or, hag e roas epad daou vloaz kemend a vercou a zantelezz ma'z oa an oll leun a respet evithan.

Doue en doa bete neuze bleignet Dom Michel dre hent an doujans, brema e fell dezhan he zével beteg ennhan, dre hent ar garantez. He denna a reas euz a douez ar sclaved, ar mevellien, evit he lacaat e renc he yugale, he vignoned. He galon frankeat er c'hiz-se evit Doue na helle ket guelet gant daoulagad ar c'horf, a zigoras franc ha tener evit ar paour a vele atao dirazhan. Adaleg ar momet-se, e crede guelet Jezuz-Christ a zindan truilhou ar paour, hag he garantez evit ar beorien a greske a-zeiz da-zeiz.

Neuze Doue o veza roet dezhan da anaout eul loden euz ar pezh en doa sonj varnhan, calon Michel a deuas da veza leun a filsiens e madelez he vestr. He spered sclerijennet a ioa en eun taol-count diboaniet, dizoursi hag en he eaz. Tanva a reas an dousder hag ar gonzolationou a ro an tad carantezuz-ze d'he vugale muia caret.

Nag e trugarekeas Doue bemdez epad he vuez da veza roet dezhan faveuriou ken dreist-ordinal! C'hoantaat a reas beza a-unan gant Jezuz en eur bellaat outhan kemend a helle kañat ouz an dour a c'hras. Evit beva er vrasa union gant he Zoue, ne gavas netra guelloch eget ar zonz en oe bet d'an oad a bevarzeg vloaz, hag a zo ar mean font euz ar berfecion. Ar sonj-se a c'hrisiennas guechall e strad he galon eo : « Red e ober fañ var draou ar bed. »

D'an dregont a viz guengolo 1598, da c'houel sant Jerom, e reas a greiz calon ar bromessa da heñvel Jezuz hag he groaz santel, ha da ober fañ var gement tra all. Abaoue an devez-se a ioa evithan eun devez a joa hag a anaoudegez vad evel devez he vadiziant; kemeret a reas ar zant braz-se evit beza he brotectour.

Evit cass da benn ar bromessa en doa

great, e c'houlennas digant he dad mont a gostez ha lezel he vreudeur a ioa eat ganthan da studia da Ajen. Aoun en doa, en eur jom gantho ha gant an duchentil all euz he vro, e vije heb dale en em gavet e touez an danjeriou ma redas araozho, pa giteas kear Bourdel.

Setu aze perag evit hallout en em rei oll d'ar studi, ha d'ar beden, e ieas da jom en eur c'horn all euz kear, da di eur bourc'hiz a rene gant he bried eur vuez cristen hag a skuer vad. Ar bourc'hizma, euruz da repui eur scolaer ker santel, a roas dezhan ouspenn evit he lojeiz, eur gampric en eul leac'h distro ha didrouz.

Eno, pell dioc'h darempred an dud, Michel a hellas en em roi d'ar bedennou a galon ha d'he zevosionou all. Nag he joa a oe braz o sonjal edo libr euz a gemend a vire outhan da veza euruz! Neuze e hallas lavaret gant ar profed : « Kemeret am euz an tec'h, pelleat oun dioc'h trouz ar bed, hag oun eat da jom en eul lec'h distro. » Eno, pell ouz peb lagad, en em roas euz he oll nerz d'ar studi, d'ar beden a galon ha d'ar binijennou. Ne vele he vreudeur hag an dud yaouanc all euz Breiz-Izel, nemet dre zigouez. Ha petra-

bennag ma comze atao outho gant eun ear chentil ha laouen. ne lavare nemed ar pezh ma cave dezhan a oa mad ha de-read etre kerent ha kenvroiz. Er feson-ze, n'en oa affer nemed oc'h he dad spirituel a henche he goustians, nemed oc'h he vistri a zeske dezhan ar vouiziegez, nemed oc'h ar beorien. Kemereta rea perz e poaniou ar re-ma evel e poaniou hor Zalver he unan, ha goudeze ho c'hentellie divar benn lezen Doue.

Guelet e vije c'hoaz gant eun nebeut scolaerien dougetoc'h evit ar re all d'ar zantelez, pe a grede hallout gounit da Zoue, hag a gave guelloc'h e tro da labourat evit he c'hloar.

PEMPED KENTEL

**Michel Nobletz a c'hounit da zervich
Doue eun dijentil yaouanc hanvet
de Limbau pe Per Kintin.**

Buez Sant Ignas, fondatour compagnu-
nez Jezuz, a rea joa ha dudi Michel

Nobletz. O lenn ar vuez-se, e tescas ren he hini hervez Doue. Da genta, pa oue distroet evit mad oc'h Doue, e c'hoanteas evel sant Ignas labourat calonec evit brasa gloar he grouer ha silvidigez an eneo. Evelthan, e poanias stard beteg ar maro da glasc an dro da c'hueza e calonou ar re all an tan euz carantez Doue a zeve he hini. Evelthan c'hoaz, e reas kemend a ioa en he c'halloud evit gounit d'ar zantelez eur maread scolaerien. Eur vech ma veze deut a benn d'ho sclerijenna, e lavare dezo : « oa red ober faë var ar bed-ma. Setu aze, emezhan, ar mean font, ar mean kenta eus va buez nevez. »

Ral a vech ma zebre kig, ma eve eur banne guin. Dioueret a rea cazi an ne-sessera, evit hallout espern arboella eur guennec bennag euz ar pezh a zigasse he dad dezhan. Gant an arc'hant-se e sicoure ar scolaerien paoura, ha da heul an aluzen a vage ho c'horf e roe c'hoaz aliou mad evit magadurez ho ene.

Aliezel lavare dezho : « Grit brema ar pezh a garfec'h en heur euz ho maro beza great a hed ho puez. Seul nebeutoc'h a vadou o peuzer bed-ma, seul nebeutoc'h a boan o pezo divezatoc'h oc'h ho dioueret.

Diouallit na golfac'h an anzer roet deoc'h
gant Doue, evit he vrasa gloar hag ho
prasa mad. Buez an den, emezhan, a zo
evel eun devez a dremen buan; keit ha
ma vever, sclerijen an Env ne ehan da
bara dirag daoulagad an oll. Mes heb dale
e teuio tevalijen an noz, tevalijen ar maro,
neuze avad ne vezo mui a sclerijen nag
a voien evit silvidiguez an ene. Doue a
vennigas he aluzennou hag he aliou mad.
Meur a scolaer, paour evit guir euz dan-
vez ar bed, pinvidic avad euz madou ar
spered, a i eas, sicouret ganthan, da reli-
jiuzed evit brasa mad an Iliz.

Michel a garie dreist peb tra an dud
paoura. Hag hor Zalver he-unan n'en doa
ket kemeret ar re zistera, evit discleria
he zonedigez, hag ober da anaout he hano
santel dre bevar c'horn ar bed ! Gous-
coude Michel, o vale ato var lerc'h roudou
sant Ignas, en em droas ouz scolaerien a
stad hag a zanvez, en esper ho gounit-da
zervich he vestr. Dont a reas a-benn euz
eun dijentil yaouanc, ginidic a Dreger ;
he hano, Per Kintin pe an autrou de
Limbau.

An den yaouanc-ma a ouenn huel a ioa
bet soudard eur pennad amzer. Goudeze

e tistroas adarre d'he studi en devoa kui-
teat evit mont d'an arme. Dont a reas da
veza relijiuz euz a urz Sant-Dominic. Eno
e renas eur vuez a vir abostol, o prezeg
an Aviel e lec'h ma c'halve anezhan bo-
lontez Doue, hag eur vuez e guirionez
burzuduz dre ar grasou puill a skuille
varnhan mestr an envou.

Mes p'e guir an Autrou Doue en em
zervichas euz Michel evit cass an den
yaouanc-se d'an huella perfescion, hag
egiz hema en deuz bet lod e labouriou
hag e buez Dom Michel, e lavarin ama
eur ger divar benn buez Per Kintin pe
an autrou de Limbau.

An dijentil-ma a i eas da Baris da zeski
ar skianchou hervez ar bed, a zindan an
autrou Lachiver, beleg euz escopti Tre-
ger, ha deut da c'houdeve da veza escop
Roazon.

Var dro an oad a ugent vloaz, e oe red
dezhan lezel he studi a gostez. Distroi a
reas d'ar gear, evit hallout roi epad ar
brezel scoazel d'he vamm neuze intanvez,
ha d'he vreudeur c'hoaz yaouanc-flamm.
Evit beza tostoc'h d'he dudach, e teuas da
veza ofiser archerien an autrou de Coat-
nizan. Er garg-se e tiskuezas kemend a

lealded hag a furnez, ma na ioa morse gûelet eur zoudard euz he gompagnunez o vont dre grisder da zen ebed, hag o laeret an distera tra divar goust an dud ma dremenent dre ho zouez.

Eun devez edo gant he gamaraded o c'hoari c'hartou er gear a Vontroulez, e lec'h ma oa he gompagnunez e garnizon gant compagnunesiou all, pa zeuas eur paour-keaz den en eur vouela hag en eur leuskel criadennou a iea doun er galon : Soudardet, emezhan, euz eur gompagnunez all o doa lamet diganithan kement munud mad en doa. Hor c'havalier yaouanc, chomet eûn hag onest en arme, a zeuas da gaout truez oc'h ar paour-keaz den-se, hag a roas dezhan var an tomm kement ma en devoa gounezet er c'hoari.

An ober a drugarez-ze ne jomas ket pell heb paeamant, rag antronoz vintin pa ziunas, e credas clevet comzou an Aotrou Doue da zant Augustin : « Kemer ha lenn. » Asten a reas he zorn hag al leor kenta a gavas a oa leor covessionou sant Augustin. Caout a reas kemend a blijadur o lenn al leor-ze, ma ne lennas ken epad ar c'horaiz pen-da-benn. Adaleg an devez-se, ne oa ken sonj en he spered nemet

chench buez ha distroi d'he studi. Mont a reas eta, evit senti ouz mouez Doue, da beur-echui he studi da Baris. Eur pennadic goude, e i eas da Ajen da ober he philozophi. Be en doa d'ar mareou-ze var dro tregont-vloaz. Eno eo e reas anaoudegez gant Dom Michel Nobletz, a c'halvas abaoue he dad hag he vestr, petra benag ma oa hema yaouanco'h evithan.

Ama e velomp da betra eo mad eur guir vignon dibabet euz a douez mil. An daou scolaer-ma a rai kentel d'an dud yaouanc a zo ker stanc er scol er c'heariou braz. Setu aze eun dijentil leun a galiteou hervez ar bed, mes siouas ! douget eo d'he dech, douget eo da ober he volontez. Anezhan he-unan ne hallo biken dont a benn d'ho zrec'hi. Mes he vignon fidel a zo aze, hen eo a ziskuezo dezhan en em drec'hi, ober faë var draou ar bed, arabad caout istim evit madou an douar nemet keit ma'z int mad da izommou ar paour.

C'HUEC'HVED KENTEL

**Michel Nobletz a c'hounit da zervich
Doue eun dijentil iacouanc hanvet de
Limbau pe Per Kintin.**

Ped guech n'on euz ket lavaret kemend a zo ac'hanomp, goude beza clevet lenn buez ar zent : Biken ne hallin dont a benn da veza eur zant. Ha perag ne halfac'h-hu ket ober ar pezh en deuz great ar zent ? Daoust hag ar zent a zo bet great euz eun danvez all ? Ha n'oant ket eveldomp-ni kig ha goad, diskennet ive euz ar pec'her Adam ?

Mes silaout, ar zent, douget ma'z oant d'ar pec'hed coulz ha c'hui ha me, o deuz harpet en dra hellent a enep ho zechou, o deuz lakeat ho bolontez dindan ho zreid, ha n'eo nemet var bouez-se ma'z int er-ruet ken huel en Env.

Per Kintin, ma'z euz ama hano anezhan, en doa he dech ; mes staga a reas

ganthan dargreiz ha dargreiz, corf ha corf, ha seul-vui eo din a veuleudi mar en deuz bet muioc'h da c'hourin. He zi dezhan a oa deut da greski e mesc a zoudarded. Douget a oa d'ar guin, ec'hiz ma'z euz eur c'halz re all, siouaz ! Poania a reas calonec da zic'hrisienna an tech-se, ha Doue o velet he labour hag he anken a deuas da gaout truez outhan. En he vadelezh e roas dezhan da c'houzout, en eun doare scler ha splamm, ez oa nesesser braz evithan lezel a grenn ar guin ar rest euz he vuez, anez e colje heb manc ebed he ene prenet gant goad eun Doue : Per Kintin a reas ar bromessa hag a zalc'has dezhi beteg ar maro. Morse ar rest euz he vuez banne guin ne ieas beteg he vuzellou.

Dom Michel eo a ro deomp da anaout kement-ma. Ouspenn, eme Michel Nobletz, abaoue ar mare-ze, ma'z eas ene Per Kintin var an araog er zantelez, iec'hed he gorf a deuas da veza guelloc'h-guell, er feson ma hellas ober ar rusta piniennou hag ar brasa labourou evit gloar Doue. Per Kintin ne varc'hatas ket evit kerzet var roudou he vestr keaz, oc'h ober fae var ar bed hag o velet Jezuz dindan truil-lou ar paour.

D'ar mare-ze e teuas eur gernez vraz er Guienne. Ar beorien a goueze a zruill var ruiou kear Ajen, hag a varve gant an naoun. Goude beza roet kement guennec en doa, e verzas he arrebeuri ha memes he levriou evit hallout ho zicour, en hevelep feson ma n'en doa mui evit studia nemet levriou Michel Nobletz. Dre ma teue ar gernez ha dienez ar beorien da voasaat, he garantez a greske muioc'h-mui evitho, ma'z eas da Vreiz da verza ar madou a deue dezan euz he dud, ha ma tistroas adarre da Ajen, evit ranna etre ar beorien an arc'hant en doa bet. Mes neuze e c'hoarvezas eun abaden all; galvet a oue dirag ar barner da renta cont euz he fortune a ioa teuzet etre he zaouarn, evel pa en dije drouziviet he zanvesiou er c'hoariou. Red mad oa eta dezhan anzaou ar virionez penn-da-benn, ha dizolei an aluzennou en doa roet d'an dud reuzeudic euz kear. Buan an anaoudegez a gement-ma a redas tro-var-dro, hag an oll o doa ar brasa istim, ar brasa respet evithan.

Ne jome mui gant Per Kintin netra d'en em vaga ha d'en em visca; setu perag, evit hallout ober he studi, oa red dezhan mont bemdez da ober scol d'ar

vugale vian. Be ez oa eun aluzen all dou-soc'h d'he galon, hag a blije a dra-zur muioc'h c'hoaz da Zoue eget ar peza roe d'ar paour. Bep sul ez ea gant Michel Nobletz da ober catekiz d'an dud divar ar meaz, evit dalc'her beo sclerijen ar feiz a glasse d'ar mare-ze eun toullad heretiked mouda e calonou ar gristenien vad.

SEIZVED KENTEL

**Dom Michel dindan proteccion an Intron
Varia, trei a ra he zaoulagad var zu
stad ar veleien.**

N'euz den var an douar hag he galon na ve digor tu pe du d'an enebour braz, d'an drouc-spered. Setu aze perag, hervez ar re a zo carget da henchha an eneoù var zu ar zantelez, kenta studi en deuz da ober nep en euz c'hoant da veza santel eo anaout ouz pe du eo digor he galon d'ar bed. Eur vech anavezet an tu goag, peb den a dle heb marc'hata an distera gourin

beteg ar maro. An tu kisidic, an tu guiridic euz calon Michel oa « crena gant aoun da goueza dindan disprijans ar bed. » Aze ema an dalc'h, aze ema he dech. Kerkent e ped Doue, mar plijo ganthan digass beteg ennhan evit he barea, an oll dismegansou, hag he c'holoi a vez dirag an dud.

Doue a zilaouas he beden, en tu all marteze d'ar pezh ma en dije sonjet. Tamallet e faoz, e santas evel eur bir hero o treuzi he galon ken guiridic. Anaout a reas pegen dister, pegen dinerz eo ar fura den anezhan he-unan, nemed he fisians a ve e Doue; eur veradennic gliz o crena var beg an delien ne goues ket buanoc'h e creiz ar vouillen. En em lacaat a reas da bedi evel ma rea ato pa veze en eur boan bennag. Eun nosvez e oa e kichen he vele var he zaoulin. « Guelit, emezhan, o va Doue, va foan, ha va anken. C'hui a oar kemend a dremen e diabarz an den, c'hui a oar oun neat dioc'h ar pezh oun tamallet. O! sicourit ac'hanon, me ho ped, da zougen eur penn ouz ar groaz a zaoubleg ac'hanon beteg an douar. » Hag an dour en he zaoulagad e poke a vriad ha gant carantez da groaz hor Zalver. « Ha

c'hui, emezhan, en eur droi ouz imach ar Verc'hez, Intron Varia, c'hui o peuz va c'helennet adaleg va bloavesiou kenta, c'hui a oar oun pur ha divlamm-caer, hirio c'hoaz en em strican e harz ho treid binniget, ha leun a fisians en em erbedan ouzoc'h, grit, grit ma vioc'h ato va Intron ha va mestrez. » Neuze ar c'homzou-ma a ias doun hag a jomas en he galon, egiz pa vijent bet lavaret gant mam Doue he-unan : « Va c'hrouadur keaz, n'o pezit aoun ebed, rag va mab ho tiquallo ha me a vezo a du ganeoc'h. » — Leun a anaoudegez vad evit comzou ken dous d'ar galon, e pignas en he gampric a ioa en eul lec'h sioul ha didrouz, o sonjal tremen an noz o roi mil meuleudi d'he vadoberourez. Credi a reas, o tra burzuus! guelet he Intron gant he c'horf gloriuz evel m'ema-hi er baradoz. Dougen a rea en he dorn teir gurunen a lakeas var benn Michel.

An hini genta a oa curunen an den pur ha guerch : he hallo eta kerzet dre greiz danjeriou ar bed-ma, gant an assurans e viro he burete beteg he alanad diveza. An eil a oa ar gurunen a zoctur, a vestr, evit hench a aneou var zu ar zantelez. An drede oa curunen ar re a ra fae var ar

bed. Be 'halfet c'hoaz lavaret en doa bet neuze, dre an Intron-Varia, ar vertuz da ziscleria ar pezh a dlle c'hoarvezout en amzer da zont, ar pezh a reas epad an daou vloaz hag anter-cant ma vevas da c'houde. Euz ar pezh a vercan ama, Michel ne lavaras ger ebéd epad he vuez. En he baperiou, el lec'h ma comz euz ar faveuriou en doa bet digant Doue, eo ez euz hano euz eur c'hras ken extraordinal.

Arabad e ve credi, goude beza bet grasou ker pinvidic, ez eas Michel a zoug en hent m'en doa Doue merket dezhan. Pell a geiment-se, ne ouie na pe du troi na pe stad kemeret. Nag e pedas he grouer, nag e reas pinijennou euz ar rusta evit hallout anaout ar pezh a c'houlenne Doue outhan! Prometi a reas chom dizemezh, heb ober gouscoude veu ebéd, beteg ma raje Doue dezhan da anaout scleroch he volontezh. He vreudeur hag he vignoned, en oad coulzh hag hen da gemeret eur stad a vuez, a ias da studia al lezennou sivil. Evithan e pedas hag e aspedas, lacaat a reas Pêr Kintin da bedi ganthan evit ma vije plijet gant Doue rei dezhan da anaout ar pezh en doa sonj varnhan. Neuze en em zantas en eun taol-count galvet da veza

den a Iliz, heb gouzout gouscoude hag e tlie chom er bed e touez an dud, pe mont d'en em gonsacri da Zoue en eur gouent bennag.

Buez sant Ignas a rea he joa, hag he denne var zu ar reglen. Mes aoun en doa n'en divije ket iec'hed aoualc'h evit herzel da ober ar c'hlasou, pe al labourou all euz an urzh, hag er c'hiz-se ne halje ket kendalc'her da labourat evit gloar Doue ha silvidigez an nessa.

Michel a oa dija oajet aoualc'h evit beza beleget. Mes gouzout a rea e c'halve Doue anezhan da ren he vuez dioc'h buez sant Ignas a Loyola. Hogen, evel ar zant-ma en doa great penn-da-benn he studi var an theoloji, ha gortozet an oad a zaou-ugent vloaz abarz beza beleget, Michel a gredas ive oa mad evithan mont da Vourdel da dremen pevar bloaz evit studia an theoloji, araog kemeret bec'h pounner ar velegiach.

Crena a rea o sonjal oa galvet da eur stad ken huel. « Ia, Michel, clevet o peuz mouez Doue, red a vezo pignat ouz an aoter, kemeret ar bara hag ar guin; ha pa vezo an elez en dro deoc'h o crena, dre eur ger burzuduz e lakeoc'h hor Zalver

Jezuz da zisken euz an envou. » Nag e oa dous d'he galon clevet mouez Doue o lavaret dezhan : « Va mab, deuz ganen-me, » me a vezo da loden da heritach var an » douar, hag en env da gurunen. »

« Ouspenn-ze, anaout a rit clenved oc'h ene hag al louzou d'he barea. Mad ! Done a c'houlén ma sicouroc'h ho preudeur da anaout ho hini, ha ma tiskuezoc'h dezho ar remed. Gouzout a rit, emezoc'h, ez oc'h bresc evel eur gorzen ha prest da dorri. Mes clevet o peuz mouez Jezuz, be hallit eta beza dizoursi. Rag ar gorzennic pa ra an dro da vezen dero a vez diouallet er goasa avelou ; harpet ive gant Doue, n'o peuz ket a lec'h da gaout an distera spont. »

Gouscoude araog en em roi d'an Theoloji, e c'hoanteas mont e pelerinach d'ar gear a Douloz, evit enori ar relegou santel a zo eno calz anezho. Doue a reas dezhan caout en he belerinach kemend a joaiou ma'z oa he galon barr a levenez. An oll dudiou, emezhan, euz ar bed-ma lakeat assambles, ne oant netra e scoaz an dousder a veuze he galon.

E creiz an oll joaiou-ze, ne ancouna-c'heas ket ar scolaerien en doa gounezet

da Zoue er gear a Ajen. N'en doa ken sonj, ken soursi, nemet lacaat anezho da vont en hent ar zantelez, ha da ober fañ var ar bed. Scriva a reas dezho, evit lavaret pegen important eo en em lacaat e doare da gemeret eur stad a vuez. Al lizer-ze eo furnez Doue, setu ama eul lodennic anezhan :

« Va breudeur ker, ra vezo peoc'h Jezuz-Christ ganeoc'h. Grit ma vezo var eun dro ho studi var ar zantelez, coulz ha var descadurez traou ar bed. Rag evidoc'h da veza habil ha gouiziec, e tleit ive beza santel ha vertuzuz. N'int ket henvel an Theolojien a oar calz traou heb pratica ar mad, hag an Theolojien, cuspen m'endeuz descadurez, a boagn da veza eun den a zoujans Doue. Stank an dud a zo e poan da veza desket caër, rouez avad eo ar re a glasc beza vertuzuz. Evidoc'h-hu, ra vezo an dra-ma bepred dirag ho taoulagad, deskit beza santel ha deskit santelaat ar re-all.

» Evit-se o peuz da boania evit beza tud habil. Truez braz am euz oc'h eur maread tud yaouanc n'o deuz na tro nag amzer d'en em roi d'al labour, ha gouscoude e vevont e doujans hag e carantez ho Doue.

Labourit ive da veza tud vertuzuz : rag truez em euz muioc'h c'hoas oc'h eun darn dud desket braz, var ho meno, mes siouaz ! ne ouzont ket en em drec'hi. Nag an eil seurt nag egile ne d'int mad da henchha an eneu.

« Evidoc'h-hui, n'en em emellit ket da vleigna ho preudeur, ma n'o peuz ket var eun dro gouiziegez ha santelez. Setu aze perag, va breudeur ker, e pedan hag e aspedan ac'hanoc'h, en hano hor Zalver Jezuz, da joaz eun tad covessour gouiziec ha santel hag a ziskuezo deoc'h penaoz ober ar mad o peuz desket... Beza parfet, silaouit-hen mad, n'eo ket en em denn euz ar bed, guisca mezer-ballin, dibri nebeut, ober pinijennou calet, chom pell var vale ha sevel mintin. Beza parfet eo stlapa er meas euz ho calon sonjezonou ar bed, chom el lec'h ma en deuz Doue lakeat achanoc'h, en em zisprizout oc'h-unan, beza laouen pa vloc'h disprijet, ober faë var draou an douar hag en em drec'hi kement ma helloc'h. Aze ema ar berfession, an hent en deuz great hor Zalver Jezuz-Christ he-unan. »

EISVED KENTEL

Dom Michel e Bourdel o studia an theoloji. — He garantez evit an dud paour ha dister.

Peb tra a c'houlen ma ve lakeat d'hen ober an amzer ma zo red. Hogen hirio an deiz, e faller ober en eun taol-count ar pezh a c'houlen beza great gant an amzer. Guelit an hini en deuz c'hoant da zeski eur vicher; a boan ma en deuz lakeat he zorn var eur benvec, ma cred beza eur micherour braz ha gouiziec. Eun den yaouanc ne oar ket c'hoaz douja d'he dud, en deuz mall da veza mestr, evit hallout commandi.

N'e ket gouscoude er c'hiz-se eo e tle mont an traou. Guelit an heol : ne zav ket a daol, a nebeudou eo e teu da zevel hag ouz he heul ema ar sclerijen, ar vadelez. Ar c'hreunen ed ne zioan, ne zidenv ket kerkent ha ma vez taolet en douar; ne

ra ket var eun dro ha plouzen ha greunen, ha mar teu zoken re vuan da vlouzenna ha da c'hreunenna, ne vezo ket mad.

Dom Michel en deuz ive eun tamm labour da ober, kemeret avad a raio he amzer. Bez' en deuz eur vicher da zeski, guir eo n'e ket eur vicher euz an douar, micher an Elez, micher hor Zalver he unan eo. Mes nag en eni zastum e goueled he goustians abarz tostaat ous ar velegiach, ha ne entent ket e iaffe hini ebed euz he anaoudegez a daol da gemeret eur garg ker pounner, heb beza pell amzer pouezet ar bec'h-se ha gullet ma'z eo he ziscoaz cre aoualc'h evit he zougen.

Mont a ra eta da Vourdel da studia an theoloji epad pevar bloaz leun. Ar c'henta tra a reas, pa oue erruet, oa clasc eur gampric pell ouz peb trouz, e lec'h ma en dije hallet en em rei euz he oll nerz d'ar studi ha d'ar beden. Eno e labouras dalc'h-mad, epad pevar bloaz, da anaout clenvejou an ene, hag an doare d'ho louzaoui, d'ho farea. Evit-se e silaoue hag e teske-piz ar peza lavare he vistri. Ouspenn, mont a reas ive beteg ar zoursen ma'z ea he professed, me lavar e studias sant Thomas mestr an theolojiañed.

He blijadur a oa dreist pep tra lenn ar Scritur-Zacr. Labourat a reas kement, ma ouias heb dale, eme unan euz ar re a ioa o studia assambles ganthan, a zindan eor ar Scritur-Zacr penn-da-benn e langach grec. Netra iston eta, ma lavaras unan euz he vistri ez oa Michel an desketa den euz a Vreiz.

Ma oa brudet Michel dreist ar re all dre he zescadurez, e oa c'hoaz calz muioc'h en tu all dezho dre he garantez evit he grouer. En em rei a reaz euz oll nerz he ene d'ar beden a galon; ha Doue, evel m'eo merket var baperiou Michel, o velet he volonteaz vad ha beoder he feiz, a blijas ganthan lavaret: « Deuit euz traon an daol ha pignit hueloc'h. » Neuze azezet fas ha fas gant he Zoue, edo evel beuzet gant ar sclerijen a goueze varnhan a bep-tu. Hueloc'h evit an douar ha traou ar bed, an drouc-spered zoken ne halle ket tizout beteg ennhan. Ar Spered-Santel he-unan eo he gentellie, a leunie he spered gant ar guirionesiou euz ar feiz. Ar guirionesiou-se a veuze hag a vage he galon. Spered Doue a ioa eat down en ene Michel, hag, o veza prennet cloz an doriou, e tarremprede an diabarz ennhan, e comze

dous outhan, e roe dezhan eur peoc'h dudiuz.

Adaleg an amzer-ze, Michel a valea bepred er guel a Zoue. N'oa mui evithan nemet lezen ar garantez. An aoun, ar spount rag barnedigez Doue, an interest en deuz peb den da veza salvet hag eüruz, eun devez da zont, n'o doa mui a c'halloud var he galon. Doue a zo mad, ha dreist peb madelez, setu aze ar pezh a zanje dre ruiou kear, n'euz forz dre be lec'h ez ea; setu aze ar pezh a rea he joa. Doue a skuillas var galon Michel kemend a joaiou, ma zeuas he gorf da gaout he lod, ha ma oa red dezhan eun devez en em daoler en dour sclasset beteg he c'houzoug, o veza ne halle mui herzel ouz tan ar garantez divin.

Evit diskuez he anaoudegez vad e kenver Doue, Michel a oa mall ganthan gouzanv bep seurt poaniou. Beza casseet, bresset a zindan an treid oa he blijadur. Nag a boan e kemere evit digass er guir hent an eneou prenet gant goad hor Zalver ! Setu perag e castize he gorf oc'h en em scourjeza, o chom heb dibri nemed ar pezh ma oa red evit dalc'her buez en he greiz. Cousca a rea var an douar ien, ha

ne gemere morse pers e joaiou he gamaraded, petra bennag ne oant ket difennet. Rei a rea zoken he scoden evit pourvei d'ho flijaduresiou, hac er c'hiz-se ne gavent hano ebed ennhan, hag e reant anezhan ar brasa meuleudi. Mes kerkent ive e pede da verrenna ouz he daol ar scolaerien paoura ne hallent ket mont da heul ho c'hamaraded all. Kement-se ne oue ket diez braz dezhan; rag he dad, oc'h anaout he furnez hag an implij mad ma rea Michel euz ar pezh a veze etre he zaouarn, a zigasse dezhan muioc'h eget na c'houlenne. Ouspenn, « hon Tad pehini zo en env, » a gemere plijadur o pourvei d'he aluzennou. Aliez ar scolaer santel a gave evit soulaji an dud reuzeudic arc'hanchou, ha den ebed ne ouie na penaoz nag a belec'h oant deut.

Epad ebatou ar scolaerien all, Michel a dremene he amzer o vont da gass euz a berz an dud vad aluzennou d'an Tadou Capusined. Goude ez ea da velet an dud clanv en hospitaliou, hag ar beorien mezuz en tiez paour; erfin ec'h echue he bourmenaden en eur vont da adori Doue en he dempl santel.

Mes, ma en doa Michel soursi euz

izommou ar c'horf, en doa c'hoaz muioc'h euz izommou an ene. Sevel a reas eur vreuriez, evit dalc'her ar feiz beo e touez an dud divar ar meaz. Er vreuriez-se e oa he gamaraded a studie an theoloji hag a oa bet gounezet ganthan da zervich Doue. Mont a rejont daou ha daou, evel guechall diskibien hor Zalver, da gement parrez a ioa tro-var-dro da Vourdel, evit deski ar religion d'ar re zister, diouall ha maga ho feiz.

Ho labour a ioa binniget gant Jezuz, hag, o velet ar frouez, an oll a lavare a vouez huel e oa eno biz Doue. — Dom Michela oakustum da lavaret : « Ar c'hatekiz great a zoare a zoug aliez muioc'h a frouez eget ar zarmoniou braz. Ar rema a zo henvel oc'h eun tantad tan raden a ia beteg an oabl, hag eur pennadic goude a losc an oaled ien sclass. Er c'hontrol, ar c'hatekiz a ra anaout Doue ha dre eno he garet hag he zervicha beteg an heur euz ar maro. »

EIL LEOR

DOM MICHEL OC'H EN EM BREPARI DA RESEO
AN URSIOU HA DA LAVARET AN OFEREN

KENTA KENTEL

An deg carrec didruez

Epad c'huec'h vloaz, Dom Michel en doa poaniet da veza desket ha santel, evit beza e stad vad da reseo an ursiou sacr. Mes dont a reas sonj dezhan oa chomet sant Ignas, goude ma en devoe great he Dheoloji, eur bloaz leun o pedi Doue hag oc'h ober pinijen. Clasc a reas bale var he rou-dou e kement-se, egiz m'en doa great bete neuze e meur a dra all. Setu perag, o veza echuet he studi, ez eas e pelerinach

da eur chapel savet en enor d'an Itron-Varia, evit he zrucarecaat euz an oll zoursi e doa bet anezhan epad ar pevar bloaz ma oa chomet er gear a Vourdel. C'huec'h miz e tremenas goude oc'h en em rei d'ar rusta pinijennou. C'ousca a rea var an douar-ran pe var eun dornad plouz, ne zouge ket a gresiou, yun a rea bemdez, noz ha deiz cazimant e pede a greiz calon.

Goude ma oue en em breparet evelse, e tistroas da vaner Kerodern da gaout he dad hag he gerent all. Joa oa gantho guelet Michel desket braz ha vertuzuz. Sonjal a rejont e vije bet enor ha gloar ho familh. Setu perag oa kemend a vall gantho guelet Michel o vont da veleg, en esper ma teuje buan da gaout eur garg vraz bennag. Dija, var ho meno, en doa tremenet amzer aoualc'h oc'h en em brepari; poent braz a oa dezhan enori he familh ha renta servich d'he vro.

Michel a responte : « O veza ma'z eo carg ar beleg hueloc'h eget hini ar Rouanez hag an Impalaered, e oa ive diessoc'h he ober mad. Nebeud a dal caout an oad merket gant an Iliz, ma vezer heb ar vertuziou a zo red evit ober ervad de-veriou ker santel. Mar d'ez euz calz enor

oc'h heul ar stad-ze, ez euz ive meur a zanjer; furnez e ve eta en em brepari hag en em lacaat e stad vad abarz mont beteg keit. Aliez an den a gemer eur stad a vuez, heb beza sonjet aoualc'h hag hen zo galvet gant Doue. Goude tout, emezhan, pell oun da veza ken habil ha ker santel hag eur maread sent, evel sant Augustin. Hogen ar zent-se o sonjal pegen huel eo ar velegiach, o sonjal ar gont striz a c'houlennno Doue digant ar veleien, a zo chomet en eur grenn an hirra m'o deuz hallet, abarz kemeret eun hevelep carg.»

Me a gred e teuas ar rezoniou-ze da boueza, epad eur pennad amzer, var spe-red he dad hag he vam, tud a feiz hag a zoujans Doue. Mes mont a rejont a dra zur doun-doun e calon Michel. Evithan, eur beleg a zo var eur mor braz ha criz; he vagic a zo bian ha dister ha var ar marc'had eo goal garget. Aze var he hent hag a bep tu, ez euz deg carrec didruez hag ar mare a gass gant tiz beteg ennho.

Bemdez e clever var ar meaz coulz hag e kear :

« Kea, va c'hrouadur, kea da veleg; hounnez a zo eur vicher eaz ha profitapl. Be vezi, gant an amzer, cure pe berson.

Er c'hiz-se e vezi dreist ar re all er barrez. Eaz e vezo did sicour da gerent hag ho sevel huel. Er vicher-ze e vever eüruz, boed dibab da zibri, ha nebeud a labour da ober. »

— Er c'homzou-ze, eme Dom Michel, ema an deg carrec criz ha didruez a gav peb beleg var he hent.

1. Ar garrec genta, zo merked varnhi gant lizerennou guen : manc a vocation.

C'hui lavar var ar meaz hag e kear : Kerz da veleg. Ha n'ouzoc'h-hu ket eo Doue hebken eo a deu da lavaret d'an den yaouanc : — « Sao euz traon an daol ha pign hueloc'h. » Ha n'ouzoc'h-hu ket eo Doue eo a lavar : « Va mab, deuz ganen-me, me a vezo da loden da heritach var an douar ha da gurunen er baradoz. » Ne ket an den eta eo a deu d'en em zibaba euz a douez he vreudeur, Doue eo a daol he lagad varnhan; *non vos me elegistis; sed ego elegi vos.*

Tadou ha mamou, sonjit ervad.

2. An eil carrec a zo merket varnhi : manc a c'hloar Doue.

C'hui lavar var ar meaz hag e kear, ar velegiach zo eur vicher eaz. — Ne d'eo ket, eme Michel Noblet, ken eaz ha ma

sonjit. Petra e teuffe da veza eur beleg ha ne glascfe nemed he ezamant. An nep zo beleg a zo beleg evit gloar Doue. Hennez a ranc, evel pa lavarfen, divisca an den ha guisca Doue, lacaat Jezuz-Christ en dro dezhan hag enuhan evit ma vezo bleiguet ganthan. Guelit ha crenit kemend ac'hanoc'h a zonz tostaat ouz eur stad ker santel.

3. Setu ama ar peza a velomp skrivet var an drede : paourentez.

C'hui lavar er bed : hounez a zo eur vicher profitapl ha pinvidic. Mad ! Dom Michel a lavar : Ne dostait ket ouz ar garg-se evidoc'hui peorien.

Ne gredan ket e ve he zantimant clasc miret ouz eun den a glev mouez Doue ouz he c'hervel, evit beza n'en deuz nag arc'hanchou, na leve caër. Jezuz a ioa calvez, an ebestel n'o doa ket a aour, sant Per a oa eur paour keaz pesketour. Ar baourentez ma comzer ama anezhi eo paourentez ar re en em gav ato paour, a zo stag ho c'halon ouz madou an douar. Arabad e ve d'ar seurt tud-se mont lar-coc'h, rag ancounac'haat a raffent buan eur stad ker santel evit en em rei d'al labouriou interesset ha n'int ket deread.

4. Var ar bederved carrec, setu ama ar pez a velan scrivet : manc a vouiziegez.

Beza cure, beza person, beza covessour, a zo eun dra vraz. Piou a lavaro an descadurez, ar vouiziegez e tle caout an hini a deu da ziscleria bolontez Doue d'ar bobl, an hini eo he stad furcha calon an den, anaout ar voazien guiridic ha taget, ha lacaat an houarn ruz da zevi pe an eol da zousaat, dioc'h m'eo ar c'hlenved ? Neb a zo carget da vleigna ar re all a dle guelet scler, mar d'eo dall e couezo er foss gantho. Diessa micher, pa'z e guir eo micher an elez, micher Doue !

5. Var gern ar garrec-ma e lenner : ourgouil. « Ia, eme Dom Michel, trist e ve doare eur beleg ne glascfe nemet beza guelet ha savet dreist ar re' all. Seul hueloc'h eo, seul izeloc'h e tle beza a galon, anez ema al lamm braz e kichen. Doue he-unan eo a lavar e ro he c'hras d'ar re izel, d'ar re humbl, hag a zalc'h penn ouz an dud ourgouilluz. »

6. Ar c'huec'hved carrec a zo aze prest da vrevi kement a stoco outhi, eo ar c'hoant direiz da blijout d'ar bed. Hervez lavarjou an dud : « Eürus ar veleien, o

veza ma vezont resevet mad gant an oll. » Siouaz ! truez em beffe ouz eur beleg a lacaffe he blijadur da blijout d'ar bed, rag ne valefe ket a dra zur var roudou he vestr, var roudou hor Zalver. » Sant Paol en deus lavaret : Doue ra viro e clascfen plijout d'ar bed, ma glascfen-me plijout d'an dud, ne blijfen ket da Zoue, ne ven ket servicher hor Zalver Jezuz-Christ.

7. Be ez euz eurgarrec all hag a zomerket varnhi : carantez dreist voder evit ar c'herent. Kerent ar veleien a zo aliez var c'hed ouz madou braz, evel pa ve dever eur beleg beza piz ha scaign evit ho finvidicaat. Aze eo ema ar fazi gantho.

Ar beleg, silaouit mad, n'eo ket beleg evit he gerent, evit Doue eo ; ha mar en deuz eun dra bennag da zioueret, eo kentoc'h lod ar paour eget preiz he dud. Ar beleg eta a vezo var evez var gement-ma, rag ma silaou re mouez ar goad e caledo he galon ouz mignoned Jezuz, ouz ar beorien.

8. Var ar garrec a zo a-hont e lennan : boed dibab. — Evit eun darn dud, an eürusded a zo eun dinel gaër ; ho flijadur a ve caout bemdez boed c'hoec d'ar galon, hag o varn ar re all dioc'h outho

ho-unan, e lavaront : Nag ar veleien a zo eürus ! Ar beleg en deuz, hen anzañ a ran, bara flourc'h da zibri evit hini al labourer douar ; he labour scanvoc'h a gorf a c'houlén kement-se. Mes ma ve unan-bennag reuzeudic aoualc'h evit redéc var lerc'h ar seurt boedou, éma a-hont ar garrec a zeuio heb dale d'he vrevi.

9. Ama a gostez éma carrec ar feneantiz.

Lod euz an dud a zonz dezho, ar beleg lavaret he offeren, eo echu he zevez, he labour ganthan. Evit Dom Michel n'eo nemet kemend acommanset. An theoloji, an histor, ar Scritur Zacr, al labouriou all euz he stad a zo oc'h he c'hedal.

Peb den en deuz da labourat hervez ma en deuz Doue merket dezhan ; mes ar beleg dreist peb tra a dle poania stard, rag n'e ket evit an dud, evit an amzer, evit Doue, evit an eternite eo e boagn : He labour, setu ar peñ en diouallo e creiz ar bed diouz an ezenn fall a zav a bep tu dezhan.

10. Var ar garrec diveza e velan scrivet e lizerennou ruz : manc a zevosion.

Hag en deffe eun den a iliz tremenet heb drouc ebet an nao garrec all, ma n'e

ket eun den a Zoue, e ielo buan gant ar mare var ar garrec-ma hag a dorro he c'houzoug heb mar ebed. En dro d'ar garrec digalon-ze, ez euz bet meur a bense, cals tud e deuz guelet o vont d'ar goueled da strad. Ne veler nemet plench, dillad, hag ar mor a zo rusiet gant ar goad tro-var-dro dezhi. Allas ! lod euz ar re a zo tremenet dre eno, n'o deuz ket atao sentet ouz speret Doue, ha

Neb ne zent ket ouz ar stur
Ouz ar garrec a rai zur.

Netra iston eta mar d'eo deut Dom Michel Nobletz, abarz avanturi he vagic var eur mor ker rust ha leun a gerrec ken treiz ha ken criz, da daoler evez en danjeriou a zo evel hadet a zindan treid ar paour-keas beleg. Ouspenn, ho merket en deuz var he baperiou evit ma hallo ar re a zeui var he lerc'h en em denn euz ho zouez heb drouc na glaz ebed.

Kement-se a ziskuez scler n'euz nemed ar re a zo galvet gant Doue, ha n'e ket gant an dud, eo a hello fisiout ho buéz en eur stad ken enoruz evit guir, mes ive ken danjeruz.

EIL KENTEL

**Michel Nobletz a dec'h araog enoriou
ar bed. — Goal-gasset eo evit-se gant
he dad ha gant he vamm. — Reseo a
ra an ursiou sacr.**

Ar c'herrec didruez-se, evel hadet e creiz eur mor criz ha spontuz, a ioa ato en he spered noz ha deiz. Avechou e creiz he gousc e crede beza en he vagic, gueleet a rea dirazhan an deg carrec, clasc a rea endra helle en em viret outho ; mes siouaz ! aliez ar mare, gant tiz, a gasse anezhan varnho. Ker buhan e tihune, ar c'huezen o pizenna en dro dezhan hag oc'h he c'hlebia.

Setu aze perag, evithan d'en em zantout galvet gant Doue da vont en ursiou sacr, e taleas c'hoaz abarz kemeret eur bec'h ker pounner, hag abarz fisiout he vuez var eur mor ken danjernuz.

Mes ar zantimant-ze ne oa ket santi-

mant he dud. Daoust hag he dad ne oa ket unan euz ar pevar noter a rea afferiou bro Leon ? Daoust ha n'en doa ket ar vrasa anaoudegez ouz an autrou Rolland de Neuville, neuze escop Leon ?

Mont a reas eta da Gastel-Paol evit senti ouz he dad. Piou a lavaro, gant pebez joa, e vriatas an autrou'n Escop an den yaouanc-se euz a ouenn goz, ha ken brudet dre he skiant hag he zantelez ? Michel, gant he spered eün ha lemm, a gomzas dirag ar veleien desketa, divar benn an theoloji en eun doare ma'z oa souezet an oll oc'h he glevet ; ouspenn, he ear dous ha modest a ioa c'hoaz trec'h d'he furnez ha d'he vouiziegez. Dioc'h-tu an autrou'n Escop, evit diskuez ar stad a rea ouz Dom Michel, a ginnigas dezhan ar c'henta-cargou a vije digouezet en escopti.

Calon he dad a zridas gant joa o velet en doa eur mab ker brudet. Setu perag, evit he droi var zu gloar ar bed, e reas ober dezhan dillad nevez flamm euz ar mezer ar floura, evel ma zouge an dud a Iliz pinvidic hac a ouenn huel. Mes Michel, o sonjal en doa prometet da Zoue ober faë var draou ar bed, a gemeras huan

he zillad coz, hag a roas he zoudanen gaër hag he zaë satin da eur paour keaz beleg guisket gros. Eur pennadic amzer goudeze, ne oue ket nebeut souezet an autrou de Kerodern o velet en eul lec'h gouez ha distro, var dro eur beleg, an dillad nevez great gant ar pinvidica danvez. Kemend a zrouc a ieas ennhan ma ziframmas an dillad-ze divarnhan, ha ma'z eas var eün-tenn d'ho c'hass da Vichel, en eur rei dezhan a bep seurt rebechou. Hema a zilaouas heb lavaret ger, ha pa en oue he dad echu he scandaladen e comzas outhan gant kemend a zouder, ma ziskennas an autrou de Kerodern ennhan he-unan, ha ma'z eas ractal da gass ar zoudanen hag ar zaë satin d'ar paour-keaz beleg m'en doa ho lamet diganhan, ha ma c'houlennas pardon da veza bet ken rust en he genver.

Gouscoude ann autrou de Kerodern a zalc'he startoc'h eget morse ma en dije Michel resevet an ursiou sacr. Comzou an autrou'n Escop a dinte ato en dro d'he ziscouarn. Dres neuze ec'h en em gavas eur garg huel. Piou a lavaro ar pez a reas he dad, evit helacaat da c'houlén ar garg-se ! Hag an autrou'n Escop n'en doa ket

lavaret : goulennit hag e pezo. Ouspenn, er plas-se Michel en dije hallet beva en eun doare deread, e lec'h o chom er c'hizse, n'en divije bet nemed an decved euz an drederen euz madou he dud, rag, hervez kiz ar vro, he vreur hena a dlíe caout he-unan an diou drederen.

Braz e cavas eta clevet Michel o lavaret : ne oa tamm ebed galvet d'ar stad a vuezse ; he ziouscoaz ne oant na cre na ledan aoualc'h evit kemeret eur bec'h ker pounner. Evithan e crede stard ez oa galvet gant Doue da labourat e Breiz-Izel, evit hench a an dud divar ar meaz var zu ar baradoz. « Erfin, emezhan, guelloc'h a ve ganen beza carget da ziuall al loaned, eget pignat ken huel, ha beza carget da c'houarn ar bobl. » He dad, o clevet ar respont-ze, à ieas kemend a zrouc ennhan, ma lavaras gant eur vouez trenc, n'en doa nemet mont gantho. Dioc'h-tu var an tomm e c'hourec'hemennas ma vije eat Michel d'ho c'hass da beuri.

Hon autrou santel, o c'houzout ervad e plije da Zoue en eur reüs ar plasou huel, a ioa joa ganhan da veza bet cavet mad da c'houzanv eun dra bennag evit he vestr. Mont a ra eta Dom Michel Nobletz mab

d'ann autrou de Kerodern ha da Franseza de Lesvern, Dom Michel Nobletz ar goui-zieca, an desketa euz Breiz, mont a ra ama, a-hont, du-ma, du-hont, da ziouall al loaned. Eüruz ha laouen en em gave ; rag goude tout, pegemend a zent, pegemend a batriarched n'o doa ket great ar memes micher ? N'e ket, silaouit mad, n'e ket hen eo a skuizas ar c'henta oc'h ober micher paotr-saout. Prest goude en doa urz da guitaat ti he dad, heb damant na truez ebed outhan.

En em denn a reas neuze da di an hini e doa bleignet he vloavesiou kenta, da di he vagerez. Gouzout a re a pegemend oa caret gant ar c'hreg-se leun a vertus-siou, paour avad a vadou an douar. Bez' e devoa evithan carantez e deuz eur vamm evit he mab, pa ne deuz ken crouadur nemethan. Chom a reas eno, epad meur a viz er brasa dienez, evel an diveza euz an dud, mes joa a ioa ganthan bale varlerc'h roudou he Vestr, ha ren he vuez dioc'h buez kuzet hor Zalver Jezus. En eun ti soul en em gave mil guech eürusoc'h, eget ar re a zo o chom en tiez ar c'haëra er c'hamprou arc'hantet pe alaouret. Dougen a re a dillad groz, hag he

voed a ioa boed paour al labourerien douar. Ma ne halle ket prezeg gant an dud habil divar benn an traou huel, piou a lavaro ar pezh a veze etre Roue an Env hag hen. Tremene a re a he amzer oc'h en em rei d'ar beden a galon, o lenn ar Scritur-Zacr, hag oc'h ober oberou mad. Bemdez ez ea dre ar c'heariou, boda a re a en dro dezhan ar vugale, hag ho c'hentellie var ar c'hatekiz, ha var ar pezh a Zell ouz servich Doue. Ne oa ket aoualc'h evithan beza paour, mont a re a choaz tro-var-dro da glasc an aluzen, evit caout pe a dra da visca ha da vaga ar beorien mezuz euz ar barrez.

Michel, guisket evel al labourerien douar, o vont euz an eil kear d'eben da gelen ar vugale, a oa kemeret gant he gerent tosta evit eun den diskiant, ha gouscoude, emezho, nag en dije gallet rei sked hag enor d'he famill ! Penaoz mont da guzat en douar kemend-all a zonezonou caër bet digant Doue ! Ah ! an dud-se ne ouient nag e pe lec'h nag e petra ema eürusded ar zent. Michel avad, oc'h en em zantout galvet da lacaat goad mab Doue da zougen eost puill ha teo, a grede ne halle ket beza guelloc'h e tro da ober an tamm

labour-ze eget oc'h ober faë var istim ha var ezamanchou ar bed. Neuze en em gavas henvel ouz eun den hag en doa savet ti var ar garrec. Dont a reas barrou-glao, barrou-avel, barrou-dour-beuz euz ar sterioriou; mes caër o devoue fouetta an ti a bep tu, e chome stard en he za abalamour m'edo fountet var ar garrec. Er c'hontrol, an hini a glasc istim hag ezamanchou ar bed a zo ec'hiz an hini en deuz savet ti var an treaz, var ar zabl; mes dont a ra ar glao, an avel dijadennet, an dour-beuz, ha kerkent ema an ti d'an traon, couezet en he boull. Ar garantez evit an enorion, a viro eta ouz gliz an Env da goueza var ar missionner, ha var an eneoù a glasc gounit da Zoue.

O veza bet he oualc'h a vez hag a zismegans epad ar c'huec'h mis a dremenas eno, Michel en em zantas pouezet gant spered Doue da vont da Bariz da glasc eun tad spirituel gouiziec, evit hallout en em glevet ganthan var ar pezh a c'houlenne Doue oc'h outhan. Lavaret a reas aliez: bolontez Doue eo ma ve an den renet gant an den. Heb eun tad covessour mad, emezhan, ne heller ket en em viret euz

ar c'herrec didruez ma'z euz bet hano ganeomp.

Mont a reas eta, leun a fisians, da gaout he dad, da c'houlenn ma plichez ganthan he lezel da vont da Bariz da studia, araog kemeret an ursoù sacr.

An autrou de Kerodern, leun a joa o velet Michel o tont beteg ennhan, hag o sonjal oa deuet ennhan he-unan, a vrias he grouadur muia caret, hag a roas dezhan pe a dra da ober he veach.

Michel a ieas da zilaou an doctored ar brudeta euz ar gear a Bariz. Goude en em roas a zevri da studia an hebre, evit hallout compren guelloc'h ar Scritur-Zacr a gare kement.

Mes he vrasa soursi a oue caout an tad spirituel ma'z oa eat di da glasc. O veza clevet hano euz an Tad Cotton, covessour ar roue Herri IV, ez eas heb marc'hata d'he gaout. Displega a reas dirag an den gouiziec-se an oll feuilennou euz leor he goustians. Roi a reas dezhan da anaout ar sclerijen en doa spered Doue lakeat da bara ennhan. Conta a reas var eun ar pezh e doa great an Intron Varia en he genver. Hi eo e doa renet he vugaleach, hi eo e doa desket dezhan pedi e chapel Kero-

dern, hi eo e oa en em ziskuezet dezhan evel m'ema-hi en env, hi eo e doa roet dezhan an teir gurunen. Niveri a reas ar grasou extraordinalen doa skuillet Doue gant largentez en he galon. He du guiridic, emezhan, a oa caout aoun da goueza a zindan disprijans ar re all; mes gant sicour Jezuz e oa deut a benn da ober fae var draou ar bed, ha da veza laouer hag eüruz, pa veze disprijet gant an dud. N'en doa ken mall, emezhan, nemet roi he vuez oll evit savetei eneou he vreudeur e Breiz-Izel.

An Tad Cotton, soüezet o velet kemend-all a c'hrasou puill o ficha ar memes calon, a skuillas dañlou a joa. He alia a reas da reseo, ar c'henta ma divije hallet, ar velegiach, ha da ren he vuez hervez ar sclerijen en devoa roet Doue dezhan evit he c'hloar ha silvidigez an eneou.

Mouez he dad covessour oa evit Michel mouez Doue he-unan, ha setu perag, heb dale pelloc'h, e resevas ar velegiach. Ober a reas ar bromessa da vale var lerc'h Jezuz er stad huel-ze.

TREDE KENTEL

An istim en doa Dom Michel evit stad ar veleien. — He zantelez er stad-ze.

Setu eta beleget Dom Michel Nobletz.

Piou a lavaro an anaoudegez en doa Michel e goueled he galon evit Doue, abalamour ma oa plijet ganthan he zével en eur stad ken huel? Ne vancas devez ebéd a hed he vuez da veuli he Grouer. Bez e oa var ar poent da vervel, hag e pede an hini a gemere soursi outhan da zigass sonj dezhan euz eur c'hras ker braz, ha d'he zicour da drugarecaat Doue evit he vadelez en he genver.

Petra bennag ma en doa tremenet c'huec'h vloaz leun evit beza e stad vad da reseo ar velegiach, e crede gouscoude n'en doa ket c'hoaz taolet evez aoualc'h, abarz pignat ken huel. Aliez e lavare d'he vignoned, ma en divije Doue roet dezhan da anaout pegen pounner eo carg ar beleg,

ha pegemend a vertusiou a dle caout ar re a c'hoanta mont da veleien, biken n'en dije bet hardizegez aoualc'h da zamma var he chouc eun hevelep carg.

He spered hag he galon oa carget gant ar zantimanchou-ze. Piou eta a lavaro pegemend en em breparas Michel, araog tostaat ouz an aoter evit ar vech kenta? Ne oa e diabarz ennhan hag en dro dezhan nemet Doue. Mont a reas, evit plijout d'he dad ha d'he vam, da lavaret he offeren genta da Blougerne.

Hogen bez' e oa en amzer-ze eur c'hiz divalo, hag a drugarez Doue n'ema mui er vro-se, ar c'hiz da bedi eur pevar pe bemp cant den en devez ma tlee ar beleg yaouanc lavaret he offeren genta. An dud-se oa kerent, mignoned hag amezeien. Var digarez roi eur prezant bennag d'ar beleg nevez, e tremenent an devez-se hag an daou zevez var lerc'h er fest hag en dans. Michel ne fellas ket dezhan plega d'ar c'hiz-se. N'en doa en dro dezhan en devez-se nemed he gerent tosta, hag e vize bet criz euz he berz ho lezel a gostez. Ar fae a re a var traou an douar a vire outhan da lezel tremen eus gouel ken caer e plijaduresiou hag ebatou ar bed. Evithan,

an devez-se oa eun devez da veza tremenet e joaiou an env, e joaiou hag a dle kentoc'h beza tanveat e goueled ar galon, eget na dlefent para a ziaveaz. Kendalc'her a reas ato da offerenna, ha goude beza en em lakeat er c'hiz-se ar guella ma helle e stad vad da dostaat ouz he Zoue, ne bigne morze ouz an aoter, nemet great en dije en devez araog eur binijen galet bennag.

D'an taol a hanter-noz, Michel oa var zao evit en em brepari d'ar sacrificis santel a iea da ginnig da Zoue an Tad. Epad div heur, e rea seiz exersis spirituel a gaver hirio an deiz skrivet ganthan, en eul leoric bian great a baper croc'hen.

O credi stard e hellint servich d'ar re a lenno kement-ma araog ma dostaint ouz an Autrou Doue er Zacramant ouz an aoter, meulet ra vezo, em'oun o vont d'ho merca ama.

Kenta exersis. — Credi a re a en he spered gulet gant daoulagad he gorf hor Zalver Jezuz-Christ, Doue ha den assambles. Credi a re a he velet, guech evel m'edo gourvezet var eun dornad plouz er c'hraouic a Vethleem, pe c'hoaz etre divrec'h he vamm zantel; guech evel m'ema er baradoz en he c'hloar azezet en tu diou d'he Dad;

guech all evel ma vezo pa zeui da varn an oll dud da fin ar bed. Er feson-ze e vele, dre daoulagad ar feiz, he Zoue evel he Zalver, he roue hag he varner.

An eil exersis. — Araog pignat ouz an aoter e claske, kement ma helle, caout eur galon sioul hag e peoc'h, ar pezh a blij kement da Zoue pa c'hoanta ober he zisken e diabarz an den. Evit-se e pellea outhan, n'e ket hebken an traou oll a zo var an douar, mes stlapa a rea c'hoaz, ar pella ma helle ouz he spered, kement soursi, kement c'hoant, kement sonj all, evit beza he unan-caër gant he Zoue, evit comz outhan calon ha calon, clevet ar c'homzou dudiuz a lavar d'an ene mad he zilaou. Ar pezh he zicoure evit dalc'her cloz he galon d'an traou a ziaveaz ha mervel da drouz ar bed, oa ar zonzj e tlie heb dale mont da veza barnet. Neuze e crene euz he oll izili evel eur barr delliou, ha n'en doa mui dirazhan nemet he Zoue hag he varner.

An drede exersis. — An intansion pur eo ar sclerijen a ro priz ha gened da gemend a ra an den. Piou a lavaro pegen pur e veze intansion Dom Michel, abarz tostaat ouz Doue, soursen an oll intansionou pur

hag an oll zantelez. En he beden a galon e offre ar zacrisfis santel, a dlle kinnig goude euz an aoter, evit renta da Zoue ar gloar dleet dezhan. evel crouer an env hag an douar, ha mestr var gement tra zo. Hag egis sacrisfis ar groaz a zo infini, ar beleg santel a ginnige Jezuz-Christ d'he Dad evithan hag evit ar re all. Hen offri a rea, evit he izommou, evit he bec'hejou, mes ive evit izommou ha pec'hejou ar bed, evit delivransan anaoun. Ouspenn, goulenn a rea, dre ar boed heb he bar a dlle kemet ouz an aoter, an nerz en doa izomm evit dalc'her penn ouz enebourien gloar Doue a glaske bepred lacaat disparti etrezho.

Ar pevar exersis. — En exersis-ma, Michel a rea ouz he galon eul lec'h propr ha kempenn evit rei digemer mad d'he Zoue. Netaat, pura, goalc'hi, coara a rea an diabarz, evit gellout digemeret en eur gampric gaër an Doue a guitee palez alaouret an Dreinded evit dont da jom ennhan. Evit-se e coessea piz he bec'hejou, e vouele dourec dezho, hag e oa hero he galon gant ar garantez evit he Zoue. Practica a rea ouspenn ar mortificationou a

grede oa ar guella evit en em zistaga neat ouz an traou crouet.

Ar bempet exersis. — Evit ma en divije muioc'h-mui a respet evit eur mister ken huel, Dom Michel a lakea kichen ha kichen, pegemend e oa dister, paour a beptra, leun a drubuilou, goloeta bec'hejou, ha pegement Doue a ioa santel, braz, pinvidic, leun a berfescionou. Neuze oc'h en em anaout guelloc'h-guella, ha goloet a vez dirag he zaoulagad, e scanvea he galon dre bedennou berr tennet euz ar Scritur-Zacr hag a iea evel birou bero var eun-tenn a dreuz an oabl beteg calon Doue :

« N'eo, o va Doue, n'eo nemet goloet a
» vez ma credan sevel va daoulagad var zu
» ennoc'h. Rag dour-beuz va fec'hejou a
» zav, a zav beteg tremen divar va fenn,
» ha savet eo zoken azioc'h d'ign beteg an
» env. Just eo eta, va Zalver, ma pella-
» fac'h ouzin, pa'z eo guir ez oc'h ar
» zantelez memes, ha me n'oun, sionaz
» d'in! nemed eur paour-keaz pec'her.
» Ia, va Doue ha va roue, pell ma verit-
» fen e teuffac'h d'am guelet, n'oun ket
» memes din d'en em strinca dirazoc'h,
» da boca d'ho treid santel gant ar bec'he-

» rez Madalen. Va c'halon a zo fraillet ha
» merzeriet gant he c'hoantegesiou fall ;
» ker pounner int ma ne c'hellan mui.
» Er feson-ze n'oun ket evit sevel va fenn
» na tenna va alan. Ha posubl a ve e
» plichfe ganeoc'h taoler ho taoulagad
» var eur zervicher ken didalvez ha ma'z
» oun, hag en deuz ken aliez treuzet ho
» calon sacr ! Ha posubl a ve em beffe
» epad va buez an enor da vont da zibri
» ho para dioc'h ho taol ! Eur c'hrouadur
» a netra evel ma'z oun, pe gentoc'h eun
» den carget a vreinaurez, ha ne ve ket
» din zoken da vont eur vech an amzer
» da zestum ar bruzunachou euz ar bara
» burzuduz-ze, goude m'o peffe roet ho
» goalc'h d'ho servicherien fidel. »
C'huoc'hued exersis. — Goude beza en
em izeleat, ha beza en em lakeat evel
netra dirag daoulagad Doue, e save a
nebeudou var diouaskel ar fisians beteg
carantez ha madelez Jezuz, m'ema ar
zoursen anezho e feunteun santel an offe-
ren. Neuze leun a fisians e madelez hag e
trugarez Doue, e tibale ar pezh a zo an
dousa, ar c'hoeca er Scritur-Zacr evit dis-
kuez d'he Zalver, pegemend a vall en doa
da vont d'he reseñ.

« Digassit, o va Doue, an oan dinam a
 » dle beza mestr var an douar. Grit ma
 » tiskenno euz an env an hini just, an
 » hini santel, soursen euz an oll justis,
 » hag euz an oll zantelez. Grit ma couezo
 » puill, evel gliz an env, ar mann-ze dous
 » ec'hiz ar mel, ha dezhan kement blaz
 » vad a c'houffet da gaout. Ma hellan ho
 » caout hag ho posedi, setu am euz ar
 » vuez a bado da viken. Dont a ran gant
 » fisians beteg ennoc'h, o soursen bur-
 » zuduz euz an oll eurusded, abalamour
 » ne badan mui gant ar zec'hed ha ma
 » roit d'ign da eva euz an dour a vuez a
 » vir ouz an ene da vervel. Eur c'haro
 » goal-gasset a zindan an amzer domm
 » ne red ket gant muioc'h a vall, var zu
 » ar feunteun dour sclear a dle torri he
 » zec'hed, ha ma c'hoanta va ene beza
 » a-unan ganeoc'h, o va Doue. O va muia
 » caret, o va c'halon, me zo deoc'h corf
 » hag ene evel m'oc'h oll a bez d'ign.
 » C'hui oc'h-unan eo a rai d'ign ar c'hras
 » extraordinal da zibri ho corf ha da eva
 » ho coad euz va goalc'h. Deuit eta, o va
 » Zalver, deuit da rei d'ign ar merc-se
 » euz ho carantez, ma zalc'hin ato sonj
 » ha ma c'hellin cana ho meuleudi da

» viken. Deuit, me ho ped, da eosti ar
 » frouez euz ar grasou o peuz skuillet
 » gant kemend a largentez var ho servi-
 » cher dister. »

Evit caout muioc'h-mui naoun ar bara
 burzuduz-se, e sonje el labour a ra
 ar boed selestiel en eur galon preparet
 mad. Kerkent ha ma teu diabarz an den
 da veza trempet gant goad eun Doue, an
 ene christen a zeudajench evel eun all en
 he blas. Araog edo couezet d'an douar,
 drouc-livet ne helle ket kerzel en he za,
 crena a rea tersien ar goall dechou.
 Brema a vad e sao dres ha soun var he
 dreid, eur vuez nevez a red dre he izili, ar
 goad a zo frescoc'h, he liou a zo flamm;
 eun dudi eo he velet. An elez, ho daou-
 lagad o para varnhan, a zrit ho c'halonou
 o velet peger caer eo ho breur nevez.

Seizved exercis. — Dont brema an oll
 enebourien, an oll drouc sperejou, Michel
 zo leun a vuez, leun a nerz hag a zalc'ho
 penn outho. Sur eo d'ho zrec'hi, rag he
 fisians n'ema ket ennhan he-unan, mes
 en Autrou Doue. Glasc a rea goude piz
 ha piz he bec'hejou, he dechou fall, he
 c'hoantegesiou direiz; ober a rea anezho
 evel eur fagoden evit ho devi ha bale var

ho ludu. Goulen a rea digant peb hini euz tri ferson an Dreinded sacr, ma vize plijet gantho rei dezhan ar grasou ma en doa izomm. Evel eur c'hrouadur ganet ha savet mad a gar ato gueleit he vamm o caout lod en he joaïou, Michel a bede ar Ver'chez gloriuz Vari he vamm ma vije plijet ganthi en em gaout ive er banked, egiz guechall ec'h en em gavas en eured Cana. Goulen a rea drezhi kemend en doa izomm evit reseo ervad Doue er Zacramant adorabl euz an aoter. Pedi a rea c'hoaz an elez, ar zent, hag en ho zouez sant Mikeal ha sant Jerom, da zisken var an douar da adori assambles ganthan var an aoter an hini a rea ho eurusdet en env.

Keid ha ma jome oc'h an aoter, an oll a oa touchet ho c'halonou, o velet he ear modest, santel ha leun a respet evit ar pezh a dremene eno. He visach oa flamm-flamm evel glaou tan ruz, he zaoulagad oa ker bero ma steredennent; ne oa mui euz an douar, beuzet e oa e Doue. Epad ar sacrifics santel Doue, a skuille varnhan kemend a c'hrasou extraordinal, ma roe dezhan da anaout meur a dra a dlïe c'hoarvezout divezatoc'h gant ar re a henche var zu ar baradoz.

Eur vech diskennet euz an aoter, e chome epad div heur dioc'h-tu he unan caër gant he Zoue. Ober a rea actou a feiz, a adorasion hag a garantez, renta a rea mil meuleudi d'he Grouer, ha goude e c'houlenne ar pezh en doa izomm evithan, evit ar re all a zo e buez pe a zo eat da anaoun.

En em roi a rea kement d'an actou-se ma'z oa er meaz anezhan he-unan, evel eun den distag he ene diouz he gorf; ne gleve, ne vele, ne finve tam ebed, collet e oa e Doue.

PEDERVED KENTEL

Dom Michel en eul lec'h distro pell diouz trouz ar bed. — He binijen extraordinal evit en em brepari d'ar Missionnou.

Pa vez ar moraer e touez ar c'herrec, fustet he vagic gant an avelou dirollet, e vez aliez re zivezat evit en em denn a

zanjer hag evit cass he garg da benn ; araog mont var ar mor criz-se, e ve mad da bep-unan taoler evez en danjeriou, guelet mar d'ema ar vag e tro da herzel ouz an tarsiou, hag al lien ouz an avelou.

Setu perag, abars crogi gant he visionnou, Dom Michel en em denn a gostez en eun lec'h distro pell diouz trouz ha darempred an dud, evit sonjal penaoz dont abenn da gass he vagic beteg ar porz. En em denn a reas, evel hor Zalver, en dezert araog ma ieas da brezeg an aviel d'he genvroiz. Evel an ebestel en em dennas guehall en eur c'horn euz kear Jeruzalem, er Senacl, Michel a gredas ive oa nesesser evithan tec'het diouz ar bed, evit en em brepari da vale var ho lerc'h.

Ober a reas sevel e kichen ar mor, en eul lec'h hanvet Tremenac'h, e kichen Plougerne, eul lochennic goloet a zoul pe a blouz. Di eo ez eas da jom, hag epad eur bloaz e vevas eno muioc'h he-unan a gostez, eget na veve guehall meur a ermit en dezert.

Noz ha deiz e touge ar roched reun, n'en oa ket a grez all en dro dezhan

nemed an dro gouzoug pe ar c'holier stag ouz he zoutanen. Bemdez e castize he gorf beteg ar goad, an douar ien a zerviche dezhan da vele, eur mean a harpe he benn. Ne zebre nemed eur vech an deiz eun tammic iod great gant bleud heiz heb c'hoalenn, heb tamm aman, heb banne leaz ebed.

Eur vaouezic coez euz ar gear tosta zigasse, en eur pladic bian, an tammic iod-se a ginnige dezhan dre eun toullic great e moger al lochennic. Great en doa ive eur benvec bian, eun hanaf, ha ne eve bemdez nemet leiz hounnez a zour. Epad eur bloaz n'en em zervichas ket euz a vin nemet pa iea da offerenna.

Dre veva er c'hiz-se, he estomag a zeuas kement da strisaat ha da baouraat, ma ne hellas mui beteg he varo kemeret he voed nemet gant ar brasa poan. Pardon a c'houlennas aliez abaoe digant Doue da veza great kemend all a binijen, ha da vera bet ken didruez en he genver, o veza ma ne helle mui, epad an ugent vloaz diveza euz he vuez, labourat dioc'h he c'hoant evit silvidigez an eneou.

Gouscoude, emezhan, lec'h am euz da drugarecaat an Autrou Doue ; rag

mar d'eo deut va finijennou ha va doare paour da veva, da lamet va yec'hed diganen, va ene a zo eat var gresc e carantez Doue. Seul vui e castizen va c'horf, seul vui e vellea d'am ene, hag o vervel bemdez d'an douar e tarze evidon an deiz a dle padout da viken. » Divezatoc'h, pa edo e Conk-Leon, e reas eur janson brezonec evit lavaret mil bennoz d'ar binijennou calet o doa bianeat nerz he gorf, mes cresket nerz he ene dirag Doue.

Dom Michel, en he ermitach, n'en doa darempred ebed gant an dud, ne gomze oc'h den nemed ouz he dad coessour. Ato sioul en he lochen, ne iea er meaz nemed evit lavaret he offeren. Er feson-ze e teuas cazimant da ancounac'haat langach he vro. Mes ma teuas eno da zizonjal ar brezonec, Doue a zescas dezhan daou zra. Da genta, e tescas da Vichel prezeg ker mad ha ker just, ma ne gomzas mui nemed euz Doue pe euz ar pezh a zell ouz he c'hloar. D'an eil, adaleg neuze, e oue eur blijadur evithan prezeg gant he grouer ha silaou ar c'homzou caer a lavare Doue dezhan en he beden a galon.

O veza hepret dirag Doue hag o comz outhan evel eur mignon gant he vignon,

e teuas da anaout ar rest euz he vuez, ar guirionesiou a iea ar guella da galon peb-unan, ha da joas ar pezh a iea a goesta evit lacaat ar re he zilaoue da zistrei ouz hor Zalver.

Eno c'hoaz, sclerijennet gant an env, eo e teuas da c'houzout ar secret da zeski d'ar bobl ar pezh a zell ouz ar zilvidigez. Ar secret-ze oa lacaat, dre barabolennou ha dre daolennou misteriu, da bara splamm dirag daoulagad an dud berra a spered ar misteriou euz ar feiz.

Lavaret en deuz bet goudeze e oa eat pell diouz an dud, da dremen eur bloaz e retred evit heulla santimant sant Ignas a Loyola. Ar zant-ma en doa falvezet ma vije deut he ziskibien da dremen eur bloaz a gostez evit renevezi ho spered a feiz, a garantez, hag evit en em brepari d'ar missionnou pe d'ar c'hargou all euz ar Gompagnunez. Ouspenn, o vale ato var roudou an Tadou, ec'h en em lakeas da studia a nevez ar pezh en doa dija desket, ha dre-ze beza guelloc'h e tro da labourat gant muioc'h a frouez evit santifia ar vro.

Da fin he retred, Michel a reas eur choaz euz ar vertuziou a dlie ren he vuez. Ho

gelder a reas he armou d'en em zifen pa vije bet clasket affer outhan, hag hear mou da vont araog da skoi, dioc'h an izomm en devije bet.

An armou-ze oa beva beteg ar maro er guel hag er zonj a Zoue : ober pinnijennou ar c'haleta evit cabesta he dechou fall ; caout eur galon distag dioc'h re a garantez evit he gerent ha dioc'h an traou vean ne zellont ket ouz gloar Doue ; erfin, beva en eur guir frankiz a galon, en hevelep doare ma oa ato prest da zigemeret gant ar vrasa anaoudegez grasou-ar Spered-Santel, ha da zenti out-ho gant ar brasa prez ha gant ar vrasa carantez.

Dom Michel ne zaleas ket da gaout izomm euz an armou-ze.

A viscoaz, an hini en deuz falvezet beva dirag Doue hag er meaz euz habitujou ar bed, a zo bet goal gasset gant ar re all. Setu aze Dom Michel Nobletz ; en em denn a ra euz he vaner, e lec'h m'en devije bet peb tra dioch he c'hoant ; mont a ra da eul lec'h gouez ; sevel a ra eul lochen-nic paour ; beva a ra eno fas ha fas gant he Zoue ; ober a ra yun an nao stereden, en em gastiza a ra beteg ar goad, cousca

a ra var an douar ien, coll a ra he iec'hed. He vuez, en eur ger, a zo henvel ouz buez ar zantela ermited. N'euz forz, ar bed a gavo abeg ennhan. Hag ar re a ouio ar muia hano eo an dud ar guella evit eur guel.

Be a zo eun orin dud hag en em fiz re var ho zantelez hag a ra faë var ar re ne vevont ket evel dho. Eur vaouez, o sonjal marteze plijout da Zoue, a zeuas da ober dezhan tec'ha euz he ermitach, araog m'en devoa tremenet ar blavez penn-da-benn. N'oa ket evit credi e vije deut eur christen mad, eur beleg santel, d'en em denn euz a vesc an dud evit ren eur vuez santeloc'h. Eur seurt den a dlje caout an oll dechou, a dra zur oa eat di evit kuzet eur vuez carget a fallagriez.

Dom Michel eta a ieas kuit euz he lochennic, an dour en he zaoulagad, en eur zellet adren meur a vech hag en eur lavaret : Ken a vo va zi soul e lec'h am euz cavet Doue hag an eurusded.

Sonjou fall an dud a ieas buan da netra. Doue a reas da anaout ker scler, dre galz burzudou, santelez he servicher fidel, ma zirede an dud a bell bro da velet he ermitach. Al lec'h santel-ze, hanter-cant

vloaz goude, a oue deut da veza unan euz al lec'hioù ar muia darempredet euz an Europ gant ar belerinet, eme eur scri-vagner euz an amzer-ze.

PEMPED KENTEL

**Dom Michel o teski al lezen gristen
d'he genvroiz**

Calon Dom Michel a zeve gant ar vall da greski rouantelez mab Doue. Mes o taoler hezaoulagad en dro dezhan, e velas e pe seurt stad reuzeudic oa he vro. Credi a rea gueleit eur glanvourez goloet a c'houliou penn kil ha troad, hag astennet var he guele a boan. Dioch-tu en em ginnigas evit he farea. Hag hor Zalver Jezuz-Christ he-unan, n'en doa ket great he zarmoniou kenta e Capharnaum, tost d'al lec'h ma oa gin-nidic? Ha sant Paol, ne alie ket ministred hor Zalver da c'hounit da Zoue ho c'he-rent ha tud ho zi? Dom Michel ne reas

eta nemet kendalc'her da vale var lerc'h he vistri.

Plougerne a zo unan euz ar vella par-resiou euz hon escopti. An dud eno a zo hirio desket caer var ar pezh a zell ouz servich Doue. Mes n'e ket bet er c'hiz-se a viscoaz. D'ar mare ma comzan ama, ar barrez-se a oa azezet en devalijen a c'holoe hor bro a bez. Rouez e oa an dud a ouie ar pezh zo nesesser evit ar zilvidigez, ha rouessoc'h c'hoaz ar re a rene eur vuez vad. Michel, leun a garantez evit he genvroiz, a zescas dezho ar c'henta misteriou euz ar relijion. En iliz, en tiez var ar meaz, en henchou, e kichen ar c'hroa-siou, e vode en dro dezhan eun nebeudic tud a volontez vad, hag e tisplege dirazho al lezen gristen en eun doare scler ha splamm. Sevel a rea ive he vouez a enep an dizursiou gant eun nerz-calon ha ne oa ket bete neuze gueleit he far.

Mes enebour touet hon eneou, an diaoul, m'hen argars, a boanias en dra c'hellas evit miret ouz Dom Michel da ziframma an eneou reuzeudic euz a dre he skilfou. Evit-se ec'h en em zervichas euz ar guella tud euz ar barrez, euz he gerent zoken. C'hoant o doa oll da dre-

men anezhan evit eun den diskiant hag eat he benn diganthan.

He gerent tosta nessa a oa ar re he voalgasse ar muia. An autrou de Kerodern a garie calz an enoriou hag ar madou. Credet en doa, e vije deuet he vab Michel da roi muioc'h a sked, a luf d'he famill, ha da veva en eun doare deread ouz he stad. Mes o velet e rea Michel ar c'hontrol beo euz ar pezh en doa sonjet varnhan, e ieas kemend a zrouc ennhan, ma ne oa ket evit gouzanv nag he liou nag he figur, mez a rea dezhan. He vamm a zilaouas mouez he c'haloun, ha meur a vech a dennas Michel a brez hag azanjer. Nag e pedas hag e aspedas he mab muia caret da gemeret eur garg bennag evit beva evel eur beleg a zoare hag a ouenn! Mes caër e devoa stigma he lasou, Michel en em ziluie hag en em denne ato er meaz a affer. « An hini, emezhan, a oar maga al labousedigou bihan, ho guisca ha caout lojeiz dezho, en devezo ive truez ouzin. » Neuze ar vamm a deuas da gaout evit Michel santimanchou he fried.

Hor beleg santel, o c'houzout ervad e oa galvet gant Doue da c'hounit dezhan eur maread eneu, a gendalc'has da

heuilla he vestr hag he Zalver, oc'h ober faë var gement tra euz an douar. E maner Kerodern e veve egiz pa ne vije ket bet euz ar famill. An dudchentil a iea hag a zeue, heb ober muioc'h a van ouz he velet, eget pa vije bet skubunadou pe atrejou stlapet en eur c'horn euz an ti.

Goude he offeren, Michel a iea da aoza he dammic boed. Ne bade ket pell an aoza, m'hel lavar deoc'h. Kemeret a rea bara groz ar mevellien hag he dorre a dammou en eur skudel goat, var c'horre e taole eur banne soubenn great evit an domestiked a laboure an doaur. Morse ne danvee euz ar pezh a dlle beza servichet ouz taol an dudchentil; hag epad an ugent vloaz kenta, goude ma oa distroet avad ouz Doue, ne evas berad guin ebed nemed ar pezh a iea red dezhan da gemeret goude ar gommunion e sacrifis santel an offeren.

Ractal ma en divije kemeret he voed, e iea, leor ar beden a zindan he gazel, euz an eil kear d'eben da zeski he greden d'ar bobl, ar *Bater* hag ar pedennou all euz an Iliz. Piou a lavaro ar basianted a gemere evit deski d'ar vugaligou ho c'hatekiz! Piou a lavaro an ijin en doa evit ober

d'ar re vraz ha d'ar re goz caout plijadur o silaou he gentellieu! Michel n'en doa ket hebken truez ouz ho eneoù, anaout a rea c'hoaz hanoiou ar re glanv, ar re baour. Mont a rea da c'houlén an aluzen e peb corn euz ar barrez, hag e cave pe a'dra da rei da zibri d'ar re o doa naoun, da visca ar re a ioa en noaz, ha da zousaat poaniou an dud maleñruz.

Da zul, ez ea da labourat er parresiou tosta. Eno e prezege, e rea catekiz, e coessee gant eun aket ha ne vez ket gullet aliez he bar. An tri exersis-se, eme Dom Michel, a zo evel teir jaden alaouret ma en em zervich outho Doue evit gounit ar bec'herien an dalla hag ar c'haleta. Aliez e lavare evel sant Paol : *Malloz din-me ma ne brezegant ket an Avel.* »

C'HUEC'HVED KENTEL

—

**Dom Michel goal-gasset gant he gerent
nessa ha gant tud he barrez**

Lavaret am euz ama dija : nep a c'hoanta beva, en eun doare all hag ar c'hroz vuia

euz an dud, a vezo ato goal-gasset a gouezo a zindan disprijaus ar re-all, hag ar bed a rai fae varnhan. Setu ar pezh a c'hoarvezas gant Dom Michel. He zoare paour da veva, he garantez birvidic evit ar re vian, ar re zister, he zantelez a oa kemeret evit froudennou eun den diskiant ha collet he benn ganthan. Hag hor Zalver Jezuz-Christ he-unan n'oa ket bet tremenet evit eun diskiant!

Eun devez, an Autrou de Kerodern, a-unangant he bried Franseza de Lesvern, a réas gelver Michel dirag he vugale all. Neuze, o crena gant an drouc ha gant ar gounar a ioa ennhan, e reas d'he vab ar c'hrisa rebechou. Ha n'ouzoç'h-hu ket, emezhan, ar gaou a rit ouzoç'h oc'h-unan en eur veva en eun doare ken divalo ha ken iskiz? N'o peuz mui eun elven a vrud mad er vro. An dudchentil, ho kerent, ho preudeur, ho c'hoarezed, ho mamm ha me ho tad, oll ne gredomp ket sevel hor penn gant ar vez or beuz ac'hanoc'h. Ha brema kea kuit, mez an dud! Kea kuit, kenta ar guella.

Hor beleg santel a zentas dioc'h-tu heb lavaret gric. Mont a reas er meas euz ti he dud, pleget he benn gant ar velconi, an

daelou leun he zaoulagad. Douja a reas gouscoude a galon vad hag heb en em glem da volonteiz he dad, hag en em lakeas a bez etre daouarn an Autrou Doue.

O veza erruet en eul lec'h distro, ec'h en em strincas d'an daoulin, hag he benn harp en douar e vouelas goalc'h he galon. Eun druez e vije bet oc'h he velet. Goude beza easseat dezhan dre skuilla daëlou, e savas he zaoulagad gant fisians var zu an env en eur lavaret : « Guelet a rit, ov a Doue, va 'tad ha va mamm o deuz va c'hasset er meaz euz ho zi, heb n'am euz na ti na oz d'am repui. N'ouzon dare da belec'h mont, n'em euz ken scoazel nemedoc'h. Me en em laca etre ho taouarn evel eur c'hrouadur, p'e guir oc'h tad ar beorien ha tad ar vinored. Va digemerit eta, o va c'hrouer, evit ho crouadur. Bis-coas n'em euz hallet lavaret gant kemend a virionez ar pezh en deuz ho Map Eternel desket d'ign : Va Zad pehini a zo en env, etc. Grit ma sentin ouzoc'h a galon vad : Renit va c'hammejou e lec'h ma plijo d'ho polontez santel. Leun a fisians en ho madelez en em daolan etre ho tivrec'h. O pezit truez, o va Doue, o pezit truez ouz vazad, ouz va mamm ; pardonit dezho

ho c'hrisder em c'henver. » Hag an daëlou a rede adarre stancoc'h ha drusoc'h beteg distrema an douar. Calet e vije bet calon eun den ma ne vije ket bet maniret o velet eur seurt maleüruz.

A boan m'en devoa great he beden ma reas ar bromessa da jom er memes parrez evit hallout eva a nebeudou an dismegans a goueze varnhan a bep-tu, ha dreze caout he lod euz calir hor Zalver Jezuz-Christ. Chom a reas eno evit gounit a-grenn da Zoue he dad, he mamm, he gerent hag ar barrez oll.

Ti soul ar c'hreg santel a ioa bet he vagerez a zeuas c'hoaz da repui Dom Michel.

Evel ar vech kenta ma'z eas di, e vevas en dienez hag en diouer a bep tra. Mes er vech-ma he galon a zeuas da veza seac'h, calet, hag evel scornet. Doue a ehanas da zigass an ezennic c'hoec ha dous a rea he joa e creiz he drubuillou. He galon a ioa araog evel eun devez hanv, heol freaz ha digatar a luger netro var dro hag a domme beteg an distera goazien. Brema ema he galon er vrasa tevalijen, hag ar goad ne red mui er goazied. Piou a lavaró he boan, he

anken? Beva heb carantez he dud a oa calet d'he galon, mes beva heb carantez Doue a oa re vec'h dezhan.

Michel a gendalc'has gouscoude da gelen ar bobl. Dont a reas d'he zilaou, tud a bep seurt renc, tud vraz, tud gouiziec, mondianed; mes ne oe nemed an dud dister, ar beorien, ar vugale hag a zeuas da lacaat e profit ar pez a glevent. Allas! netra souez e kement-se. Ober faë var an traou crouet, roi da bep-unan ar pez zo dleet dezhan, tec'het dioc'h an assambleou, andansou, ar festounoz, pel-laot ouz ar boesson, ouz an occasionou fall, oa traou ha ne blijent nemeur d'ar re ho silaoue.

Piou a lavaro an oll dismegansou en oe da c'houzant euz a berz eun hevelep tud! Clasc a rejont zoken lamet buez ar c'horf digant an hini a ioa bet digasset gant Doue evit roi dezho buez ho ene. Mes Doue a veille varnhan hag a zioualle he zervicher fidel evel mab he lagad.

Eun dijentil euz he gerent n'oa ket evit gouzanv e vije prezeget a enep an dizursiou ma'z oa lec'h da damall dezhan. Toui a reas var he le ne vije ket maro contant nemet, discaret en divije d'an

douar hor beleg-santel. Diou vech oa bet darbet dezhan dont a benn euz he daol ha diou vech e vancas varnhan.

Eun devez, o veza cavet Michel en iliz, heb respet ebed evit al lec'h santel, ec'h en em lakeas e doare d'he laza. « Ama, emezhan, eo bet great an dismegans var-non, ama ivee ranc beza paët an torfed. » Neuze e savas he bistolen evit ober tan. Mes servicher Doue, prest da vervel evit an hini a ioa bet staget ouz ar groaz dre garantez evidomp, en em strincas d'an daoulin, en eur zizoloi poull he galon da reseo an taol. Ar muntrer, souezet o velet kemend all a galon, a gouezas ar bistolen euz he zorn, hag ar gownar a ioa ennhan a ieas ker buan da netra. Eüruz ha teir guech eüruz ma vije deut da brofita euz ar gentel-ze! Mes, siouas! kendalc'her a reas da ren eur vuez fall ha justis ar bed he-gondaonas evit torfejou all da veza dibennet er gear a Roazon.

Piou a lavaro ped guech e oa bet Michel e tal da goll he vuez! Ar beleg en em zavo, en eur barrez, a enep an dizursiou, an techou fall, a vezo ato casseet gant ar re a zo da veza tamallet. Hogen Dom Michel a brezege gant tan a enep an dud fallacr en em

zerviche euz ho madou, euz ho stad, evit touella ar re all hag ho lacaat da bec'hi. Setu perag, meur a vech, an dud a rene eur vuez diroll a glascas an tu d'he voal-lacaat, ha da ober dezhan coueza en toull o devoa great evithan. Mes eal Doue a oa bepred oc'h he heul, hag a dennas anezhan er meas a zanjer.

Neuze e clascjont dont a benn d'he goll en eun doare all. Douga a rejont clemm en he enep dirag an Autrou'n Escop, evel pa vije bet eun den ha ne oa nemet fallagriez oc'h he heul. An Autrou'n Escop a ioa dija cazi gounezet gantho, pa zeuaz an Autrou de Louet, neuze he vikel vraz hag abaoe escop Kerne, da lacat scler ha freaz dirag daoulagad an oll peger divlamm e oa hor beleg santel euz ar pezh a oa bet tamallet dezhan.

SEIZVED KENTEL

Dom Michel a deu a benn da c'hounit a grenn da Zoue he dad hag he vamm.
— Ren a reont eur vuez a skuer vad.
— Ho maro santel.

Hor beleg santel en doa muioc'h a lec'h da drugarecaat he dad eget n'o deuz peurvuia ar vugale all, abalamour d'an descadurez cristen en doa bet diganthan. Setu perag ne oa ken ioul, ken c'hoant en he galon, nemed he velet o poania stard da zavetei he ene ha d'en em zizober euz ar plegou fall a dlle he gass da goll. Evit caout ar c'hras-ze, nag a reas? Bemdez e rea eur binijen bennag, bemdez e casse he bedennou hag he hirvoudou var zu he grouer.

An hini en deuz crouet an den a oar a be seurt pri-douar eo bet great ganthan. Anaout a ra he du goag couls hag he du calet. Bez' a ouio eta an doare d'he lacaat

da ober ar pezh a blij ganthan. Hogen an Autrou de Kerodern ne zontje nemet guelet he vugale meulet dreist an oll, aze ema he du kizidic, dre eno eo e teuo Doue a benn anezhan.

Clevet a reñ aliez lavaret e oa Michel eun den elavar, eur beleg hag a brezege caër-meurbed divar benn guirionesiou Doue. Kement-se a reñ plijadur dezhan. Aliez zoken e lavare : Ah ! ma ve doare Michel da vev dioc'h ma'z eo he zescadurez ne ve ket cavet par dezhan e Breiz.

Mes tostaat a reñ ar mare ma l'lie Doue lacaat an Autrou de Kerodern da gaout, evit doare paour he vab da vev, an istim en doa evit he vouiziegezh.

Eun devez Michel, o veza pignat er gador, a gomzas gant kemend a dan hag a nerz divar benn deveriou an tadou ar mammou e kenver ho bugale, ha divar benn deveriou ar vugale e kenver ho re, ma ias he gomzou beteg beo ar c'hallou. Tad hoñ beleg santel a ioa ouz he silaou, hag e scoas eun taol ker pounner en he galon, ma ouias dioc'h-tu Michel e oa deut mare gras an Autrou Doue. Leun a fisians e ias d'ar maner da gaout he dad evit clasc an tu da gomz outhan divar

benn ar pezh a zell ouz ar zilvidigezh. N'en doa ket sonjet fall o credi se, rag digemeret e oue euz ar guella. Mont a reas gant he dad e sal vraz ar maner, hag ar Spered-Santel o veza digasset dezhan eur zonzj leun a ijin, e stagas dioc'h-tu d'al labour evit cass da benn ar pezh en devoa sonjet Doue var an Autrou de Kerodern.

O veza great digass dezhan eur skudell, e lakeas ennhi eun tammic pri hag he leunias ractal a zour. « Brema, emezhan d'he dad, sellit me ho ped, ha guelit ho patrom en dour, hag e kemmeske ar pri hag an douar gant e viz. » — « Gortozit eur pennadic, eme an tad ac'han ken a vo deut an dour da veza sioul. » — « Er memes stad, eme neuze Michel, ema ho coustians. Ne hallit ket he guelet mad aoualc'h nag anaout ho plegou fall, o veza m'eo kemmesket ho calon gant traou an douar. » Gras an Autrou Doue a ias ker founuz da heul ar c'homzou-se ma couezas he dad d'an daoulin ha ma pedas Michel da zicour anezhan gant aoun na iasse da goll.

Dom Michel a lezas neuze he dad etre daouarn Doue. Mont a reas adarre d'al lec'h ma veve a gostez, da di paour he vagerez; hag, o veza pedet an hini a zalc'h

etre he zaouarn calon an den evel eun tamm pri etre daouarn ar poder, e scrivas d'he dad ar reglen-ma a vuez :

« N'euz nemed ar garantez hag e deffe va c'hasset beteg ho maner evit hallout henchha ac'hanoc'h var zu ar baradoz. Peb den en deuz en he stad pe a dra evit he lacaat da vont divar an hent mad ha d'en em goll. Hogen en ho stad, an danjer eo labourat da zul ha d'ar goueliou berz. Bezit eta var evez var gement-se. N'e ket aoualc'h chom heb labourat da zul ha da c'houel, arabad e vezo zoken var ar pemdez gounit an distera, heb beza distaget ho calon dioc'h an traou crouet. Beteg hen, ar zoursia a gemerec'h euz ho tiegez a vire ouzoc'h da ober oc'h exercisou a zantelez. Divar vrema e lezoc'h kentoc'h afferiou ho ti, evit en em zoursia euz an affer vraz, euz affer ar zilvidigez. Rag oll draou ar bed a zo roet deomp evit en em zavetei, ma n'en em zaveteomp ket eo collet an traou-se oll. Erfin, egiz boed an ene a zo necesseroc'h eget n'eo boed ar c'horf, e tleit da viana kemeret kemend an amzer evit roi dezhan ar boed ma en deuz izomm. Evit-se, ne dremenit ket eun devez a hed ho puez heb lenn eun draic-bennag evit

sclerijenna ha crevaat achanoc'h, heb ober eun tammic pinijen, ho peden a galon, hag hoc'h exercisou all a zevosion. »

Ouspenn, pedi a reas he dad da ober diou veditasion, da lavaret eo, e lakeas dirag he zaoulagad diou virionez euz ar feiz evit ma vije deut da zonjal enno noz ha deiz, en eul lec'h distro-bennag pell diouz trouz an dud :

KENTA MEDITASION. — Michel en doa c'hoant ma teuje he dad da c'houlenn diganthen he-unan.

1^{re} poent. — Petra eo Doue ? Petra oun-me, siouaz ? Pe seurt mad en deuz great Doue d'ign ? Ha be ez euz unan-bennag tostoc'h d'ign evithan ? Petra e ran-me evit va mestr ? Petra en deuz lavaret roi d'he zervicherien ar fidela ?

2^o poent. — Ama e falle da Vichel e vije deut he dad da respont e goueled he galon d'ar goulenno-se : Petra eo Doue, etc.

3^o poent. — Goudeze, an Autrou de Kerodern a dlie dastum ar frouez euz ar pezen doa hadet. — Mar d'ez euz eun Doue ha mar d'oun crouet ganthen, oun dleour dezhan euz ar pezen am beuz. Eul labourer n'en deuz ket kemend a vir var ar vezen en deuz lakeat en douar, eur micherour

kemend a c'halloud var he damm labour ha m'en deuz Doue varnoun; ar poder n'e ket kement dezhan ar pod a zo great ganthan ha ma'z oun-me da Zoue. Rag n'e ket al labourer douar eo a zigass ar glao, an heol da ober d'ar pezh en deuz hadet divoana didenvi, ha dougen eost; n'e ket al labourer douar eo a zigass amzer c'hleb, amzer zeac'h, dioc'h m'en deuz izomm ar vezen evit roi frouez. Ar micherour a ra he labour, ar poder he venvec a zanvez all, e lec'h Doue en deuz he-unan va c'hrouet a netra, en deuz va frenet var bouez skuilla he c'hoad beteg ar berad diveza. Dezhan oun eta a bez muioc'h ma'z eo ar vezen hag ar frouez d'an nep en deuz he lakeat en douar hag en em zoursiet outhi, muioc'h ma'z eo ar pod d'ar poder en deuz he c'hreat dioc'h he c'hoant, dioc'h he zorn.

Dezhan oun eta corf hag ene, setu aze he zaou venvec, evithan e tleont servicha, ha ma n'her greont ket, ez euz goasoc'h laeronsi eget laeret frouez euz guezan an amezeg. Dezhan oun corf hag ene, setu an daou venvec a dle beza lakeat e servich Doue, ha ma ne vezont ket ez int saotret ha louzet gant an drouc-spered. Echui e

tlie he veditasion oc'h ober actou a c'hla-c'har evit an amzer tremenet, hag oc'h ober ar propoz ferm evit an amzer da zont. Goulén a rea evithan he-unan, evit he gerent, evit re all c'hoaz ar grasou m'o doa izomm. Evel-se en em erbede ouz an Intron-Varia hag ouz ar Zent.

EL VEDITASION. — 1^{er} poent. — An Autrou de Kerodern a dlíe goulén an drama diganhan he-unan, pe velloc'h silaou ar goulennou-ma egiz pa en divije ho c'hlevet euz a c'hinou hor Zalver.

« Bale a rit-hu dre an hent striz ha moan a gass var eñ d'ar vuez eternal, pe mont a rit-hu en hent franc ha ledan a gass d'ar maro evit ato? Clasc a rit-hu e pep'tra bolontez Doue, ha poania a rit stard da blijout dezhan en oc'h oberou? Ha be ez oc'h-hu mignon braz d'he Vamm zantel? Penaoz emoc'h gant deveriou ho carg? Digoret ho peuz-hu ho spered hag ho calon d'an Aviel, ha ren a rit-hu ho puez dioc'h ho creden? Caret a rit-hu miret lezen Doue ha pratica ar vertusiuu christen? Ha ne vevit-hu ket muioc'h e doujans ar bed eget na vevit e doujans Doue? Ezel ma'z oc'h euz an Iliz, ha sicour

a rit ho mamm dre ho skueriou mad hag ho puez santel? »

Eil ha trede poent. — Ama e tlie tad Michel respont d'ar goulennou a zo araog, ha d'ar fin ober ar propoz ferm da jench buez penn-da-benn.

Ma vercan ama an doare da ober ar beden a galon eo evit ma teui lod euz ar re a lenno al leor-ma da vale var lerc'h an Autrou de Kerodern. Na pebez taol tud a zo var ar meaz, ken goazed, ken merc'hed, hag a zo galvet marteze gant Doue da vedita guirionesiou ar relijion !

An Autrou de Kerodern en doa bet calz joa o reseo lizer Michel. En em roi a reas euz he oll nerz da vedita var ar guirionesiou-ze. Neuze e lakeas doun en he benn chench buez, hag, o veza galvet he vab muia caret dazont d'he gaout, e c'houlennas pardon diganthan da veza bet ken criz ha ken dinatur en he genver. Abaoue ne reas mui da zul ha da c'houel berz labouriou he garg a noter. Ouspenn, rei a reas en aluzen hag en oberiou a garantez ar pezh a grede beza gounezet o labourat d'an devesiou-ze. Adaleg neuze e rea he beden a galon hag eur binijen-bennag, hag e lavare bemdez ofis bian ar Verc'hez.

Franseza de Lesvern, mamm hor beleg santel, a fallias dezhi beza bleignet gant he mab var zu ar zantelez. A viscoaz an Intron-ma a ioa bet eur gristenez vad, skuer an intronezed-all, var dro ho ziegez ha var dro ho zud, mes abaoue m'e doa clevet he mab o prezeg e chapel mainer Kerodern, e teuas d'en em zistaga neat euz ar bed, da ober fae varnhan, d'en em rei d'an traou spirituel, d'ar beden a galon ha d'an oberiou a drugarez. Beva a reas e creiz ar bed ec'hiz en eur gouent ar zantela. He c'horf a veve var an douar, mes he spered, savet etrezeg an env, a gomze bepred ouz Doue hag ouz he elez.

Piou a lavaro ar joa a zantas Dom Michel o leunia he galon ! « Mil bennoz deoc'h, o va Doue, emezhan, abalamour ma'z eo plijet ganeoc'h renta d'ign va zad ha va mamm am oa collet. » An daou bried santel-ze a gendalc'has da veva ar rest euz ho buez en hent euz ar berfescion. An Autrou de Kerodern a varvas pemp ploaz goude en he vaner, 1612. An Intron a rentas he ene da Zoue tri bloaz var lerc'h he fried santel. Mervel a reas etre divrec'h he mab Michel en eur roi mercou euz eur zantelez vraz.

Dom Michel Nobletz a lavaraz ez oa en d'he guele, eun tammic araog ma tremenas he vamin, eur c'huez euz an dousa a ouffer da zantout, hag ar c'huez-se a jomas en dro d'he c'horf goude ar maro anezhi. Ouspenn, kerkent ha ma tennas he alanad diveza, he bizach a zeuas da gemeret eun ear ker caër ha ken dous ma'z oa kemënt-se eur merc anad e oa eat he ene da velet Doue.

Hor beleg santel na ancounac'heas ket he dad hag he vamm goude ho maro. Evel ma tle peb crouiatur mad hen ober, e pedas Doue, e kinnigas sacrifis santel an offeren d'an Tad Eternel evit ma vije plijet ganthan ho c'hass d'ar baradoz. Doue a zilaouas he beden oc'h ober dezhan da anaout oant eat ho daou d'he velet. Setu perag e lavare d'he vignoned, e crede stard oa eat he dad, he vamm, diou euz he c'hoarezed hag he vagerez da danva an eürusdet heb he far a ro Doue d'he zervicherien fidel.

TREDE LEOR

KENTA KENTEL

**An Autrou de Limbau, hanvet c'hoaz
Per Kintin, a zeu da guitaat compa-
gnunez Jezuz. Mont a ra en eun urz
all er gear a Vontroulez.**

Guelet or beuz ar vad a reas Dom Michel Nobletz evit ar scolaerien a studie assambles ganthan e Bourdel hag e Ajen. He c'halloud a reas evit ho lacaat da zistroi a grenn ouz Doue. Gant sicour he aliou-mad hag an arc'hant a ziouere evitho, an dud yaouanc-se a hellas en em denn er c'houentchou evit ho brasa mad ha brasa mad an Iliz.

Unan anezho a zo bet hano anezhan

ama, an Autrou de Limbau pe Per Kintin. Guelet ez euz bet pegemend a zoursi a gemere Dom Michel euz an Autrou yaouanc-ma a ouenn goz. Hema euz he gostez, nag e poanias evit hallout stlapa er meaz euz he galon he dech, he bleg fall! Evit mervel a grenn d'ar bed, ha beva hebken evit gloar Doue ha silvidigez an eneou, e ieas e Compagnunez Jezuz.

Guelit ama me ho ped, lenner, penaoz Doue, o kemeret an den dre an dorn evel eur c'hrouadur bian, a zeu d'he vleigna dre an hent ma en deuz merket a oll viscoaz, evit he gass beteg al lec'h ma fell dezhan e iaffe.

Doue eta en deuz lavaret ennhan he-unan, e ielo Per Kintin en eun urz e Breiz da vevà santelamant, hervez reglen Sant-Dominic, ha da rei skuer vad d'an oll relijiuzet euz ar gouent-ze. Evit-se e ielo e Compagnunez Jezuz. Eno e kemero spered Doue evit sclerijenna he gammejou epad he vuez. Eno e tesco bale var roudou sant Ignas a Loyola, hag an doariou santel da ober d'ar re all mont d'he heul. Eno e teuo da domina he galon ouz tan carantez Doue evit lacaat an tan-ze

da bega e calonou he vreundeur. Ar c'hlaouen tan ruz-se a dommo, a rusio ar glaou all.

Per Kintin e novisiat an Tadou Jezus-ted, en em roas kement d'ar beden ha d'ar binijennou calet, ma zeuas e berr amzer da goll he yec'hed, en hevelep feson ma na helle mui kemeret an distera boed, nemet gant poan. Caer o devoa he vistri caout an oll zoursi var dro he yec'hed, ne heljont ket guellaat he zoare. Red mad oa eta da Ber Kintin senti ouz ar vedisined ha mont da gemeret ear ar vro ma oa ginidic anezhi.

Dont a reas da Vontroulez evit scolia ar youankiz. Ober a rea scol var al latin, ha bemdez e teske troi e gallec Ciceron ha Virgil da eur maread tudou yaouanc a zired euz escoptiou Leon, Treger ha Kerne. Ouspenn, da heul he gentelliou var al latin, ne vanke morse da gentellia he scolaerien var an doare da veva hervez ar guir furnez ha da droi ho c'halon ouz ar zantelez.

Doue, o velet bolontez vad Per Kintin, a zigassas euz a Vro-Zaoz, evit sicour anezhan, an Autrou Charlez Louet. Ar beleg-ma a ioa bet prizoniet epad daou vloaz e Bro-

Zaoz, abalamour ma laboure stard da asten ar guir feiz en he vro.

An daou veleg santel a stagas gant calon d'al labour. Ho scol deut da veza brudet a ioa e'c'hiz eur zeminer pe gloerdi. Ac'hano eo e teuas meur a veleg ha meur a relijiuz leun a garantez evit ho c'hrouer hag evit ho nessa.

Per Kintin, oajet neuze a zaou-ugent vloaz, ne oa ket c'hoaz beleget. Mar d'eo, emezhan, enoruz carg ar beleg, eo ive pounner meurbed; ha ne gredan ket kemeret eun hevelep bec'h var va chouc. Gouscoude o sonjal ne halje ket, o chom er stad ma oa, labourat kemend evit gloar Doue ha mad he vreudeur, e teuas da zilaou mouez he galon, mouez ar garantez, hag e kemeras an ursiou-sacr.

Eur maread tudchentil a zivar-dro hag eur maread tud a renc huel euz kear, o veza deut d'he offeren genta, a zigassas gantho prezanchou, hervez giz ar vro. Ho frezanchou a ioa seul binvidicoc'h ma ouient e oa Per Kintin er vrasa dienez, o veza m'en devoa dispignet he oll zanvez evit sicour ar beorien. Credi a reant ive e roje eur banked evel ma oa ar c'hustum d'an amzer-ze. Mes hor beleg nevez ne oa

ket heb gouzout an dizursiou a zeu a zruil da heul ar prejou-ze. Pedi a reas an Autrounez ker brao da gaout truez outhan, o tiskuez dezho splamm e oa red dezhan caout an devez-se penn-da-benn evit trugarecaat Doue, ma ieas pep hini anezho laouen en he dro, ha leun a respet evit eun den ker santel. Evithan, goude beza kemeret ar pezh en devoa bet, e ieas da glasc ar beorien e pep corn euz kear hag e rannas etrezho kement m'en doa, en hevelep doare na jomas ganthan an distera tra.

Mes ma oa laouen ar beorien gant aluzennou an Autrounez vad, kement-se ne reas ket cont an oll.

Eun den a veve gant hor beleg nevez; guelet en devoa ar prezanchou caer digaset di gant an dud kenta euz ar vro. Mall en doa da gaout he lod. He naoun a oa braz, he staon a oa du. Pazeuas da c'houlzout pe seurt divi o devoa bet ar prezanchou, e ieaz kemend a zrouc ennhan ma na hellas mui en em zalc'her; mont a reas beteg sevel he zorn da roi eur javedad da Ber Kintin. Hor beleg santel a c'houzas an taol didruez-se egiz m'o deuz great

ar Zent, me lavar, heb na reas an distera clemmaden.

Kentel gaërevit eur bern tudou yaouanc a vouenn! Ar re-ma, evit beza ma'z int christenien, a gred eo red roi taol evit taol, dismegans evit dismegans.

N'e ket aze ema, selaouit hen mad, ar gourach, ar galon. Eun den a galon eo an den a oar en em drec'hi he-unan. An autrou de Limbau pe Per Kintin, gue-chall offiser, a oa e guirionez eun den a galon, p'e guir e hallas lacaat da jom a za ar goad a rede d'ar c'haloup en he oll voazied. An hini a ioa bet ken criz en he genver, touchet beleg beo he galon o velet he vertuz, he basianted, en em strincas e harz he dreid hag he bedas, an dour en he zaoulagad, d'he bardoni. Per Kintin he vriatas var an tomm hag a douas e carje anezhan muioc'h c'hoaz evit a ziagent.

Setu aze, tudou yaouanc, ar guir galon, ar guir gourach, en em drec'hi hon-unan, ha dre-ze bale var lerc'h hor Zalver Jezuz-Christ.

Nebeud amzer goude, oa rancout dezhan dioueret an autrou Louet, deut euz a Vro-Saoz. An Tad santel ar Pab a reas he c'halver evit lacaat anezan da arc'hes-

cop e Cantorbery. Neuze Per Kintin, o velet ne halje ket he-unan scolia kemend all a vugale yaouanc, a ieas e Urz Sant-Dominic, er gear a Vontroulez, e lec'h ma crede en devije rentet muioc'h a zervich da Zoue ha d'an Iliz.

EIL KENTEL

**Dom Michel assambles gant Per Kintin
en eun Urz relijiuz er gear a Vontroulez.**

Er penn kenta Doue a reas corf an den euz a bri-douar. Ar pri-douar-ze ne jomas ket reiz goude pec'hed hon tad kenta. Setu perag an den, hirio an deiz, n'euz forz piou ha n'euz forz e pe seurt stad e ve, n'e ket eun eal. An dud a Iliz, hag e vent relijiuzed, menec'h zoken, mar d'o deuz ho flegou mad, o deuz ive ho flegou fall. N'int sent var an douar nemet var bouez poania stard d'en em drec'hi. An dud a Iliz zo galvet gant Doue da eur zantelez hueloc'h eget ar bobl. Evit-se

Doue ne varc'hato ket he c'hrasou, ar gliz euz an env a gouezo druz ha teo varnho. Mes eur vech c'hoaz, n'int ket elez, n'int ket parfel. Netra iston : hor Zalver Jezuz-Christ he-unan, evithan da veza dibabet he ebestel, n'ho c'havas ket oll direbech.

Ma vercan kement-ma, eo evit ober da c'hout ne gavas ket ato Dom Michel ar berfecion e touez he genvreudeur na zoken er c'houentchou.

Per Kintin, eat en eun Urz relijiuz er gear a Vontroulez, ne c'houlenne nemet beva evit he Grouer. Mes ar relijiuzed euz ar gouent-ze a oa troet eun tammic divar an hent en doa merket dezho sant Dominic ho fondatour.

Ar reglen euz an Urz santel n'oa mui miret madaoualc'h. Ar bed a zave he vouez e touez ar venec'h, hag aliez zoken e veze silaouet.

An Tad Kintin, evit ober d'he vreudeur dont d'an hent mad, da viret ar reglen a boent da boent, a bede ar starda ma halle, a ouele dourec dirag hiniennou anezho, hag a dra zur en divije skuliet he c'hoad kentoc'h evit mancout.

Dom Michel a ieas er bloaz 1607 da velet he vignon braz an Tad Kintin. Hemà

a gontas var eun dezhan kemend a rea evit ober d'he vreudeur dont da zantelez ar venec'h kenta euz an urz. « Ah ! emezhan da Vichel, ma vec'h ganen, ni hon daou scoaz ha scoaz a deuffe a benn da zibrada ar bec'h-se re bounner da unan. Neuze ar reglen miret ama a ve heb dale miret e Breiz en tiez euz ar memes Urz ha goude, marteze, er Frans a bez. Ne vanc aliez evit eur seurt tra nemed eun den pe zaou a volonteiz vad. Al labourou kenta a vez cavet tenn ha c'huero ; mes nag ar frouez, nag ar baeamant, a zo dous d'ar galon ! »

Ar c'homzou-ze, lavaret gant tan, a ieas beteg goueled he galon, ha Dom Michel Nobletz a gemeras guiscamant relijiuzed Sant-Dominic, er gear a Vontroulez.

An novis santel-ma a vevas er gouent-se evel ar c'henta relijiuzed euz an Urz. Yun a rea cazi bemdez, ne eve berad guin, cousca a rea var an douar noaz ha ne zouge morse na lienach na crez ebed. He spered hag he galon a oa bepred troet var zu Doue. Bez' e oa evit an novised coulz hag evit ar relijiuzed-cosa, eur skuer vad e peb tra.

Eun demezell yaouanc euz kear, o veza

maro p'edo o vont da zimezi, a oue interret e iliz an Tadou. Ouspenn, he mamm a stagas oc'h eur pilier patrom an demezell yaouanc, peñtet a zoare gant rubannou, seizennou, fanfurluchou hervez giz ar bed. An dud divar ar meaz, o credi e oa patrom eur zantez, a iea gant hast da zaoulina dirag eun imach ken caër. Keariz avad a c'hoarze goap o c'houzout patrom piou oa.

Eun devez Dom Michel a i eas ennhan eur vuaneged santel evel ma i eas er Zalver Jezuz-Christ en templ a Jeruzalem. Pila a reas d'an traon ar patrom-ze hag he rogas e mil damm. Ar vamm, drouc ennhi leun he c'halon, a zougas clemm ractal, hac e oue clask var an hini en doa lakeat ar patrom en eur stad ken divalo.

Neuze Dom Michel a lavaras a vouez huel d'an Tad superior, dirag ar relijiuzed-all, ne oa nemethan da veza tamallet, hen eo en devoa great an tamm labourze.

An Tadou a gavas guelloc'h plijout d'an intron eget da Zoue, hag a roas he gonje da Vichel. An Tad Kintin avad a zavas he vouez en ho enep oll. « Dom Michel, emezhan, a zo eur zant; ar pezh en deuz

great a zo mad hag hervez bolontez Doue. Evidoc'h-hu, n'oc'h ket din da gaout eur seurt relijiuz en ho touez. Me n'hen dilezin ket er boan, mont a ran ganthan betek ti he dad evit rei compagneuz dezhan ha goude e tistroin ama adarre.

Michel a zigemeraz an dismegans-se evel deut a berz Doue. Distrei a reas ac'hano laouen d'ar gear, o veza ma oa bet cavet din da c'houzanv eun dra-bennag evit he Vestr.

Biscoas den n'her c'hlevas oc'h en em glemm euz an Tadou. Er c'hontrol, pa zeue ar gaoz var gement-se, e lavare oa bet marteze he-unan eun tammic re hardiz, ha goude tout, e bardone dezho euz a greiz he galon.

TREDE KENTEL

Missionnou Dom Michel hag an Tad Kintin en Escopti Treger. — Prezeg a rejont gant frouez.

Lavaret or beuz, lec'h guiridic Dom Michel a oa caout aoun da goueza dindan

disprijans andud. Azeema hedech, azeema he zi, ha beteg ar maro e c'hourino outhan. E Montroulez e oa bet great faë varnhan, eno ema an dachen a vrezel ne dec'ho ket ac'hano evel eur zoudar digalon. Di eo e ielo, ha gant sicour he Zoue ec'h evo a nebeud a nebeud calir an dismegans beteg ar oelezen, hag er c'hiz-se eo e vougo an ourgouill ne ehane da c'hueza en he greiz.

O veza eta chomet nebeut devesiou e ti he dad. Michel a i eas da Vontroulez, an dachen a vrezel evithan. Evit lamet gri-siou ha mellou-ar vez a ioa ken down en he galon, e i eas da loja e kichen ar gouent. Bemdez e vele an Tadou o vont hag o tont, hag e oa leun a respet evitho oll, ha dreist peb tra evit ar re o doa ar muia he voalgasset. Pa gomze anezho n'en doa nemed ar brasa mad da lavaret.

Commans a reas ractal da ober catekiz d'ar vugale. Da heul ar re-ma e tirede d'he zilaou mareadou tud a bep seurt stad, a bep seurt oad, hag oll e c'avent da zeski er pezh a lavare. Ouspenn, gant aotre an Autrou'n Escop, e iea da brezeg en eur chapel euz a gear, ha dre an tiez, evit hallout dougen muioch-mui an eneou da eur zantelez hueloc'h. Gounit a reas

er c'hiz-se calz eneou da Zoue, hag eur vech m'o devoa tanveat pegen dous oa he gelennadurez, e kendalc'hjont da vale en hent m'en doa merket dezho. E touez ar re a vleigne Michel var hent ar zantelez oa he c'hoar Mac'harit Nobletz. Houma, hed he buez, a ziskuezas splamm d'an oll, pegen talvouduz eo da eun ene christen caout d'he ren eur beleg santel ha gouiziec.

Doare Dom Michel da veva ha da brezeg ne blije ket d'an oll, ma oa douget clemm en he enep dirag Autrou'n Escop Treger deut da Vontroulez da ober eur bale. An Autrou'n Escop a glascas ar pisa ma hallas ar virionez var gement-se, hag o velet kemend all a zantelez hag a zescadurez e Michel Nobletz, e pedas anezhan da gaout truez ous an eneou, ha da ober missionnou en he Escopti.

Mouez an Autrou'n Escop oa evithan mouez Doue. Mont a reas eta da labourat er missionnou gant an Tad Kintin. Hema a c'halve ato Michel he vestr, abalamour m'oa en em zervichet Doue anezhan evit he c'hounit d'ar berfecion. Pa vezent stag gant al labour, an Tad Kintin peurvuia a brezege, Michel a reas ar c'hatekiz, hag a

ziplege ar prinsipala misteriou euz arfeiz. Ar pez a rea n'e ket hebken en ilizou, mes var ar mesiou, en henchou braz, e kichen ar c'hroasiou a gaver e pep lec'h e Breiz-Izel. Kemend e carie ar seurt instrucionou-se ken talvouduz d'an eneoù, ma zeue aliez da ancounac'haat he brejou, oc'h ober evelse he vagadurez gant comzou an Autrou Doue.

An Tad Kintin en em roe ker calonec d'al labouriou ar garantez ma ne daole evez ebed euz ar pez a zelle ouz ar c'horf. Morse ne danvee banne guin, ha da skuizmaro ma vije ne zebre nemed eun tam-mig bara zegal a iea da c'houlén en hano Doue digant an dud divar ar meaz. Prezeg a rea gant kemend a nerz euz galloud ha meurden Doue, ma zirede he c'hoad d'he vizach, ma verve he zaoulagad en he benn evel diou stereden. Neuze hinien-nou, o varn ar re-all dioutho ho-unan, a rea da glevet ar pez a lavare guechall ar iuzevien euz an Ebestel. « Savet eo ar guin d'he benn. »

An orin dud-ze ne gomze ket guelloc'h divar benn Dom Michel. He c'hervel a rejont ar beleg foll, ar beleg diskiantet. Lavaret a reant anezhan ar pez a ioa bet

lavaret euz Abostol sant Paol : Re a zecadurez haga garantez o doa great dezhan coll he skiant vad. Guir eo en doa troet kein da furnez ha da gisiou fall ar bed evit heuilla follentez ar groaz. Mes o veza diskiant er c'hiz-se eo e teuas da c'hounit da Zoue poblou ha broiou tud. Doue a dennas he c'hloar euz ar fañ a ioa bet great var he zaou zervicher fidel, ha var an had-se, taolet en douar gant poan ha gant ar c'huezen euz ho zal, e savas eun eost puill ha founuz.

Ama e lavarign en em gleve an daou visionner-ma evel an daou viz eus ar memes dorn. An emgleo etrezho, an istim o doa an eil evit egile a reas dezho ober ar muia vad d'ar boblou ma brezegent dezho. Aliez, siouas ! tud a spered, tud a skiant ne reont ket ar vad a halfent, o veza n'ouzont ket en em glevet aualc'h etrezho.

An daou zen santel-ma ne ehanent morse da gomz euz Doue a leunie ho c'hallon. Comzou Dom Michel a iea ken doun e calon an Tad Kintin, mac'h en em strinke aliez da dreid an hini a c'halve he vestr, evit poca dezho.

Ho c'hustum oa, goude beza labourat

epad an deiz, tremen eul loden euz an noz o pedi. Kendalc'her a rejont da veva en doare-ze edoug trivec'h vloaz, ha Doue en em zervichas anezho evit renevezi a bez ar boblou o doa an eur vad da veza kentelliet gantho.

PEDERVED KENTEL

**Dom Michel Nobletz a gommans he
vissionnou e bro Leon, dre an ene-
zennou Eussa ha Molenez.**

Dom Michel en doa evit bro Leon ar garantez an tenera. N'e ket hebken abalamour ma oa ginidic ac'hano, mes c'hoaz abalamour euz an oll escoptiou euz rouantelez Frans, ne oa nemed escopti Leon a gemiend e dije diouallet ar feiz splamm ha digatar, abalamour morse an oll ne oa bet guelet unan-bennag, ginidic euz ar vro-ze, oc'h en em roi d'an herezi a ioa en em zilet e goazied ar rest eus ar Frans, hag a vreine he izili.

Poania a reas da genta, e parrez Plou-

gerne, da ober d'ar bobl dalc'her mad d'ar feiz, ha da viret ouz an dud d'en em zaotra ha d'en em gaillara dre ar pec'hed. Goude e ias da ober missionnou d'al lec'hioù ma grede an diessa da c'hounit da Zoue. Mes an hini a zalc'h calonou an dud etre he zaouarn, evel eun tamm coar goag, ho lakeas e doare da gemeret ar plegou mad a falveze da Zom Michel. Mont a reas da genta d'an Enez-Eussa. An enezen-ma a ioa enn-hi var-dro eun daou vil den. Dre eno, hervez a lavarar, eo e commansas sant Paol, kenta escop a Leon, da brezeg an Aviel gant he zaouzeg compagnon.

Enezen Eussa e deuz tost seiz leo dro. Savet eo a-uz da eur mor criz ha didruez. Ne haller mont di nemed e riscl ober pense ha coll ar vuez. Ouspenn, evidoc'h da veza digouezet beteg en enezen-ze, n'o pije ket hallet douara nemet var bouez pignat dre eul lec'h striz ha moan ec'hiz eur skeul, ha c'hoaz gant calz poan. Ma veve eno an dud en assurans hag heb aoun rag ar Zaozon, e oant gouscoude e danjer ho buez, ken aliez guech oa red dezho mont pe zont. Setu perag ez oa nebeut darempred etre an douar braz hag

Eussa. An dud a veve eno evel pa ne vije bet nemetho var an douar, ha n'o doa anaoudegez ebed, euz ar zonjezonou nevez a rede dre ar bed. Mes er c'hiz-se pell diouz peb darempred, nag ho spered, nag ho c'halon, a jomas eñ hag onest! Nag ho feiz a oa stard, nag ho c'harantez a oa hirvidic!

« Rac-se ive, eme Dom Michel Nobletz, biscoaz em buez n'am euz gullet eur bobl tud e couls doare da reseo gras an Aviel, ha da lacaat da dalvout ar pezh a gleve. »

Eno an dud a veve evel breudeur ha c'hoarezed. Ar garantez hag an emgleo a rea dezho beza eñ hag bugale da eun hevelep tad, hag izili euz eun hevelep famil. Morse an oll prosez ebed ne teue da lacaat yenijen etre amezeien. An testou faoz a zo kemend anezho e peb lec'h, ne oant ket anavezet er vro-ze. Setu perag ne oa harner ebed en ho zouez. Ma tigoueze ne vije ket dirouestl aoualc'h ar guden gantho, eun dijenstil ac'hano a roe da anaout, goude an offeren bred, guir peb hini, hag oll e blegent d'ezhan, o c'houzout ervad e oa ar virionez, al lealded, ar pezh en deveze discleriet. Ho doare da vev a ioa ker pur ha ker chast, ma

ne oa morse clevet hano euz unan-bennag brein he galon gant ar pezhed vil.

Ractal ma lakeas Dom Michel he dreid benniget var douar Eussa, kement den a ioa en enezen a ziredas, bian ha braz, coz ha iaouanc, d'he velet ha d'he zigemeret. Unan euz ar pennou kenta euz ar barrez a zeuas d'he bedi ma vije plijet ganthan dont da loja d'he di. Souezet braz e oa antronoz, o clevet lavaret ez oa cavet Michel gourvezet en eur c'hoz ti couezet, eur mean oc'h harpa he benn. « Doue ra viro, eme hon den santel d'ar mevel a ioa digouezet eno, e ven-me cavet cousket en eur guele kun ha blot, pa n'en doa hor Zalver Jezuz-Christ nemed eur groaz da c'hourvez varnhi. »

Ar brud a gement-ma a redas buan a c'hinou da c'hinou dre bevar c'horn Eussa. An enezidi, o velet eun den ker santel o castiza he gorf dre ar binijennou ar c'halleta, a varve gant ar vall d'he glevet. Nag e oant aketuz da zont d'he zilaou ! Michel a rea catekiz, a zeske dezho ho deveriou e kenver Doue, ha deveriou an eil e kenver egile. Displega a rea ar guirionesiou euz ar feiz dirag an dud a vor-se, naoun ha seched dezho a gomzou an Autrou Doue.

Nag an eost a ioa puill ha founuz ! Oll e teujont da govess ho fec'hejou. Eun tamm couez a oue bet great en Eussa euz ar seurt ne oa ket bet guelet bete neuze. Unan eus an devesiou caëra euz he vuez, eme Dom Michel, oa an devez ma velas an enezidi, duet ha caledet gant ar mor ha gant an amzer, o tostaat oc'h ho Doue e Sacramant an Aoter, meulet ra vezo. Dridal a rea he galon en he greiz gant eur joa santel o velet ar pezh en devoa great Doue e kenver an dud-se. Evit ma vije bet paduz ar mad en doa great en ho zouez, ec'h alias an autrou person da zalc'her dreist peb tra da ober catekiz d'ar vugale.

Ac'hano Dom Michel a ias d'an Enez-Molenez An enezen-ma a ioa var-dro eur mil den o chom enni. Ar re a ioa er gear he zelaoue gant ar brasa respet, hag a rea ho mad gant ar pezh a glevent evel m'o devoa great tud enez Eussa. Mes d'ar mare-ze, ar c'hrozvuia a ioa oc'h ober ar besketerez. Michel a iea d'ho c'haout hag a bigne er vrasa euz ar bagou. Ac'hano eo e prezege dezho gant kemend a nerz, divar benn poaniou Mab Doue ha divar benn grevused ar pec'hed, ma ne oa

morse bele neuze guelet kemend all. « Ar vouc'hal, emezhan, a zo savet azioc'h, diouallit mad, coueza a ra, ha dija ema he zremm var grizioù beo ar vezen. Selaoût, kement guezenn ne zougo ket a frouez mad a vezo trouc'het ha stlapet e barz en tan. » Neuze ar vartoloded-ze, caledet gant an amzer ha gant ho labouriou, a zirolle da vouela ec'hiz bugale. Daoublega a reant ar c'herden euz ho bagou evit hallout castiza ho c'horf, ha dre-ze paëa ho dle da justis Doue.

PEMPED KENTEL

Mission Enez-Vaz

Sant Paol Aurelien, anavezet gant bro Leon evit-he Abostol, hag evit he c'henta Escop, goude m'en devoa gounezet d'ar feiz tud an Enez-Eussa, a ias d'an Enez-Vaz a zo ac'hano var-dro eun ugent leobennag. Dioc'h ma lavarar, e caras kemend an enezen-ze, ma ias teir guech da jom di ha ma falvezas dezhan mervel

eno, goude beza kuiteat he garg a genta pastor euz an Escopti.

Dom Michel a c'hoanteas bale var roudou ar zant braz-se, hag evit renevezi spered ha kelennadurez sant Paol, e ias di euz a Volenez. Eno e labouras adarre a zevri evel m'oa custum d'hen ober.

Setu ama unan euz he zoareou santel da zeski al lezen gristen d'ar re vraz coulz ha d'ar re vian : Da Eussa oa eat ganthan eur plac'hic gouiziec ken a, var he c'hatekiz. Mont a reas d'an enez Vaz gant eur c'hrouadur yaouanc desket mad var ar peza zell oc'h ar zilvidigez. Michel a c'houlenne catekiz diganthen, hag hema a responte mad ha difazi. Ker buan e oa meulet hag en doa evit recompans eur vetalen guen cann evel an archant. Ar vugale all ne badent ket gant ar vall da gaout d'ho zro eun dra-bennag. Dom Michel a c'houlenne neuze traou eaz digant eur rebennag o doa ar goupari da veza hardisoc'h ; ha nebeud e respontent mad, racial o doa var eun dro ha meulendiou ha chapeledou. Ar vugale all, peb hini d'he dro, a lavare ar peza ouient, ha Michel a roe eun imach da hema, eur vetalen da hennont, eur groaz da unan all.

Ar mammou hag eur c'halz tud all a zeue ive da heul ar vugale, hag o devoa kemend a c'hoant da veza meulet hag ar re vian. Dom Michel a c'houlenne digant-ho traou diessoc'h, ha goude beza roet eun tammig meuleudi, e kemere tro evit displega scleroc'h-sclera ar peza en deveze goulennet. Er c'hiz-ze, braz ha bian a ioa heb dale desket mad var ho c'hatekiz, ha var ar peza zell ouz ar zilvidigez.

Ar re a zo bet dibabet gant Doue, euz hon touez, evit sclerijenna ar re a zo azezet en devalijen ha dalc'her plas Dom Michel en hon Escopti, a hello ober ho mad gant ar peza zro merket ama.

Er gador e veze, ar c'homzou a iea ker hero euz he galon tommet gant carantez Doue, mac'h en em gave he-unan tene-reat. Neuze e comze evel-hen ouz ar grusifi a zalc'he etre hezaouarn. « Piou oc'hu ? Ma ne lavar ket dign huel aoualc'h mouez va c'halon, an douar o crena, ar vein o frailla, o vruzuna, ar besiou o figori, a lavaro ez oc'h Mab Doue, ez oc'h hor c'hrouer hag hor Zalver-ni. Ha piou a zo criz aoualc'h evit lacaat ac'hanoc'h er stad truezoc'h m'emoc'h, o va Jezuz ? » Piou eo en deuz tachet ho treid sac'r ?

Piou eo en deuz tachet ho taouarn o deuz ken aliez binniget an douar hag an dud a vev varnhan? Piou eo en deuz kurunet ho penn a spern? Piou eo en deuz toullet deoc'h ho costez en eun hevelep feson ma red c'hoaz an dour hag ar goad? Piou...? Me, paour-keaz pec'her ma'z oun. (C'hui, pec'herien ma'z oc'h, a zo ama dirazon. » Hag an daëlou a zifrunke hag a goueze puill-puill euz he zaoulagad. Ha kemend a ioa eno a vouele ive doureg d'ho fec'hejou.

Eur vech m'en deveze tenereat ho c'halon dezho, he vizach a zeue da gemeret eun ear dous ha laouen. Neuze e lakea gant eur vouez dudiuz ar fizians er c'halonou-ze ker glac'haret ha ker mantret. He vouez bremaic a groze, ha brema nag eo dous! nag e ia beteg ar c'halonou-ze goullet, d'ho goalc'hi gant eol ha gant guin mesc ha mesc!

Ouspenn evit daou-ugent vloaz goudeze, moraerien an Enez-Vaz a skuille daëlou o conta doare santel Michel Nobletz evit ho alia da ober pinijen.

Prezeget en deveze dezho ar guirionesiou euz ar relijion. Dom Michel ho c'ho-vessee heb distag ebed, ar rest euz an deiz.

Ha c'hoaz an amzer a ioa re verr evithan, rag, o vont hag o tont euz an iliz veur d'an ti ma loje ennhan, e oa red dezhan covess penn da benn an hent.

Piou a lavaro he zouder, he vadelez, evit ober d'ar bec'herien dizac'ha, dislonca an traou ar c'huzeta e pleg ar galon. Dont a rejont da govess ho fec'hejou oll, hag ho c'halonou scanveet ha divec'hiet a zride gant joa en ho c'hreiz.

Dom Michel goude beza great dezho dilezel an dizursiou ar vezusa, a henchas hiniennou da vont en eur vro franc ha ledan e lec'h ma red al lez hag ar mel, me lavar ho bleignas en hent euz an devosion hag euz ar zantelez. Na pebez taol intanvezed a vije dimezet hag o divije bevet hervez ar bed! Dom Michel a roas dezho Jezuz-Christ evit guirbried, ha dre he aliou mad, an intanvezed-ma a gendalc'has da veva e kreiz an dudiu divin a ro Jezuz d'ar re a zilez an dud evit beva a-unan ganthan.

Dom Michel abarz kuñtaat an enezen a zastumas en dro dezhan an enezidi, hag a lavaras dezho : « Mont a ran kuit, mes ne ancounac'haign morse ac'hanoc'h. Ar boan o peuz kemeret da zilaou piz

comzou Doue, ha da lacaat anezho da zougen eost founuz, en deuz laoueneat va ene. O pezit sonch euz an aket am euz bet da roi kuzulliou mad da bep hini ac'hanoc'h. Dalc'hit mad, me ho ped, da viret ar gelennadurez am euz roet deoc'h epad an devesiou-ma. Arabad eo ober stad ebed euz traou an douar. N'euz nemed eun affer vraz, affer ar zilvidigez, ar rest a zo avel ha moged. » Hag evel an dud a zirolle da vouela, Michel o c'honsolas en eur lavaret dezho, e vije bet ato a galon hag a spered en ho zouez.

Goude-ze e tiskuezas a daol eur groaz ruz hag a ioa stag outi eur penn maro : « Ha bez' euz, emezhan, en ho touez, unan-bennag a gemend a ouffe credi ne vezo ket discaret gant ar maro pa zonjo an nebeuta ? Daoust ha credi a raffe, he benn brema beo-buezec, flour ha flamm ar c'hroc'hen, gant he zaoulagad o virvi evel diou c'houlouen, ne halfe ket beza henvel oc'h ar penn-maro-ma ? »

Hag o velet an oll spontet gant eun hevelep doare da brezeg var ar maro, Michel a lavaras c'hoaz :

« Lezel a ran ganeoc'h ar penn-maro-ma evit prezeg deoc'h ar guirionesiou euz

an Ayiel, keit ma vezin pell ouzoc'h. En hano an Doue beo, ha dre interest evit ho zilvidigez, e pedan hag e aspedan ac'hanoc'h da zilaou aliez he vouez ha da zeski ganthan, eo red en em brepari d'ar maro. An dibri, an eva, al labourat, an ehana, an oll draou-ze, ken nesesser evit dalc'her ar vuez, a lam bemdez ho puez diganeoc'h, hag a dosta ac'hanoc'h bepred ouz ar maro. Grit faë var ar bed ha troit kein d'he lezennou, abalamour ar bed ha kemend a zo ennhan a dremen buan evel eur skeud, ha goude n'euz hano ebed mui. Dalc'hit penn da zonjezonou ha da c'hoantegeziou fall ar c'hic a dle breina ractal goude ar maro. Distagit ho calon euz traou an douar, o veza ma'z int bresc ha ma'z eont buan da netra. Ha ne vent ket zoken bresc anezo ho-unan, e ve red ho c'huitaat pa sco ar maro. »

Mont a reas er c'hiz-se gant he zarmon en eur lavaret eur vech an amzer : *Red eo mervel, red eo mervel.*

Goude m'en doa spontet an enezidi gant aoun rag barnedigez Doue, e roas dezho unan euz ar barapolennou-ze ma oa kustum da lacaat a-zindan an daoulagad. Hor Zalver en doa desket dezhan comz

dre barabolennou, o c'houzout ervad ar bobl a daol muioc'h a evez er pezh a gouez dindan ar skianchou.

Dom Michel, o veza savet huel-huel he vouez, a grias outho a bouez-penn, en eur lavaret : « Grit pinijen, va breudeur, rag tostaat a ra ouzoc'h rouantelezh Doue. Red mad eo da bep hini ac'hanoc'h ober brezel dindan eur Roue. Bez' en deuz tri vanniell a veur a liou. A zindan unan anezho eo red mad deoc'h stourm. Choa-zit an hini a geroch. Be zo unan ruz : hema eo banniell croaz hor Zalver. Ar sura hag an enorapla eo he heuil dre hent ar vuez. Neb en deuz c'hoant da ober pinijen n'en deuz ket da varc'hata, n'euz nemet bale da heul ar banniell-ze. Bez' euz unan guen ; e skeud hema eo a ra brezel an eneoù glan a vev a-unan gant ho Doue, a zarempret ar sacramanchou. An drede banniell a zo du, ema liou ar c'haon varnhan. D'he heul e ia ar becherien aheurtet ne fell ket dezo distroù ouz Doue. Mes an hini a zalc'h ar bed en he za, an hini en deuz ho crouet, pec'her, a zeu d'ar c'haloup da c'houlenn cont diganeoc'h. Ha brema grit ho choaz, emaint

aze an tri vanniell dirazoc'h. Dioc'h ma reoc'h e cavoc'h. »

Ar gelennadurezh-se a oa bet roet gant kemend a nerz, ha Doue a gemeras kemend a blijadur o skuilla he c'hrasou var ar re a zilaoue, ma'z oa fresc c'hoaz, daou-ugent vloaz goude, ar zont euz an deiz caer-ze. An enezidi a ieas d'he heul en eur skuilla dañlou hag en eur hirvoudi beteg al lestr ma dliz pignat ennhan.

Eun Tad Jezuit, goude beza great missionnou cazimant e kement corn euz a Vreiz, a lavaras biscoaz hed he vuez n'en doa cavet tud ken desket var ar misteriou, tud ker pur a galon hag a gorf. Credi a reas, emezhan, kuitaat eun douar santel, eun douar prometet el lec'h an dud a veve ec'hiz elez, kemend a oue paduz ar frouez a reas Dom Michel en enezen binniget-se!

C'HUECHVED KENTEL

**Dom Michel a ra Missionnou e beg
Loc-Maze**

Dom Michel ne gavas ket, en douar braz, ar volontez vad en doa cavet en enezennou. Credi a reas gouscoude, oa beg Loc-Maze al lec'h ma vije bet er muia tro da labourat, evit silvidigez an eneou dasprenet gant goad hor Zalver Jezus-Christ. Ac'hano e halje mont dre vor da ober beachou e bro Leon, e bro Kerne, e bro Treger, evel ma reas e cazi kement bourc'haden euz an escoptiou-ze. Ouspenn, dont a rea da daoler ho heor, e porz Conc-Leon, tostic-tost da veg Loc-Maze, listri euz a bep corn euz ar Frans hag euz a Vro-Zaoz. Michel a grede en dije cavet tro da ober d'ar varc'hadourien ha d'ar var-toloded gounit an env, tenzor presiusoc'h mil guech eget an aour hag an arc'hant a glaskent. Ar pezh he denne c'hoaz var zu eno, oa ma crede en divije hallet

en em zastum e goueled he galon eur vech an amzer evit comz ouz he Zoue, ha dre-ze beva muioc'h-mui a-unan ganthan. Ha neuze, nag an douar a ioa da zigori a oa gouez, goloet a zrez, a spern, a bep seurt stroez ! Seul-vui a dechou o devoa an dud a veve eno, seul-vui a vall en doa da vont da zic'hrisienna ar plegou fall-ze euz ho c'halonou.

Dom Michel a ieas eta di da labourat e guinien he Vestr. Kenta a reas oa anaout clenved ar vro, ha techou fall an dud. Kemeret a reas evithan ar c'homzou a lavaras guechall Doue d'ar profed Izaïas evit rebech d'he bobl he dorfejou hag he fallagriez. Michel a ieas var eün gant an hent, heb sellet en tu-ma tu-hont, ha bis-coaz an dudou-ze n'o doa clevet prezeg an Aviel gant kemend a dan hag a nerz. Mes evel ho c'halonou ne oant ket troet var an tu mad, comzou an Tad missionner a gouezas e touez an drez hag ar spern. D'ar mare-ze e oa eno calz marc'hadourien bian, euz ouenn ar re ne valeont nemed a ruzou ha var ho c'hof; ha n'o deuz nemet poultren an douar evit magadurez. Ouspenn madou ar bed o devoa c'huezet ho c'halonou en ho c'hreiz,

en eun hevelep feson ma ne brizent nemet traou an douar. Ac'hano, eo eaz compren ez oa an devalijen an dua, an teva, en dro dezho.

Michel gouscoude ne gollas ket courach. Dirazhan ez euz eur parcad douar fraost ha gouez da zigori. Ne zamanto ket d'he gorf, poania a raio stard da vont beteg calon an douar, da droi ha da zistroi ar bommou, ha d'ho zrempa gant he c'huezen, a gouezo puill ha druz en henchou.

N'oa ket aoualc'h evitan fusta ar plegou fall e jeneral, ha diskuez splamm an oll guirionesiou euz an Aviel. Ha petra-bennag ma cave dezhan n'oa ket mad ato disken re beteg an traou munud hag ho lavaret penn-da-benn, gant aoun da roi da anaout ar re a ioa cabluz, hag evelse digori a nevez ho gouli hag he voasaat e lec'h he barea; morse evelato ne jomas d'en em darlasca evit lavaret var eün ar virionez d'an oll. Diflat en he gomzou, e roe he damm da bep hini, heb damant ebéd.

Gouzout a rea mad, evit beza neat euz a bep pec'hed, ez oa aoualc'h caret Doue. Gouzout a rea nep a brezeg ar garantez

d'an dud, ho ali ive dre-ze da bratica an oll vertusioù, ha da dec'het dioc'h an oll dizursioù. Mes Dom Michel, gant he spered lemm, en doa remerket, evit chench ar pec'her ec'hiz eun all en he blas, e oa dao disken doun en he galon, disken beteg ar grisiou fall, ho lama unan-a-unan, ha plantañ dioc'h-tu en ho lec'h ar vertusioù. Anez, caër e ve prezeg, den ebéd ne gemerfe evithan ar pezh a ve lavaret.

Great en devoa eul listen, ha var al listen e oa skrivet ar plegou fall ma'z oa ar muia douget dezho ar begad douar-ze euz bro Leon. Varnhi e oa merket ar pec'hejou a ioa er c'halonou, an doare da ober da bep hini anaout he dech ha d'he zic'hrienna, grisiou ha mellou.

Ha prezeg a rea enep an avarised, pec'hed mignon ar vro, ne gave ket d'ezhan ez oa aoualc'h displega ar vis-se, roi da anaout an doare d'en em zizober ha diskuez scler gened ar vertuz a zo enep d'an tech fall-ze. Red mad oa c'hoaz disken beteg an traou minuta, ma vije deut ar varc'hadourien, an dud a justis, an dud a renc-huel, da douch gant ho bizied ho gouli, ha d'en em anaout. D'ar

varc'hadourien e lavare crenn ho laeron-siou, pa o deveze tro da versa pe da brena evit hallout rastellat pesiou arc'hant ha pesiou aour. Rebech a rea d'an dud a justis ho zroiou camm, ho digaresiou, evit hallout ober d'an afferiou stleja hirramzer, ha dre-ze suna ar re a ioa diod aoualc'h da lacaat ho afferiou etre ho daouarn. He c'her a oa ive rust, pa rebeche d'an dud pinvidig, d'an dudchentil, ho c'hrisder e kenver ar paour keaz. Ma ne halle ket ar paour-keaz labourer, ar paour-keaz micherour paëa ric ha rac ha dioc'h-tu he c'houel Mikeal, ker buan e veze aliez stlapet er meaz euz he di gant he bried, gant he vugale, ha taolet var ar plouz.

Ar missionner d'he dro a oa didruez e kenver ar re binvidic-ze a zune goad ar beorien, ha bep taol ma scoe, e save moged ha fulec'hen a zindan he freill. « Goad ar paour, emezhan, a gri venjans ouz justis Doue. Traic ar paour a zo sacr dirag Mestr an envou. Deoc'h eo da grena; an douar, skuiz ganeoc'h, a ia d'ho lonca. Chenchit, pe e criz ez eoc'h gant Satan. » Hag an dud-se, caledet en ho fec'hed, a

scoe eun taol var boul ho c'halon, hag a rea pinijen.

SEIZVET KENTEL

**Dom Michel Nobletz a ro aliou mad
d'ar veleien a ioa er begad douar-ze**

Ne oa ket aoualc'h evit Dom Michel mont var an dachen da ober brezel d'an techou fall, lacaat a rea c'hoaz re all da stourm outho.

Bez' euz cabitened hag a zo dispar da ober eun taol collier; kentoc'h e varfent eget troi kein d'an enebourien. Be a zo re all, ouspenn ma'z int calonec var an dachen, a oar dibuna eur brezel, lacaat peb hini en he blas, ober scoi d'ar poent ha d'ar mare, en eur ger cass an taol da benn. Michel a oa euz ar ouenn dud-ma. N'e ket eur c'habitenic oa, mes eur jeneral braz hag a vele en eun taol lagad, en dachen a vrezel, tu crenv evel tu goag an enebourien, a ouie renca he dud evit

darc'hoi, hag an doare da ziscara ouz torgen an adversourien touet.

Dom Michel a gomze eta, gant ar veleien ha gant ar bastored, divar benn plegou fall ar vro ha divar benn an doareou santel d'ho stlapa er meaz euz ar c'halonou.

Bez' e ouie eo an dud santel gloar ha pillerou an Iliz. Bez' e ouie eo eun den santel talvoudusoc'h da zervich Doue, evit eur maread christenien digalon halezireg. Setu perag e pede ar veleien da gaout ar brasa soursi euz an eneou a gerze en hent euz ar berfecsion. Red mad eo. emezhan, netaat ho oberou euz a gemend ho zeche hag ho breigne. Evit-se en devoa merket scler d'ar veleien an drouc hag ar mad, ar vertuziou hag ar plegou fall a ioa mesc ha mesc er guella christenien euz ar vro-se.

Tenna a ran euz paperiou Dom Michel eul lodennic euz an aliou mad a roas dezho, evit ho scriva ama. Ma oant stanc neuze an eneou daou-hanteret, n'int ket marteze rouez hirio an deiz. Plijet gant Doue e teuffe ar re-ma da denna kentel euz a gemend a vercan.

Bez' e oa en amzer-ze tud hag a rede

da bardona da gement lec'h a zevosion maglevant hano anezho. Hojoa a ioa mont e pelerinach da bedi Doue d'an ilizou ma oa bet staget outho induljansou. Mes lezirec a vad ez oant da zeski ar guirioneziou nesessera euz ar relijion, ne bratikent ket ar vertusioù, ne zarempredent nemeur ar zacramanchou, hag a boan ma virent zoken gourc'hemen an Iliz a lavar eo red covess an oll bec'hejou ha tostaat ouz Sacramant an Aoter, da viana eur vech ar bloaz. D'an dud-se e lavare : « Ar guella doare da blijout da Zoue oa he anaout. » Mar d'ama var an douar an dud a glasc beza servichet egiz m'o deuz c'hoant e vent. eo just ive deomp servicha Doue dioc'h an doare m'en deuz falvezet. Ouspen ar re ne heuillent nemed an devosionou-ze oa heuvel-buez oc'h ar pharizianed. Hogen. ha Jezus-Christ he-unan ne rebechas ket dezho ar c'hiz-se da viret piz an traou distera eus al lezen, epad ne daolent cont ebed en diou c'hourc'hemen genta.

Evit eul loden all, ho devosion a oa ober lavaret eur maread offerennou, ha lacaat eur bern tud da bedi evit ar re a ioa eat d'an anaoun; hag epad an amzer-ze e

oant lezirec ken a, var dro ho zilvidigez ha var dro zilvidigez ar re ma'z oant carget anezho. Ar missionner santel a veule ho aket da lacaat pedi Doue evit ananaoun, en eur lavaret : « Ne hallent ket caout re a garantez evit sicour an eneoù-ze dasprenet gant goad hor Zalver. » Mez fol-lentez a ioa euz ho ferz ober ken nebeud a stad euz ho zilvidigez ho-unan. Muioc'h a lec'h a ioa da gaout truez oc'h outho a rea kemend all a bec'hejou bemdez, eget ouz ar re ne jome mui gantho nemet poan eur pec'hed bian-bennag da beur-baëa da justis Doue. Erfin, an den a vev e creiz tevalijen ar pec'hed, chaden-net ma'z eo gant eur goal voazamanit-bennag, a zo mil guech dinoc'h a druez, evit an eneoù a zo dalc'het ebarz tan ar Purgator, mes eneoù a gar Doue hag a zo caret ganthan.

Lod all a rea dispignou braz var dro ilizou, chapelou, evit ho c'haëraat, ho fitcha, beteg zoken dieza ho zudou. N'o doa avad soursi ebed da baëa ho dle, ho c'homanant d'ho zervicherien, ho devezioù labour d'ar vicherourien o devoa c'huezet an dour hag ar goad evitho. An dispignou direiz-se a rea da Zom Michel

lavaret « ez oa ar chapellicou savet, ha staget ar vein eannho, gant goad al labourerien, gant goad ar beorien. An ofransou-se, e lec'h plijout da Zoue, a oa eun donjer evithan. E lec'h guisca caër pried Jezuz-Christ evel ma gredent, he c'holoi a vez eo a reant, o stlapa varnhi dillad lamet divar dro ar beorien. »

Rez' e oa devodezed hag a iune bep sadorn, a jome heb dibri kig bep merc'her epad ar bloaz, hag ho c'homzou a ioa c'huero evel ar vestl. An drouc-prezeg a oa buez ha plijadur ho c'hozeadennoù. Dispen a reant, ma'z oa eun drugar evitho, brud ho nessa ha dreist peb tra brud an dud a Iliz. Hor missionner a ziskueze dezho, « e tle ar yuniou hag ar binijennou all ober d'ar c'horf douja d'ar spered evit ma vije deut ar spered da zouja da Zoue. Nebeud a dra eo castiza ar c'horf ma laosker franc ar c'habestr gant ar spered. Ar yun a blij ar muia da Zoue eo chom heb ober ar pez a zisplij ar muia dezhan : rag-se, eo talvoudusoc'h d'an ene barn ar re all gant carantez, lezel a gostez eur gaoz eun tammic scanv, eget chom heb dibri kig da verc'her. Erfin, hag e yunfe eun den bemdez a hed he vuez, heb ober

d'he spered yun, da lavaret eo, heb miret outhan da gemeret ar peñ a zo difennet, he zilvidigez ne ve ket evit-se nebeutoc'h var var. »

Echui a rea en eur lavaret : « Si ar re a zo galvet devod eo aliez clasc an devosion a blij ar muia dezho, heb beza e poan, hag an devosion-ze eo ar peñ a c'houlenn Doue digantho? Er c'hiz-se, o heuil ho menosiou ho-unan, e chomont gant ho ze-chou ha ne'z eont ket var an araog en hent ar berfecion. »

Dom Michel en devoa taolet evez piz euz ar c'hlenvejou-se, hag a glaske ho farea ar guella ma halle. Rag dirag he zaoulagad, an dud-se, hanter-vertuzuz ha tremenet gant ar bed evit guir devoded, a ra aliez muioch a zrouc d'ar relijion eget an dud falla. Ar re-ma, anavezet gant an oll evit ar peñ ma'z int, ne lacont den ebed da fasia var ho c'hont, e lec'h ar re all, kemeret evit tud vertuzuz, en em zil seul vravoc'h er c'halonou ma n'euz difisian's ebed anezho.

EIZVED KENTEL

**Meur a dra a deu da enebi ouz Dom
Mikel en he vissionnou**

Ma en dije Dom Michel great sarmoniou caer ha flour divar benn an traou huel-huel, pe c'hoaz ma en dije comzet euz ar plegou fall e jeneral, heb morse disken beteg ar gouli al lec'h guiridic, a dra zur den ne vije bet ker meulet hag hen er begad douar-ze. Mes siouaz dezhan ! neuze en dije displijet da Zoue, rag ar re ne glascont nemet plijout d'an dud ne blijont nemeur da Zoue.

Michel ne ouie ket petra eo meuli an dud coust pe goust, ne ouie ken tra nemet servicha he grouer, ha lavaret heb damanti ar virionez da bep hini. He c'her didroidel hag avechou rust a denne var he benn cassoni ar re o devoa debron, ha lec'h d'en em gravat. Pignat e rea er gador, buan ar gamaraded-ze, debron ez ho, a denne var zu ar meaz evel p'o

divije bet donjer oc'h he glevet. Dom Michel a gendalc'has ato da gelen ar bobl, ha pa gave tro ne vanke morse da ober vad d'ar re a rea goal-vuez dezhan. Rag eüruz aoualc'h en em gavche ha n'en dije gounezet nemed eun ene da Zoue, pe viret oc'h unan hebken da goueza er stad a bec'hed marvel.

N'e ket hebken ar re en em gave flem-met eo en em zave en he enep. Bez' e oa c'hoaz eun orin dud all, ha ne bliche ket muioc'h dezho doare Dom Michel. Ne falveze ket dezho evit netra er bed e vije touchet ouz ar c'hisiou, fall pe vad ma vezent. Ar re-ma, boazet ma'z oant da velet ar veleien stag ouz euz barrez evel person pe gure, a grede eur beleg, evel hema, o vont hag o tont en eur brezeg, a iea a enep peb urz hag a enep peb reiz vad.

Ah! daoust hag an dud-se ne ouient ket e iea hor Zalver he-unan euz an eil lec'h d'egile en eur brezeg hag en eur ober ar mad? Hor missionner, o vale var roudou hor Zalver, a iea euz an eil bourc'haden d'eben en eur ober ar muia vad d'an eneou.

Mes an dud, ma comzan ama anezho,

ne oant ket evit compren e vije eat eur beleg da redeg ama a-hont, hag e rebechent dezhan ar boan a gemere evit mont da brezeg an Aviel. Biscoaz, emezho, beleg a zoare ebed ne oa bet guelet o veva er c'hiz-se.

Guelit ama, me ho ped, lenner, pegen dies eo avechou ober ar mad var an douar. Ma vevit en eun doare paour ha dister, guisket gros ha tano, e vo cavet abeg en-noc'h. Ma fell deoc'h ober labour Doue, e vo red enebi oc'h avel ha mare. Neuze e vo red deoc'h caout calon ha fizians en ho Toue. Dom Michel a ra ar pezh m'o doa great araozhan hor Zalver, an Ebestel, hag oll cazimant a reont an hu varnhan evel var ar bleiz.

Ar vikel-vraz, skuiz gant kemend all a glemmou a zouget en enep hor beleg santel, a iea o vont da lamet diganthan ar guir da brezeg, da ober katekiz, ha da roi ar zacramanchou. Mes Doue ne lez morse en abandon nep piou-bennag'a laca he fisians ennhan. Eun den hag a anavezze mad-tre hor missionner, o veza m'en devoa he velet gant he labour er missionnou, a scrivas kement-ma d'ar vikel-vras :

« Na gredan ket, autrou, eo just ober

tremen evit eur beleg reder ha direiz an autrou Michel Nobletz. Ma caver testou da lavaret e car Dom Michel redeg var lerc'h ar boedou dibab, mont d'ar festou badiziant, d'ar festou eured, d'ar chasse, d'an tavarniou, d'ar manerioù e mesc an dud huel, an dud a stronz; ma tiskuezer scler eo eun den da vont d'ar foarioù, marc'hajou, da brena, da verza, da drafica; mar d'he veler o tarempret an dud a justis evit gounit prosezou, en eur ger ma vev ec'hiz ar re a strinc bouillen outhan, neuze e lavarìn a vouez huel eo just ma reer eur reder anezhan.

» Mes clevit ganen, autrou, meur a vloaz dija a zo abaoe m'en deuz Dom Michel great ar bromessa da vervel d'ar bed. Leun a faë var draou an amzer, ne glasc nemet traou an eternite, nemet gounit da Zoue an eneou prenet gant goad hor Zalver.

» Ma'z euz lec'h da veuli ar re a ia a bell da zelvira ar c'haptived e bro Barbari, ar re a ia da gass a bell ursiou ar roue, ne'z euz ket, a gredan, lec'h da gaout abeg en hini a glasc diframma an eneou euz a dre skilfou an drouc-spered, ha n'en deuz ken c'hoant nemed ober

da anaout ursiou Roue an Env, evit ma vezo Doue anavezet, caret, hag adoret gant an oll dud eus ar bed.

» Hag abaoe peur e voal-gasser, epad ar gernez, ar re a zicour ar paour en he izommou? Hogen, he ouzoc'h mad pe seurt kernez a zo var an eneou euz an escopti.

» N'o deuz ket ar bara a ro hag a zalc'h ar vuez en ho c'hreiz N'euz cazi den da brezeg dezho comzou Doue en doare ma'z eo red. Ar braz euz ar bersoned ne hallont ket roi dezho da glevet an Aviel, o veza ne ouzont ket ar brezonec, langach ar vro. Darn-all ne brezegont nemed en eun doare ken huel ma ne hall den ho entent...

» Ouspenn, rouez eo an tadou spirituel gouiziec aoualc'h evit tenna ar paour-keaz pec'her euz ar vouillen, evit he lacaat var an hent a gass d'ar baradoz, ha dreist peb tra evit he vleigna dre hent ar zantelez. An hini avad a glasker miret outhan da labourat, evit zilvidigez an eneou, a zo eur beleg gouiziec ken a, var an Theoloji, var ar Scritur sacr a oar penn-da-benn, ha var scridou an tadou euz an Iliz. Autrou'n Escop Treger, goude beza anavezet he furnez, en deuz cavet mad he

bedi da labourat en he Escopti. An a-trou du Louet, caner Leon, ar veleien santel o deuz he velet var an dachen labour en ho farresiou, oll a reont ar brasa meuleudi anezhan.

» Mont a ra gant conje an eskibien a bep costez, da gement kear, da gement bouc'haden euz Breiz-Izel ma cred gounit ennho calonou d'he Roue, evit kelen, covess, ha consoli ar re baoura, ar re dizsketa. Hag e lec'h caout eun dra-bennag evit he boan hag he zervich, e teu da ranna he vadou etre ar beorien mezuz, an dud clanv, an intanvezed, hag ar vinored.

» Setu aze, Autrou, perag eun orin-dud a glasc he dremen evit eur reder hag eun den scanv a benn. Gouscoude an dud santela, an dud fura euz an amzer goz o deuz bevet en doare ma clasker hirio kement all a abeg enñhan. Gouzout a rit penaoz an Abostol braz a iea euz an eil bro d'eben, ha sonj mad o peuz ive euz ar c'homzou a lavare d'ar re a zicoure anezhan en he labour : « Deomp da gement kear m'on deuz prezeget ennho comzou Doue evit gueleit hor breudeur er feiz, ha gouzout ho doare. » Den ebed ne gredo caout abeg en den santel Abra-

ham, abalamour ma zave aliez he delt evit mont ana a-hont. Ha ne vo ket cavet cristen diskiant aoualc'h, evit gout hano er Zalver Jezuz, abalamour ma'z ea euz an eil kear d'eben, hag e peb lec'h var ar meaz evit astenn rouantelez he dad. »

Al lizer-ze, skrivet gant eun den hag a anaveze mad an traou, a reas d'ar vikel-uraz chom a za, ha lezel Dom Michel da labourat evit gloar Doue.

Hor missionner santel a dennas ar reolen-ma evithan he-unan, hag evit ar re eo ho dever sclerijenna ar re all : Neb a boagn da c'hounit eneoù da Zoue a dle gedal persecusion. Doue avad he zicouro hag a denno anezhan er meaz a brez, hervez comzou ar profed. — Piau a lavaro ar pezh en devoa da c'houzanv epad tri bloaz euz a berz bep seurt tud ! Mes courach, courach, missionner santel, a viscoaz e skeud ar groaz eo e tíoan, eo e sav ar puilla an drusa eost. Tamallet e faoz, scandalet, gourdrouzet, goloet a vez dirag an oll, Dom Michel a c'houzanas peb tra heb lezel an distera clemmaden. Pa'z eo guir e pardonas a galon vad d'ar re o devoa great goal-vuez dezhan, ni davo ive en eur c'holoi gant hor mantel traou hag

a ra deomp caout dônjer hag a laca ar galon da eugi.

NAVED KENTEL

**Dom Michel a brezeg gant frouez e porz
Conc-Leon, e porz Loc-Maze, ha penn-
da-benn an aot.**

Lavaret or beuz dija, an eost puilla ha drusa eo an eost a zo bet dioanet didenvet e skeud ar groaz. Seul-vui a boan ez euz o lacaat eur gelennadurez da grogi doun e calonou an dud, seul zounoc'h e poulzo he grisiou, ha seul-gaëroc'h e vezo ar frouez. Piou a hello lavaret ar bersecusion m'en d'euz bet Dom Michel da c'houzanv ? Mad, fallagriez an dud a skuizas kentoc'h evit he garantez. Doue a skuillas gant kemend a largentez he venosiou var he labouriou, ma jomas neubeud a gement n'o doa c'hoant da guitaat an devalijen, evit mont da heul ar solerijen a lakea hor missionner santel da bara dirazho. A nebeudou e teujont oll da gaout ar

vrasa istim evithan, hag evit he aliou mad. Ho joa a ioa mont d'he gaout da c'houlén kuzul diganthan, ken evit afferiou ar c'horf, ken evit afferiou an ene. Nag he gomzou a oa c'hoec ha dous d'ar c'halonou gouliet ha merzeriet gant ar boan ! Tenvel ho fenn ez eant d'he di, laouen avad e tistroent ac'hano. Ar braz euz an dud a zeuas dizale da gemeret e peb tra he guzulliou, heb silaou ar peza helle c'hoaz lavaret eur vozadic tud gri-siennet ha louedet er pec'hed.

Pa oa er c'hiz-se carantez Doue peg mad en eur maread calonou, ha pa oa eaz da velet e tlee heb dale ar vro-se en em roi a bez da Zoue, he c'hoar Mac'harit Nobletz a zeuas di, d'he zicour da c'hounit eneoù d'hor Zalver.

Mont a reas da jom en eun ti soul pe blouz, etre Sant-Mahe ha Conc, evit ma vije bet eassoc'h dezhi scolia ar merc'hed bian a zired euz an diou gearic-ze, hag a zivar ar meas tro-var-dro.

An demezell-ma a ioa ken dous ha ken humpl, ma oa an tadou hag ar mammou leun a istim evithi, o velet eur vaonez a ouenn huel o lezel peb plijadur, peb ezamant, evit caout soursi euz ho bugaligou.

Ah ! an demezell-ze na vele ket hebken eno peizantezed-vian, credi a rea gueleit priejou d'hor Zalver Jezuz-Christ. Guelit ama, me ho ped, lenner, he doare santel da zeski var eun dro al lezel gristen d'ar re vian coulz ha d'ar re vraz. Pedi a rea ar mammou da zont da velet ar profit a denne ho bugale euz he c'hentelliou, hag er c'hiz-se e teske dezho oll ho relijion.

Eun intanvez a zoujans Doue, he hano Franseza Troadec, maouez a galon, mar boe biscoaz, a roe dezhi an dorn evit scolia ar vugale. An intanvez-ma a heuille ar pisa ma helle kuzulliou Dom Michel. Tremen a rea evit mamm ar beorien, kemend a blijadur e doa ouz ho maga, ouz ho guisca.

Beilla a rea cazi an oll dud clanv euz Conc hag euz Locrist, hag e sebelie anezho gant ar brasa soursi goude ho maro. Caout a rea c'hoaz amzer da vont da velet an intronezed euz ar renc huela evit comz dezho divar benn an affer vraz, affer ar zilvidigez. An intronezed-ze a ioa leun a istim evit eur vaouez ken spereduz ha ker vertuzuz, en eun hevelep feson ma vizont atao bodet dre gement lec'h ma tremene. Nag e oa eaz evithi displega

scler dirazho ar pezh a zelle ouz ar zilvidigez !

Ouspenn ma oa eur vaouez a zoujans Doue, e ouie c'hoaz evel he fater al langachou brezonec, gallec, saoz, ha spagnol. Anaout a rea kemend a zelle ouz al labouriou mor. Bez' e ouie peñta, ma'z oa eur drugar he gueleit, hag ober cartennou evit bleigna ar vartoloded a iea da drifica d'ar broïou estren.

Dom Michel a reaz dezhi caout eur vouiziegez all calz caëroc'h c'hoaz, an doare da garet Doue ha d'en em zistaga dioc'h carantez ar bed. Tremen a reas ar rest euz he buez oc'h en em roi d'ar beden a galon ha d'ar binijennou. Er c'hiz-se an anaoudegez-ma a oa calz talvoudusoc'h evithi hag evit he nessa, eget an anaoudegez e doa aziarog. Hag he gouiziegez var draou an env a roe dezhi tro da labourat evit silvidigez he ene hag evit silvidigez ene he nessa, eur bar presiusoc'h eget kement marc'hadourez peger pinvidic bennag e halche beza ; pa'z e guir, hervez ar profed, Doue en deuz credet ne oa nemed he c'hoad a gemend en divije hallet prena an ene-ze.

Hor missionner santel a gendalc'has

gouscoude da brézeg, da ober catekiz, ha da govess. An Autrou Doue, o velet he boan, a blijas ganthan ober eur zella garantez var he labouriou. Coueza a reas he c'hras puill ha druz var an dachen ma laboure Dom Michel, hag hema en doa an heur da velet ar vro-ze chenchet a bez evel unan all en he lec'h.

Pa zeuas da genta di, biscoaz den n'en doa clewet ober catekiz. Ne iea den da govess ouspenn evit eur vech ar bloaz. Ar jarneou, ar blasfemou, a zaille euz ginou an oll, evel an dour euz an eïenen, ar vammen. Hag ar c'hrouadur bian, a nevez bragezet, ne ouie nemed eun dra, pec'hi ha toui ec'hiz eur paotr marchosi.

Heb dale, ar vro-se ne oa mui anavezet. Araog ne oa nemet douar fraost, douar gouez, parkeier goloet a zrez, a spern; brema an douar-ze, labouret flour, a zoug eost ha frouez aleiz.

An dud o devoa plijadur o silaou he harabolennou. An eil a lavare d'egile ar pez a ouie, ar pez en doa clewet, hag evelse e teujont da c'houzout mad tre al lezen gristen. Lacaat a reas eur c'hiz da bega er vro-ze, ha dioc'h ma lavarar eo chomet c'hoaz eno. Ar c'hiz-se eo, tostaat

eur vech ar miz ouz Sacramant an Aoter, lavaret grasou dioc'h mintin ha dioc'h noz, ober eur pennadic lenn bep noz abarz mont da gousket.

Dont a reas ive a benn da zic'hrisienna euz calon ar bobl ar zi da zacrear, da doui, ar pez n'en divije credet den. Nag e oa tenn lamet ar c'hrisien fall-ze euz a douez an dud! Mes Dom Michel ne oa ket den da varc'hata. Cousta a raio marteze da ler unan-bennag, n'euz forz, ar mad a zeuio ac'hano hag an oll a vo laouen. Remerket en doa e tremene ar zi-ma euz an eil rummad tud d'egile. An tadou a bec'he a Doue, hag ar vugale a zeske. Ar re-ma d'ho zro a gentellie re all, hag en doare-ze e creske an tech tro-var-dro. Dom Michel, goude beza ruillet ha diruillet ar zonz-se en he benn, a gredas distroi ar re vraz en eur blanta furnez e pennou ar re vian.

Pa zigoueze, var ar blasen pe var an hent, da eur c'hrouadur-bennag sacreal, toui, ker buan Dom Michel a rea he fusta ken a ken var al lec'h, ha dirag an oll. Braz ha bian, o velet kement-se, a gemere caz ouz ar pec'hed hag en em vire outhan goude guella ma hallent.

Eüruz ha teir guech eüruz mar d'ar re a zo deut var ho lerc'h o deuz ar memes donjer ouz eur seurt pec'hed miliget!

E mesc ar re a c'hounezas er vro-se Dom Michel d'ar zantelez ez oa diou c'hoar a lignez huel, an demezelled de Kerourien. Ar re-ma a lavaras kenavo d'ar bed, hag a ieas d'ar gouent e lec'h ma'z int maro ec'hiz diou zantez. Evit an demezell de Kerbescont, o veza great veu da jom dizemez e creiz ar bed, a gendalc'has beteg ar maro da ober faë var draou an douar.

A viscoaz ar Zent o deuz en em c'hreat dioc'h an dud evit ho gounit da Zoue. Dom Michel en em zervichas euz an anaoudegez en doa var ar c'halcul ha var ar mathematic evit gounit calonou ar re a iea da drifica var ar moriou. Deski a rea dezo kemend a zell ouz ar mor, hag ac'hano e kemere he dro evit comz divar benn ar zilvidigez, o teski dezho var eun dro an hent a gass d'an env, hag an hent a gass d'ar broiou pell.

Piou a lavaro he aket da vont da velet ha da gonsoli ar re glanv! Kemeret en doa hanoiou ar beorien mezuz a zicoure kemend ha ma halle, o tioueret he-unan

an fraou nesessera evit maga izili hor Zalver Jesus-Christ. En eur ger, vad e rea d'an oll.

DEGVED KENTEL

**Mission Landerne. — Taolennou
misteriuz Dom Michel.**

Landerne a zo unan euz ar vrasa, euz ar pinvidica keariou euz ar vro, me lavaro zoken eo ar bobl unan euz ar re vella euz an Escopti. Mes diouz ar vech e lec'h ma zo greun reud ha coant ez euz ive duan ha lostennachou.

En devez kenta ma tigouezas Dom Michel er gear-ze, e oe bet darbet dezhan beza lazet gant eun den mezo a rede var he lerc'h evit he dreuzi gant he gleze.

Ouspenn, mar am euz lavaret dija en deuz peb den he zi, e lavarin ama e deuz peb bro he zech. Kear Landerne e doa he hini, douget e oa da vaniteou ar bed. Ar merc'hed eno ne zonjent, d'ar mare-ze, nemet caout dillajou caer, rubannou,

seizennou, fanfarluchou en dro dezho evit hallout bragal. Hag evit-se, ñe trouzivient ar pezh a ioa etre ho daouarn, ar pezh a c'hounneze ho goazed, e lec'h lacaat an archant-ze da zoulaji izommou ar paour, da vaga, da visca ho bugaligou, ha da ober scolia anezho en eun doare deread : « Intronezed didruez, mammou dinatur, eme Dom Michel, a laca var ho zro da vouga ho ene, ar pezh a dle beza lakeat da vaga ar paour ha da scolia ho bugale! » Mes siouas! pa vez ezenn an douar o talla eun den, e prener cloz spered ha calon gant aoun rag ar sclerijen.

An dud huel, an dud a strons, a gavas guelloc'h chom e creiz vaniteou ar bed, eget dont da zilaou eur missionner divar ar meaz, eur missionner ha n'en doa nemet comzou rust ha c'huiro da lavaret d'ar pinvidic, d'ar mendant. Ha n'o doa ket hi beleien aoualc'h, ha dezho eur ger gous flour ha dibab?

Ne zeuas eta da zilaou Dom Michel nemed an dudigou paour ha dister ho doare.

Credi a reas e oa deut ar mare evithan da zeski ar bobl, dre an doare santel ma

en doa diskuezet dezhan spered Doue, en he ermitach e Tremenac'h. Remerket en doa ar rezoniou huel n'o deuz crog ebet er sperejou poud ha berr. Ar zarmoniou braz a rea d'an Ilizou tregarni ken a zistag ar raz, a zo henvel, emezhan, oc'h eun tantad tan raden a zao beteg an env, hag a laos eien sclass an oaled var he lerc'h. Setu ar pezh a zigouez gant an dud nebeut digor ho spered; buan ez int touchet gant ar zarmoniou-ze, gouela a reont zoken, mes aliez goude, ne jom netra, netra.

Credi a rea, goude m'en deuz eur predicatour pedet ha goulennet bennoz Doue varnhan ha var ar re he zilaou, e tle poania stard da veza rez ha rez gantho, hag ho lacaat cazimant da douch gant ho biz ar pezh a glevent. Ar scoarn, evit beza ma'z eo an or da reseo an Avel, n'e ket marteze franc aoualc'h ato, eme Dom Michel, evit hallout digemeret al lezen gristen. Red mad eo c'hoaz d'al lagad dont da zicour. Digoromp scoarn ha lagad, ne vezo ket re anezho.

Ar rezoniou-ze a reas da Zom Michel ober meur a daolen misterius. Varuho e oa peñtet an techou fall hag ar vertusiou.

An oll, en eun taol cont, a ouias lenn he gentelliou. Eun ebat hag eur c'hoari a oa evitho deski er c'hiz-se ar misteriou euz ar feiz, ha deveriou peb christen e kenver he Grouer, e kenver he nessa.

Biscoaz ne oa bet gueleit na clevet kemend all. Tud dizec ha ne oant bet morse er scol, a lenne var an taolennou ar seiz pec'hed capital, hag ar guirionesiou all euz ar relijion.

An taolennou-ze a zougas dioc'h-tu ho frouez. Eur guchennic tud a zilaouas ho displega gant joa ha plijadur, hag a gen-dalc'has beteg ho heur diveza da veva hervez aliou mad an Tad missionner.

Doze ne lezas ket eta he zervicher en abandon. Ober a reas eur zell a garantez varnhan, ha calon Dom Michel a zeuas da veza barr a levenez. Rag gueleit en doa pegemend a frouez o dije douget an taolennou-ze e peb lec'h euz an escopti. Hag hirio an deiz an taolennou, displeget a zoare gant ar re o deuz kemeret plas missionner Breiz-Izel, a zo joa ha dudi ar gristenien. Var digarez farsal hag ober c'hoarzin, hor missionnerien a oar ker brao ha tra sila en eneou guirionesiou ar feiz ha rei kentel d'ar re ho zilaou.

PEVARE LEOR

MISSIONNOU DOM MICHEL NOBLETZ EN
ESCOPTI KERNE

KENTA KENTEL

Mission Kemper-Corentin

Abaoue sant Visant Ferrier ne oa bet gueleit den ebed en escopti Kerne o teski al lezen gristen dre barabolennou ken eaz da gompren. Tano oa eta an dud a ouie ar misteriou.

Dom Michel, o velet kemend all a eneou o virvi en eur seurt tevalijen, ne gredas ket e oa aualc'h evithan lavaret he vrevier; en em lacaat a reas e doare da staga a zevri d'al labour.

Er bloaz 1614, goude mission Landerne, Dom Michel a ia da gaout Autrou'n Escop Kerne. An Autrou'n Escop a aotreas

dezhan prezeg, ober catekiz, covess e peb corn euz he escopti.

Hor missionner a gommansas dre Gemper, ar gear benn, hag ar vrasa euz Breiz d'ar mare-ze, goude Roazon ha Naoned. Er gear-ze an dud a ioa dizesc var ho deveriou a relijion hag ar vugale ne ouient seurt euz ho c'hatekiz.

Dom Michel a boanias stard da zeski ho relijion d'an oll. Prezeg a rea bep sul ha bep gouel e parrez Sant-Vaze. Epad ar c'horaiz ne vancas ket da vont bemdez da gouent Loc-Maria evit comz d'al leanezed euz ar poaniou e doa bet an Intron-Varia da c'houzanv da vare passion he Mab divin.

En em roi a reas c'hoaz d'an oll oberiou a garantez, ha gouscoude ne ancouna-c'hea ket ar vugale. Petra a lavaran-me? he vrasa soursi a oa beza var ho zro. Credi a rea e oa galvet gant Doue da gentellia ar re vian. Doue a lakeas ar zonchse en he spered, neuze pa oa c'hoaz iaouanc-flamm. Ne oa nemet pevarzeg vloaz pa i eas var lerc'h roudou hor Zalver da zeski al lezen gristen d'ar vugale euz he oad. Al labour-ze a blije seul-vui dezhan ma'z oa nebeud a dra dirag daou-

lagad an dud, ha ma cave tro da jom izel a galon.

Evit kelen ar merc'hed, Dom Michel en em zervichas euz an diou vaouez santel a ioa bet assamblez ganthan e missionnou Conk ha Loc-Maze. He c'hoar Ma-charit Nobletz a i eas d'he heul oc'h hada he c'hentelliou hag o roi an aluzen evit guisca ar re a ioa en noaz, boeta ar re o doa naoun.

Me gav dign e ra mad an Autrou Doue roi madou d'ar re a zo truezuz ha carantezuz ouz an dud reuzeudic.

Ne oa ket aoualc'h da Zom Michel boda en iliz Sant-Primed hag en iliz Santez-Madalen ar vugaligou en dro dezhan evit pasca dezho ar guirionesiou euz ar feiz, clasc a rea c'hoaz en em gaout gantho an aliessa ma helle. Evit-se e roe eun imach da unan, eur vetalen da unan-all, hag oll bugale kear a rede var he lerc'h leun a joa hag a garantez evithan. Mes, siouaz! an dud vraz, an dud desket euz kear, a gavas divalo eur seurt doare da instrui, doare hag a rea gouscoude dridal elez mad ar vugale-ze.

Epad an tri bloaz ma jomas e Kemper, ez eas aliez d'ar c'heariou bian ha d'ar par-

resiou all euz an escopti, e lec'h ma c'hou-neze calz muioc'h a eueou da Zoue eget ne rea e kear, o veza ne gawe ket eno an dud ker douget d'an interest ha da vani-tiou ar bed.

Ober a reas gouscoude da Gemperiz chench calz ho doare da veva. Rouez avad a ioa ar re a hellas Dom Michel hench a var zu ar binijen, ar beden a galon, ar garantez birvidic evit an nessa hag ar fae var traou ar bed.

E paperiou Dom Michel e caver gouscoude skrivet hanoiou eun nebeud intro-nezet euz Kemper, brudet en ho amzer evit ho zantelez.

Ouspenn, n'euz den ebet a gemend a ouffe tostaat ouz an tan heb santout an domder ar grouez. Neb piou bennag a dostaio eta ouz Dom Michel a zeuio buan da veza tonim-bero e carantez an Autrou Doue.

Kemeret en doa evit he dad covessour eur beleg euz parrez Sant-Vaze. An autrou-ma o tarempret eun den ker santel, a zantas he galon o teuzi en he greiz gant carantez Doue hag a varvas en eur roi ar brasa mercou euz eur zantelez heb he far. He gorf a ioa bet cavet fresk en he

bez meur a vloavezh goude egiz ma vije bet a nevez maro.

EIL KENTEL

**Missionnou Dom Michel er Faou, e
Conc-Kerne, e Pont-n'Abad, e Goaien,
hag el lec'hioù all euz escopti Kerne.**

O veza ma oa escopti Kerne er brasa izomm euz an Aviel, carantez Michel a iea e peb corn evit lacaat sclerijen ar feiz da bara e greiz an devalijen. Mont a reas da eur gearic vian hanvet ar Faou evit ober eur mission. He zoare da brezeg, da ober catekiz a blije calz d'an dud a gleve anezhan. Mes, siouaz ! he rancas kuitaat divar greiz he labour ar mission evit mont da Gerodern da velet he vamm a ioa var ar poent da vervel.

He veach ne badas ket hirr amzer. Goude beza great ar pezh a c'houlenne ar garantez a berz eur c'hrouadur a galon, e tistroas ar buana ma hellas d'he vro a ioa dija o c'hlaezezi gant an eost a zave puill ha

druz. Labourat a reas e kear ar Faou evel el lec'hioù all heb damant ebed d'he boan; ha ma ve red dign henvel ar parresioù a dremenas dreizho oc'h hada comzou an Autrou Doue gant ar c'huezen ouz he dal, e hanfen cazi an oll parresioù euz an escopti. Mes ne gomzin ama nemed euz al lec'hioù anavezet guelloc'h, o veza ma'z euz chomet paperioù ha testenioù euz ar pezh a scrivan.

Kear Conc-Kerne a ioa d'ar mare-ze brudet abalamour d'he forzh mor ker coant ha tra. Guelet e veze eno, ma'z oa eun drugar, listri euz ar c'haëra, douget var eur mor sioul evel eur mellezour. Ouspenn, ar mor a rea en dro da gear ec'hiz eur c'houriz c'hlaç, hag eur c'hastell-brezel, savet gant an dukez Anna a Vreiz, a zifenne kear a enep ar re o dije clasket dont a benn anezhi. Er porzh mor-ze, neuze unan euz alc'hueziou ar vro, e veze bepred soudarded paët ha boetet gant ar gouarnamant.

Hor missionner a zigouezas eno eur zulvez epad ar gousperou. Heb coll tamm amzer e pignas er gador-brezeg da fin an offis, hag en em lakeas a zevri da zisplega

ar prinsipala misterioù euz hor feiz ha dreist peb tra ar goulennou euz ar bater.

Aoualc'h a oa evit soudarded guelet eur beleg o vont er gador evit ober dezho scara euz an Iliz. Ker buan ar vourc'hisien, evel eur vanden denved a ieas var holerc'h. « Penaoz, eme ar re-ma, ober deomp c'atekiz ! » Evel pa vije bet ober nebeud a stad oc'h outho, abalamour ma en doa clasket ober dezho da anaout ar pezh a c'houlennent bemdez en ho fedennou. Beza e oa evit guir nebeud anezho ha ne ouient ket ar c'homzou a zo er beden gaër-ze desket gant Jezuz d'he ebestel, mes ker tano a ioa ive ar re a ouie entent ar c'homzou-ze ! Biscoaz bete neuze n'o doa clevet prezeg nemed en eun doare re huel evitho, setu perag n'o doa nemet disprijans evit comzou ken ordinal hag evit eur predicator ken izel.

Eun intron a ouenn, euz bro Leon, o veza eat d'ar mare-ze da velet he c'hoar dimezet da eun dijentil o chom tost-tost da Gonc-Kerne, a oue souezet braz o velet an nebeud a stad a rea ar vourc'hisien euz Dom Michel. Buan e lamas ar scant a c'holoe daoulagad he c'hoar ha daoulagad ar re all. Conta a reas dezho ar vad en

doa great an den santel-ma e meur a lec'h e bro Leon. N'euz forz, tano a oue an dud vraz a blijas gantho mont d'he zilaou ; ne ieas da glevet he brezegennou nemed an dud dister hag a zivar ar meaz.

Ac'hano e ieas da Bont-Abad. Eno he gomzou a gouezas en eun douar beo ha druz hag a zougas ar brasa frouez. Pa lavaras kenavo da geariz, ar vugale oll a ouie ar pez zo red da c'houzout, hag an dud vraz o devoa great covessionnou jeneral ha troet kein d'ar pec'hed. Egiz ma oa custum da ober el lec'hioù ma dre-mene dreizho, e clascas sevel beteg an diveza pazen euz ar zantelez hiniennou euz an huella tud euz kear, evit ma vije bet ho buez evel eur brezegen veo dirag ar re all.

Setu ama penaoz en em gemeras Doue evit santellaat unan euz ar famillioù-ze.

Michel a oa boazet pa'z ea en eul lec'h bennag da studia ha da scriva bemdez tra pe dra. O veza eta c'hoanteat caout paper e c'houlennas digant eun intron e pe lec'h eo e veze guerzet. Houma a droas he fenn heb respont ger, evel gant faë. Gouscoude he c'houstians a rebechas dezhi beza faïet a respet da eur beleg. Conta a reas var

eün d'he fried ar pez a ioa c'hoarvezet ganthi. An dijentil-ma, leun a garantez e kenver ar beorien hag a respet evit ar veleien, a oue poaniet braz o clevet kement-se. Ober a reas eta clasc an den-ze, hag evit diskuez ar boan en doa bet, e roas dezhan eur pezig arc'hant en eur lavaret : « Pa o pezo izomm ac'hanon, me vo atao prest d'ho sicour. »

Servicher Doue ne reñzas ket an aluzen a oa kiuniget dezhan, eüruz da veza bet kemeret evit eur paourkeaz. Dom Michel a ieas zoken da drugarecaat an autrou-ze euz he vadelez. He zoare santel a blijas kement dezhan ha d'he bried ma oa eaz evithan o lacaat d'en em zistaga a grenn dioc'h ar bed ha da garet traoù an enev. An dijentil-ma en doa eur c'hoar. Houma a zigoras franc he c'halon da alioù mad hor missionner hag a renas eur vuez hen-valoc'h ouz buez eun eal eget ouz buez eun den. Er c'hiz-se eo e teuas Dom Michel da baë an aluzen en doa bet, en eur roi eun aluzen all, talvouduz aoualc'h evit prena ar baradoz.

Hor missionner a ieas goude da Voaien. Ar gearic-ma a ioa d'ar mare-ze unan euz ar brudeta porsioù mor euz Kerne.

Eno e oa o chom eur maread marc'hadourien pinvidic. Troet e oant re, siouaz ! ouz ar c'honverz, ouz an arc'hanchou evel ma'z oa Konkiz. Rag-se ive ar varc'hadourien a daolas d'ar meaz dal ma velchont Dom Michel o pignat er gador-brezeg.

Hor Zalver en deuz lavaret an nep piou bennag a ra faë varnoc'h-hu va diskibien, a ra faë varnon-me. Marc'hadourien braz Goaïen oc'h ober faë var gomzou Dom Michel, a reas eta faë var gomzou Doue he-unan; ouz Doue eta o devezo affer. Setu perag Doue a ziframmo digantho ar madou a rea buez ho c'halonou, evel ma tisclerias dezho hor missionner en he zarmon genta.

Eun devez e teuas dezho ar c'helou oa collet var eun dro ho listri, ho marc'hadourez. Eüruz c'hoaz ma teujont da c'houde da glasc gounit madou ha ne hallont ket beza lonket e goueled e strad ar mor, na coueza etre daouarn al laëron.

An dudigou paour ha dister, an dud a c'hounitho boed divar bouez ho divrec'h, a zeuas da zilaou ar missionner, hag a dennas ar brasa profit euz he zarmoniou.

Dom Michel a jomas eno nebeud amzer. Anaout a reas neuze e c'houlenne Doue

outhan ma vije eat da labourat var ar meaz evit sclerijenna ar re baour.

TREDE KENTEL

**Missionnou er parresiou hag e c'heria-
dennou var ar meaz. — Superstisio-
nou ar vro.**

Dom Michel en doa remerket eo eas-soc'h da eur missionner dastum en dro dezhan an dud divar ar meaz, ho c'hen-tellia, hag ober dezho chench buez evit m'eo ebarz e kear.

Credi a reas eta oa deut ar mare evithan d'en em roi a bez d'ar missionnou var ar meaz. Evit hallout ober scanvoc'h he droiou, e prenas eur marc'h. Ouspenn, bez' e oa clanv diglanv, hag en doa aoun n'en dije ket hallet padout da vale. Prena a reas c'hoaz eur marc'h all evit dougen he daolennou, he baperiou, he imachou, ha calz traouesiou bian a roe d'an dud evit ho zenna da zont d'he zilaou.

Setu eta Dom Michel var varc'h o vont

da brezeg an Aviel, pa zigouezas ganthan peorien a iea da Gemper da verza pesked. Bep a veac'h a ioa gantho, skuiz a dra zur e tleent beza. Hon den carantezuz ne vele morse unan er boan, en izomm, heb santout dioc'h-tu ar c'hoant da zont, d'he zicour ha da ranna ganthan he zamm. Dont a reas eta da gaout truez ouz an dud vad-ze a iea ker sammet en hent. Kinnig a reas dezho he zaou varc'h evit ober buanoc'h hag eassoc'h ho zro. En nozvez genta e oa taget unan euz ar c'hezec gant ar bleiz, an hini all a gouezas en eun toul islong hag a oa lazet var an taol. An dud paour-ze a zeuas en eur grena d'en em daoler e harz treid hon den santel. Hema ho digemeras gant ar brasa dousder ha gant ar brasa madelez. N'e c'houlennas digantho digoll all ebed, nemet ma vijent deut da zilaou he gelen-nadurez. Plega a reas gouscoude a galon vad da volonteiz an Autrou Doue a c'houlenne outhan ma vije eat da brezeg e peb corn, heb clasc soulajamant ebed.

Neuze e teuas dezhan eur c'hoant braz, eun naoun du da c'hountid da Zoue eneou an dud divar ar meaz. Ouspenn, kemend a vall o doa an dud keiz-se da veza scle-

rijennet, ma vije bet criz calon eun den o chom heb roi dezho ho goulenn ! Dom Michel a gredas g'eleit ar mesiou goloet a eneou o tua gant an naoun ha dallet c'hoaz gant ar superstisionou. Ar guel-ze a dizas beteg he galon, hag e vouelas gant truez o velet en dro dezhan kemend all a zienez hag a baourentez.

Setu ama darn euz ar superstisionou pe simillerez a rene d'ar mare-ze var bro Breiz-Izel hag a c'holoe ar bobl evel eul lorgnez diez da gass kuit.

Calz gragez a skube piz ha piz an tosta chapel d'ho c'hear, a stlape ar boutren, ar skubanadou en ear, ma teuje mad an avel evit distro ho goazed pe ho bugale a ioa var ar mor.

Gragez all a gemere etre ho divrec'h imachou skeudennou ar zent a ioa er chapelliou. Neuze e c'hourdrouzent an imachou-ze ma ne teujent ket da zigass ho zudou d'ar gear. Ha pa ne zigoueze ket ar peiz a c'houlennent, ar gragez-se a fuste tu-dioc'h-tu ar skeudennou pe ho flante en dour.

Lod all a stlape er parc eun trebez pe eur gontel croget, evit miret ouz ar bleiz da daga ar penn-loan a ioa dianket.

Meur a hini a scarze ar barazou, ar zaillou, ar veoliou, pa veze maro unan-bennag euz an ti gant aoun na-vije bet beuzet an ene. Ouspenn, derc'hent goel Ian, peb rumad tud a rea eun tantad tan ha peb hini a stlape eur menic ebarz, evit ma vije deut ho zadou, ho mammou coz da domma en ho eaz varnho.

El lec'hiou all ez oa ar c'hiz divalo da laosker ar iaouankizou, goazed ha mer-c'hed, da zansal er chapelliou, var digarez enori ar zant pe ar zantez, ha den ebed, m'hen tou deoc'h, n'en dije sonjet miret eun dra ken iskiz.

Bez' e oa c'hoaz er memes lec'hiou ar c'hiz d'en em strinca d'an daoulin dirag al loar nevez, ha da lavaret ar Bater-noster en he enor. En amzer-ze ez oa feunteuniou er bourc'hadennoù pe var dro ar chapelliou. Mad, d'an deiz kenta ar bloaz, peb hini a ginnige eun tamm bara goloet a amann d'ar feunteun an tosta. Kinnig a reant c'hoaz d'ar feunteuniou-ze ken aliez a damm bara ma'z oa a zen en tiegez, ha dioc'h ma jome an tammou var an dour e lavarent piou a dlee mervel er bloaz-ze.

Setu amaeur superstision calz goasoc'h : an dud divar ar meaz a ioa cazi heb tamm

descadurez cristen ebed. Credi a reant e oa great ar guiniz hag ar zegal gant Doue; evit an ed-du pe sarrazin ez oa deut, emezho, a berz an diaoul. Rag-se ive e stlapent fozadou euz an ed-ma en anchou, evit enori an drouc-spered ha roi he damm d'an diaoul.

Beza e oa eur c'hiz caër d'an amzer-ze, ar c'hiz da ginnig nao devez dioc'h-tu sacris santel an offeren evit goulén bennoz an Autrou Doue. Mes, sionaz ! lod euz ar gristenien, pa zigoueze d'ho loaned coueza clanv, a grede ez oant scoet gant ho zudou maro, ha ker buan oa red lavaret nao offeren dioc'h-tu evit dousaat an anaoun fuloret, gant aoun n'en dije scoet al loaned all.

Hor missionner santel en doa ar brasa fisians e sant Corantin, abostol ha kenta Escop Kerne. En em erbedi a rea outhan euz a greiz he galon evit ma en divije bet dreizhan an nerz da netaat ar vro euz ar superstisionou. Bez' en devoa an eur abarz mervel da velet he labour o roi frouez. E peb lec'h an dud keiz-se a lezas a gostez ar zorserez. Ne glaskent mui nemed eun dra, clevet ar guirionesiou cristen a zeue euz ginou ar missionner.

Neuze e harz treid Dom Michel e ranne ho c'halonou en ho c'hreiz gant ar c'heuz, d'ho fec'hejou tremenet. Ah ! mar d'eo calet c'huero al labour, nag eo dous ive ar frouez ! Piou a lavaro ar joa, al le-venez a zavas e calon Dom Michel, o velet eur seurt chenchamant ? Nag e anavezaz neuze peger gallouduz eo dorn an Autrou Doue, a laca da redez al leaz hag ar mel en eur vro e lec'h ne oa ket zoken dour aziaraog !

PEDERVED KENTEL

Dom Michel a ia d'an enez Sizun. —

Doue a skuill he venostlou var he labour.

E creiz ma oa guir vella o labourat evit silvidigez an enecou, er parresiou a zo var ribl mor Anvoric Kerne, e teuas da c'houzout ez oa an enez Sizun heb beleg abaoue meur a vloavez. Aoualc'h e oa evithan ar c'helou-ze evit lezel eno var al lec'h he rouejou, ha mont timad d'an

enez, pegen danjeruz-bennag ma'z oa an treiz.

An enezen-ma, var dro teir leo euz an douar braz, a ioa guechall brudet dre an nao druzez a rea var ho meno anaout an amzer da zont. Rag-se ive, ar greden a ioa e touez ar boblou e rea an nao druzez-se da anaout peb tra da nep piou-bennag en dije treuzet ar moriou evit mont d'ho c'haout. Credi a reat e sente an amzer outho, e zeue da veza brao pe fall dioc'h ma lavarent ; e anavezent al louzou a bare an oll glenvejou ; e chenchent corf evel en eur c'hoari evit kement ar furmou ma carent. Ar vetalennou a gaver eno ker stanc a ziskuez splamm ez ea ar greden-ze e peb lec'h.

N'euz ket e Breiz, na marteze e lec'h all ebed euz an Europ, eun enezen ken diez douara ennhi eget hounma. Red mad eo, evit mont di, treuzi eur vrec'h-vor hanvet ar Raz, mil guech danjerusoc'h eget Karybd ha Scylla, ker brudet guechall gant ar re goz-goz. Er Raz e teu meur a vare da geja an eil ouz egile. En em stoki a reont gant kemend a diz hag a nerz ma ne'z euz lestr ebed evit herzel ouz an taoliou spontuz-se. Red mad eo d'ar mo-

raër gouzout drez peur e haller tremen, anez n'euz nemed ar maro da c'hedal. N'e ket aoualc'h beza er meaz euz ar mareou-ze, ar vartolodet a gav c'hoaz var ho hent kerrec criz ha didruez.

Piou eo a nivero al listri a zo bet brevet o vont da scoi var ar c'herrec-se! Piou eo a hello niveri ar voraerien a zo bet sebeliet en eur mor ken digalon! Ar mor-ze zo ken treiz, hag ar c'herrec ken didruez, ma vez atao ar vuez var var da vont da goll peger brao-bennag e ouffe beza an amzer, peger gouziec-bennag e halfe beza ar sturier. Setu perag e lavarer:

Biscoaz den ne dremenaz ar Raz
Heb aoun pe c'hlaez.

Sizun he-unan a zo bepred e riscl da veza beuzet. Kemend ema-hi rez ha rez gant ar mor ma c'hoarvez aliez e vez go-loet gant an houlennoù, hag e couez an tiez en ho foul.

N'e ket braventez al lec'h nag an ezamanchou eo a ra d'an dud chom eno. N'euz guezenn ebet evit mont da voaskedi pa vez fall ha criz an amzer, n'euz guezenn ebet evit mont da zisheolia pa vez tomm scaot an heol. Eno n'e ket anavezet an

ezennic fresc ha clouar a ra ebad an dud da vare an hanv. Eno n'e ket anavezet ar voazic a ruill he dour oc'h hiboudi goustadic. Eno ne glever morse al labousic gant he vouez flour ha laouen o richanat, var branc ar vezen, meuleudi d'he grouer.

Gouscoude an enezourien a zo stag a greiz ho c'halon euz ho zammic douar. Ha perag ne ve ket? Daoust hag eur galon great mad ne gar ket ato he bro?

Silaouit, lenner, setu ama doareoù tud an enez Sizun d'ar mare ma ieas di Dom Michel Nobletz.

An douar ne zouge ken eost nemed eun tammic heiz, aoualc'h a vec'h evit maga an enezourien epad tri miz. Ar rest euz ar bloaz, e'tebrent grisiou louzou e lec'h bara gant eun tamm pesked, heb amann nag eol na guinegr. N'e event ken guin nemed an hini ma plije d'ar mor digass beteg enno en eur pense bennag. N'o doa ken evach nemed an dour az eant da denna euz eur puns a ioa eno. An dour er puns-se a ioa cazimant ker sal hag ar mor. Great oant kemend ouz an dour zalze ma n'o doa diezamant ebet evit he eva, ha marteze zoken, eme an hini a scrivas

an dra-ma, an dour eo a rea dezho beva cosoc'h eget an dud euz an douar braz.

Ar goazed, eno, adaleg seiz pe eiz bloaz, eo ho buez beza o pesketa noz ha deiz e creiz ar barrou amzer, e creiz ar c'herrec a zo evel hadet pemp leo ac'hano. Evit herzel oc'h kemend all a labour hag a skuisder n'o deuz evit magadurez nemet bara ha dour, evit lojeiz nemed ho bagou hag ar goeliou a lacont en dro dezho. Ho gragez hag ho merc'hed eo a labour an douar, a had, a eost, a val an heiz, hag a ra bara ganthan. Evit-se n'o deuz ket d'ho zicournamarc'h, nag ejen, na melin vraz ebed. E peb tiegez e veler eur velinic vian henvel ouz ar velinou a zo o vala pebr. N'eo eta nemet divar bouez ho divrec'h ma hellont mala ho heiz ha goudeze e lacont an toaz da boaza dindan ludu bezin.

Matroloded an enez Sizun n'o doa d'ar mare-ze hano mad ebed, kemeret e oant evit goal draoù, galvet e oant diaoulou ar mor abalamour e c'huezent tan var ar reier evit hallout lacaat al listri da fazia var ho hent, ha da scoi var ar c'herrec didruez a ra an dro d'an enezen, hag evelse caout gant ar mor ho lod euz ar

pez a errue beteg ennhio. Nebeut bloave-sion araog, an Aotrou'n Escop, o veza oc'h ober he dro, a c'halvas da zont d'he gaout, da Gleden, autrou Person an enez, evit goulén cont diganthan divar benn ar pez a dremene en he barrez. Ker buan enezourien da dreuzi ar Raz evit goulén a nevez ho ferson. Dirag an Autrou'n Escop e tenjont ho c'hontilli hirr ma en em zervichent outho evit divoùzella ha ne-taat ar pesked braz. An Autrou'n Escop a zavas aoun dezhan, ha ne oue dispont nemet pa velas ar bleizi mor-ze eat en ho bagou.

Setu aze ar brud a rede divar benn an enezourien. Piou a gonto ar pez a glevas Dom Michel lavaret outho! N'e ket tud e oant, dioc'h ma lavaret, mes bleizi prest da daga ar maleüruz a goueze etre ho daouarn. Ha neuze eno e veve an 'dud gant pesked criz ha dour zal. Ouspenn, nag e oa chansus eun hevelep beach! Aot an Anaoun a zo guen gant eskern an dud reuzeudic o deuz clasket tremen ar Raz!

Dom Michel, den calonec mar d'ez euz bet biscoaz, ne dec'ho ket araog an danjer. A-hont en tu all d'ar goagnenou spontuz

ez euz eneuou prenel gant goad hor Zalver, an eneuou-ze a zo er vrasa dienez. Lod n'iat ket bed badezet, lod all a zo bec'hiet a bell zo ho c'houstians, ha ne'z euz ket eur beleg evit ho lacaat mad gant ho C'hrouer. Mad, Michel a ielo di, be e oar e saveteer ar vuez ma clasker an dro d'he c'holl evit ar C'houer. Ouspenn, buez an den a zo bepred etre daouarn Doue coulz var zouar eget var vor. He fizians dezhan a zo en hini a ra d'an avelou dijadennet ha d'an tarsiou guen douja, dont da veza sioul ha compez.

Va Doue, va zicourit evit tremen ar Raz,
Rag va bagic zo bian, hag ar mor a zo braz.

Bennoz Doue he heuillas beteg Sizun. Tremena reas ar Raz cazimant heb santout an danjer. Leun a anaoudegez vad, Michel en em strincas d'an douar evit trugarecaat Doue. An enezourien, braz ha bian, a deuas d'he zigemeret, hag a reas dezhan ar brasa mercou a respet hag a enor. Kemeret e oa gantho evit eun eal deut di evit lamet ar plegou fall a ioa en ho c'halonou. Poania a reas gant eun aket heb he bar da lacaat ar guir Doue da veza anavezet hag adoret muioc'h-mui.

Mes euz ho c'hoztez, nag e oa moraerien an enez Sizun aketuz da brofita euz he geennadurez ! Goude prezeg diou vech an deiz, Michel a rea dezho oll ober eur govession jeneral. Gras Doue a gouezas puill ha teo var an enezourien. Ho c'halonou, calet evel mein, a zeuas da veza boug ha goag evel coar. Ne òant mui henvel ouz ar pezh ma'z oant aziaraog, Doue a ioa tremenet dre eno, hag en devoa lakeat he verc, he ziel.

Eun dra ag ha ra d'ar beacher beza, souezet eo ma ne'z euz hano ebed en enezen-ze euz a amprevaned binimuz. N'ouzon ket abaoe peur ne'z euz mui loaned drouc en douaren-ze. Ne gredfen ket lavaret, ec'hiz meur a hini all, eo abaoe m'e bet sant Guenole o chom eno. Mes ar peza ouzon, ar pezh a doufen, eo o deuz tec'het pell ac'hano, goude mission Dom Michel, amprevaned mil guech binimusoc'h. Hag e guirionez ne veler cazi mui eno na casoni, nag avi, na drouc-prezeg, na trouz, na prosez ebed. Ne c'houzanver eno pec'her ebed a skuer fall. Vertuziou ha carantez ar gristenien genta an eil evit egile a ren eno en ho c'haëra ; e nep lec'h ebed euz an Europ

ne vez heuillet kercoulz an exersisou a zevesion. N'euz gour ha ne iaffe bemdez d'an offeren, nemed he labour var vor a virfe outhan. Ar c'hroz vuia a ia da govess bep miz. Mintin ha noz ez eont da adori Salver ar bed er zacramant adorabl euz an Aoter. Ha morse ne veler den ebed o chom heb mont d'ar gousperou, sul ha gouel. Ar voraerien hag ar merc'hed a gan tro ha tro ma ioa eun dudi evit an Autrou'n Escop a blijas ganthan mont da velet an douar benniget-ze.

Setu aze, lenner, penaoz an Autrou Doue a zeu a benn da ober, euz eun tamm douar goloet a gerrec hag a zabl, eul liorzic laouen ha coant, eur skeuden euz liorz hon tad hag hor mamm genta e baradoz an douar.

PEMPET KENTEL

**En enez Sizun, Dom Michel a zescas
gant kemend a zoursi eur pesketaer,
ma'z eo deut goude da veza beleg,
ha person an enez.**

E kement lec'h ma dremene evit prezeg an Avel, Dom Michel en doa ar c'hiz santel da zibaba unan-bennag euz an dud huella, d'ho henchha hirroc'h er zantelez, evit ma vijent bet evel touriou-tan da sclerijenna ar re all. Araog kuitaat an enezen-ma, hor missionner a boanias da gentellia eur pesketaer brudet mad eno.

Kemend a zoursi a gemere var he dro, ma oa eaz gouzout e lile anaout dija eun dra-bennag euz ar pezh a zonje Doue var ar moraer-ze. Lacaat a reas etre he zaouarn al levriou devod-se a vleign an ene en eur vro francoc'h, hag he voet gant eur vagadurez divin. Deski a reas dezhan meur a dra zantel evit dougen ar re all d'ar vertuz hag ober dezho anaout ar pezh m'int oblijet da c'hout.

Ar moraer-ze a ioa eta evel eun tour-tan huel e creiz ar c'herrec. Michel a zeue a vare da vare, dre he liziri, dre he gannaouennou devod, dre he zivinadennou ijinuz, da zalc'her var elum ha da greski zoken ar sclerijen a bare dirag an oll.

Ar pesketaer, ma gomzan ama anezhan, a dremene e touez an enezourien evit eun den a spered hag a galon vad. Dont a rejont eta d'hen henvel cabiten an enez. Ar c'habiten-ma en em zervichas euz ar c'halloud a roe dezhan he garg nevez, evit ober d'he genvroiz heuilla piz an exersisou a zevasion m'en doa hor missionner santel desket dezho.

E 1641, eiz vloaz var-n-ugent goude ma'z oa bet eno Dom Michel o prezeg ar feiz, daou dad Jezunist, o veza clevet ne oa en enez Sizun beleg ebed evit kelen ar bobl nag evit rei dezhan ar zacramanchou, a ieas di da beur-ober an tamm labour great gant hor beleg santel.

Eur joa vraz a ioa evitho caout ar besketaerien-ze c'hoaz leun euz ar Speret-Santel a reas Dom Michel disken varnho keid all a ioa. Hor c'habiten, aketuz da viret ar pezh a ioa bet gourc'hemennet gant hor missionner, a iea hep sul gant-

ho d'an iliz. Neuze e veze great eur procession, douget ar groaz hag ar banniel, canet litanioù ar Verc'hez, ha goude eur beden-all bennag, e tisclerie dezho gouelioù ar zizun, an devesioù vijil, hag ar yuniou. Goñde creisteiz, hor c'habiten a zone adarre ar c'hloc'h, hag eur vech ma vijent bodet, e cane gantho ar gousperou. Ober a rea c'hoaz eur pennad lenn euz eul leor-bennag digaset dezhan gant hor missionner. Avechou all e save he vouez hag e comze dezho euz misterioù ar gouelioù brasa. Ouspenn, da Vener ar Groaz, hor c'habiten, desket mad he gentel gant-han, a brezege gant nerz ha gant tan divar benn poanioù ha maro hor Zalver Jezuz-Christ.

An daou dad Jezunist a gavas eta an enezen goloet a eost guen ha dare. N'o doa nemed eosti ar pezh ma oa bet hadet gant Dom Michel, ha dourèt gant hor c'habiten Fransez Su.

An Tad Maner, o velet ar bobl tud-se digor ho sperejou hag ho c'halonou gant-ho evit reseo guirionesioù ar feiz, hag euz eur c'hostez all o veza ne oa moyen ebed da gaout eur beleg da vont di da berson, a lavaras ennhan he-unan : « Perag ne

ve ket great eur beleg ouz eun den hag a zo kemend a zoujans evithan en enezen. Goude tout, Fransez a oar lenn ha scriva brao. Nema ket kennebeud heb gouzout ar gallec. Eun tammic scol var al latin evit hallout lavaret mad ar brevier hag an offeren, ha neuze eun nebeudic studi var an theoloji evit anaout clenvejou an eneou hag al louzou evit ho farea, setu aze ar pezh a zo red, ha Doue a ralo ar rest. »

Ar c'helou-ze a reas plijadur da Vransez. « Va-unan, emezhan, an dour en he zaoulagad, em heuz bet aliez ar zonch-se, mes ne greden ket chom ennhî, abalamour am euz nebeud a zescadurez hag a vertusiou evit pignat ken huel. »

An tadou a alias hor c'habiten da vont da gouent Landevennec evit deski lavaret an offeren, ar brevier hag an traou a gaver ar peurlieissa da zibuna er gador govess e touez ar voraerien. Goude beza tremeneteno eur zizun-bennag, e ieas da Gemper da gaout an tadou. Digouezout a reas eno gant he zillad moraer, eur zac'h dindan he vrec'h. An tadou a roas dezhan eun toc e lec'h ar honed elaz a ioa gant-

han, hag eur vantel e plas ar gapoten vartolod a zouge.

Goude e ieas dirag ar chalonied evit beza examinet. Ar re-ma da genta ne oant ket evit credi e vije galvet da veleg eur martolod a hanter-cant vloaz. Mes, o veza kinniget dezhan leor braz an offeren, hor c'habiten a lennas ken difazi ha ken dibi-couz ma'z oant dija cazi gounezet. Unan anezo o veza goulennet diganthan ar pezh ma c'houlennas sant Philipp ouz tenzorier rouanez an Ethiopii : « Credi a rit-hu compren ar pezh a lennit aze ? » Hema a zisplegas dirazho ker brao, e langach ar vro, ar pezh a lenne, ma'z oa an oll souezet, sabatuët. Respont a reas coulz all d'an oll goulennou a ioa bet great dezhan divar benn ar govesson.

Mont a reas eta da Sant-Paul a Leon da reseo an ursiou sacr, ha goude e tistroas da lavaret he offeren genta d'an enez Sizun. Chom a reas eno epad seiz vloaz o roi ar brasa mercou a zantelez hag a garrantez e kenver he genvroiz.

An Autrou'n Escop a oa eur blijadur vraz evithan mont d'an enezen-ma, ha bep tro e cleve an enezourien oc'h ober ar vrasa meuleudi euz ho c'habiten per-

son. « Beilla a rea, emezho d'an Autrou'n Escop, var he zenved evel eur vamm var he bugale, ho diouall a rea a enep an techou fall coulz hag ar guella pastor a ziouall he loaned ouz ar bleizi. Bez e oa ken aketuz da bellaat outho an distera tra a zoug d'an drouc, eget m'eo an den da bellaat kemend a halfe ober poan da vap he lagad. »

Evit-se e vedite bemdez var an Aviel, o tenna ar brasa profit euz a gemend a lenne. Prezeg a rea bep gouel ha bep sul ; goude ar gousperou ec'h esplike ar c'hatekiz d'an oll hag erfin e cane ar c'hanticou spirituel a gomze euz ar prinsipala guirionesiou euz al lezen gristen. Morae-rien an enez Sizun a zescas ar c'hanticouze d'ar voraerien all, hag e veze cleve, var mor criz ar Raz, heb ehan ebed e pe vare euz an deiz hag euz an noz, ar c'hanticou santel-ze a rea joa ha dudiu an Elez.

Ar c'hiz-se, roet d'ar vartoloded gant hor c'habiten da gana canaouennou devod e lec'h chansoniu ar bed a ganent araog, e deuz, hervez ma lavar an hini en deuz scrivet kement-ma, lakeat ar mor criz ha leun a darsiou guen da veza siouloc'h.

Epad ugent vloaz dioc'h-tu, eme ar memes skrivagner, ne oa bet beuzet gour euz an enez, ha gouscoude bete neuze ne dre-mene bloaz ebed ma na vije collet eur vag-bennag ac'hano.

Enezourien enez Sizun n'int ket evit trugarecaat aoualc'h ho c'habiten santel hag hor missionner he gentellias, ken dre he gomzou, ken dre he liziri.

PEMPET LEOR

DOM MICHEL A IA DA JOM DA ZOUARNENEZ. —
ENO E CAV TRO DA C'HOUZANV, ABALAMOUR
MA CLASC PELLAAT AN DEVALIJEN A C'HOLOE
AN ENEOU, HAG AR PLEGOU FALL A GRIGNE
AR C'HALONOU.

KENTA KENTEL

Dom Michel e kear Douarnenez

Dalc'h mad goude mission an enez
Sizun, Autrou'n Escop Kerne a bedas
Dom Michel d'en em zoursia euz parrez
Meillard, neuze heb person ebed. Tremene
a reas nebeudic amzer er garg-ze o veilla
guella ma helle var an denved fiziet
ennhan. Mes Dom Michel a oa galvet
gant Doue da vont en tu-ma tu-hont da
brezeg ar feiz, heb beza stag oc'h parrez
ebed. Distag crenn diouz peb tra var an

douar e iea e lec'h ma crede ez oa galvet
gant Doue.

Mont a reas da Gemper da velet he zis-
kibien evit ho startaat er feiz. Meur a hini
all e c'hounezas da Zoue, hag ho alias d'en
em ziszober euz ar pezh a lui an den er
bed-ma, evit bale gant tiz en hent santel
ar groaz. Araog ma ieas er gear-ze, o veza
ne ouie ket pe lec'h mont goude, e pedas
Doue, dre an Intron-Varia, ma en dije
anavezet ar vro e doa ar-muia izomm euz
he c'huezen, euz he boan. Ar Verc'hez
gloriuz Vari, an Intron dous-se a renas
anezhan evel dre an dorn, a roas dezhan
he c'houlenn. Guelet a reas splamm dre
eur sclerijen digaset dezhan euz an Env,
ez oa galvet da gelen eul loden euz pobl
Kerne en iliz Plouare.

Ouspenn, Doue a roas dezhan da c'hou-
zout e vije couezet gliz an Env seul zru-
soc'h ha seul founusoc'h var he labour
ma vije bet braz ha c'huiro he boanien.

Ne c'hortozas ket ma vije echu mission
Kemper evit mont da Blouare. Digoue-
zout a reas eno da Verc'her al Ludu. An
iliz a ioa leun, evel eur gestad guenan,
a vartoloded, a labourerien douar. Ne oa
en dro dezho na dillajou caer na fanfur-

luchou. Kempen en ho guiscamant, ne glaskent ket bragal oc'h heuill frouden-nou ar bed. Ar goupari anezho a blijas calz d'hormissionner. Prezega reas dezho, hag he gomzoutommet gant tan carantez Doue, a ias var eün beteg beo ar c'halon-nou. Neuze e lavaras ennhani he-unan, e teuje da gentellia ar bobl-ze dal m'en divije echuet he vission e Kemper.

D'an eil var-n-ugent a viz mae 1615, antronoz gouel an Dreinded santel, eo e teuas Dom Michel da daoler he dreid benniget var an aod-ze a dlue gounit d'he Zoue. Mont a reas da jom da Zouarnenez neuze eur gearic vian, ennhu eun daou vil-bennag pe var dro. Mont a reas di evit deski ho c'hatekiz, ho relijion, d'an dud-ze a ioa ken dizesc var gemend a zelle ouz servich Doue. Mont a reas abalamour ma'z oant paour a vadou an douar, ha ne oa ket anavezet en ho zouez ar spern-ze a zav hag a voug ar greun mad a vez hadet er c'halonou. Ouspenn, den a feiz hag a esperans ma'z oa, e crede stard dont a benn da roi eun elven-bennag euz carantez Doue d'ar varc'hadourien a zeue, a bep corn euz rouantelez Frans, da

gerc'het sardin evit ho c'hass d'ar Spagn, d'ar Portugal, ha d'an Itali zoken.

A boan digouezet er gearic-ze, ma ias da c'houlenn bennoz autrou person Plouare evit mont da brezeg en iliz Santez-Helena e lec'h ma iea ar vartoloded d'an offeren. Ar pastor-ze a ioa eüruz o velet Dom Michel deut da brezeg d'he barrez. Dija en doa guelet, e Conc-Leon, Dom Michel var an dachen, ha ne oa ket evit meuli aoualc'h Doue da veza lakeat e spered ar missionner ar zonj da zont da sclerijenna he barresioniz.

Dom Michel a ias dioc'h-tu d'an iliz, hag, o veza, dirag an aoter, kinniget da Zoue ar c'hoant en doa da greski gloar he hano santel, e sonas he-unan ar c'hloc'h. Ar bobl, o clevet ar c'hloc'h o seni en eun devez hag en eur mare ma ne oa ket custum, hag o credi ez oa an tan-goal en eur c'horn bennag euz kear, a ziredas d'ar c'haloup da velet pe seurt a oa a nevez. Ar predicatour, dija er gador, a lavaras dezho e oant en eun danger calz brasoc'h eget an danger m'o doa aoun razhan. Goudeze e prezegas dezho gant tan divar benn barnedigesiou Doue.
* Diouallit, emezhan, e ve tost deoc'h an

deiz ma astenno Doue dorn pounner he justis varnoc'h. Grit pinijen, rag ar vouc'hal a zo savet a zioc'h ar vezen, ema dija an drem sco er grisiou, hag heb dale ar vezen a vo trouc'het ha stlapet ebarz an tan. »

An devalijen a oa braz e touez ar var-toloded. Ar c'hroz-vuia euz an dud, ken goazed, ken merc'hed, ne ouient ket « *hon Tad pehini a zo en env* », na peden all ebed, na zoken an articlou euz hor feiz. Dom Michel a lakeas he oll zoursi d'ho c'helen var misteriou an Dreinded, an Incarnasion, ha da zisplega dirazho ar sclera ma helle ar *Bater*, an *Ave*, ar *Gredo*, gourc'hemen-nou Doue, an doare da govess, an actaiou a feiz, a esperans, a garantez, hag a gon-trision.

Da genta nebeud a dud a brizas gantho dont da zilaou he gentelliou. An darn-vuia anezho ne oant ket evit gouzany e vije goulennet digantho ar pez a veze goulennet digant ar vugale. Lod all a lavare : « Re goz omp evit en em lacaat a nevez d'ar c'hatekiz, ar memor ne bleg mui d'ar seurt traou-ze. Ouspenn, hon tadou coz ne oant ket desketoc'h evidomp ha kement-se ne vire ket outho da veza

tud onest. » Lod all a vad lavare a zindan e pleg ar scoarn, e ouie ar missionner ar pec'hejou ar c'huzeta. « Henez, emezho, a dle beza sorser hag a oar en em zila beteg strad ar galon. » Bez' e oa zoken hag a iea bete lavaret ez oa an Antecrist he-unan hag ar bed a oa tost d'ar fin.

Eur seurt diotachou a gavas gouscoude sperejou berr aoualc'h evit roi lojeiz dezho. Hor missionner ne vancas ket evit-se da ober catekiz ha da zarmon bemdez epad an amzer ma dremenas e lec'h-se. Caër a oa he c'hoapaat ha roi dezhan ar rebechou ar c'hueroa, an niver euz he ziskibien a greske muioc'h-mui. An drouc-spered a c'huezas kement tan ar bersecusion er c'halonou, ma i eas lod euz an dud a oa enep hor missionner beteg miret ouz ho gragez hag ouz ho bugale mont da glevet conchennou ha farsou an estranjour. Mont a rejont zoken beteg lacaatar polis varlerc'h Dom Michel, evel pa vije bet eur c'holl amzer evit ar re a iea d'he zilaou.

Unan-bennag gouscoude a zeuas d'he zicour evit dalc'her penn oc'h ar re a glaske noazout dezhan. Eur marc'hadour braz hag he bried, heb aoun rag den, a

zavas huel ho mouez evit ober da anaout d'an oll ne oa ket eur c'holl amzer mont da zilaou comzou Doue ha mont d'an offeren. Evitho, n'en em gavent ket paouroc'h, pell aze; abaoe ma oant ken aketuz da vont da glevet Dom Michel, ar madou a zeue founusoc'h en ho zi evel pa vije bet dorn Doue eno. Meur a hini all a lavare ec'hiz an daou bried-se, e tioane francoc'h an archant etre ho daouarn abaoe ma oant deut d'en em roi euz oll nerz ho c'halon da zervich ho C'hrouer, e lec'h madou ar re ne dostea ket morse oc'h sarmon nag oc'h offeren a iea da netra. Henvel er chiz-se ouz an eienen ne skuill ket he dour a ia buan d'an hesc, hag a zeu da veza sec'h corn.

EIL KENTEL

Dom Michel a all Autrou person Plouare da examina' he barresioniz evit gouzout piou a iea e tro da reseo ar sacramanchou.

Eul loden vraz euz martoloded Douar-nenez hag euz tud Plouare, a ioa o chom

var ar meaz, o doa mall da zont an aliessa ma hellent da zilaou kelennadurez hor missionner. Mes ar braz anezho a gendalc'he da ober fañ var he gomzou hag a jome er chiz-se da vreina en ho dallentez. Eun devez Dom Michel Nobletz, goude beza goulennet sicour Doue, a ias da gaout Autrou person Plouare evit en em glevet ganthan var an doare da alia he barresioniz da zeski ar pez a zo red abarz tostaat ouz ar sacramanchou. « Mar d'eo red, emezan, gouzout hag eur c'hloarec a zo desket aoualc'h araog reseo sacramant an urz, ez eo ive cazi red gouzout hag ar re a zo o vont da dostaat ouz ar sacramanchou a oar petra emaint o vont da reseo. Hogen evel al loden vrasa euz parresioniz Plouare ne ouient ket ar pez a zo nesesser evit ho silvidigez, e crede stard ne tlee ket ar pastor ho lezel da dostaat ouz ar sacramanchou, heb m'o dije gouezet ar pez a zo red evit-se... Var he veno, an oll a dlee beza examinet var ar relijion gristen, hag eur vech douget al lezen evit an oll, cazi den no dije savet ho mouez en enep. Goude tout, goaz aze d'ar re n'o divije doujet d'al lezen. Er

c'hiz-se heb dale, ar re vraz o dije gouezet ho c'hatekiz coulz hag ar re vian. »

Ar pastor carantec-se, o velet ne halle eun heveler sonj dont nemed euz an Env, a lavaras e pron an offeren bred ne roje mui sacramanchou an Iliz, nemet d'ar re a vije bet examinet.

An oll a oa souezet o clevet kemend all. Neuze Dom Michel a bignas er gador evit explica dezho ar pezh a ioa a nevez. Er c'hiz ma couez an eol var ar gouli ruz, e couezas dous he gomzou var calonou an dud.

« N'euz netra iston ama, emezhan. C'hoant o peuz da reseo ho sacramanchou ? resevit mad anezho, anez ho cont a vezo calz goasoc'h eget ma ne dostafac'h morse outho. Deoc'hui eta eo d'en instrui ha deomp-ni eo d'ho kelen. C'hui ha ni a gavo hor mad e kement-se, pa'z e guir e raimp oll hon dever. Ouspenn, n'e ket an dra-ma ken diez ha ma zonj eur guchen dud a zo ato oc'h ober labour an drouc-spered, gant ar vez. Eun heuric-bennag a zo aualc'h evit deski al lezen gristen deoc'h oll. Hag e ve goude tout en ho touez unan-bennag ha ne ouesfe ket he bedennou, ar zarmoniou a rin bemdez dirag an oll ho zicouro, ha ma'z eo red

deski dezho a gostez ho c'hreansou, emañ ama prest da roi va amzer ha va foan dezho. »

Gliz an Env da viz mae ne ra ket muioc'h a vad d'ar guez eget na reas comzou ker brao lavaret. An dud divar ar meaz coulz hag an dud euz kear a ioa aketuz da zont d'he zilaou. E lec'hioù var ar meaz an dud o doa ar c'hiz divalo d'en em zastum diou pe deir guech ar zizun evit hallout dansal eur pennad-bennag euz an noz. Dom Michel o veza casset, d'al lec'hennou-se, unan-bennag euz he ziskibien ar gouizieca, buan an ebatou a droas e divizou santel.

Ar missionner calonec-ma, ouспен, ma gelenne an dud en iliz, a iea c'hoaz da glasc al labourerien douar en ho farcou hag en ho ziez evit deski dezho ho relijion. Mont a rea ive da velet an oll dud clanv e kear evit ober catekiz dezho, ha dousaat ho foanioù dre ar pezh ma tisclerie dezho a berz Doue. Avehou e cave tud ha ne falle ket dezho dont d'he zilaou, abalamour n'o doa ket na spered, na memor aualc'h, var ho meno, evit dalc'her sonj euz a gemend a glaske lacaat en ho fenn.

Michel a ziskueze dezo splamm, ne oa

kement-se nemet digaresiou. « Rag, emezhan, nouspet chanson e ouzoc'h, ha n'e ket eassoc'h ho deski evit ar misteriou euz lezen Doue. » An dud-ze, sclerijennet ho spered gant comzou ken guirion, a velas ar viriñez hag a zeuas a c'houdeve gant miall da glevet he instruksionou.

Dre an doariou santel-ze an Avel a ioa heb dale prezeget e peb corn euz ar barrez. Neuze, pa oa anavezet ha caret Doue e peb lec'h, hor missionner a reas dont he c'hoarevit peur-ober, ekichen ar merc'hed devod, ar pezh en doa commanset e calonou an oll. Mac'harit Nobletz a gavas eno ar sperejou hag ar c'halonou preparet ken mad-gant labour he breur ha gant ar gliz a ioa diskennet euz an Env, ma zeujont, var bouez poania ive euz ho c'hostez, da zougen eur frouez euz ar seurt ne oa ket bet gullet c'hoaz.

A viscoaz an drouc-spered en deuz clasket caëa ouz gras an Autrou Doue. Ne lezas ket Michel da boania e peoc'h evit gloar he vestr. Ar re binvidica euz ar barrez, o credi ma oant hueloc'h evit ar re all e oa evit m'o dije hallet beza nebeutoc'h desket evitho, hag en em goll heb na lavarche den netra dezho, a gassas

ho ferson dirag an Autrou'n Escop. He dorfet a oa, emezho, digas er barrez nevezentiou, kisiou ha ne hallent ket beza miret gant an dud oajet ha gant an dud o doa traou-all da ober ouspenn evit deski catekiz.

An Autrou person ne zeuas ket var he gil evit en em zifen a enep an teodadou fall-ze. « Me, emezhan, d'an hini a zalc'he lec'h an Aotrou'n Escop, zo dalc'het da respont da Zoue euz silvidigez an eneoù a zo fisiet ennon. Hogen ne hallin ket ober d'am zud en em zavetei nemet deski a raffen dezho ar pezh zo red. Coz ha yaouanc, pinvidic ha paour a dle eta gouzout ar pezh a zo nesesser evit tostaat ouz ar sacramanchou. An huella euz ar barrez, o veza n'int ket an desketa, pell a-ze, a dle ive, evel ar re all, douja da eur memes lezen... Goude tout, e tlient beza eüruz braz da gaout eur seurt missionner evit ho c'hen-tellia. Daoust hag an den gouiziec ha santel-ma, ne lakea ket he oll boan, he oll zoursi d'ho sclerijenna? ha morse an oll ger c'huero ebed ne zeue euz he c'hinou. Ouspenn, ne gemere evit he labour hag he c'huezen, paëmant ebed. Petra a lavaran-me? Sicour a ra ar re a zo en

izomm, o rei dezho kemend a zo etre he zaouarn. »

Ar rezoniou-ze a blijas cals d'an hini a zalc'he lec'h an Autrou'n Escop. Pastor ar barrez a oa meulet abalamour m'en devoa great kemend a ioa en he c'halloud evit deski ho relijion d'he barresioniz. Ar c'hiz-se da c'houlen c'atekiz digant an oll a dremenas e meur a barrez all, hag ar bersoned o deuz kemeret an doare-ze, o deuz desket guelloc'h, a zindan eur bloaz, al lezen gristen d'ho zud, evit m'o doa great, e doug cant vloaz, ar bersoned a ioa bet araazho.

TREDE KENTEL

**Na pebez chenchamant e touez an dud
e Douarnenez hag el lec'hioù tro var
dro !**

O taoler evez er pez a reas Dom Michel e kear Douarnenez, e teu sonj dign euz carantez eur vamm e kenver he c'hrouaduric.

Guelit ar vamm-se. Na pebez soursi var

dro he bianic ! Hi eo a basc dezhan he dammic boed keit ne hell ket mala mad he-unan. Hi eo a zesc dezhan balbouza eur geric bennag. Hi eo a ra dezhan kemeret ar pleg mad. Mes nag a boan e coust dezhi eur seurt tamm labour ! Na pebez guiad pasianted ! Ar c'hrouadur a lamm hag a zilamm, araog ma laosco ober eur paotr kempen anezhan. Ar c'hrouadur, froudennuz ma'z eo, a vouel, a lenv evit an distera tra. Aliez a vech ar vamm, o clevet he frouez o crial, a zanto neudennigou ar galon evel o torri en he c'hreiz : harpa a raio gouscoude. Deut eo he c'hrouadur da baotric crenn, ar vamm a bourveo dezhan ar bragezic kenta. Evit he gass d'ar scol hi a ziouero beteg an tamm euz he ginou. He spered a zo ato o sonjal ennhan noz-deiz. Dioual a ra he bugel evel mab-he-lagad. En eur ger, evithi he c'hrouadur eo he joa, he buez.

Dom Michel en doa ive da genta affer ouz bugale cassañ. Rebarbi a reant outhan, sevel a reant zoken en he zaoulagad. Mes he zorn, m'ar deo dous, a zo ive nerzuz ha ferm, hag a lacaio anezho da zouja. Doue a skuillas he c'hras var ar

vugale geiz-se, hag e couezas dioc'h ho daoulagad ar scant a vire outho da velet ar guir hent. Ouspen, buez Dom Michel a oa ker santel, he vurzudou a oa ken anad d'an oll, ma ne oa ket braz aoualc'h an ilizou evit mont d'he zilaou. Ar re a oa bet ar muia en he enep o doa ar muia mall da zont da glevet he geleennadurez. Goude beza desket dezho petra eo Doue, hag evit petra e oant bet great ganthan, e reas dezho en em anaout hag anaout ho zechou fall. Poania a reas kement var ho zro m'ho lakeas da govess ho fec'hejou oll, abaoue ma oa anezho.

Dom Michel, oc'h anaout an den evel ma rea, en doa remerket ez euz eul loden dud hag a gav eassoc'h digori ho c'halon da eur c'hovessour estren. Setu perag ne ehane d'ho alia da vont da Gemper da gaout eur beleg gouiziec ha santel. Ar beleg-se, oc'h heuilla kuzulliou Dom Michel, a oa digouezet en huella pazen euz ar zantelez, hag hor missionner a gave gras he-unan silaou piz he aliou mad.

Ar beleg ma comzan ama anezhan, en devoa eun doare burzuduz da ober d'ar c'halonoù dislonca ar goad brein a gin-nige ho mouga. — Oh ! piou a lavaro

pegen tresset oa dorn ar medisina furche ken scanv beteg ar plegou ar c'huzeta euz ar galon ! Pion a lavaro pegen dous e oa an dorn a voalc'he gant eol c'houez vad ar c'houstiansou goloet a c'houliou. An dud-se diboanied ha pareat a zistroe laouen d'ar gear hag a rea skuer vad d'an oll.

Eur vech ma oue neteat ar c'halonou ha great plas da c'hras ar Spered-Santel, abostol Breiz-Izel a laboure kemend ha ma hellé evit dic'hvisienna rac'h grisiou ha mellou, ar plegou fall, ha dreist peb tra ar re a oa maget gant kisiou divalo ar bed. — Neuze, ec'hiz eur jardiner, ec'h hade en eun douar labouret flour ar vertuziou cristen. Eur c'halz tud, oc'h heuilla he guzulliou, a lezas crenn a gostez ar vesventi a oa evel intret en ho natur, hag a zeuas da veza evel tud-all en ho lech.

Ar blanten lakeat en douar drusa a zav en dro dezhi louzeier bian hag a zebr, a zun ar suc a dle he maga. Eur jardiner anaoudec ha soursius a lamo kuit al louzeier bian-ze n'int mad nemet da lonca ar pe vella. Dom Michel ive en doa lakeat e calonou an dud ar garantez evit

Doue. Mes en dro d'ar garantez e tidenve e tioane eun toullad plegou fall ne oant mad nemet da ober dezhi dizec'ha. Ar superstisionou, ar scrupul, an aoun da zisplijout d'ar bed a oa ken aliez a louzaouen fall a zebre, a lonke ar suc a dlee maga ar garantez. Mad ! Dom Michel a lakeas e calonou ar yaouankiz kemend a gaz oc'h vaniteou ar bed, ma zeuas ar merc'hed yaouank d'en em zizober euz ho fleur, ho seizennou, ho dantel, evit ficha an aoteriou. Allaz ! yaouankizou Douarnenez a zo deut d'ar pleg d'an anch coz, hag hirio e ve diessoc'h marteze, evit guechall, ober taoler a gostez an dantel hag ar fanfarluchou. Mad ! Dom Michel ho zroas kement var zu ar bini-jennou rust ha calet, ma rea evitho gourizou reun da lacaat en dro d'ho dargreiz.

Lavaret am euz, eun den hag a fall dezhan ober peb tra dreizhan he-unan a hell beza eul labourer mad, eur zoudar calonec. Mes be ez euz eur ouenn dud all. Ar re-ma, ouspenn ma scoont didruez var an enebour, a oar c'hoaz lacaat peb hini en he blas evit scoi d'ar poent ha d'ar mare, hag ober dre ar re all ar pezh n'ouffent ket ober ho-unan. Dom Michel

a oa euz ar ouenn-ma. O sonjal eo ar vugale esperans an Iliz, e tibabas eun den leun a vouiziegez hag a vertusiu evit ober scol dezho. Hema, ma labouras stard evit deski d'ar vugaligou lenn, scriva, ha calculi, ne boanias ket nebeutoc'h evit enaoui en ho c'halonou tan ar zantelez. Er c'hiz-se e rea var eun dro ha tud gouziec ha tud a Zoue. Ouspenn, evel ar re zo savet huel a zo e guel d'ar re all, an tadou hag ar mammou a zeuas ive, kemend a nerz en deuz ar skuer vad, d'en em zantelaat, da gomz brao ouz ar relijion ha da jench euz ar penn kil d'an troad. Pell goude maro ar mestr scol santel-ze, an oll a rea anezhan ar brasa meuleudi.

Martoloded Douarnenez a dremene var vor ar braz euz ar bloaz. Dom Michel a oa aketuz da zeski ho gragez ha d'ho lacaat e tro da gentellia ho zudach, eur vech ma vijent deut d'ar gear. Morse an oll ne iea d'ar parresiou all da ober missionou, heb ma en dije pedet hag aspedet ar gragez-se da zantelaat ho ziegesiou. Evit ma ne vije ket deut an dud da ancounac'haat he gentelliou, e tescas da eun intanvez bennag an doare da zisplega

he daolennou misteriu. An taolennou, a c'halve he-unan levr an dud dizesc, a lavare, heb damant na truez ebed, ar virionez da bep hini.

Arag ma vije peget er vialen venn e veze great eur pennadic lenn, ha d'ar fin e veze canet eur c'hantic-bennag great gant Dom Michel. Ar c'hanticou-ze, ouspenn ma oant eaz ha caër da gana, a lavare c'hoaz dever peb-unan. Evithan, eur c'hantic ne oa nemet eun doare dudiuz da zeski ar relijion d'ar gristenien. Buan an toniou a oa desket, ha ne veze clevet noz-deiz nemet ar c'hanticou-ze canet var ar meaz gant al labourerien douar, gant an dioualerien loaned, e kear gant ar merc'hed a laboure assambles var ar rouejou beteg hanter-noz, ha var vor gant ar besketaerien hag ar voraerien. En hevelep feson ma oa eun dudi, evit an dud estren a iea da Zouarnenez, clevet e peb corn euz kear cana toniou ha canticou ken brao ha ken devod.

Sant Jerom a lavar e oa eur joa hag eur blijadur evithan clevet cana, e pep lec'h euz douar Jeruzalem, canticou en enor d'an Dreinded. Douarnenez oa ive deut da veza evel eun douar santel e lec'h ne

veze clevet nemet cana meuleudi da Zoue. An hymmou, ar c'hanaouennou devod-se a sclerijenne hag a vage ho feiz. Atao o rùilla an traou-se en ho spered, ho c'halonou a zeuas da veza evel fornou c'horet gant tan carantez Doue.

Dom Michel a daille he labour da bep-hini. Eun intanvez a oa carget da zisplega an taolennou, ar peza bade adalegan amzer Basc beteg gouel sant Mikeal. Unan all a oa carget da zastum an aluzennou ha d'ho ingala etre ar beorien. Evit ar c'hreg all, e iea bemdez e peb corn euz kear da velet kemend a ioa er boan. Houma a gemere hanoiou ar re glanv, hanoiou ar re a oa dare da vervel, hanoiou ar re varo, ha n'o doa den d'ho sebelia, d'ho interri. Dalc'h mad goude e zeue an diou c'hreg all gant pe a dra da visca ar re n'o doa ket a zillad, da roi da zibri d'ar re n'o doa ket eun delien vara da lacaat etre ho dent, da zoulaji ar re a oa er boan. Ar bennoz a lavare an dud reuzeudic-ma, euz a greiz ho zrubuillou, d'ar merc'hed santel-ze, a oa eur c'hanaouen dudiuz meurbed evit ho diou-scoarn.

Setu, lenner, ar pezh a hell ober eun

den leun a furnez hag a zoujans Doue. Ober a reas da Zouarneneziz chench doare da veva. Euz a dud ha ne ouient seurt ebed euz ho relijion, e reas tud desket mad var gemend a zell ouz ar zilvidigez. Euz a dud douget d'ar vaniteou, e reas cristenien hag a roe da Zoue, d'an Iliz, ar pezh a oa bet evitho eun danjer da bec'hi. Euz a dud ha ne reont van ebed euz an nessa, e reas cristenien leun a garantez an eil e kenver egile.

PEDERVED KENTEL

Dom Michel a zo tregasset gant eun neubet tud abalamour d'he daolennou. — He lizer d'ar Viket-Vraz.

Eur ran-galon eo evit eun tad a familh, croumet gant he labouriou, guenn he benn gant ar bloavesiou, beza casset kuit euz an ti m'en deuz savet gant kemend a boan. Mar d'ar re he gass kuit a zo bugale dezhan, neuze he ran-galon a zo ken braz ma ne hell mui herzel. Mad, setu ar pezh

a c'hoarvezo gant hor missionner. Dom Michel, goude beza uzet he nerz, he yec'hed o labourat evit silvidigez tud Douarnenez, a vo red dezhan en em denn euz ar gearze araog an dud ne ehanint ket da ober brezel dezhan.

Dom Michel a rea ar brasa frouez gant he daolennou a gomze ken d'an daoulagad, ken d'an diouiscoarn. Sclerijennet ma'z oa gant Doue, hor missionner a velas a bell e teuje eun devez hag an dud a glasko miret ouz ar sclerijen, d'en em skigna, o dije cavetabeg en doare santelze da brezeg an Aviel. Setu perag e cassas da Gemper an diou c'hreg devod a oa boazet da zisplega an taolennou.

Mont a rejont da gaout an Autrou'n Escop evit renta cont dezhan euz an doare da zeski ar guirionesiou cristen dre an taolennou. Goude beza lavaret ar vad a rea an taolennou, ar blijadur a gemere an dud divar ar meaz ha zoken an dud chentil da zont d'ho zilaou, e kinnichont d'an Autrou'n Escop displega dirazhan unan-bennag euz an taolennou. An Autrou'n Escop ho silaouas hag a c'hoarsas he-unan goalc'h he galon. Souezet o velet pegen scler, hag er memes amzer pegen

just e oa ar gragez se en ho c'homzou, evit ober da gompren guirionesiou ken dies da lacaat e spered ar bobl, an Autrou'n Escop a roas dezho he vennoz. Ho alia a reas da heuilla piz ha piz kuzulliou Dom Michel.

Mad en doa great hor missionner ober da anaout d'an Autrou'n Escop he zoare santel da bellaat an devalijen, rag tud, taget gant diaoul ar guarizi pe jalouzi, a c'hoarias en dra heljont evit lamet diganthen he daolennou.

Dom Michel, ken dichal pa ne vize hano nemed outhan he-unan, a lamm evit difenn he daolennou evel eul leonez evit difenn he re vian. Scriva a reas eul lizer da Vikel-Vraz Kerne, carget da ziousal ar feiz digemesc ha digatar.

Diskuez a reas, en he lizer, ez oa an doare-ze da zeski ar c'hatekiz rez ha rez gant arsperejou arstanca, ar berra. Tud ha ne ouient seurt ebed euz ho relijion a zeske en eun taol ho deveriou, ma'z oaeun drugar ho guelelet.

« Pegen douget bennag e ven da zifenn va zaolennou beteg ar maro, kement-se ne vir ket oun prest brema da blega da

gemend a blijo ganeoc'h gourc'hemen dign. Bezit ar vadelez, m'ho ped, da ober dign her gouzout. Mar credit eo mad ha talvoudec an doare-ze da gelen ar bobl, e rin da c'houzout ne'z euz drouc ebed en eur seurt mod da brezeg Mes ma ne gav ket deoc'h e ve mad ar c'hiz-se da zisplega ar guirionesiou cristen, lavarit eur ger hebken, hag e vloc'h silaouet. N'em bo poan ebed o tilezel va menoz evit heuilla oc'h hini. Mar d'em euz lec'h da bedi ar re o deuz galloud varnon da bardoni dign va zechou, e credan gouscoude n'o dezo ket tro d'en em glemm oc'h ouzin, abalamour n'em bo ket sentet ractal outho. »

Ar rezoniou-ze a ias doun e spered ar Vikel-Vraz, mes ar pez a blijas muioc'h c'hoaz dezhan, a oa comzou humpl Dom Michel. Eun den hag a oa prest da zilaou mouez ar re o doa galloud varnhan a ranke beza eun den a Zoue. Scriva a reas eta d'he dro d'hor missionner : « Arabad eo, emezhan, falgalon, o veza ma cavit en ho missionnou tud en oc'h enep. Seul-vui e zailh an dud evit miret ouzoc'h da zisplega ho taolennou, seul-vui e tleit credi ema Doue a du ganeoc'h. »

Comzou ar Vikel-Vras a reas vad d'ar

paour keaz missionner a rene eur vuez ken c'huerdo e creiz he labouriou.

PEMPET KENTEL

**An Tad Per Kintin a zeu da sicour
Dom Michel en he vission e Douar-
nenez. Mero santel an Tad Kintin.**

Eur guir vignon a zo eur pezh ral var an douar. Keid ha ma vez an dud assambles, keid ha m'o deuz ar memes interest, ez euz mignoniach. Mes dont a ra an dud da bellaat an eil diouz egile, neuze ar peurliesha e teuer d'en em ancounac'haat.

Dom Michel hag an Tad Kintin a ioa daou vignon braz a helfe servicha da skuer d'an oll. Dom Michel eo en doa gounezet an Tad Kintin da Zoue hag he henchas var zu ar zantelez. Ar zonz euz a gement-se ne ielo morse deuz spered Per Kintin.

Neb a glasco caoz ouz Dom Michel a vezo abred diarbennet gant an Tad Kintin. Mar d'eo red he zifenn, an Tad

Kintin a zavo hag heb faia a respet d'ar re o deuz galloud varnhan, e lavaro a vouez huel eo Dom Michel eur zant. Keid ha ma vez an heol freaz ha digatar, neuze ez euz mignoned a vanden, a zruill, mes dont a ra an amzer da veza tenval, dont a ra ar poaniou, an trubuillou d'ho coloi, *solus eris*, setu c'hui oc'h unan caër. Ar c'hroasiou eo a ra anaout ar guir vignon, evel an tan a ra anaout an aour pur, an aour melen.

Dom Michel en doa re vec'h da eun den e kear Douarnenez. Galver a ra an Tad Kintin da lacaat an dorn var ar roenv, evit hallout cass ar vagic a enep avel ha mare. Labourat o doa dija assambles e bro Treguer hag e bro Leon, hag ar vrasa emgleo a ioa etrezho.

An Tad Kintin a brezege bep mintin gant eun tan ma ne oa ket ar re he glevet evit miret da zantout eun dra-bennag o vrouda, o vransella en ho c'hreiz. Dom Michel hag ar relijiuz a ioa oc'h heul an Tad Kintin a brezege dioc'h tro goude creisteiz hag a eslike ho deveriou d'an oll. Ar zarmoniou a blijas kement, ma zeue an dud divar ar meaz d'ho zilaou evit ho brasa mad. An Tadou ive, euz ho

c'hostez, a iea aliez aliez da gaout al labourerien douar a zivar-dro, hag ho c'homzou a zougas cant evit unan.

Setu aze unan euz an diveza missionnou a reas an Tad Kintin. Eno eo e peur-c'hreas ar gurunen gaër-ze a zo hirio, a gredan, o lugerni en dro d'he dal binniget. Eno e lakeas eur berlezen a liou e mesc an aour hag an arc'hant a zo oc'h ober he gurunen. Mervel a reas er bloaz var lerc'h, 1629, d'an unan var-n-ugent a viz even, e Vitre, en eur gouent euz urz sant Dominic.

Evit beza ma ne oa ket anavezet er gear-ze, ar brud euz he zantelez a ias ker buan, goude he varo, e peb corn, ma ziredas keariz oll da enori he gorf, egiz ma vez great evit corfou ar zent. Lod a glaske touch ouz he gorf chapeledou, lod all a glaske trouc'ha tammou euz he zillad. Kemend a dud a ziredas d'he enori ma ne oa ket hallet interri, sebelia he gorf nemet tri devez goude he varo. Ouspenn, ne vije ket chommet eur billen euz he zillad ma ne vije ket bet lakeat goardou en dro da viret ouz an dud da dostaat ouz he gorf santel.

Conta a reer, eun hugonodez (eur bro-

testantez), en em zantas ken douget da drouc'ha eur guchen euz he vleio, ma ziredas a daol gant tiz dour ar c'hraz en he c'halon, ha ma zeuas d'en em roi d'ar guir religion.

Eun nebeut bloaveziou goude, eur relijiuz euz urz an Tad Kintin, a scrivas he vuez. C'hoantaat a reas hirraat ar vuez-se, gant ar pezh ma en dije clevet ama a-hont. Goulennet e oa digant Dom Michel Nobletz ar pezh a ouie var benn an Tad Kintin. Ha piou, m'her goulenn, a anaveze guelloc'h an den santel-ze eget Dom Michel ? Ha n'e ket Dom Michel eo en doa he denneteuz a greiz ar bed evit ober anezhan eur benvec dibab evit servich Doue ? Ha n'eo ket da Zom Michel en doa great da anaout he dech ? Ha n'e ket Dom Michel a rea calon dezhan evit kendalc'her da vont en hent ar guir furnez hag ar zantelez ?

Dom Michel a lavaras e oa buez an Tad Kintin leun a vurzudou. Mes he vrasa burzud, eme Dom Michel, a oa beza kendalc'het epad ugent vloaz da vont en hent ar berfecion, petra-bennag ne vele en dro dezhan nemet skueriou fall. En em zalc'her tomm-bero e creiz ar scorn a zo

eur burzud euz ar brasa a ouffet da ober.

Evithan da veza darempredet meur a relijiuz santel, biscoaz, eme Dom Michel, n'en doa anavezet hini ebed ken izel a galon, ken pasiant, ha ken douget da gastiza he gorf gant pinijennou calet. Eun deiz, evit guelel ma vije deut da falgaloni, en doa urz da jom dindan dour ar feunteun a goueze pill pill var he benn. Chom a reas eno epad eun heur heb flach an distera. Aoualc'h eo eur seurt abaden gouzanvet gant ar brasa pasianted evit ober da c'houzout en doa en he galon ar c'homzou a veze aliez var he vuzellou. « Doue ra viro e tenfen-me gloar euz a netra all nemed ouz croaz hor Zalver Jezus-Christ. N'eket deomp-ni, o va Doue, n'e ket deomp-ni, mes d'oc'h hano santel eo a bedan ac'hanoc'h da roi enor ha gloar. »

O veza ma teu gloar an diskib da veza gloar ar mestr, ne hallan ket miret da lavaret ama an traou burzuduz a zo bet touet da zaou dad Jesuist var al lec'h memes. Aliez, emezho, e teue d'an Tad Kintin dizonjal da zibri he voed kemend e veve a-unan e Doue, kemend e oa heuzet

ennhan. He garantez evit an nessa ne doa na kemm na ment. Pa ne veze ket o labourat er missionnou, ez ea bep gouel ha bep sul vintin da ober catekiz er parresiou var ar meaz, hag e tistroe goude creisteiz e kear da ober an hevelep labour. Aliez er c'hiz-se e tigoueze dezhan prezeg bete seiz guech an deiz. Pa lavare en he brezegennou an hano a Zoue, an hano-ze a zeue euz he galon ken bero ha ken tomm, ma iea var eun-tenn bete goueled calonou ar re he zilaoue.

Skuiz-maro e veze, ne verree tamm ebed evit-se he orezonou. Lacaat a rea neuze amzer ar c'houasket da zicour. Ne gouske nemed eun diou pe deir heur, ha bep noz en em scourjeze evit castiza he gorf.

Eur blijadur vraz a ioa evithan sicour ar beorien hag ar vugale. Hor Zalver ho c'harie kemend he-unan ! Pa vele eur paour izommec, he galon a ioa ken douget da zont d'he zicour, mac'h en em ziviske dioc'h-tu, pa helle, euz ar pez m'en devoa izomm. Ar vech diveza ma i eas euz Montroulez, e roas he vantel da eur paour a grene gant ar riou, gant an anvoued. An Tad a iea d'he heul a lavaras beza guelel an Tad Kintin o roi he doc

en aluzen e Guerleskin, neuze en Escopti Treger. He superioired a ioa boazet d'he velet o tont d'ar gouent, he zaouarn goullo ganthan, petra-bennag m'en dije dastumet muioc'h evit an Tadou all. Mes be ouient, pa vele an Tad Kintin en dro dezhan gouliou paourentez ha dienez, ne oa ket evit miret da vouela ha da roi kement ma en deveze ganthan.

Ma'z ea var ar meaz, e c'houlenne digant ar vugale a gave var he hent ar prinsipala misteriou, hag e rea dezho ober actou a Feiz hag a Garantez. Eunn dudi a oa evithan ober allazic d'ar vugale vian, en eur gomz dezho euz ho C'hrouer hag en eur zeski dezho balbouzat ho anaoudegez evit an hini en devoa dasprenet ho eneou.

Doue a reas da anaout dre veur a vurzud pegemend e plije dezhan carantez ha labouriou ar relijiuz santel-ze. Eunn deiz ma prezege e Daoulaz, da c'houl santez Anna, mamm an Itron Varia, an oll he velas dibradet nao droatad euz an douar, petra-bennag ne oa cador brezeg ebed er chapel-ze.

An Tad de Keranfor, deat da c'houde da zalc'her he lec'h er missionnou, a velas an Tad Kintin evel var neun e carantez

Doue. He vizach a oa ken skeduz ma ne grede ket sellet outhi. Ne oa ket he-unan a gemend en deffe he velet er stad burzuduz-se. An Autrou de Coatsalio, dijentil a zonzans Doue ma ez oa er vro, en deuz lavaret da gemend a zilaoue, en doa guelet an Tad Kintin evel beuzet e Doue, hag eul lugern en dro dezhan, ma'z oa sclerijennet ar gampr, kemend ha gant an heol e creiz an deiz.

An Tad Kintin a rea burzudou, miraclou epad he vuez. Goude he varo, Doue a blijas ganthan diskuez santelez he zervicher. Eunn Intron a ouenn-huel he hano Renea de la March, e doa eur c'hrouadur dare da vervel, e parrez Landelau. Ne velet ez oa beo nemet dre ma finve avechouigou eunn tammic he c'houzoug. O veza deut sonj dezhi e doa varnhi eunn tammic euz dillad an Tad Kintin, e lakeas an tamm mezer-ze var benn he c'hrouadur, en eur lavaret : « Ha brema, Doue oll c'hallouduz, plijet ganeoc'h diskuez splamm santelez ho servicher. » Ker buan ar bugel a zigoras he zaoulagad, a dennas franc hag eaz he alan hag ec'h en em gavas ractal en eunn taol pare ha yac'h pesc.

E 1630, ar memes Intron a feas, da vare ar Pantecost, da velet Intron de Lanriou a ioa toc'hor, fall-fall. Dija e doa bet sacramant an Nouen, hag ar vedisined ne roe esperans ebed mui. En dro d'ar glanvourez, o piye gueleit he c'herent nessa o c'he-dal anezhi da laosker he alanad diveza evit hellout serra dezhi he daoulagad. Neuze e teuas sonj d'ar Varkizez santel euz ar c'hras e doa bet ar bloaz araog dre intercession an Tad Kintin. Goude beza lennet litaniou ar Verc'hez Vari, scri-vet ganthan he-unan, ar Varkizez a lakeas al litaniou-ze var benn ar glanvourez gant eur fisians vraz, ha ractal e doa an eurvad da velet an Intron o comz outhi hag ouz an dud a ioa eno. Pareat e oa var an taol. Chom a reas hebken eun tammic skuisder, evit digass sonj dezhi euz ar burzud-ze.

C'HUECHVED KENTEL

Dom Michel a zo tamallet e faoz da lacaat ar rouestl hag ar freuz etre tud Douarnenez. He lizer da eun Tad Jezunist.

An den var an douar a zo froudennuz. Ar pezh a lavar brema a vezo dislavaret heb dale. Ar pezh a ra hirio a vezo dis-c'hreat varc'hoaz. Diouz ar mintin e c'houl-len ruz, ha guen diouz an abardaez. Ar re o devoa great ar muia, er penn kenta, evit sicour Dom Michel da zeski al lezen gristen d'an dud, a gave brema abeg en-nhan. Guir eo, ar guarizi, ar jalouzi, a zo evit eul loden vraz er seurt traou-ze.

Dom Michel a ioa brudet dre he skiant, dre he ganticou, dre he daolennou, ha kement-se a rea poan da veur a lagad, da veur a scoarn. Dija ar Vikel-Vraz en doa lavaret ar pezh a zonje divar benn an taolennou. Eun devez ma oa Dom Michel oc'h esplica unan euz an taolennou a oa

hano varnhi euz ar faë a dle peb cristen ober var ar bed, ec'h alias he ziskibien, hervez he gustum, d'en em denn euz da-rempred ar re a ioa spered ar bed ouz ho labourat. Ne dleent, emezhan, ho c'haret nemed evel imachou, skeudennou Doue, hag evel breudeur prenet coulz hag hi gant goad presiuz hor Zalver.

An daolen-ze ne blijas ket evit doare da unan bennag. Atao e vez cavet eun darn dud ha n'int mad nemet da c'hout hano er re-all. Dom Michel a oa brudet ha caret dre gear. Hen eo en em zoursie euz an dud reuzeudic hag ho sicoure oll. Ar paour, an intañvez, ar minoric, o doa e Dom Michel eur madoberour, eun tad. Ar pinvidic a zeue ive da c'houlén kuzul, o veza ma zeue ato da vad kement m'en de-veze lavaret. Mes a viscoaz an den a zo bet douget d'ar guarizi, d'ar jalouzi. Eur sclerijen re vraz a ra poan da zaoulagad eur seurt tud. Ar jalouzi e calon an den a zo eur goal zi, eur goal glenved. Ato ar prenv iskiz-ze a zo o crignat, o tibri gri-siou ar galon. Reuzeudic he-unan, mar gell e lacai ar re all ken reuzeudic hag hen. Allaz! an tech-se en eun den a zo henvel ouz eun toullad poultr er garrec.

Eur vech peget croget an tan, ar garrec a straco, a lammo en tu-ma tu-hont. Goaz a ze d'an hini a vezo dindan, var hed taol. Dom Michel a vo voaz a ge-ment-se.

Hor missionner o velet en he enep ar re a dlie he harpa e creiz he labour, a dec'has kuit hag a ieas da offerenna ha da govess da eur vourc'haden hanvet Poul-daü.

Pa vez eun den er boan e clasc unan-bennag evit conta dezhan ar pezh a dremen en he greiz, neuze ar galon, scanveat, di-vec'hiet, en em gav essoc'h, siouloc'h. Setu perag eun tad covessour a ra kemend a vad var an douar. Setu eur goustians sammet, bec'hiet. Be ez euz eno traou diez da lavaret, secrejou ha n'int ket brao da ziscleria. Mad, ar c'hovessour a zo aze, hen a zalc'ho ho secret, hen eo a doulo deoc'h ar gor a ra kemend a boan hag a scarzo er meaz ar goad blonset, al lin-brein a zo a bell zo o viri eno. Goude beza neteat ar gor, ho tad covessour a voalc'ho deoc'h ar goul gant eol dous, hag oc'h ene en em gavo laouen, eüruz.

Dom Michel a zo er boan. Clasc a ra eun dorn dous ha madelezuz evit louzaoui he

c'houli. Bez' e oa eur mignon braz d'an Tadou Jezuisted a ioa a nevez deut da jom da Gemper. Ugent vloaz araog ma ouent deut di, neuze pa ne oa c'hoaz da nevell ebed anezho, e skuillas daëlou a joa diragheziskibien. « Canomp, emezhan dezho, an *Te Deum* evit trugarecaat Doue euz ar vadelez en deuz bet da dostaat ouz Breiz-Izel ar sclerijen gaër a dle para heb dale var hor bro geiz evit henchha hor c'henvroïz en hent ar Baradoz. »

Ractal ma'z oant digouezet, e ieas d'ho gueleit, hag o veza kemeret unan anezho evit covessour, e lavaras dezhan : « Ma ne'z euz den a gemend en deffe lec'h d'en em harpa var he furnez, e crede gouscoude ne oa den hag en dije kemend a izomm hag hen d'en em zifiziout anezhan he-unan. » Dizoloi a reas dezhan he galon, diskuez a reas he oll baperiou, ha goulenn a reas kuzul diganthan divar benn he zoariou santel da gelen ar bobl.

An tad carantezuz-se ne oa ket evit trugarecaat aoualc'h an Autrou Doue evit ar grasou ordinal en doa skuillet var he zervicher fidel. Souezet braz e oa o velet kemend all a anaoudegez euz ar Scriptur-zacr euz an Tadou euz an Iliz, ha

kemend all a furnez evit comz freaz ha scler da dud berr ha poud a spered ; he bedi a reas da gendalc'her da gelen ar bobl er c'hiz-se, ha da gredi ne halle ober netra all ebed da blijout muioc'h da Zoue eget an doare santel-ze. Kendalc'her a reas ato da gaout ar memes fisians en Tadou, ha setu ama ar pezh a scrivas da unan anezho, a ioa bet o prezeg ar c'ho-raiz e Douarnenez, divar benn ma oa bet tamallet da lacaat ar rouestl hag ar freuz etre keariz.

« *Va Zad meurbed enoruz,*

» Goude trugarecaat ac'hanoc'h, a greiz va c'halon, euz ar boan o peuz kemeret da vaga, dre ho kelennadurez, eneou tud Plouare, ha tud Douarnenez, e credan rei deoc'h da anaout e pe stad ema eno an traou o peuz gueleit, hag en em gonsoli ganeoc'h euz ar brezel a reer d'ar re a glasc hada spered an Aviel er c'halonou. Tamallet omp da brezeg ar rouestl etre an dud, ha ne zav ket an distera trous e kear ha ne ve ket ker buan tamallet an taolennou. Gouzout a rit, an Aviel prezeget a zo eur c'hleze a rann, a zispartian tad dioc'h ar mab, ar mignon dioc'h he

vignon hervez ar c'hig, ar goad ha maximou ar bed. Comz Doue, eme an Abostol braz, en deuz kemend a diz, a nerz, hag a ia ken doun, ma ia bete ranna an eneou, ar sperejou...

» Sant Gregor a lavar : Ma'z euz lec'h da veuli ar re en em glev assamblez evit ober ar mad, ez euz lec'h da gaout aoun rag ar re en em glasc evit ober an drouc.

» Ar garantez se etre an dud vad hag an disparti etre an dud fall eo ar mean font euz peb compagnunez ha zoken euz ar relijion gristen. Heb ar mean-se, eur compagnunez ne ve nemed eun toullad tud mad d'en em zrailla. Gouzout a ran ervad eo poaniuz, evit an dud vertuzuz, ha muioc'h c'hoaz evit ar re ne d'int ket, en em denn a grenn an eil dioc'h egile. Mes dao eo hen ober, gant aoun na iaffent da goll ! Daoust, ha n'e ket guelloc'h plijout da Zoue evit d'an dud ? Ha carantez an dud a zo eun dra-bennag e scoaz carantez Doue !

» N'e ket ma em beffe c'hoant da lavaret e tle ar re vad cassaat ar re fall, be dleont er c'hontrol ho c'haret hervez Doue. Mes an hini a lavar d'ar gristenien en em garet an eil egile a lavar ive en em ziuall ouz

hiniennou... Guelit-se oc'h-unan, va zad meurbed enoruz. Caret a rit an oll veleien ha zoken ar re ne dalvezont ket ac'hanoc'h. Mes ne gredan ket o peffe gantho ar memes emgleo, ar memes doare, ha m'o peuz gant an Tadou euz ho compagnunez o deuz ar memes spered, ar memes fin, ar memes reglen ganeoc'h.

» Ar memes tra a c'hoarvez ganeomp. Evit beza mad hag a-unan gant hon Doue, ni a gav guelloc'h pellaat dioc'h ar re a lacaffe ac'hanomp da goueza en hent. Neb a zo en he za a dle beza var evez gant aoun na ve puntet gant ar re all er puns islong... Evel ma velit, va zad enoruz, ez euz er gear-ma tud ha n'int ket digouezet c'hoaz var lein menez ar berfecsiion. Bez' a pezo lec'h da renta gloar da Zoue a dosta ar pezo a zo ar pella, hag a zo ar mean a zalc'h en he za an union santel, ma zeuit ama da labourat a nevez ha da renevezi an had o peuz taolet en eneou. Pedit gouscoude hor Zalver ma plijo ganthan digass he c'hras da zicour eun den ken dister anezhan he-unan, ha pardoni ac'hanon, pec'her braz ma'z oun. »

Ar zervicher braz-se ne vele nemet gloar he vestr. He vrasa joa a oa gullet

an niver euz ar re a labour e vit gloar Doue o cresski a-zeiz da-zeiz. C'aret ha zicour a rea kemend ha ma helle ar relijiuzed vertuzuz, hag ar re-ma, dioc'h ho c'hostez, a ioa leun a istim evithan.

Gouscoude caout a reas var he hent tud en em roet da Zoue. Ar re-ma, o vezä ancounac'heat ar pez a c'hourc'hemenas dezho ho mestr, a zeuas da ober dezhan eur brezel criz ha didruez. Clevet ez oa bet zoken unan o prezeg a enep an taolennou ma en em zerviche Dom Michel anezho evit silvidigez an nessa. Dioc'h clevet ar relijiuz-se, an taolennou ne oant nemet revere; eur spered troed var an tu a enep a glaske beza brudet, o vont atao pelloc'h evit ar re all. Unan all a lavaras dezhan, deiz a oue, traou diez da glevet, hag ar re a oa eno oc'h he zilaou a jomas souezet braz o velet ne responte an den Doue netra da gemend all a draou iskiz. Adaleg an devez-se, ar respet evit Dom Michel a grescas muioc'h mui.

En eur ger, Dom Michel en doa da c'houzanv e Douarnenez traou poaniuz da lavaret. Allaz! ar berfescion n'emä ket var an donar. Peb hini a varn he nessa dioc'h m'eo he zaoulagad. Ar pez a

ra hema ne blijio ket da hennez. Ha ma fell deoc'h beva en eun doare all, e helloc'h gedal ma vioc'h tregasset er bed-ma. Mar d'oc'h savet dreist ar re all dre oc'h ijin, dré ho spered, kellienn bian, m'hen assur deoc'h, a glascö flemma ac'hanoc'h. Dom Michel, a dra zur, a oa eun tamm brao huelloc'h evit ar re a ioa en dro dezhan. Tud ha ne ouient ket peger bian e oant da velet e kichen ar missionner braz-ma, a glascas he c'hoapaat, ha goapaat ar gelennadurez a roe d'an dud dizec. Mad! seul-vui o deuz bet an taolennou da c'houzanv en ho bugaleach, seul zuroc'h ez int da jom en hon touez.

N'e ket hebken euz a berz an dud eo en doa servicher braz Doue da c'houzanv, an drouc-sperejou ma rea dezha eur brezel heb ehan, a zeuas ive d'he voalgass meur a vech. Deiz a oue, e teujont da scoi ganthan en eun doare ken didruez, ma lavaras goude, oa bet reddezhan chom var he vele epad pevar devez, ken torret e oa he gorf gant an taoliou en doa bet diganthö.

Mes Doue ne lez morse an den en abandon e creiz ar poaniou, an trubuilhou. Dont a reas da roi calon d'he zervicher

en draonien-ma a zaélou. Dre ma ziruille a bep tu an traou poaniuz varnhan, Doue a skuille he c'hrasou var he ene. Roi a reas dezhan da danva pegeñ dous eo beva e skeud ar groaz. Ia, eüruz ha teir guech eüruz, ar re o deuz ho lod da eva euz calir hor Zalver ! Er bed all e vezint heb mar ebed digollet, ha var an douar zoken Doue n'ho dilezo morse.

Ar peñz a vez bet hadet en daélou a zindan ar groaz, a zioan druz ha founuz. Dom Michel en devoe ive an eur-vad da velet lod euz ar re a ioa bet ar muia en he enep o tont da veza gounezet gant kemend all a garantez hag a humilite.

SEIZVED KENTEL

Dom Michel goal-gasset adarre a dec'h dioc'h Escopti Kerne. An Tad Manera deu da zalc'her he blas er missionnou.

Maro an Tad Kintin a ioa eur c'holl braz evit bro Breiz-Izel. Eur sclerijen gaer a oa mouget pa varvas ar relijiuz

santel-ze. Dom Michel eat he nerz digant-han gant an oad, gant he labouriou, a vele a ziabell ar bersekusion a dlíe dont da c'hueza en he enep. O c'houzout n'en dije ket hallet harpa he-unan oc'h eur seurt scourrad avel foll, e pede calonec an Doue trugarezuz ma vije plijet gant-han digass buan an hini a dlíe dont da zalc'her he lec'h er missionnou.

Setu ama ar peñz a gaver en he babe-riou. Eun devez ma bede gant fisians, e clevas mad e creiz he beden eur vouez o lavaret dezhan : « Doue en deuz silaouet ho peden. An hini m'emoc'h var c'hed anezhan a zo dija e Kemper, e scolach an Tadou Jezuisted, hen eo ar yaouanca anezho. » Mont a reas ractal, ar joa en he galon, da velet ar relijiuz yaouanc-se a zeske d'ar vugale vian ar grammer, er c'hlas diveza. Ker buan ma her guelas, Dom Michel a lamas d'he c'houzoug hag a vriatas an tad yaouanc-se en eur skuilla daélou a joa. He galon a ioa barr a levenez, abalamour m'en doa Doue silaouet he beden. Hor missionner coñz ne lavaras ger ebed d'an Tad Maner euz ar peñz a ouie divar he benn. Comz a reaz gouscoude dirazhan euz sant Per, euz sant

Andre, galvet gant Jezuz he-unan da vont d'he heul, da brezeg an Aviel. Na pebez carg, emezhan, beza galvet gant hor mestr da vont da sclerijenna ar re a zo e creiz an devalijen an teva, d'ho henchavar zu ar guir vro, d'ho zevel ma couezont en hent, d'ho goalc'hi ma'z eo digouezet dezho ricla e mesc ar pri! Na pebez carg, beza galvet da roi dezho nerz ma teuont da falgalonil!»

Ne ias ket pelloc'h o c'houzout ervad p'en deuz Doue great he zonz var eun den, eo lur da gass he vennoz da benn. Aoualc'h a oa evit Dom Michel beza gullet an hini m'en devoa Doue prometet dezhan. Deg vloaz araog en doa lavaret e Douarnenez : « Lec'h or beuz da drugarecaat an Autrou Doue, o veza ma'z eo plijet ganthan digass eur sclerijen nevez var an douar. An hini a zeuio, var va lerc'h, da brezeg deoc'h an Aviel, en deuz dija seiz vloaz, ginidic eo à Roazon, ha bez' e vezo relijiuz euz compagnunez Jezuz. »

Doue en doa lavaret en he furnez : Julian Maner a vezo ar benvec mac'h en em zervichin outhan evit dalc'her plas Dom Michel. Doue ne fañ ket d'he c'her, me heñ assur. Ren a raio ar c'hrouadur-ze a

venedicsion, ec'hiz dre an dorn, bete stad huel ar velegiach. Mes ne oar ket seurt euz iez ar vro; gouscoude ar brezonec a zo unan euz al langachou an diessa da zeski. Penaoz e hello neuze prezeg hag ober catekiz d'ar bobl? Silaouit, an hini ma c'halv Doue da ober eun tamm labour, en devezo diganthen an nerz, ar gouiziegez a zo red evit-se.

D'ar mare ma comzan ama, an Tadou Jezuisted o doa ar c'hiz santel da vont bep bloaz e pelerinach da eur chapel savet en enor d'ar Verc'hez, var dro eun hanter-leo dioc'h Kemper. Deiz pe zeiz, e doug miz Mari, o pije gullet mintin mad an Tadou o vont gant ho scolaerien da glevet an offeren, ha da gommunia da di Mamm-Doue. Na pebez deiz eñruz evit ar yaouankizou! Nousped hini o deuz clevet an Autrou Doue o comz outho e creiz ar gouel caer-ze! An Tad Maner, goude ar communion, neuze pa verve goad hor Zalver en he galon, a ioa evel beuzet en eur sclerijen gaër ha skeduz, ha dre greiz ar sclerijen e vele Escoptiou Leon, Kerne, Dôl, Sant-Briec, ha Guenned ec'hiz eul lannec vraz goloet a zrez, a spern, a vrug treud. Setu eno an dachen en deuz da

labourat. Braz eo evit guir, re vraz eo zoken da eun den. Mes Doue ho kennerzo, calon vad a zen ! An Tad Maner a zescas d'ar red evel dre vurzud ar brezonec. Dindan eiz deiz ec'h en em gavas e tro da ober catekiz, e ti Mamm-Doue. Mont a rea d'ar c'heriou var ar meaz, ha d'ar vourc'hadennou tro-var-dro da zeski al lezen gristen d'ar re vian coulz ha d'ar re vraz.

Eur pennadic amzer goude, an Tad Maner a gouezas clanv. Biscoaz, eme ar medisin, n'en doa guelet eur c'hlenved par da hema. Ar goad evel scornet ne finve mui dre he c'hoazied. Ar grangren pe ar c'hrign-beo a labouré an diabarz en eun doare scrijuz. C'hoaz eun tachadic, ema peg er galon, hag echu tout. Dont a reas neuze dezhan eur c'housec doun; epad he gousc e credas dezhan dougen var he gein eur paizan a Gerne. Pa ziunas, an Tad Maner a oa mall ganthan beza yac'h, ha mont da labourat evit glôar Doue. Ker buan an darsien a dec'has kuit, ar c'hrign-beo a ehanas d'he verzeria evel dre vurzud. C'hoaz eun devez bennag, hag an Tad Maner a vezo pare coulz ha biscoaz. An Tad-se n'en doa ket an distera

douetans ez oa bet pareat dre bedennou Dom Michel. Daou vloaz araog, hor missionner coze en doa discleriet ar c'hlenved-se. Setu-perag an Tad Maner a lavare d'an nep a gare he glevet : « Anez pedennou an den Doue, e vije great ganen brema, e vijen bet maro e Bourjez. »

Gouscoude an drouc-spered a c'huezas adarre tan ar bersekusion, ha Dom Michel Nobletz a oa red mad dezhan kuitaat Escopti Kerne ha Mission Douarnenez ken dous d'he galon. Enebourien Dom Michel a boanias d'he zua, keid ha ne oa ket an Autrou'n Escop er gear. Hor missionner a oa eur bec'h encrez var he spered, rag Doue en devoa roet dezhan da c'houzout ar peza d'lie c'hoarvezout gant han. Eun nebeudig amzer goude, e rezevas an urz-ma digant ar Vikel-Vraz : « Prezeget o peuz epad ho puez ar zentidigez d'ar re all; mad, sentit brema oc'h-unan; distroit d'an Escopti Leon ma zoc'h ginidic, hanezeuit mui en Escopti Kerne. »

An hini a zigasse an urz-se a lavaras, an dour en hezaoulagad, da Zom Michel ar peza ioa varnhan. Servicher humpl Doue, o veza en em strinket d'an daoulin, a lennas ar paper-ze hag e pocas dezhan

nousped guech gant eur respet a iea doun bete calon ar re a ioa eno. Clemm ebed ne zeuas euz he c'hinou, nag a enep an hini a oa deut an urz-se euz he berz, nag a enep an hini en doa labourat evit-se. Ne lavaras nemed ar c'homzou-ma : « Great am euz er vro-ma ar pezh a c'houlenne Doue diganen, ha brema e anavezan oun galvet da vont en eul lec'h all. »

An oll a oa evel er meaz anezho honan, kemend a zrouc a oa enno, o velet peger criz ez oar eat da eun den santel en doa tremenet pemp ploaz var-n-urgent en ho zouez, oc'h ober ar mad. Ar garantez hebken eo e doa dalc'het er vro an den Doue, daoust d'ar poaniou ha d'an trubuillou m'en doa bet da c'houzanv. Kemend all a aket var dro ho eneou en doa gounezet ho c'halonou. Meur a zen euz a renc-huel e kear, ha meur a zenchentil o doa c'hoant da vont da Gemper da gaout ar Vikel-Vraz. Mes servicher humpl Doue ne lezas ket anezho da ober ar pezh ma carent. Beza e oa cazimant prest da vont kuit kerkent ha m'en doa bet an urz, ha ne jomas ket eun heur zale, abarz clasc eur vag da vont da Goulochrist a zo er penn pella euz bro Leon.

C'hoarvezout a reas gant Dom Michel, pa guiteas Douarnenez, ar pezh a lavar an Abostol sant Paol divar benn he veach e Millet. Kerkent hama oa anavezet ar c'helou-ze e kear, ne jomas den ha ne vije deut da lavaret kenavo dezhan, ha da reseo he veuno. An dud pinvidic, ar beorien, an intañvezed santel, ar vinored, an dud reuzeudic a oa diredet evit he velet eur vech c'hoaz. Keariz oll en em gavas, en eun taol-count, e kichen ar porz, o vouela hag o laosker criadennou gouest da ranna ar c'halonou ar c'haleta. An den Doue a zirollas ive da vouela, hag a vescal he zaëlou gant daëlou he vugale. Leun a druez evit ar re a ioa en dro dezhan, e kimiadas dioutho, en eur lavaret ar c'homzou-ma e creiz an daëlou, ar goelvan, an hirvoudou :

« Gouzout a rit, va bugale gez, abaoue m'eo plijet gant Doue va digass beteg ama evit ho savetei, n'em euz ket espernet arbouellet, na poan, na danvez evit ho sicour e peb giz, hag evit diskuez deoc'h rouantelez Doue. Tremenet em heuz pemp ploaz var-n-urgent e creiz an daëlou, al labouriou, an danjeriou, evit deski deoc'h an doare d'en em zizoher euz oc'h

enebourien touet, hag evit assuri deoc'h eul lec'h a repos hag a joa epad an eternite. Eüruz ha mil guech eüruz e vijen bet da dremen ar rest euz va buez, oc'h alia ac'hanoc'h bepred en ilizou, en tiez, da droi kein d'ar bed, d'he gisioù fall, evit beva mad gant Doue ha gant an nessa.

» Da viana, va bugale gez, silaouit c'hoaz va mouez, hag heullit piz ar c'homzou emoun o vont da lavaret deoc'h, bez' ez int comzou hor Zalver he-unan : En em garit an eil egile ; carit ar re o deuz caz ouzoc'h ; bennigit ar re n'o deuz nemet mallosiou da laosker varnoc'h ; grit ar mad d'ar re a ra drouc deoc'h, ha ne ehanit da bedi evitho. Ra vezo kement-se eur merc hag a rai anaout ac'hanoc'h ne ket hebken e touez an dud difeiz, mes zoken e touez an dud losc a garantez evit croaz hor Zalver Jezuz-Christ. Setu ama ar vech diveza ma en em velomp er vuez-ma, va bugale gez, mes en em gaout a raimp heb douetans ebed, eun devez da zont, e demeurans an elez. Hor Zalver madelezuz hag he vamm zantel a astenn deomp ho divrec'h evit hon digemeret. Pedi a ran a greiz va c'halon hag ar Mab hag ar Vamm da jom ganeoc'h, ha da zont d'am

heul em beach, en hano an Tad, ar Mab, hag ar Speret-Santel. »

An oll o veza en em strincat d'an daoulin, Dom Michel a roas dezho he vennoz diveza. Neuze e pignas er vag a dlle he gass da Gonc-Leon.

Ker buan e ieas, euz peultrin kement den a ioa eno, eur c'hri, eur goelvan, eun hirvoud ken skiltruz, ma vije bet credet ez oa lamet digantho ho c'halon diouz ho c'hreiz.

Ar vinored, ar beorien, an intanvezed, an dud reuzeudic o doa dienez dezhan, abalamour m'o doa collet an hini en doa ho maget, ho guisket, dousseat ho c'halon en ho foaniou, hag ho bleignet var zu ar baradoz.

Adaleg an devez-se, Douarnenezis ne gomzent mui nemed euz Dom Michel. Neuze e teue sonj dezho euz he skueriou santel, euz he aket heb he bar, euz he garantez birvidic. An trubuilhou en doa gouzanvet gant kemend a basianted, ar beorien hag an dud maleüruz m'en doa sicouret, ar miraclou en doa great dirazho oll nousped guech, an dud varo a ioa dre nerz he bedennou savet dirag ho daoulagad euz a varo da veo, kement-se oll a

oa buez ho c'haozeadennou, a brezege c'hoaz dezho goude ma'z oa eat kuit, hag a zigasse sonj d'an dud-se euz a vadelez Doue, hag euz madelez an den santel-ma.

Calz tud euz Douarnenez a dreuze bep bloaz ar mor braz evit mont da velet Dom Michel, ha goude he varo ez eant muioc'h c'hoaz da bedi var he vez, ha da c'houlén eur c'hras bennag dre he inter-session, ar pezh o deveze cazi ato.

Ma'z oa caret hor beleg santel gant tud Douarnenez, euz he gostez, hen ho c'hare ive. Boazet e oa da lavaret en doa eur garantez, eun deneridigez dreist penn evit teir euz he verc'hed, da lavaret eo, evit Montroulez, Conc-Leon, ha Douarnenez. Houma c'hoaz e care en tu all d'ar re all, abalamour m'en doa bet muioc'h da c'houzanvenoevit Jezuz-Christ, abalamour m'en doa bet eno digant Doue muioc'h a faveuriou extraordinal, abalamour m'en doa cavet eno muioc'h a eneou dibab hag a iea eñ evel ar goulm var zu ar berfession. E Douarnenez eo en dije caret mervel. Choazet en doa he vez en iliz parrez, dirag aoter Sant Nicolas. Mes eur vouez a zave hueloc'h en he galon hag a lavare : « Ho polontez ra vezo great, o va Doue, ha nan va hini. »

C'HUEC'HVED LEOR

BLOAVESIOU DIVEZA DOM MICHEL HAG HE
VARO SANTEL

KENTA KENTEL

**Dom Michel a glasc an doare da gelen
tud beg Loc-Maze. — Ar Vinorez.**

D'an oad a dri bloaz ha triugent, e tistroas Dom Michel Nobletz da vro Leon, dinerzet hag uzet kentoc'h gant he labouriou hag he binijennou, eget gant ar bloavesiou. He spered a ioa c'hoaz ken-lemm, he galon ken birvidic evit silvidigez an eneou ha gloar Doue, ha ma'z oant d'an oad a dregont vloaz. Ne ehanas ket eun devez da ober catekiz e meur a barrez euz a vro Leon.

Poania a reas ive da ober unan-bennag dioc'h he zorn evit he zicour en he labour, hag evit kelen ar bobl goude ar maro anezhan.

Autrou person Ploumoguier a oa eun den leun a vertusiou, mes ginidic ma'z oa euz a Bariz, ne ouie seurt euz langach ar vro, ha ne helle ket er c'hiz-se ober labouriou he garg. Dom Michel a alias anezhan da zeski ar brezonec evit hallout ober catekiz en he barrez, ha zoken renta servich d'al lec'hioù all euz an Escopti o doa kemend all a izomm da gaout beleien gouziec. Ar beleg santel-ze a zilaouas mouez hor missionner evel mouez Doue, hag epad ma jomas person e Ploumoguier, e kendalc'has da sclerijenna, ha da voeta an eneoù ken dizec'het ha ken mour-naounet. Deut goude da veza unan euz ar re genta en Escopti, he skueriou a oa c'hoaz muioc'h a vel d'an oll, hag he zoursi a helle en em astenn var bro Leon a bez.

Eur c'hlaouen dan, eme Dom Michel, pa vez tomm ruz, a zeu da domma, da rusia ar glaou all, en hevelep feson mar deu buan ar fournez da veza leun a dan flamm. Ar memes tra a c'hoarvez gant

an dud. Eun den gouziec, hag hen ruz he galon gant tan carantez Doue a zo aoualc'h evit tomm, rusia ar c'halonou all. Setu perag e lakeas he oll boan e Leon, egiz m'en doa bet great e Kerne, evit deski mad unan-bennag euz a vesc ar bobl. Ar re-ma a dlee kelen ar re all, hag ober dezho caret Doue.

Neuze e oa gullet ar pezh a hell carantez eun den ha gras an Autrou Doue da ober var dro eur paour-keaz plac'hic. He mamm, dare da vervel, e doa pedet hor missionner da gaout truez oc'h he merc'h a jome he-unan penn var he lerc'h.

Houma a oa crog en he bloaz var-n-ugent pa varvas he mamm. Great a zanvez groz, poud ha bian a spered, evit eur guel, ne ouie netra nemet cass an alar coulz ha peb paotr. Ne zonje netra, evel ma ra eur c'halz, siouaz, nemet gounit he zamm boed o labourat heb ehan. Ne oa ket e poan euz a gemend a zell ouz an env.

Goude maro ar vamm, Dom Michel a alias ar verc'h da zont da Gonc-Leon da jom. Mont a reas da vatez da di eun de-mezell, ha ne doa ken commanant nemed he boed, gant ma dije bet an amzer a zo

red evit beza scoliet. O! nag a boan e kemeras Dom Michel ganthi, heb ma dije digoret eun dallet he spered d'ar pez ma claske ober dezhi da gompren! N'euz menez ebed diessoc'h da labourat ha ma oa da genta spered ar plac'h-ma. Meur a hini, o credi ne rea nemet coll he boan, he alie da glasc eun douaren guelloc'h, eur spered lemmoc'h hag eassoc'h da labourat.

Mestrez ar plac'h, euz he c'hostez, a rea kemend ha ma helle, evit miret outhi da vont da glevet kentelliou Dom Michel, evithi gouscoude da veza prometet roi an amzer a oa red evit-se.

Mes an hini en doa desket dezhi, ne'z euz, en draonien-ma a zaëlou, nemet poan ha trubuil evit ober ar mad, a alias ar plac'h-ma da vont da Zouarnenez da dremen eur pennad amzer da di unan euz an intanvezed vertuzuz a rea kemend a vad eno.

Kement-se ne rea ket cont ar vestrez. Houma, pa glevas hano euz ar pez a dremene, a ieas drouc ennhî, rag ar plac'h a oa cre ha mad distail d'al labour. Kemend a gounar a ioa ennhî, ma scrigne he dent ha ma verve ar goad en he izili.

Mont a reas beteg dic'hourda eur javedad gant he matez, en eur lavaret kemend ha ma hell teod eur vaouez da lavaret, a enep hor beleg santel, hag enep he gelennadurez.

Morse an oll servicher Doue n'en oa goulennet ma vije betscoet, punisset an dud o doa great faë varnhan, pe lavaret drouc anezhan. Mes he aket evit gloar Doue, hag evit silvidigez ar paour-keaz plac'h a ioa var ar poent da lentaat, a reas dezhan mont ker buan da gaout an demezell. Houma a oa eat d'an offeren da eun iliz savet en enor da zant Laurans. Pa zeuas er meaz e cavas Michel dirazhi, ha dezhan eur vizach ruz tan gant eur vuanegez santel.

« Goal gomzet o peuz, eme Dom Michel dezhi, a enep lezen Doue hag a enep ar re a deu da ziscleria al lezen-ze. En despet d'ho promessa, o peuz falvezet distroi eur vinorez baour dioc'h ar pez a c'hourc'hennas dezhi he mamm, hag a c'houlenn Doue oc'h outhi. Ne hallan ha ne fell ket dign scoi ganeoc'h evel m'o peuz scoet ganthi, mes be hellan stlapa en ho taoulagad poultren va boutou, evel m'eo gourc'hemennet gant ar Zalver, ha roi

deoc'h he valloz p'e guir ne fell ket deoc'h caout he vennoz o pije tennet varnoc'h, ma vijec'h bet mad e kenver ar paour-keaz plac'h-se. Kemend o peuz lavaret, evit ober dezhi distroi divar hent ar zilvidigez, a zo ken gaou ma'z eo guir e vloc'h mud beteg ar maro, hag an dra-ze a c'hoarvezo evit savetei oc'h ene. »

Ar pezh m'en doa lavaret a c'hoarvezas ractal. N'en doa ket peur-echu he c'her ma teuas an demezell-ze da veza mud.

Dom Michel a hellas eta cass he vino-rez dre vor da Zouarnenez. An intañvez, ma hon euz comzet anezhi, a zescas ker brao d'ar plac'h-ma traou ar zilvidigez, ma zeuas, a benn eun nebeut misiou, da veza e tro da zeski ar re all.

Burzud oa gueleet eur paour keaz paizantez ne zeblante beza ganet nemed evit trouc'ha buzug, ne zeblante ket caout aoualc'h a spered evit gouzout ar misteriou prinsipala euz ar relijion. Burzud oa gueleet eur seurt maouez desket ganthi a daol ar pezh a zell ouz ar zilvidigez. N'e ket tout, kentelliet a zoare ma'z oa gant ar c'hreg santel-ze, e teuas buan da c'houlzout lenn en taolennou, kement ma len-

ner el leoriou divar benn santelez ha perfection ar christen var an douar.

Keid ha ma labouret dezhi he spered hag he memor, he c'halon ne jomas ket da ehana. C'hoant braz e save dezhi da zigouezout beteg an diveza pazen euz ar santelez, ha sicour ar re all da vont d'he heul, o teski dezho guirionesiou an Aviel gant ar memes aket ma oa bet kentelliet he-unan.

Hor missionner a roas, heb dale tro dezhi da ober ar pezh e doa kemend a vall da ober. O veza he galvet da zont da vro Leon, e lakeas anezhi da zisplega an taolennou, pa veze oc'h ober he gatekiz. Houma a oa great evit-se. Eur blijadur a oa he gueleet, ar vialen venn en he dorn, o tilen piz an taolennou, hag o rei ker mad da anaout ar guirionesiou a ioa kuzet enno.

Araog crogi en exercisou santel-ze, Dom Michel a falvezas dezhan e dije tennet varnhi bennoz an env, o covess he fec'hejou abaoue ma oa anezhi, oc'h en em roi d'ar pinijennou, ha d'ar beden a galon.

Ouspenn, evel n'euz nemed an dud izel a galon, an dud a oar douja d'ar re o

deuz galloud varnho hag a hell talvezout calz d'an nessa, Don Michel a reas d'houma mont da Gastel da c'roulen bennoz ar Vikel-Vraz. Ar Vikel-Vraz, doctor euz Sorbonne, a oa eun den a sclerijen, ha tamm ebed troet da laosker eur plac'h a zivar ar meaz da vont da gelen ar bobl. O veza examinnet piz ha piz ar vaouez-ma, e oa souezet-mar o velet eur spered ken sclerijennet hag a ouie lavaret ker scler ar pezh a zonje. Euz a greiz he galon e aotreaz dezhi kelen ar merc'hed, respont d'ar c'hatekiz dirag an oll, hag explica an taolennou, pa vije bet goulennet diganthi gant eur beleg-bennag.

Doue en em zervichas outhi evit kelen calz tud euz a vro Leon, ha dreist peb tra evit deski d'ar re toc'hor hadare da vervel ar pezh e tlient da ober er stad-ze.

Bez' e doa eun doare burzuduz d'ho sicour var ho zremenvan. Var unan euz an taolennou, ez oa peñtet ar vertusion a dlee ar c'hlanvour da heuilla, an de-faochou en doa d'en em viret outho, hag al lasou a stigne an drouc-spered d'an hini a ioa o vont da vervel.

Ar zent oll o deuz poaniet da c'hounit da Zoue ar re o doa ho goal-gasset. Ar

plac'h-ma ive a boanias da c'hounit d'he Zalver ar vestrez e doa guechall dar-c'hoet ganthi e Conc-Leon. Houma a zilaoue laouen he matez goz o tisplega he zaolennou, hag a ziskueze dezhi ha carantez ha bolontez vad. Mervel a reas a benn tri bloaz goude, o roi a bep seurt mercou a vir binijen.

Ar vaouez-se, evel a velit, e deuz great ar brasa vad e missionnou Dom Michel, hag e missionnou an hini a oa bet galvet gant Doue var he lerc'h da gelen poblou Breiz-Izel. Doue a falvezas dezhan diskuez pegemend e plije dezhan labour ar plac'h-se. Taget gant ar vosen a ziscare, a bep tu dezhi, berniou tud, ec'h en em gavas en eun taol pare, kerkent ha m'e doa great veu da zervicha Doue e kichen an dud clanv ha toc'hor.

EIL KENTEL

**An Tad Maner a zeu da gemeret plas
Dom Michel Nobletz er missionnou.**

Comzet am euz ama dija euz an avi a gemer an dud an eil ouz egile. Aliez, siouaz ! ne zonjomp ket e Doue, ne zonjomp nemed ennomp hon-unan. Ar mad, em'omp-ni, a ranc beza great ganeomp, ha n'e ket gant re all. Setu perag, ma ne hellomp ket ober ar pezh on euz c'hoant, e virimp ouz ar re all d'hen ober. Setu aze an den gant he viscamant coz.

Dom Michel a oa deut pell zo d'en em zizober euz eur seurt crez. Evithan, ne vele nemet gloar Doue, ha kement ma helle creski gloar he vestr a ioa he blijadur. An Tad yaouanc a dlee kemeret he blas er missionnou, dioc'h m'en doa great Doue dezhan da anaout, a oa digouezet e scolach Kemper. Hor missionner coz he bedas da zont d'he gaout da Gonc-Leon, o veza ma'z oa bet difennet oc'h outan

taoler he dreid var douar escopti Kerne, hag o veza ma oa he yec'hed re baour evit hallout treuzi ar mor. Lavaret a reas en he lizer, en doa mall braz da veza en he gichen, pa en dije taolet ar mean kenta euz he vissionnou, da lavaret eo, er penn kenta euz he labouriou. Calz traou, emezhan, en doa da lavaret dezhan divar benn ar pezh a zelle ouz mad bro Breiz-Izel. Neuze pa en dije bet an eurvad da velet ar pezh m'en doa lavaret Doue dezhan e vije maro laouen hag eüruz.

Peb tra a dlee dont evel m'en doa c'hoant. An Tadou Jezuisted o doa ana-vezet e oa bolontez Doue ma vije deut an Tad yaouanc-ma d'en em roi da vissionnou Breiz-Izel.

An Tad Maner o veza eat da Gonc-Leon, hon den Doue, dal ma her guelas, a lammas a vriad d'he c'houzoug. hag a skuillas dañlou a joa hag a garantez, en eur lavaret : « *Nunc dimittis servum tuum.* Brema, o va Doue, e hellit lezel ho servicher da vervel e peoc'h, pa o deuz hallet va daoulagad gullet an hini o poa prometet dign. Dinec'h oun brema, ha leun a fisians e lacan bro Breiz-Izel etre he zaouarn. » Goude beza great eur go-

veccion jeneral d'an Tad Maner, e falvezas dezhan e vije deut dioc'h-tu an Tad-ma da brezeg, da ober catekiz ha da gouvess en iliz. Mont a reas da ober tro kear, eur c'hloc'hic bian en he zorn, evit halout dastum an dud en iliz. Pa'z oant bodet dirazhan, e lavaras dezho. « Va bugale gez, setu ama an hini a dle delc'her va lec'h er missionnou, an hini a zo digaset gant Doue evit henchha an dud var zu ar Baradoz. Silaouit he vouez, rag mouez Doue he unan eo. » Mont a reas ganthan da velet ar beorien hag ar re glan euz kear evit ho zicour ha dousaat ho foaniou.

An Tad Maner a ieas ganthan d'he gampr dioc'h rouz an noz. Eno Dom Michel, o veza digoret dirag ar missionner yaouanc eul levr theoloji scrivet ganthan, a lavaras dezhan : « Brema, lennit ha gouezit. » Souezet maro ez oa an Tad o velet scrivet mad ar respont d'ar pezh a glaske pell zo divar benn an doare da ren ar c'houstiansou. Ha gouscoude morse an oll n'en doa lavaret ger ebed nag a bell nag a dost d'hor missionner var gement-se. N'e ket tout, hema, evel pa en dije digoret calon an Tad

yaouanc, ha lennet piz kement feuillen euz he goustians, a lavare dezhan scler var eun ar pezh a dremene en he ene, coulz ha ma en dije lavaret he-unan.

Evit roicalon d'antad-ma, hag her lacaat da garet ar missionnou var ar meaz, e tisplegas dirazhan pegen talvouduz ha profitabl eo kelen an dud paour ha reuzeudic. « Ama, emezhan, var ar meaz, n'o peuz da c'hortoz na gloar na joa euz a berz eur seurt tud; ne labourit nemed evit Doue, ha Doue ho paeo ec'hiz matere ouz eun autrou ker pinvidic. Er c'hontrol, ar re a boagn da brezeg, er c'heriou, d'an dud vraz, o deuz aliez ho faeamant var an douar. Aliez e hellont dont da ancounac'haat gloar Doue evit sonjal en ho gloar ho-unan. Gouscoude Doue ne ro he c'hloar da zen ebed, *gloriam meam alteri non dabo*. Var ar meaz, ar missionnou a zalc'h ar beleg en he renc, n'eo nemed eur benvec etre daouarn Doue. He benvidigeziou, he denzoriou, eo ar poaniou, an trubuillou a bep seurt a gouez varnhan a bep tu. Evel a velit, mar deo eur garg dister dirag ar bed, dirag an dud, eo gouscoude eur garg euz ar re huela dirag daoulagad Doue. »

Goudeze e alias ar missionner yaouanc da brezeg, e peb lec'h, eo red ober faë var ar bed, var he bompou, var he vaximou. Ma raje se, Doue en dije great ar muia vad dreizhan. « Evit-se, emezhan, n'o peuz nemet kemeret an taolennou-ma a zesco d'an oll caret Doue ha cassaat ar bed, ar pezh eo an hent berra evit beva a-unan gant Doue. »

Hor missionner cozh a alias c'hoaz an Tad-ma da ober cana, e peb lec'h ma vije eat, ar c'hanticou spirituel a dlire dalc'her guirionesiou ar c'hatekiz ha guirionesiou ar zarmoniou, rag an dud divar ar meaz o deuz plijadur o cana meuleudi da Zoue noz ha deiz, hag er c'hiz-se e vijent deut buan a benn da zeski al lezen gristen. Ouspenn, lavaret a reas dezhan caout muiozh a zoursi euz he yec'hed eget n'en doa bet bete neuze, abalamour he vuez a vije bet talvouduz da eur c'halz tud.

Servicher braz Doue a vevaz c'hoaz daouzeg vloaz. An Tad Maner a zistroas d'he velet meur a vech, evit silaou he guzulliou a heuille ar pisa ma helle en he vissionnou. Guelet a vije ar missionner cozh-ma o renta an oll zervich ma

helle d'ar missionner yaouanc en doa digasset Doue e Breiz-Izel, evit delc'her he blas. Pa ouie e teuje, e prepare kemend ha ma helle caout izomm. Pourvei a rea peb tra dezhan gant eur garantez par d'an hini e deuz eur vamm evit he c'hrouadur ar muia caret. Al labour, ar zervich izela var dro an Tad yaouanc-ma a oa joa hon den santel.

Aliez guech, heb gouzout ma teuje an Tad-ma da Gonc-Leon, e lakea peb tra en urz evit he reseo. Eun dro e savas e creiz an noz, hag e ieas dre ruiou kear, eul letern ganthan en he zorn, da ziuna he ziskibien, ha da lavaret dezho : « Savit, savit, setu ama mignon Doue o tont. Deomp buan d'he ziambrouc, da geja outhan. » Hag oll var zao ez ejont d'ar porz evit rei ar guella digemer d'an Tad Maner ha d'he gompagnon, petra bennag n'en doa bet kelou ebed a gement-se. Rag an avel, savet a daol, a reas d'ar vagig, a zeue euz an enez Sizun, scoi a gleiz da voe an Anaoun, ha troi penn var zu Conc-Leon.

Ar missionnou e Breiz-Izel a zo tenn ha poaniuz meurbed. Rag ouspenn ma'z euz da brezeg aliez, ez euz c'hoaz poblou tud

da govess, ha canticou da gana. Piou a hell he-unan cass eun hevelep labour en dro? An Tad Maner ne hello ket eta herzel a zindan eur seurt bec'h. Buan en dije collet ha nerz ha yec'hed, dindan eur zamm ker pounner.

Gouscoude ne helle den dont d'he zicour. An Tadou ne ouient ket ar brezonec. Unan anezho a oa c'huec'h vloaz hag hanter-cant ha ne ouie ger ebed euz langach ar vro. Dom Michel, sclerijennet gant Doue, hag o c'houzout pegen eun a oa an Tad-se, a bedas anezhan da veza compagnon an Tad Maner.

An Tad Bernard a gemeras mouez hor missionner santel evit mouez Doue, hag, heb marc'hata tamm ebed, a stagas, evithan da veza-coz, d'ar brezonec, unan euz al langachou an diessa da zeski. Dont a reas kement da garet ar missionnou e Breiz-Izel, ma pedas he Grouer da zont d'he c'helver e creiz al labouriou-se. Ar pezh a zigouezas pemzeg vloaz goude.

N'em eus ket ama da lavaret buez an Tad Bernard, he vertusioù, he vuzudou. Ar gear a Gemper a zalc'has pell goude he varo sonj euz he vuez santel, euz he viraclou. Epad he vuez e resevas aliez

liziri digant Dom Michel. El liziri-se, hor missionner braz a roe aliou d'an hini a oa neuze e penn ar missionnou var he lerc'h, var bouez ar pezh a zonje Doue varnhan ha var bouez an doare ma falle da Zoue he vleigna, en hent poaniz euz ar vuez-ma. An Tadou Jezuisted o deuz e Kemper meur a lizer skrivet gant Dom Michel. Al liziri-se a zo leun a furnez hag a garantez evit Doue. Guelet a reer c'hoaz e liziri-se, an donezon en doa bet digant Doue da ober da c'houzout ar pezh a dlize c'hoarvezout divezatoch. Ar pezh a laca nep ho lenn da zouezi o velet pegen braz ha pegen mad eo Doue en he Zent.

TREDE KENTEL

Aliou Dom Michel evit mission Douar-nenez. — An taolennou hag ar c'ha-naouennou santel.

Abostol Breiz-Izel ne helle mui herzel ouz labouriou tenn ar missionnou. He lagad ker lemm guechall, ne vele mui,

coulz lavaret, berad; he zorn, ken sur araog, pa vije red cass eun tamm labour da benn, a grene, er feson ma ne lavare ket a bell zo he offeren. Henvel ouz eur penn tiegez, pa'z eo croummet gant an oad ha gant ar bec'hiou, pa ne hell mui cregi en alar nag er freill, a oar c'hoaz gouscoude cass al labour en dro. Dom Michel ive a zalc'he eur spered lemm ha fresc, evel d'an oad a dregont vloaz, e creiz eur c'horf a c'houzie bemdez d'an douar. He spered a ouie c'hoaz sclerijenna en dro dezhan, evel an heol ne ehan da bara var mogeriou ar maner coz a gouez bemdez en ho foul.

Dom Michel eta a rene an Tadou, a ziskueze dezho an doare da c'hounit eneou da Zoue. Hen eo a lavare dezho penaoz e vez croget en eur mission, penaoz en em gemeret evit ober d'ar bobl diredec a bep tu da zilaou comzou Doue, ha penaoz eur vech tomm an eneou, a reer dezho kemeret ar pleg ma'z euz c'hoant. Pedi a reas an hini a zalc'he he blas da gommans he vissionnou dre al lec'hiou ma'z oa tremenet dreizho.

Ar pezh a rea dezhan alia an Tadou da vont d'al lec'hiou-se, eo m'en doa ar ga-

rantez an tenera evit ar hoblou en doa kentelliet. Quspenn, Dom Michel e kement lec'h-ma oa tremenet; en doa bet da c'hourin a enep an techou fall hag a enep an dudou a glaske caëat ouz gras an Autrou Doue. Hen a anaveze an tu goag hag an tu calet, ar mammennou dour scler hag ar mammennou dour breign. Hen eta eo a roi ar c'huzulliou ar fura evit anaout ar mad hag an droug, evit scoi var an tu-ma kentoc'h eget var an tu-se. Dom Michel, ec'hiz eur moraer, en doa bet en he enep hag avel ha mare. Ped guech an avelou dirollet ne oant ket deut da lacaat he vagig var var da veza goueledet? Mad, piou a hello lavaret d'ar vissionnerien o dije bet heb dale da roenvi a enep ar memes avel, ar memes mare? Piou a hello lavaret dezho penaoz en em gemeret, pe du troi, mar d'o deuz c'hoant d'en em viret ouz ar reier hag ouz ar maro, nemed an hini a oa bet he-unan er memes danger gantho? Aliou mad zoken a dlee ober dezho en em denn euz a veur a vare treiz, hag araog meur a scourrad avel fall.

An Tadou Jezusted a reas ho c'henta mission e kear Douarnenez, hag hed an

aod tosta, evit senti oc'h ar missionner
coz ha gouiziec.

Dom Michel ho sicouras euz he oll
c'halloud, keid ha ma jomchont eno.
Scriva a reas di, d'he ziskibien, d'ar re
a oa bet an aketusa da zont d'he zilaou,
hag o doa diskuezet dezhan ar muia ca-
rantez, evit ho dougen da roi an dorn d'an
Tadou santel epad ma vijent bet en ho
zouez. Scriva a rea aliez ive d'an Tadou
evit roi calon dezho. « Arabad, emezhan,
eo falgalon. Al labour a zo tenn, an
amzer a zo tomm scaot, mes dont a raio
heb dale ar rouejou da veza leun a besked,
ha neuze ar galon a zrido gant joa. »

Dom Michel a oa evel eur mestouer a
roe he ursou d'an nep a oa dindanhan.
« Aze, emezhan, a bouez penn, aze ema
ar garrec digalon, taolit d'ar meaz. » Dom
Michel e Conc-Leon a oa ar penn euz
mission Douarnenez. Ac'hano eo e tigas-
se he aliou, he guzulliou mad. Ac'hano eo
e tigas-se da Zouarnenez he zivinaden-
nou ijinuz, hag he ganaouennou santel a ge-
lenne an dud berra a spered, ec'hiz dre
c'hoari. Kemend a blijadur a oa o teski ar
c'hanaouennou, an divinaden-
nou, ma zirede mareadou tud, a bemzeg, a ugent

leo tro-var-dro, evit ho c'hlevet cana, ha
goude e tistroent d'ar gear da zeski d'ar
re all an toniou o doa clevet.

Er c'hiz-se an Tadou a zeuas buan da
gelen ar bobl var ar guirionesiou cristen.
Pell goude, ne glevet cana a bep tu, e
peb lec'h, nemet toniou ha canaouennou
devot, e lec'h ar chansonniou gadal ha
fall a oa anavezet araog e touez ar Vre-
toned.

Done a oa gant an Tadou hag a skuillas
he vennoz var ho labour e kear Douar-
nenez. Mont a rejont goudeze da Gonc-
Leon, e sonj ober eno eun tamm couez a
dlie beza talvouduz da galz a dud, dioc'h
m'en doa lavaret Dom Michel Nobletz.
Mes an diaoul, m'hen argars, a zelle a
dreuz oc'h an daou Dad santel-ma. Glasc
a reas lacaat ar vaz er rod, ha miret out-
ho da vont araog. An Autrou'n Escop,
ma'zejont da gaout, ne falvezas ket dezhan
ho zilaou. « C'hui, emezhan, a zo galvet
da scollia ar vugale, da veva en eur
gouent, n'e ket eta deoc'h da zont er par-
resiou da brezeg an Aviel. Me am euz
pastored aoualc'h da ren va denved, me
am euz beleien, hag ouspenn ma'z int

desket, a oar gisiou ha boasiou ho c'hen-
vroiz. »

An Autrou de Louet, deut da veza Escop Kerne, a ziskuezas scler d'an Autrou Cupif, Escop Leon, ez oa faziet var bouez ar relijiuzed. Ne oa nemet teodou trempet en ampoezon hag o dije hellet lavaret drouc divar benn tud ker santel. Ha goude tout, mar en doa aoun d'ho lezel da brezeg en douarou braz, n'en doa nemed ho c'hass d'an enezennou e lec'h ne iea beleg ebéd da ober missionnou.

An Autrou'n Escop a zilaouas eun ali ker fur hag ho c'hassas d'an enezen Molenez ha d'an enezen Eussa.

Dom Michel en dije caret mont di da lacaat he zorn var ar stur, mes he oad, he nebeud a yec'hed, he zalc'he stag oc'h Conc-Leon. Ma ne hellas ket mont gant he gorf, e heuillas gouscoude an Tadou gant he spered ha gant he guzulliou. Doue a skuillas he vennoz var ar vissionnerien, hag ar besketerez eneo a oue miraculuz.

Gouscoude tud Douarnenez, o veza credet e vije bet mission e Conk-Leon, a dreuzas ar mor evit guelek ho missionner coz, ha caout lod euz ar c'hrasou a ra

Doue coueza gant largetez var an dud a volentez vad a red var lerc'h he gomzou. Ar gristenien-ma o doa darn anezho ho c'herent er gearig-se. Chom a rejont eta eno eun nebeudig devesiou, petra-bennag ne oa ket a vission.

Neuze ec'h en em lakejont da gana an toniou a ouient, hag o veza an tiez ne oant ket franc aoualc'h evit an dud a deue d'ho zilaou, unan bennag a gredas mont var leur-gear da gana e kichen eur groaz. Buan ez oa en dro dezhan bodet, evit he glevet, eur vanden dud a bep oad hag a bep stad.

Eur c'habiten coz, daoubleget gant ar bloavesiou ha gant an abadennoù, ne hell mui evit guir troc'ha broiou evit mont da stourm ouz an enebourien; mes pa glev son skiltruz an drompill, e sant he oll c'hoad o virvi en he izili, hag e tisken var an dachen var leur-gear. Dom Michel a verve he c'hoad en he voazied, o sonjal en he amzer tremenet. Disken a reas var leur-gear, ha setu hor missionner coz en ho zouez o ren ar c'han ec'hiz guechall.

Pe seurt droug a oa eno, me her c'houlen? Cana meuleudi da Zoue pe eur

c'hantic en enor d'ar Verc'hez pe d'ar Zent, ha kement-se a oa eun torfed? Ma vije bet dans ha cholori, den ebed marteze n'en dije cavet an distera abeg, an distera hano en traou-se. Gouscoude, e oa cavet tud, ha tud a renc zoken, da vont da gaout an Autrou'n Escop da lavaret divar bouez Dom Michel, he daolennou, ar c'hanticou spirituel, goasa ma hellent. Rebechet e oa dezhan beza great da eur bobl tud dont euz a Zouarnenez da Gonc evit cana soniou fall ha danjeruz, beza diskennet he-unan en ho zouez, heb mez ebed, evit roi calon dezho ha goasaat ar skuer fall; erfin, ez oa rebechet dezhan displega imachou, taolennou a rea d'an dud c'hoarzin, ha goasoc'h c'hoaz, laosker ar merc'hed da gaketel var ho fenn.

Setu aze ar pezh a zornas an dud fallacrise var he bouez. Hor missionner ne respontas ger ebed da gemend a oa lavaret en he enep. Neuze an Autrou'n Escop a lavaras dezhan : « Ha ne respontit netra da gemend a lavar an dud-ma ac'hanoc'h? » An den Doue a respontas : « Guir eo, me n'oun nemed eur maleüruz, siouaz! N'oun ket din da veza bet savet ken huel. » An Autrou'n Escop, o credi

ez oa guir ar pezh a lavare, he scandalas grons, ha goude he alias gant dousder ha gant madelez da zilezel an techou a oa rebechet dezhan.

« Ar c'hanticou a zo condaonet, eme an Autrou'n Escop, ha nep a roi lojeiz da ganerien Douarnenez a vezo exkumunget. »

Hor beleg santel ne oa ket evit gouzanv e vije lavaret drouc ebed dirazhan a enep ar re o doa kemeret avi outhan, hag he damallet e faoz. « A dra zur, emezhan, o deuz credet ober mad. »

Unan euz ar gragez devod, m'en doa great dezhi dont da explia an taolennou, ha da ober catekiz d'ar merc'hed bian, e mission Gonc-Lochrist, a lavaras dezhan : « Mar d'o peuz credet mad chom peoc'h, pa'z euz bet rebechet deoc'h meur a dra iskiz, e thiec'h da viana sevel ho mouez evit difen crenn an taolennou hag ho tiskibien. » Dom Michel a respontas : « Ma em bije-me kemeret varnon d'ho tifen, Doue en dije lezet ac'hanon va-unan e creiz ar re o deuz caz ouzin. Brema ma em euz lakeat ar gaoz etre he zaouarn, eo dezhan d'he difen, ar pezh a rai heb dale, m'hen assur deoc'h. »

Kement m'en doa hor missionner lavaret dezhi ne zaleas ket da zigouezout. Antronoz, oc'h penn evit mil den, o tont euz a enezen Eussa evit reseo sacramant ar Gonfirmasion, a reas d'ar mor tregarni adaleg an enezen-ze beteg porz Conc, gant ar c'hanaouennou devod m'en doa desket dezho an Tadou, var ali Dom Michel. A boan m'o doa taolet ho zreid var douar Conc ma'z ejont var diou renc. Ar merched braz hag ar merched bian en eur vanden, ar goazed hag ar baotredigou en eur vanden all, a gane var bouez ho fenn ar c'hanticou spirituel beteg kearic Sant-Vaze, e lec'h ma tleent beza confirmet gant an Autrou'n Escop.

Mes dre ma'z eant, an oll a lavare dezho: « Peoc'h, peoc'h, ar c'hanaouennou-ze a zo condaonet ha difennet ho c'hana. » Ar re-ma ne oant ket evit credi e vije displijet d'an Autrou'n Escop canticou ker santel ha ker devod. « Penaoz, emezho, canticou hag a blij kement da Zoue a ve difennet; » hag e canent muioc'h-mui creoc'h-crea, o sonjal e oa dezho da zifen an Tadou hag ar missionner coz.

Gouscoude Doue ne zaleas ket da zigass ar sclerijen. Eno e oa en em gavet Theo-

logal iliz gaër ar Folgoat, da lavaret eo, an hini a oa carget da ziuall ar feiz splamm'ha digatar. An autrou-ma, den a skiant hag a furnez, en doa eun tammig discred var gemend a oa bet lavaret a enep Dom Michel. Ober a reas da eur plac'hig bian-bennag cana dirazhan ar c'hanticou-se. Hema a gavas an toniou brao da zabatui. Ar feiz a ioa ker neat ha ken digatar, ar mann kuzet a oa ker mad da vaga ar c'halonou, ma'z eas var eun da gaout an Autrou'n Escop. Troi a reas e galleg lod euz ar c'hanticou en eur ober kemend a veuleudi anezho d'an Autrou'n Escop, ma zeuas da jench mennoz. Anaout a reas ez oa deut teodour fall da lavaret drouc euz ar c'hanaouennou. Brema avad e reas da unan euz ar re genta euz an Escopti pignat er gador. Hema a lavaras dirag an Autrou'n Escop hag euz he berz, ez oa bet faziet divar benn hor missionner hag ar c'hanticou spirituel. Pell, emezhan, da gaout an distera abeg er c'hanticou-ze, an Autrou'n Escop n'en doa nemed ar brasa meuleudi da ober anezho. Roi a rea he vennoz d'an den Doue, evit ma en dije kendalc'het da gelen ar bobl, ha da gaout soursi euz ar gristenien. Roi a rea

c'hoaz euz a greiz he galon he vennoz d'an nep piou-bennag en dije kemeret kuzul diganthan, doujet dezhan, canet ar c'hanticou, ha dreist tout e roe he vennoz da Zouarneneziz a ioa deut da Gonc-Leon evit atiza ar re all dre ar guel hag ar skuer.

An Autrou'n Escop, o veza deut da anaout guelloc'h an Tadou, ne helle mui ho dioueret. Gouzout a rea ar frouez caër o doa great e Molenez hag e Eussa, hag he galon a zride gant eur joa santel. Adaleg ar mare-ze, en doa evitho ar brasa istim. Ho c'hass a rea zoken d'al lec'hioù ma carie ar muia euz he Escopti. Dom Michel, atao he zorn var ar stur, ho henche hag ho sicoure gant an alioù mad ne ehane da roi dezho.

An Autrou de Rieux, deut da veza Escop Leon, o veza clevet hano euz ar poaniou en doa bet Dom Michel da c'houzanv, hag euz ar burzudou en doa plijet da Zoue ober dre he zervicher, a zeuas d'he bedi da vont gant an Tadou Jezuisted da labourat er missionnou. Mes hor missionner coz, torret he gorf gant he labouriou pouner, guenn he vleot gant ar bloavesiou ha gant an trubuillou, a lavaras e

vire ar pezh a jome c'hoaz a nerz ganthan evit boeta, maga tud Conc-Lochrist. Ne oa mui, emezhan, e taill da zisken er blenaen e mesc ar zoudarded yaouanc ha calonec, mes var ar menez ne ehane da zevel he zaouarn var zu an Env evit goulen ouz Doue he c'hrasou puilla var ar visionnerien ne ouient ket argila da c'houlin ouz an techou hag ouz ar plegou fall.

PEDERVED KENTEL

Hor beleg santel a deu da veza seizet oll he gorf. — Goal-gasset eo gant an drouc-sperejou. — En em lacaat a ra e stad vad da vervel.

Ouspenn evit tri-ugent vloaz a oa abaoe ma boanie hor missionner d'en em lacaat e stad vad da vervel. Ar vuez evithan a oa, evel pa lavarfen, porched an eternite. Michel oc'houzout e tostea bemdez gant he oad braz ouz he eürusded, ha Doue o veza roet dezhan da anaout an amzer ma tlee he c'helver evit mont d'he gaout, Michel

a boanie muioc'h-mui evit tremen ar rest euz he vuez evit brasa gloar he Vestr. Neuze, evithan da veza coz ha santel, e zeuas c'hoaz d'en em renevezi ha d'en em starda muioc'h ouz Doue ha da heuilla pisoc'h he exersisou a zevosion. An oll a velas ne'z euz den, n'euz forz peger santel e ve, ha ne halfe ket dont da veza santeloc'h, evel an aour ar melenna a zeu da veza cañroc'h o tremen dre dan ar fournez.

Buez Dom Michel a oa prederia medita var hor Zalver Jezuz-Christ yaouankic, disteric, hag astennet var ar groaz. Goulennet en doa, a hed he vuez, ma en divije bet sempladurez ar c'hrouadur bian, ha poaniou eun den stag oc'h ar groaz, gant en dije bet gouscoude he spered mad hag he galon e tro da garet ha da zervicha Doue.

Tri bloaz araog he varo, Doue a blijas ganthan roi dezhan da anaout en dije he c'houlenn. Var dro gouel sant Mikeal, er bloaz 1651, e teuas da veza seizet he oll gorf. Scoet en eun taol, e couezas d'an douar, e creiz he gampr, heb hallout sevel, hag ec'h en em gavas er stad m'en devoa goulennet beza. Ar c'hlenved-se a

badas seiz miz, hag epad an amzer-ze ez oa red he zevel, he visca, he voeta, evel eur c'hrouaduric bian, heb ma halche morse finval na corf nag ezel.

Er stad truezuz-ze, abostol Breiz-Izel a brezege, evel divar eur groaz, mil guech guelloch eget n'en devoa great a hed he vuez.

Great en doa dija he destamant ha lavaret kenavo d'he ziskibien muia caret euz a Zouarnenez. Scrivet en doa dezho eul lizer evit ho startaat er feiz, e servich Doue, hag evit roi dezho eun ali all-bennag; ho fedi a reas da zilaou lenn eul leor devod bennag. Eulleormad, emezhan, a zesc d'an den hent ar guir furnez, hent ar zantelez. Bez' ez eo ar guella mignon a ouffer da gaout, o veza ne lavar morse netra nemed evit brasa mad an hini he lenn. Arab eo, emezhan, caout damant d'ar gueneien pa'z eo red scollia ar vugale « Guell eo deski mab bian eget dastum madou dezhan. » Ne zonjit ket re ive en diouer o peuz anezho. Ar blantennic a vez soursiet mad outhi abred a ra buan coat calet. Claskit, me ho ped, eur mestr scoll fur ha gouiziec, hag a ouio var eun dro ober ouz ho pugale ha tud a zoare ha

tud a Zoue. Bezit leun a respet hag a zoujans evid an dud a Iliz. Ra vioc'h oll a-unan er barrez. Mac'h en em glevit oll etrezoc'h, evel izili euz ar memez corf, an drouc-spered ne hallo ket eaz dont a benn ac'hanoc'h. Ar spered fall-ze n'eo crenv nemet pa ia peb hini euz he gostez hag en he bart he-unan.

Kimiada a reas ive dioc'h he gerent nez. Laosker a rea gantho var he lerc'h he baourentez evit heritach. En he destamant e roe ar brasa meuleudi euz an dienez, euz ar baourentez, eur barr, emezhan, presiusoc'h evit an aour, an arc'hant, ar perlez.

Dom Michel, astennet var he vele a boan, ne baoueze, ne ehane ket da ober catekiz, da scoi var an techou fall, ha da alia ar re a iea d'he velet da heuilla ar vertusiou cristen. Ne teue den ebed d'he velet, heb n'en dije goulenned eun ali bennag evit ar vuez da zont, o veza ma'z oa deut ato beteg hen da vad ar pez en doa Dom Michel discleriet dezho. Ouspenn, roi a rea an hevelep ali d'an oll. « C'hoant o peuz da veza parfed, emezhan, troit kein d'ar bed, marvit a grenn d'he lezennou. Carit ar re o deuz drouc ouzouc'h, ha grit vad

d'ar re ne glascont nemed ober poan deoc'h. Setu aze ar pez a raio deoc'h beza anavezet evit diskibien Jezuz. »

Ar brud euz clenved Dom Michel a oa redet dija e pevar c'horn an Escopti. Meur a zen a renc huel a falvezas dezho guelet ar zant-ma var he vele a boan. Dont a reas di d'he velet ar c'hosa euz he nisien, an autrou de Kerodern. An Intron de Carne he nizez, a zeuaz ive, ha Dom Michel a lavaras scler dezhi ar pez a tlie c'hoarvezout ganthi. Ar markiz de Kergroadez a gavas ez oa lojet fall hon den Doue. « Penaoz, emezhan, chom en eur gampric a boan dezhi deg troatad hirded? » Goulenn a reas outhan ma ne vije ket contant da droca he lochennic oc'h castel Kergroadez a oa e kichen. An oll a ouie ez oa ar maner-ze unan euz ar re gaëra euz Breiz. Hon den santel a c'houlennas, en eur vousec'hoarsin, pegemend en dije ar markiz roet dezhan var ar marc'had ouspenn evit he vaner. Goude e lavaras d'an autrou-ze kemend a vije digouezet ganthan penn-da-benn.

Mar d'an Autrou Doue hag he elez o doa ho daoulagad troet var ar paour-keaz clanvour, an diaoul euz he gostez ne de-

c'he ket kuit. Doue a lakeas guechall an den santel Job etre daouarn an drouc-spered evit ober anezhan ar pezh m'en dije caret, roi a reas ive galloud dezhan var Dom Michel. Dont a reas beteg teir guech d'he fusta a daoliou fouet en eun doare ken didruez, ma'z oa he gorf bronduet oll euz ar penn kil d'an troad. En dro diveza da Vener ar Groaz, an abaden a ioa bet crisoc'h evit er guechennou all. Rag en droioù-se, mercou an tañliou scourjez ne joment varnhan nemed e doug eun devez, e lec'h en dro-ma e chomont adaleg Gue-ner ar Groaz beteg ar zul Fasc.

Eürusted hon den santel a ioa sonjal e poaniou hor Zalver var ar Golgotha, var menez Calvar. Mad, ar spered fall-se a gemere plijadur oc'h ober dezhan gouzanv eul loden euz poaniou hor Zalver. Eur mignon o veza goulennet diganthan pétra a c'hoarveze gant he zorn, Michel a respontas goustadic ez oa bet he gamma-rad braz, da lavaret eo an diaoul, ouz he velet, ouz he vizita.

Guelet a reat mercou an tachou teo en he zaouarn beteg goude he varo. Ouspenn, evit ma vije bet he boaniou henva-loc'h ouz poaniou hor Zalver, ez oa toul-

let he gostez dezhan var dro eur miz araog ma varvas. An abaden a ioa bet tomm. An dud a oa eno, diunet a daol gant an trouz a ioa bet clevet en he vele, a gavas ar paour-keaz clanvour o crena gant ar spont ha gant ar boan. Guelet a rejont neuze eur gouli braz aoualc'h evit lamet he vuez diganthan ma ne vije ket deut ar Medisin braz da stanca ar goad ha d'he barea.

An Doue ne lez morse en abandon he zervicherien fidel a jomas en he gichen. Roi a reas dezhan da danva eun tammic euz an eürused a ioa oc'h he c'hdal er baradoz. Gouzout a reas e creiz hé dru-buillou pegen dudiuz eo caret Doue, pegen dudiuz eo beza teuzet en he garantez ha beza var neunv ennhi. An Tad Kintin, he vignon braz, maro tost da ugent vloaz oa, en em ziskuezas dirazhan. Euz a greiz ar sclerijen gaër a rea an dro dezhan, an Tad Kintin a bedas gant eur vouez ken dudiuz he gammarad da vont d'al lec'h ne zeuz nemet joa ha levenez, ma oa beuzet calon Dom Michel a zelisou.

Neuze hor missionner coz a falvezas dezhan ober ar pezh m'en doa aliet ar-re all da ober, nousped guech epad he vuez,

da lavaret eo, en em brepari da reseo he zacramanchou ha da vont diraghe Grouer. Epad he glenved e reseve diou vech ar zizun corf ha goad he Zoue. Brema e fell dezhan caout ar gommunion evel ma vez casset d'ar re glanv. Ober a ra he denna euz he vele hag he lacat var he zaoulin e creiz ar gampr. Goude m'en deuz adoret he Zalver en hostiv sacr, e ped ar beleg deut gant an Autrou Doue da lacaat an hostiv dirazhan, var eun daol preparet evit-se.

He adori a ra gant eun ear ken humpl ha ken devod ma'z eo treuzet calonou ar re zo eno ha ma zired an dour euz an daoulagad. Neuze e comz evelhen dirag an oll : « Red eo, emezhan, dizoloi eur c'hras a roas Doue dign em yaouankiz, pa'z oan c'hoaz e Ajen oc'h ober va studi. An Intron-Varia, va mestrez, ne deuz morse ancounac'heat he zervicher. Pa oan er boan, en anken a zindan va c'hroaz, yaouanc flamm c'hoaz, ar Verc'hez va mamm ger, a blijas ganthi disken beteg ennon. Goude m'e devoa va diboaniet, va c'honsolet, e roas dign euz a berz he mab kurunen an dud guerc'h, an dud pur, gant an assurans e vijen tremenet dre greiz

danjeriou ar bed heb an distera drouc ebed. Hag hirio e lavaran scler n'em beuz morse, a hed va buez, great an distera pec'hed a enep ar vertuz santel. Hen toui a ran dirag va C'hrouer am barno dizale, va dorn astennet var zacramant an Aoter, meulet ra vezo ! An dra-ma e lavaran dirazoc'h evit ma teuoc'h da drugarecaat assambles ganen an hini en deuz roet ar c'hras-se dign, an dra-ma e lavaran evit renta gloar da Zoue, evit mad an dud am euz clasket hench a var hent ar vertusiu, hag evit ma reoc'h muioc'h a stad euz ar pezh am euz prezeget deoc'h dre urz Doue. »

Goude e resevas sacramant an Aoter ha sacramant an Nouen gant ar brasa feiz, gant ar brasa fisians, ha gant ar brasa carantez.

Gourc'hem en reas ma vije bet atao unan bennag en he gichen evit lenn bep noz passion ha maro hor Zalver Jezuz-Christ. Clevet, emezhan, conta poaniou hor Zalver, a ra d'ar c'hlanvour ancounac'haat he re, evit sonjal hebken e poaniou hor mestr. Eur blijadur vraz a ioa evithan clevet histor poaniou hor Zalver el langach m'en doa prezeget a hed he vuez penn da benn. Ma teue eur vech an amzer

da ober d'al lenner enana, ez oa evit sonjal er misteriou a gleve hag evit en em unissa muioc'h gant he Grouer.

Doue en he vadelez a roas dezhan da c'houzout, pemp sizun araog he varo, he heur diveza ha kemend a dlie c'hoarvezout ganthan d'ar mare-se. O credi eta, ez oa ar pezh a jome a amzer ganthan evel eun devez a zilvidigez, e reas dont d'he gaout an hini m'en doa desket dezhi sicour ar re glanv var ho zremenvan. « Tostaat a ra, emezhan, va heur diveza. C'hoaz eun nebeud, ha va jadennou a vezo torret. Va mestr en deuz bet truez ouzin, hag, heb dalc'her cont ebed euz va fec'hejou, e fell dezhan va c'holoi, va c'huruni a c'hloar. Chom a ra c'hoaz dign teir boan vraz da c'houzanv en draonien-ma a zaëlou, hag em euz izomm da veza sicouret, kennerzet ha reconfortet. Ho pedi a ran da lavaret dign ar pezh m'am euz aliez lavaret va-unan evit roi calon d'ar re all a enep tentasionnou an drouc-spered. Er c'hrogad diveza, an diaoul a zaill gant kemend a dan hag a gounar var an dud ma ne zeuz den ebed hag a ve er meaz a zanjer. Neuze eo e sco gant an den dre he du goag ha kizidic. Clasc a raio ar spered fall-zelacaat dirazhan

ar pezh am euz great a vad evit gloar Doue. Mes neuze e vezo deoc'h da lacaat dirag va daoulagad va bec'hejou tremenet, ar grasou am euz laosket da vont da goll, ha da ober dign ober actou a contrision. Oh ! neuze, roit dign ar groaz da adori ha da boket. Oh ! neuze comzit ouzin, me ho ped, euz ar groaz santel am euz caret em buez, hag a fell dign caret en heur euz va maro. »

En tri devez diveza euz he vuez ne dlie guelet den, na comz oc'h den, nemed ouz an hini a zalc'he he blas er missionnou, an Tad Maner, he vab muia caret. Epad an tri devez-se en dije, emezhan, prennet cloz doriou he ene d'an traou a ziaveaz evit en em zastum ennhan he-unan, evit en em unisa gant he Zoue, mesca he garantez gant garantez he vestr ha mervel beuzet e grasou he Zalver.

Goulen a reas er memes amzer kelou ouz eun den a renc euz a Gerne. Hema en doa goal-gasset hor beleg santel ha great d'he galon goada meur a vech. Dom Michel var he vele a boan a zeu sonj dezhan oc'h he adversourien hag a bardon dezho kement m'o doa great dezhan. Ha ne veler ket aze diskib an hini a

bede guechall he Dad, a zivar he groaz,
da bardoni d'ar re o doa great dismegans
varnhan hag he lakeat d'ar maro?

PEMPET KENTEL

—

**Dom Michel Nobletz a ioa bet teir guech
en he bassion**

—

Lavaret a hellomp ez oa bet hor beleg
santel eur miz en he bassion abarz ma
rentas he ene da Zoue, pa'z e guir e c'hou-
zanvas cazi epad an amzer-ze poaniou hag
ankeniou an den toc'hor dare da vervel,
evithan gouscoude da gaout a-vare da-
vare eur scleraen-bennag. Goude beza
gourennet epad pemp devez oc'h an ancou,
e teuas adarre er poent ma'z oa araog he
genta passion. Caout a reas zoken nerz
aoualc'h evit roi lod euz he zillad da eur
paour a ioa deut d'he velet, keid ha ma'z
oa eat d'an offeren ar re a ioa oc'h entent
outhan.

Ar vellaen-ze ne badas nemet pevar de-
vez, ha goude e ieas adarre en he bassion

evit an eil guech. Epad pemp devez all;
renc ha renc, ez oa sclasset he gorf oll
evel pa vije bet a zindan an erc'h. Guelet
a oa bet varnhan ar pezh a veler var dro
ar re a zeu da vervel, da dremen euz ar
bed-ma d'ar bed all. An oll a grede beza
he velet o renta he alanad diveza, hag he
gorf a jomas reud ha sounet. Ne denne
mui he alan, he voazied, he galon, ne fin-
vent, ne dalment an distera. An oll a grede
ez oa eat da velet Doue.

Mes nag o doa lec'h da zabatui ha da
veza laouen er memes amzer pa velchont
anezhan en eun taol-cont o tigor he
zaoulagad, o tenna he alan, o comzal, o
tont da zibri ha da gousca dous.

Meur a hini euz ar re a ioa bet test a
gement-ma a gredas en oa falvezet da
Zom Michel en em ressusita he-unan evit
dont adarre da c'hourin oc'h ar boan, ha
dre c'houzanv renta muioc'h a c'hloar
d'he Grouer. Ar re-ma o veza comzet out-
han divar benn-se, ar c'hlanvour ne reas
nemet mousc'hoarzin heb respont ger
ebed. Ar pezh a reas dezho credi ez oa
guir ho zonz, rag bez' en doa an doare-ze
da respont pa glaske kuzat eur c'hras
bennag bet digant Doue.

Evidon-me ne assurin netra divar benn kement-se, petra bennag histor an Iliz a ginnig deomp meur a skuer euz a dud deut adarre beo; lavaret a rign avad, heb aoun ebed, n'euz netra souez e kement-se, pa zonjer ez oa Dom Michel eun diskib santel, pa zonjer en oa Doue en em zervichet outhan ken aliez evit diskuez he c'halloud.

Daou Dad Jezuist euz scolach Kemper, o veza deut beteg ennhou ar c'helou e oa Dom Michel dare da vervel, a falvezas dezho mont d'he velet. C'hoant o devoa da ziskuez d'an den Doue-ma ho anaoudegez vad evit ar pezh en doa great en ho c'henver, pa zigouechont e oa Dom Michel o tont euz he eil bassion. Neuze e teuas ar prezeg dezhan hag e hellas roi eun ali mad bennag d'an Tadou diredet di evit he zilaou. Piou a lavaro ar joa en doa Abostol braz Breiz-Izel o velet ar re a zalc'he he blas o tont da glevet ouz he c'hinou kuzulliou evit lacaat Doue da veza anavezet ha caret e peb corn euz a Vreiz. Epad eun devez ha diou nozvez dioc'h-tu e roas dezho da c'houzout ar pezh a zonje Doue varnho ha var ho missionnou. Renevezi a reas ho aket, ha

creski a reas tan ho c'harantez evit silvidigez an dud divar ar meaz. Ho fedi a reas da zicour unan bennag euz ar re a garie ar muia d'en em zalc'her e gras Doue ha d'en em zantifia muioc'h-mui. Erfin e pedas anezho da roi euz he berz he vennoz diveza d'he vugale gez a Zouarnenez.

Neuze an Tad Bernard a lavaras dezhan : « C'hoant braz em beffe da zilezel ar missionnou. Al labour a zo tenn ha poaniuz, n'oun ket euz ar yaouanca ha ne hallan mui. N'e ket tout, va zroad a vouz ouzin eur vech an amzer, hag eo diez braz dign mont ha dont. »

« Nan, nan, va Zad, eme Dom Michel, ne zilezit ket ar missionnou, me eo hel lavar deoc'h. Red eo mervel pa heller, stag gant al labour, ha ma zeu goude tout ho troad da vouza en hevelep feson ma reüz ho tougen, dougit anezhan ha kendalc'hit da ober missionnou beteg ar maro. »

« Evidoc'h-hu, eme Dom Michel d'an Tad Maner, distroit me ho ped d'ho mission, etre ho tivrec'h-hui eo e fall dign mervel, mes n'e ket deut an heur c'hoaz.

Bezit dizoursi, deut ma vezo ar mare o pezo kelou, me hen tou deoc'h. »

Ar vellaen a badas c'hoaz eun nebeud amzer goude ma'z oa eat an Tadou en ho hent. Implij a reas an amzer a leze Doue ganthan evit lavaret ar pez a oa da ober, eur vech ma ne vije ket bet mui euz ar bed-ma.

Falvezout a reas dezhan e vije chomet he gorf epad tri devez en eur chapel savet en enor da zant Cristof, evit m'o dije gelllet ar beorien he vreudeur dont a vandenadou da bedi Doue evit silvidigez he ene. Falvezout a reas ive dezhan e vije eat ractal goude he varo he ziskibien hag he vignoned da bedi ar Ver'hez hag ar Zent oll he brotectourien, en eun iliz savet en enor da zantez Barba. Eno o dije kiniget d'an Tad Eternel tenzorieu, miritou hor Zalver Jezuz-Christ, evit he denna er meaz euz tan ar purgator, ma vije digouezet ganthan mont di evit netaat ha melenaat aour he garantez.

Gourc'hemen a reas c'hoaz ma vije caset he gorf da iliz Lochrist ha sebeliet e traon chapel sant Tujan, e lec'h ma veze interret ar beorien.

En nozvez-se zoken, Dom Michel en em

ziskuezas da eun den a ioa diun caër hag a lavaras dezhan scler mont da govess antronoz hag ober pinijen euz ar pec'hed en doa kuzet d'he govessored. An den-ma a zentas dioc'h-tu hag a zisloncas he bec'hed miliget en dije cazi sur he gollet anez hon den santel.

C'HUEC'HVED KENTEL

Maro Dom Michel Nobletz

Mont a reas neuze en he bassion diveza. Ar bassion-ma a oa, a gredan, an drede poan m'en doa Dom Michel da c'houzanv, dioc'h m'en doa roet Doue dezhan da anaout. Ha neuze, evel ma c'hoarvezas gant hor Zalver he-unan, e teuas hon den Doue da c'huezi an dour hag ar goad ken a boulenne a zindanhan.

En dro-ma e c'houzanve poan an tan. An diabarz anezhan a oa devet, hag ar grouez, an domder a ioa ken braz, ma zeuas a ziaveaz beteg devi ha rosta ar c'hroc'hen, en eun hevelep feson ma

jome ar c'hroc'hen stag ouz al liseriou vele, ha ma jome an tammou a istribill outho.

E creiz he boaniou criz ne glemme ket gouscoude nemet abalamour ma ne c'houzanve ket aoualc'h evit he Zoue. C'hoant en dije bet da c'houzanv var eun dro kement m'o doa gouzanvet an oll merzerien, evit hallout diskuez d'he Zal-ver Jezuz he anaoudegez hag he garantez birvidic.

D'an eil devez, e c'hourc'hemennas d'an Tad Maner dont d'he gaout. An Tad-ma a zentas ec'hiz eur c'hrouadur, hag a zeuas timad, divar greiz he vission da velet he vestr o vervel.

D'an drede deiz ez oa meur a hini e kichen he vele diredet da velet ar zant-ma o tremen. Neuze Dom Michel a i eas evel er meaz anezhan he-unan evel pa vije bet distaget he ene diouz he gorf, hag e chomas en doare-ze epad div heur dioc'h-tu. Epad an amzer-ze an oll o doa ho daoulagad o para varnhan. He vizach a oa ken skeduz, he liou a oa ken fresc ha ker flamm ma'z oa scoet calonou an oll beteg ar voeden, beteg ar beo.

Neuze dres eo e teuas ar peñter evit

tenna patrom hor beleg santel, ha dioc'h ar patrom-ze henvel buez outhan eo bet great ar patromou all.

Eur vech ma oa deut ennhan he-unan, hiniennou a c'houleennas diganthan petra en doa guelet ma'z oa deut joa ha levenez he galon da bara var he vizach. Lavaret a reas e oa deut he Intron dous, he vestrez kez, an hini e doa he ziboaniet guechall er gear a Ajen, d'he zicour adarre ha d'he frealzi.

Goude e prennas cloz daoulagad ar c'horf evit digori daoulagad an ene ha chom er vrasa union gant-he Zoue. Digori a reas gouscoude he zaoulagad pa glevas comz dous an Tad-ma en doa gourc'hemennet mont d'he glasc.

Ractal ma oa digouezet an Tad-ma, hor beleg santel a c'hoanteas covess he bec'hejou evit ar vech diveza ha caoul an absolven anezho. Tremen a reas an noz var lerc'h o comz ouz he Zoue. Piou a lavaro ar pezh a oa etre he vestr hag an ene cristen-ze.

Erfin, e kenver deiz translasion corf sant Corantin, ma oa custom da zelebri gant ar vrasa devosion, goude beza en em erbedet stad ouz abostol Breiz-Izel,

e tastumas kemend ha ma hellas he oll nerz, he oll c'halloud evit sonjal en he Zoue epad an tri devez diveza euz he vuez.

D'ar bemp euz a viz mae 1652, oajet a 75 vloaz, goude beza c'hoaz stardet var boul he galon crusifi he Zalver muia caret, hon den Doue a rentas he ene caër d'he Grouer en eur boca a vriad d'he groaz benniget...

Neuze e savas en dro d'ar c'horf santel eur c'huez dudiuz, hag an oll a ouias ez oa eno eur merc anat e oa he ene caër ha flamm beuzet e calon Doue.

Setu eta maro Dom Michel Nobletz, abostol braz Breiz-Izel, mab d'an autrou de Kerodern, unan euz an dud brudet euz bro Leon. C'hoaz iaouanc e oa kemet evit an den desketa euz a Vreiz-Izel. Nep en dije gueleit Dom Michel Nobletz e creiz he vrud o vont evel var nij da gass ar c'helou mad, nep en dije gueleit abostol braz Breiz-Izel d'ar mare ma dec'he araozhan ar c'hlenvejou hag ar maro, en dije lavaret ez oa e guirionez galloudusoc'h, hueloc'h evit rouanez ha prinsed an douar. N'euz forz, ar maro a zeu d'he sconi evel an distera den. An hini m'ema

he balez e barr an enyou, an hini a ro ar gurunennou, ar galloud d'an nep e fell dezhan, hag ho lam pa blij ganthan, hennez ive, mestr var ar maro, mestr var ar vuez, a ro kentel d'an dud gallouduz, d'an dud huel; hag evitho da veza savet hueloc'h evidomp n'emaint ket nebutoc'h dindan he zörn eget an distera paotr saout.

Dom Michel Nobletz a varv ec'his an diveza, an distera ac'hanomp, mes mervel a ra e Doue, eno ema tout an den.

Deuit, poblou, deuit brema; deuit tud a ouenn da velet e pe seurt stad ema unan ac'hanoc'h, unan euz ho touez. Mes deuit dreist peb tra, tud paour he vreudeur, intanvezed devod, minored reuzeudic, deuit ha gouelit dourec, rag ho madoberour, rag ho tad n'ema mui. N'ema mui an hini a roe muioc'h a sked d'an noblans ha ma en dije gounezet victoriou var brinsed an douar; rag discaret en deuz rouantelez prinsed an devalijen en hor bro. N'ema mui an hini a glasse e peb lec'h an dud maleüruz, an dud sammet evit ho divec'hia, evit ho zoulaji. N'ema mui an hini a oa he blijadur boda en dro dezhan ar vugaligou vian evit

pasca dezho ar guirionesiou cristen. N'ema mui an hini a scarze ken neat ar c'hous-tiansou contammet ha brein hag ho guel-c'he gant eol ha gant guin mesc ha mesc.

Mes tostait dreist peb tra, o c'hui a zalc'h he lec'h var an douar, o c'hui a red gant kemend a dan, gant kemend a vall var lerc'h an enecou dasprenet gant goad hor Zalver. Ama dirag ar c'horf-ma, Dom Michel Nobletz, missionner braz Breiz-Izel, a ziskuezo deoc'h eo red dilezel peb tra hag en em zilezel oc'h-unan mag o peuz c'hoant d'en em roi a bez d'ho Toue ha da zilvidigez an enecou. Oll deuit ama da skuilla ho taélou mesc ha mesc gant ho pedennou.

Ia, Dom Michel Nobletz, mestr ar vis-ionnerien en hor bro, c'hui a vevo en hor c'halon. Eno eo a blijo ganeomp dont da velet ho patrom en doare ma'z oac'h en heur euz ho maro. Eno eo ho kuelim gant ar goupari, an ear-ze ker flamm, ken caër, ma lavare an oll e oa oc'h ene var neunv e carantez Doue. Pa vezo eur boan-bennag o verzeria ac'hanomp, eno eo e teuimp da vedita var ho puez, var ho poaniou, ha da zeski ganeoc'h eo red da

bep hini en draonien-ma a zaélou dougen he zamm, dougen he groaz.

Echui a rin dre gomzou eun den devod ginidic euz a gichen maner Kerodern. En he vugaleach en deuz punset ar memes ear yac'h ha santel. Hen eo en deuz dibuchet ar brezonec flour ha digatar-ze ne vije ket bet cavet divalo gant he gev-vroad Dom Michel Nobletz.

Setu amañ ar pezh a lenner e leor an *Ene christen e Bali an Env* :

« An aotrou Mikeal an Nobletz? An neb en devize he velet pa guitaas, e bar he vrud, maner Keroudern ha douarou Plougerne, evit mont evel var nij da gas ar c'helou mad, da zitour ar Baradoz var ar-meaz hag er c'heriou, e Montroulez, e Eussa, Molenez, Enez-Vaz, e Sant-Vaze penn ar bed, ha var dro; e Landerne, er Faou, e Kemper, Concarne, Pont-Abbat, Gouaien, Enez-Sizun, Douarnenez, etc., an neb en devize guelet abostol Breiz-Izel er mare-ze, pa dec'he ar c'hlenvejou hag ar maro en he raog, a vize bet men-ned da zonjal oa eur prins bennag euz an Env, eun eal e doare eun den, diskenned e touez an dud; mes pa velomp anezha, en eur goz-campric e Conc, var eur guele

ha n'oa ket dezha, seizet maro he izili, hag unan o rancout beza o visca anezha, o rei boed dezha, o trei hag o tristrei anezha, oc'h entent outha evel ouz euz c'hrouadur ; pa velomp anezha er stuz-ze, epad seiz miz, abarz ma varvas, e hal-lomp lavaret : — Setu aze petra oump eb an Aotrou Doue ; an hini en deuz great kemend-all a vurzudou, setu aze petra vize bet, anez ar vertuz a roe Doue d'he gomzou ha d'he oberou, epad he vuez ne vize bed mad da netra. Bennoz ha meuleudi deoc'h, o va Doue, evit an oll vad a veler var an douar. »

SEIZVET KENTEL

**Burzudou Dom Michel Nobletz ractal
goude he varo**

Corf hor beleg santel a oa casset dioc'h-tu goude he varo da iliz Sant-Cristof evel m'en doa lavaret he-unan. Goude ma oa great ar pedennou evit repoz he ene her-vez ar c'hiz, meur a hini euz ar re a ioa

eno a gredas gullet eul liou flamm ha caër o pignat d'he vizach. He vuzellou a ginnige finval ha respont d'al litanioù ar Verc'hez, egiz pa en dije bet c'hoant da ziskuez goude he varo he zevosion evit mamm Doue.

Kemend a dud a ziredas evit poket da zaouarn ha da dreid ar c'horf pur-ma, evit touch outhan ha chapeledou ha leorion a zevosion, ma'z oa bet red laosker doriou ar chapel digor noz-deiz epad daou zevaz penn da benn.

Gragez devod a ieas di evit enori corf an den santel, hag a velas eur sclerijen gaër o para dre an iliz oll, petra-bennag ne oa eno na goulouen na lamp ebed var elum. Ar gragez-se a lavaras c'hoaz e clevchont eur c'han ken dudiuz ha ker cre ma dregarne ar vrec'h-vor a zeue beteg harz ar chapel. Ouspenn, gullet a rejont c'hoaz a zioc'h an aod-se eun taberlanc, eun de guenn-cann a ioa sclerijennet gant eur maread goulou a oa tro-var-dro. Moraerien o tont di euz a neuz Eussa a lavaras ar memes tra. Bez' e oant, emezho, tostic-tost da veza tizet gant eul lestr a zeue, tiz ennhan, var ho lerc'h evit ho laeres, ho laza, ha cass ho bag da voueled

da strad ar mor, pa velchont eur sclerijen vraz o sevel euz ar chapel, o tont var zu ennhao hag oc'h ho c'huzat da zaoulagad al laeron-ma.

Eur marc'hadour o tont e porz Conc a ro ar memes testeni. Ez oamp, emezhan, a vel d'ar porz; ar mor a oa scrijuz, an tarsiou, ar goagou a zave guech beteg an oabl, guech all ar mor a ginnige disken hor lestric beteg ar goueled. An avelou dirollet a fuste ken a ken, a bep tu, a roge al lien, a dorre ar guerniou, pa velis o tont euz ar chapel, e lec'h ma'z oa bet lakeat corf ar missionner santel, eur sclerijen henvel ouz hini an heol da vare cresteiz Dioc'h ar sclerijen-ze e halmomp labourat en dro d'ar c'herdin, en dro d'al lestr a rea dour a bep lec'h. Ar barrad guall amzer a gouezas, hag e halmomp douara er vro ma'z oa deut anezhi ar sclerijen hag ar zilvidigez deomp. N'em beuz ket bet an distera discred oa deut Dom Michel d'hor zavetei, hag ez ejomp var eün d'ar chapel da renta dezhan mil bennoz ha mil meuleudi.

Bez' ez euz hag a resevas scleroc'h c'hoaz sicour hon den santel. Eur plac'h yaouanc, a oa o chom tostic-tost da gear Sant-Vaze

a goueze e drouc-sant abaoe daou viz bennag. Eun Intron a reas he c'hass beteg ar chapel, ha ractal ma lakeas he daouarn da douch ouz hor beleg santel ec'h en em gavas pare en eun taol.

Hon Abostol a gemere epad ma oa beo ar brasa soursi oc'h eur plac'hic all, oajet a zaouzec vloaz pe var dro, a oa deut da veza mud ha seziat. Mont a rea aliez d'he guelet ha da zeski dezhi al lezen gristen. Eun devez ma e doa c'hoant braz da ober eur bedennic-bennag, Dom Michel a rentas dezhi ar prezeg. Eun nebeut misiou goude ma ioa deut da hallout comz adarre, e teuas da veza dall, en eur jom atao seziat he c'horf. Hon den santel ne zilezas ket ar c'hrouadur-ze goude he varo. Dont a reas dreist peb tra pa edo ar plac'hic-ma er brasa izomm. Eun nosvez ma oa houma tetet braz gant an drouc-spered a bunte anezhi da vlasfemi hano Doue, meulet ra vezo, ha da goueza en dizesper, e clevas scler mouez Dom Michel ec'hiz araog he varo, o roi dezhi kuzulliou mad da drec'hi ar spered fall-ze. Antronoz vintin e roas da anaout d'he c'hovessour ha d'he mamm kemend ha me doa clevet. Casset dioc'h-tu d'ar chapel, oue lakeat e harzic treid he

mestr madelezuz. Ar baour-keaz dallez a bocas dezho gant calz fisians, ker buan he daoulagad a zigoras da sclerijen an deiz. En devez var lerc'h e poueze var he divesker hag e commanse da vale, hag er c'hiz-se ec'h en em gavas pare en eun nebeud amzer.

Dom Michel a en em ziskuezas c'hoaz, eur sclerijen gaër en dro dezhan, da veur a hini all var ar poent da goueza er brasa dizursiou. Ar guel anezhan, he aliou mad, a reas dezho chom a za var hent an-fern, ha trei kein d'ar pec'hed, hervez m'o deuz anzavet ho-unan.

Goude ma oa bet corf servicher Doue var ar vaz-canv epad tri devez egiz m'en doa lavaret he-unan, ez oa casset da iliz Lochrist evit beza sebeliet el lec'h m'en doa merket. He interramant ne oa tamm ebed henvel oc'h interramant eun den ordinal. Casset e oa di evel tad ar boblou tro-var-dro, evel tad ar vro. Mont a reas da heul he gorf eur prosession tud. Eno ne oa ket hebken ar beorien, an dud maleuruz, ar vinored, an intanvezed, an dud en doa pareat ha sicouret. Beza e oa c'hoaz eur poad tud a renc, tud huel di-

redet di evit diskuez ho anaoudegez, ho c'harantez.

An Tad Maner he ziskib ar muia caret, an hini ma oa maro Dom Michel etre he zivrec'h, a reas he veuleudi ebarzergador. Ne oa ket diez dezhan touch ar re he zilaoue beteg beo ho c'halon. Rag eno e oa nousped hini hag a oa bet testou euz he vertusiu, euz he vurzudou. Ma zeuas an oll daskuilla daëlou puill oc'h he gle-vet, ne ouzer ket ha ma oa kemend abalamour ma'zoant glac'haret da veza collet hozad, ho madoberour, eget abalamour m'o doa plijadur o credi o doa en Env eur protectour gallouduz.

Araog ma oa he gorf goloet a zouar, eun intanvez a ouenn, a bell zo labouret ha draillet he c'horf gant eun dersienn varc'h, a ziskennas en toull bez, hag o pocat a vriad d'an arched, e c'houlennas gant feiz dre an den santel-ze ma e dije bet ar pare digant Doue. Silaouet e oa bet he feden, torri a reas ker buan ar c'hren varnhi, hag abaoue an devez-se ne zantas tamm dersienn ebed mui.

An hini a dlüe golo an toull bez a zouar a jomas eno heb dibri beteg an noz. Ne oa ket evit kuitaat corf an den santel ke-

mend a c'huez vad a gleve ganthan. Meur a hini euz ar re o deuz darempredet ar bez-ma, e lec'h ma'z euz bet great hag e lec'h ma reer c'hoaz calz burzudou, o deuz santet ive ar c'huez-se a rea kemend a blijadur hag a joa dezho. Bez' ez euz bet zoken, hag, heb gouzout an hent a gass di, a zo eat eün var ar c'huez vad a glevent seul velloc'h ha seul daneoc'h ha ma dosteant euz ar bez.

BURZUDOU DOM MICHEL EPAD HE VUEZ

Brema pa'z eo echu buez Dom Michel Nobletz, emañ o vont da lavaret unan-bennag euz ar burzudou en deuz great epad he vuez ha goude he varo. Keid ha ma scriven he vuez em beüz lezet a gostez ar miraclou a zeue d'en em ginnig din-dan va fluen. Crog em ervenn, oun eat ar guella ma hellen, heb sellet en tu-ma nag en tu-hont, var eün beteg ar penn.

Brema, o taoler va daoulagad var an dachen labour, e velan ar pezh a ra ar muia sked, ar muia lufr da vuez eun den santel, eo ar burzudou m'en deuz Doue great dreizhan. Dom Michel en deuz great burzudou ha burzudou braz.

N'em euz nemet labour choaz da ober. Silaouit mad, lenner, ama ne gomzign deoc'h nemed euz a viraclou en deuz great hon den santel dirag meur a hini a zo deut ho-unan da renta testeni a gement-se, o toui var ho le ez oa guir ar pezh a leverent.

Ne gomzign ket ama deoc'h euz an ar-c'hanchou a gave dindan he zorn evit ranna etre ar beorien, ha den ne ouie a be du e teuent. Ne gomzign ket kennebeud euz ar c'hrasou extraordinal m'en dije pa gare digant Doue, evel ober d'an avelou paouez da c'hueza, ha dont da veza sioul ha reiz.

Ar brasa burzudou a ouffer da ober eo reussita: ar re varo, me lavar ober da eun den maro dont adarre e buez. Mad, bez ez euz testou da lavaret en deuz Dom Michel Nobletz roet avechou ar vuez a nevez da dud varo, ha var gement-se ne heller ket caout an distera douetans.

Eur c'hreg euz kear Douarnenez a oa brazez. Be hellas gant sicour pedennou Dom Michel cass he c'harg da benn, hag e roas ar vuez da eur paotric bian. Ar c'hrouaduric-se a zeuas da vervel ha n'en doa ket c'hoaz eur bloaz leun. Neuze e oue sebeliet gant eur vaouez deut di evit-se dirag he vamm ha dirag gragez all. Ar c'horfic bian a oa lienet peder heur varn-ugent oa. Peb hini a iea hervez ar c'hiz da skuilla varnhan dour binniget a ioa en eur plat var boul he galon. Dija ar vamm a glaske unan-bennag da gass ar c'horf

bian d'an douar, pa zeuas hon den santel en he zi evit dousaat he foaniou. Lavaret a reas d'ar vamm-se, mantret gant ar glac'har, e oa arabad dezhi clasc den ebed evit cass d'ar vered korf he c'hrouadur. Ouspenn, lec'h e doa da lacaat he fisians e Providans Doue. An hini en doa bet truez ouz ar vamm hag ouz ar c'hrouadur, abarz ma zeuas hema var an douar, a vije deut c'hoaz da zicour an eil hag egile, ma gavche mad.

Neuze e oa gaelet Dom Michel oc'h en em strinca d'an douar, o pedi, var bennou he zaoulin, euz a greiz he galon, epad eur pennadic amzer, hag, o veza great sin ar groaz var ginou ar paotric maro, ec'h en em dennas er maez euz ar gampr. Kerkent, o tra souezuz, ar re a ioa en dro d'ar c'havel a velas ar c'hrouaduric o tenna he alan, o finval, ha setu hen pare ha ya'h ec'hiz biscoaz.

Beva a reas daouzeg vloaz goudeze, ha ne oa hanvet dre gearic Douarnenez nemed *Ian a zo bet maro*.

Mac'harit Labous, greg Yvon Moal, mamm d'ar c'hrouadur, ha gragez all a velas ar burzud-ma, o-deuz touet e oa guir ar pezh a lavarent. Ouspenn, Jann

Guillaser, an intañvez santel a zebelias ar c'hrouadur, goude beza covesseat he fe-c'hejou ha resevet an Autrou Doue evit ar vech diveza, neuze pa oa o vont da renta cont d'he barnier, a rentas, testeni euz ar burzud-ma. —

Eur plac'hic bian pevar miz, merc'h d'an Intron de Tremenec, a zeuas da ver-vel. Hon den santel, digouezet eno pa'z oa an dud o vont da gass ar c'horf d'ar vered, a reas sin ar groaz varnhan, ha ker buan ar grouadurez a zeuas beo-buezec. Deuet braz, e timezas d'an Autrou de Kerbas-kiou. —

Setu ama eur burzud all c'hoarvezet var dro 1622, hag a zo hirio c'hoaz hano anezhan e kear Douarnenez.

Eleonor Thepot e doa en he zi evit maga eur paotric bian, he hano Herve Poul-laouec. Contet e deuz andra-ma var lerc'h d'he merc'h Blanch Stipon, da Jann Guillaser ha da veur a hini all.

Eun devez, eme ar vagerez, e tistrois d'am zi goude beza bet e kear. Pebez calonad evidon-me, guelelet ar paour-keazic Herve Poullaouec maro mic, mouget ma oa gant ar c'haz briz a jome c'hoaz puchet var he vizach! O velet ar c'hrouadur yen

sclass, e kemeris anezhan etre va divrec'h evit he lacaat eur pennadic e kichen an tan ha guelelet ma ne oa mui ennhan eun elven buez. Caër em boa he droi hag he zistroi var va barlen, ar c'hrouaduric a jome atao sounnet he gorf. Neuze ne ouien mui e pe lec'h lacaat va fenn, na petra da ober. Conta a ris var eün da eur c'hreg devoù kemend ha ma oa c'hoarvezet ganen, hag houma a gredas stard e vije deut Dom Michel da druezi var va stad ha da gaout doan var va zicour. Hon den santel a zeuas ractal d'am zi, hag, o veza great sin ar groaz var gorf Herveic, ar c'hrouaduric a zeuas var an taol da denna he alan ha da zigori he zaoulagad. —

Guillou Nicolas a oa var dro seiz vloaz pa blijas gant Doue digass ar maro beteg ennhan. Maro e oa gant eur c'hlenved a skub kemend-all a vugale d'an oad-se. He vamm a zalc'he etre he divrec'h he gorf ien hag a vouele dourec. Eun truez a oa he guelelet er stad reuzeudic-se. Dom Michel a zantas he galon o teuzi en he greiz. En em daoler a reas var bennou he zaoulin, ha goude beza pedet e teuas da gemeret ar c'hrouadur etre he zivrec'h. Ober a reas sin ar groaz gant ar c'hreu-

nen benniget var ginou ar c'hrouadur, hag he roas d'he vamm, en eur lavaret dezhi : « Greg, setu ho crouadur, deuet eo beo, trugarecait an Autrou Doue a zoplijet ganthan roi dezhan ar vuez. » Ar bugel, deut da veza den, en euz lavaret d'an nep a gare he zilaou, en doa sonj mad e oa deut ennhan he-unan etre divrec'h hor beleg santel. Mac'harit Gouzac'h ha meur a hini all o deuz gullet kemend ha ma vercan euz ar burzud-se, hag o deuz rentet testeni euz an dra-ma.

— Eur vaouez all euz Douarnenez, cavet mouget gant he boed, a zeuas beo adarre dre-bedennou hon den santel. Noel Cor ha Mari Cor, he vugale ha calz re-all a ro testeni a gement-ma. —

Dom Michel en deuz pareat, var bouez pedi he Zoue, meur a hini all dare da vervel pe goal-lakeat gant ar c'hlenvejou.

Bez' e helfen lavaret ama e oa bet pareat an Tad Maner dre nerz pedennou hor beleg santel, neuze pa'z oa clanv braz er gear a Vourjez.

Catel Danielou, intanvez devod a Zouarnenez, a lavaras e oa bet pareat ganthan en eun doare miraculuz er bloaz 1649. Ar c'hreg-ma a ioa neuze o chom e Kemper,

var dro eun ugent leo euz Conc-Leon, e lec'h ma'z oa Dom Michel dija coz, ha torret he gorf hag he zivesker gant al labouriou. Ar medisin a grede ne halche mui ar c'hreg-ma dont da veza pare, setu perag ec'h alias anezhi da ober d'he c'hovessour dont d'he c'haout ha da reseoe he sacramanchou diveza. Neuze e velas o tont d'he champr hor beleg santel guisket ganthan he jupiliz. Penaoz, emezhi dezhan, oc'h-hu deuet ama euz a Gonc, rag dioc'h ma velan, n'oc'h ket evit dont na var droad na var varc'h na dre vor. Doue, eme Dom Michel, en euz pourveet d'am beach, hen eo ar mestr da gement tra zo. Ouspenn, emezhan, ne varvoc'h ket gant ar c'hlenved-ma. Dont a raio c'hoaz an Tad Bernard hag an Tad Maner d'ho kulet da fin ho mission. Covess a reas gouscoude ar vaouez-ma, ha ker buan e teuas da veza pare evel biscoaz.

An Intron de Kerourien a ioa eur goal c'harad stag outhi. A bell zo ne halle mui na finval na flach an distera. Bez e oa labouret gant ar boan hanvet er vro poan Sant-Cadou. Dom Michel Nobletz a zeuas d'he bizita, hag o velet an Intronze glac'haret abalamour ma ne helle mui

entent ouz he afferiou, e teuas da gaout truez outhi. — Ma zeuffe, emezhan dezhi, ma zeuffe Doue da roi deoc'h ar pare, daoust ha c'hui a en em roffe a bez dezhan ha d'he zervich, me her c'houlén diganeoc'h? — Ia, emezhi, a greiz va c'halon. Neuze hor beleg santel, o veza great eur bedennic bennag, a douchas ouz he gar ar c'hreunennic binniget en eur ober sin ar groaz varnhi hag e assures dezhi e vije deut Doue heb dale d'he zicour. A zindan eis dez e oa pare neat va mamm, eme an Intron de Kerourien, petra bennag m'e doa araog clasket an oll remejou evit caout ar pare. — Evidon-me em boa bet eur pare c'hoaz burzudusoc'h. D'an oad a nao pe a zeg vloaz, e crenen bemdez an darsien. Epad pemp pe c'huec'h miz an darsien ne laoscas ehan ebed ganen. Neuze eo e teuis da zicada dre va fri ha dre va ginou ken na hellent mui herzel var va zreid. Ar vedisined, o velet ac'hanon o tizec'ha bemdez, n'o doa mui esperans ebed ennon. Eat e oan cazi da netra, ne oa mui nemed ar spez ac'hanon. Keariz oll coulz lavaret a zirede d'am guelelet. Biscoaz lagad ne velas eul liou ken divalo var eur gristenen. Gant truez

ouzin, unan a lakea eur bizou dign var va biz, unan all a daole eur chapeled dreist va gouzoug, pe c'hoaz a zigasse ganthan relegou evit va farea. Pa deuas Dom Michel e tosteas ouz va guele, ha goude beza sellet mad ouzin, e lennas an Aviel. A boan en doa echuet da lenn ma jomas va goad a za. Dont a reas neuze dign eur c'housec doun a badas div heur dioc'h-tu. An den santel, o velet an oll souezet, a en em dennas kuit ar c'henta ma hellas gant aoun na vije bet meulet. Evidon-me, a vec'h diunet, a c'houlennas eun dra bennag da zibri, petra-bennag ma n'em oa debret eur c'heuz abaoue meur a zevez. An oll o doa plijadur ouz va zervicha, hag euz va c'hostez en em dennas brao a affer. Mad e cavis va boed, hag ar yec'hed a zeuas d'ar c'haloup em goazied, e feson ma oa bet mil boan ouz va dalc'her em guele ar rest euz an deiz.

— Brec'h Clemens Restou, intanvez euz a Gonc-Leon, a oa ker c'hoenvet, ma'z oa ker teo hag he c'horf. Ar medisin, o velet ar vrec'h spontuz-se du dija gant ar c'hanguen (gant ar c'hriñ beo), a falle dezhan he zrouc'ha evit savetei ar rest. Mes hon den santel a gavas ar remed eun tammic

criz. Petra e reas ? distrempa eun tammic poultren gant he granch ha lacaat ar prise var brec'h ar glanvourez. Ker buan e teuas da vellaat, da gousket ha da veza pare. —

Franseza Goulair, Intron de Kerescar, a dreuzas ar mor e 1633 evit mont euz a Graon da Zouarnenez da c'houlén eur c'huzul mad-bennag digant hon den santel. O veza treuzet he zroad e teuas da dorri he gar. Ar vedisined a oa bet var he zro ne oant ket deut a benn d'he fansa mad aualc'h, hag ar baour-keaz maouez ne halle ket poueza var he gar. Dom Michel, gant truez oc'h outhi, a zeuas espres caër euz Conc-Lochrist da Graon evit he farea. Ar pez ne goustas ket eur c'halz dezhan. Rag n'en doa bet nemed ober sin ar groas var ar gar glanv, hag hi ractal ampar evel biscoas. Gouscoude guelit ama, lenner, doareou santel ar zent. Roi a reas dezhi he vaz evit ober an neuz d'he harpa. Ouspenn, he alia a reas da bourmen el liorz, er jardin, gant aoun na vije deuet ar miracl-se da veza re vrudet. —

Ar plac'hic bian Mari de Meabe, goloet he c'horf gant al lorgnez, a ioa bet pareat gant Dom Michel. —

Ne ouffen ket lavaret oll hanoiou an dud dall, bouzar ha mud a bareas Doue dre nerz pedennou hor missionner. N'oun ket gouscoude evit miret da gonta penaoz e teuz eur c'hreg a nebeud a feiz da droi crenn ouz Doue.

Ar vaouez-ma, he hano Lisen Liminic, a oa tri-ugent vloaz ha ne grede ket er Zalver Jezuz e sacramant an Aoter, meulet ra vezo. Ar c'hreg-ma a zeuas eun devez da c'houlén eun ali mad-bennag digant Dom Michel divar bouez traou an douar, hag a lavaraz dezhan ne oa ket evit credi kemend a lavar ar feiz var gement-se. Hor belegsantel a ouie ar seurt clenvejouse ne vezont ket pareat gant rezonioù. Setu perag, heb beza e poan da ziskuez ar virionez-ma dre ar Scritur-zacr, dre an Tadou, e pedas anezhi da zont antronoz da zilaou an offeren. A boan en doa echuet ar zacrifissantel ma'z eas ar vaouez-mad'en em strinca e harz he dreid en eur lavaret e crede stard e oa hor Zalver Jezuz e sacramant an Aoter. Rag, emezhi, gueleet am euz etre ho taouarn hor Zalver Jezuz dindan furmeur c'hrouaduric bian, laouen ha caër evel an deiz, hag e stoue gant carantez he benn var zu ennoç'h. Calz

tud, bet test euz conversion ar vaouez-ma, o deuz lavaret beza he c'hlevet aliez o conta ar c'hras e doa bet dre intersession Dom Michel.

Da c'houel santez Catel e 1645, hor missionner coz a ieas, eur blavez-bennag araog he varo, da eur chapel savet en enor da zantez Barba. Eno e velas gant poan an aoter ma'z oar o vont da lavaret an offeren varnhi, ne oa na proprna kempenn aoualc'h. En em lacaat a reas dioc'h-tu e doare da gempenn an aoter goloet a bouldren. Neuze e c'houzias evit dastum grisien eur fourdilizen goz couezet eno ha dizec'het abaoue pell a oa. A vec'h e oa en he zorn ma zeuas ar fourdilizen-ze da vronsa a nevez. En dro d'ar fourdilizen sec'h ha maro, e save, e tioane brons fresc, guenn cann hag hanter zigor. Eun dudi, eur blijadur a oa gullet eur fleuren ker coant.

Eun Intron, o veza eno test euz a eur seurt burzud, a ieas d'he gaout hag a c'houlennas diganthan ha beza e ouie pe seurt fleuren gaër a oa etre he zaouarn. Souezet e oue he-unan, hag, en eur stoua gant respet etrezeg imach ar zantez-ma a enore, e lavaras : « N'e ket d'in-me eo

an dra-ma, mes d'ar zantez vraz ma fell da Zoue a enorfen el lec'h-ma. » Lacaat a reas ar fleuren-ze var an aoter hag e pedas adarre evel pa ne vije bet netra. Gouscoude ar gragez santel a ioa eno hag o doa gullet kemend ha ma oa c'hoarvezet, a lavaras d'ar re all, hag oll ne oant ket evit sellet aoualc'h ouz brons, ouz bourouz ker coant en dro da eun drojen ker coz ha ken dizec'het. Oll e caschont gantho eur bronzic-bennag hag oll e tistrojont d'ar gear estlamet, en eur roi mil meuleudi da Zoue a blije gantho diskuez ken scler he garantez evit he zervicher fidel.

Doze en deuz c'hoaz falvezet dezhan diskuez santelez he zervicher da veur a zen all. Aliez eo bet gullet savet huel en ear, he zaoulagad troet etrezeg an Env, hag en dro dezhan eur sclerijen gaër. Avechou e comze gant eun den yaouanc. An den yaouanc-ma a ioa skeduz evel an heol hag en doa ar goupari an humpla, ar modesta.

An dud a vele hon den santel, o prezeg gant an den yaouanc-ma guisket gantho eur chapiliz, o deuz he gemeret evit he eal mad pe evit eal mad ar vro ma labourer ennh.

BURZUDOU GREAT GANT DOM MICHEL

GOUDE HE VARO

Calz tud, evitho da veza o chom pell diouz ar vro m'en deuz prezeget ennhi Dom Michel tost epad daou vloaz hag hanter-cant, a zo bet scanveat euz ar poaniou ar c'hueroa ha pareet euz ar c'hlenvejou a lakea ho buez var var. Evit-se ne reant ken tra nemet pedi ar beleg santel-ze, dougen he imach, he batrom, pe eun tamm-bennag euz he zoutanen, pe c'hoaz en em voalc'hi gant dour euz ar feunteun ma oa boazet Dom Michel da vont da eva e kear Douarnenez.

Gouscoude anzaou a rin, e kemere Doue plijadur o tiskuez he garantez evit he zervicher fidel e Tremenac'h, e lec'h ma tremenas eur bloaz a gostez pell dioc'h an dud, hag e Conc-Leon e lec'h ma oue bet interret.

Guelit penaoz Doue a ren peb tra var an douar, penaoz e teu an' dud izel, an

dud humpl da veza a vel d'an oll. Dom Michel en doa clasket en em guzat e Tremenac'h, Dom Michel en doa falvezet dezhan beza interret e touez ar beorien e Conc-Leon, ha Doue a zeu da ziskuez an daou lec'h-se d'ar boblou. Eno eo e raio burzudou, di eo e raio Doue diredec an dud a beb corn euz Breiz evit enori an hini en doa clasket, pa veve var an douar, en em ancounac'haat ha beza tremenet evit netra.

Gouscoude al lec'h ar brudeta a oa ar chapel ma'z oa bet savet e plas he di e kear Douarnenez. Di eo e tirede a vareadou, a vagadou, tud a bep seurt broiou, a bep seurt oajou, a bep seurt guiscamanchou. Eno eo e kemero Doue dreist peb tra he vrasa plijadur o roi mercou euz santelez Dom Michel.

Piou eo a lavaro an oll miraclou a zo bet great er chapel-ze dirag an oll? Va foan ama a vezo ober eun dibab euz a vesc kemend all a vurzudou great e fas an heol dirag meur a vil den.

Autrou'n Escop Kerne a gleve a bep tu comz euz ar miraclou a rea Dom Michel goude he varo. Ar miraclou-ze a oa bet discleriet gant testou deut da doui e oa

guir ar pezh a leverent. An Autrou'n Escop a gredas stard e vije bet sicouret ganthan en he izommou.

Beteg en he gosni e care mont da vale dre he Escopti, mes siouaz ! da heul an oad e oa deut an diezamanchou. Ne halle mui mont ha dont dioc'h he c'hoant, ha kement-se a rea dezhan ar brasa poan. Abaoue eiz miz dija ne halle mui plega he zaoulin na poueza var droad ebed. Setu perag, o veza c'hoanteat mont da velet ar gampr ma oa bet hor missionner o chom enni an hirra euz he amzer, e oa bet rancout dezhan ober he gass di. Digouezout a reas er gampric d'an dre-gont a viz guengolo 1663. Pedi a reas gant ar brasa fizians Dom Michel da roi dezhan ar c'herzet, ha Doue a blijas dezhan kemend he beden ma hellas ractal an Autrou'n Escop poueza var he dreid ha bale heb poan ebed. Antronoz e clevas an offeren var he zaoulin.

Abaoue ar mare-ze, Autrou'n Escop Kerne a vizite an Escopti, a roe an ursiou, hag a rea an oll deveriou euz he garg. He anaoudegez e kenver Dom Michel a oa ker braz, ma reas sevel el lec'h-se memes eur chapellic vrao en enor da zant

Mikeal Arc'hel. Douarneneziz hag an dud a zivar dro a bep oad, a bep stad, a oa ho flijadur dont da ginnig ho arc'hant, ho divrec'h, evit sevel eun ti en enor da batron an hini a garent kemend all. Ar brud euz ar chapel-se a nevez savet a redas buan e pevar c'horn Breiz-Izel hag ar fizians en hon den santel a grescas a-zeiz da-zeiz e touez hor c'henvroiz. —

D'an nao var-n-urgent a viz du euz ar memes bloaz, eur plac'hic bian, he hano Helena Melou, merc'h da Vlanck Stipon euz Douarnenez, a zeuas adarre e buez. Ar vamm e doa great veu da gass he c'hrouadur da japel nevez Sant-Mikeal, ma vije deut beo adarre. —

Perrina Fouket, greg da Villou Bourles, a oa e chom e bourc'hadennic sant Rivoal, neuze e parrez Braspart. D'an eiz var-n-urgent a viz kenver 1665, he merc'h, oajet a c'huec'h vloaz, goude beza bet goal gasset gant an darsien, epad pemzeg dez dioc'h-tu, a varvas dirag meur a hini a oa eno. Chom a reas epad c'huec'h heur heb tenna he alan, heb finval an distera; reud ha sounet e oa he izili evel ma c'hoarvez gant ar c'horfou maro. Abaoue eur pennad amzer e oa bet clozet he bizach

d'ar plac'hic. E oar o vont d'he zebelia pa zeuas ar vamm glac'haret d'en em strinca d'an daoulin ha d'en em erbedi ouz hor beleg santel. « Michel Nobletz, servicher Doue, emezhi, n'em euz mui crouadur ebed, rentit dign va merc'h pa'z e guir e hellit. » Netra var an douar ne ouffe roi eur skeuden euz joa ar vamm hag euz estlamm an dud a ioa eno, pa velchont ar grouadurez vian o sevel a daol, oc'h en em stlapa a vriad etre divrec'h he mamm en eur lavaret : « Ia, chom a rin ganeoc'h va mamm gez, pare oun. » Hag e guirionez ar plac'hic a oue pare var an heur.

Eur plac'hic bian all a oue bet prezervet he buez pe gentoc'h a zeuas beo adarre, en eun doare burzuduz. Ar verc'hic-se a oa e harzic eun ti a goueze en he boul, pa ec'h en em gavas a zindan mein an talud a oa ouspenn evit c'huec'h carrad anezho. Oc'hpenn evit eun heur a oa abaoe ma oa c'hoarvezet ar maleur-ze, ha den ne gleve gric ebed. Tad ar c'hrouadur ne grede ket gueleit he verc'hic nemet lazet, flastret hag en eun doare ma n'en dije ket he-unan he anavezet. Gouscoude o veza deut sonj dezhan euz ar vadelez en doa

diskuezet Dom Michel en he genver, pa veve var an douar, e pedas an den santel-ma gant ar vrasa fisians. Ker buan e clevas cri eur c'hrouadur bian. Goude beza poaniet gant he amezeien da lamet ar vein, e cavas he verc'hic goloet a zouar hag a c'hrouan. Mag e oa souezet an dud o clasc gouzout penaoz e doa hallet tenna he alan ha crial, e ouent c'hoaz souezetoc'h pa he guelchont, eur vech ma oue bet guelc'het dezhi he bizach, heb glaz ebed ha yac'h evel araog.

Dom Michel en Env a zo ken tener he galon e kenver ar vugaligou ha ma'z oa pa veve var an douar.

D'ar c'huec'h var-n-urgent a viz gouere 1664, Nicolazic Mintern, oajet a c'huec'h miz var-n-urgent, a gouezas e lenn eur velin a zo e parrez Guisseney. An tiz dour a gassas buan ar c'hrouaduric beteg ar velin, hag ar ranvell o veza digor, e oue stlapet var ar rod vraz en eun toul doun e lec'hma oa c'huec'h troatad dour da viana. Goude beza clasket he gorf epad eun heur hanter, he dad a gavas Nicolazic e kichen ar rod vraz, a c'houen he groc'hen, astennet he zivrec'h ganthan, hanter lazet gant ar rod ha beuzet gant an dour. An den

reuzeudic-ma a reas veu da roi eun dra-bennag evit caëraat ar chapel a ioa savet el lec'h ma oa bet hor beleg santel oc'h ober he ermitach. Ar vamm a zirede ive glac'haret oll. Houma a reas veu da vont di gant he c'hrouadur ha da ober lavaret eun offeren.

Dom Michel ho zilaouas, hag ar c'hrouadur a zeuas da finval he valvennou hag he vuzellou. Goude beza taolet an dour en doa lonket, ec'h en em gavas yac'h pesc.

D'an daouzeg a viz eost 1664, eur plac'hic, hanvet Catrin Guivarc'h, a gouezas, e parrez Scaër, en eur puns doun hag a oue beuzet. He zad, Fanch Guivarc'h, hag he mamm, Mac'harit Boon, a vouestlas he c'hass da japel Sant-Mikeal, e Douarne-
nez, ha ker buan ar plac'hic bian a zeuas leun a vuez.

Anna Moin ha Clauda Ferec, bugale euz Commana, a oa bet beuzet hag a zeuas beo-buezec ractal ma oa bet gouestlet mont gant ho da japel Sant-Mikeal.

Eur c'hreg euz parrez Cleden-Cap-Sizun, he hano Adelisen Normand, a gred beza bet, dre intersession Dom Michel, eur c'hras vrasoc'h evit ar re a zo hanvet

araog. Da viz c'huevrer 1664, e teuas da vilioudi, hag he c'hrouadur a ioa maro araog dont er bed. Neuze he vamm a bedas hon den santel ma vije plijet gant Doue roi d'he c'hrouaduric ar vuez evit hallout caout ar vadisiant. Dont a reas dioc'h-tu beo dirag ar re a oa eno, hag e oue badezet dirazho. Chom a reas e buez amzer aoualc'h evit diskuez galloud Dom Michel e kichen Doue.

Eur verc'hic vian all da Anna Gouzabaz, Intron an Enez, a zeuas adarre e buez evit hallout beza badezet.

Calz tud taget gant clenvejou ha n'o doa remed ebed var an douar a zo bet pareet oc'h en em erbedi ouz ar beleg santel-ma.

Doue a fall dezhan e ve enoret var an douar ar Zent, pa gommans he-unan d'ho glorifia dre ar miraclou, dre ar burzudou. Eun intanvez vraz e doa bet discred, heb an distera rezon, var zantelez ha burzudou hor missionner, Doue a zarc'hoas anezhi hag he astennas var he guele beteg ma c'houlennas he-unan sicour hon den santel.

Ar relijiuzez Corantina Mamm Doue euz a Gemper, ne halle ket a boan tenna

he alan. Pedi a reas Dom Michel, ha ker buan e teuas da gaout ar pare.

Andre-Jozeph de Lesormel, euz Escopti Treger, a oa pareet en eun taol, da Vener ar Groaz 1669, kerkent ha ma zeuas he vamm da vouestla mont ganthan da japel Sant-Mikeal, e Douarnenez.

Mari Jouan, Intron de Kergourant, euz a Gemper, a oue ive pareet, dre intersession hor beleg santel, dioc'h ar darsien a lame he nerz diganthi hag he c'hasse beteg ar mouch.

An autrou de Carne, deut da veza car nez da famill Dom Michel, a ioa bet pareet dioc'h eun darsien domm a laboure anezhan abaoe daou viz a oa, ractal ma zeuas an Intron de Carne, he c'hreg ha nizez Dom Michel, da vouestla evithan e vije eat he fried da bedi var bez he eontr santel. Tri euz he vugale o deuz cavet ive ar pare dre intersession hon den Doue, ha gouscoude ne oa remed ebed evitho var an douar.

Gant aoun da skuiza al lenner o lavaret atao ar memes tra, em'oun ama o vont da lacaat hebken hanoiou an dud a zo deut da veza pare dre intersession Dom Michel Nobletz, missionner Breiz-Izel.

An dud-ma a zo bet lamet divarnho ar c'hlenvejou a oa stag outho, en eur vouestla mont da japel Sant-Mikeal, e Douarnenez, e lec'h ma dremenas hor missionner ar braz euz he amzer, pe da Gonc-Leon e lec'h ma'z eo interret, pe c'hoaz o tougen eun tammic euz he zillad, oc'h en em zervicha euz greun chapeled o doa touchet ouz he gorf, pe oc'h ober an naved en he enor, evel m'eo kustum er vro.

An Tad enorus Marsel, superior ar Garmeliz diarc'henn, e Brest, e 1663.

An Tad Daniel, euz ar memes Urz, hag eur breur dezhan, euz a famill de Lestobec.

Michel Jubin, mab da Louiz Jubin, autrou de Kerivili.

Regnaud Gourien, avocad e Kemper.

Ar relijiuzez Jann a Galon Jezuz.

*Setu ama hanoiou lod euz ar re o deuz
bet ar guelede.*

Guillamed Gurric, merc'h d'an autrou du Rumen, o chom e maner Kergoras, e Kerne, d'an eil a viz kenver 1664.

Eur vaouez oajet a zaou vloaz var-n-ugent, ganet dall.

Yvon Fagun, d'ar zeiteg a viz gouere
1664, e Plouneour-Trez.

Franseza Bourdon, euz parrez Dirinon.

An dud bouzar o deuz bet ar c'hlevet.

Franseza Pouliquen, euz Pleyber-Sant-
Thegonnec.

Yvon, mab da Vorvan ar Gral.

Yvon Patinec, euz parrez Goulven, e
Leon.

Louiza Turmel, euz Locmeur, e Kerne.
Mazo Cariou.

An dud seizet deut da gaout ar pare.

Renan Trevien, euz a Viniventer.

Yvon Grall, euz Lesneven.

Catrin Castell, intañvez; Ian Dourmab,
euz Kerlouan.

Yvon Gueffun, euz parrez Tremenac'h,
Plougerne.

Anna Madec, euz Plouider, 1669.

Yvon Bihan, euz Guisseney.

An intron de Kersulvan, euz Landerne,
1664.

Andre Lor, euz Nizon.

An Tad Fuljans, euz urz Sant-Augus-
tin, e Kerahez.

An Tad Alan de Launai, euz Compa-
gnunez Jezuz, 1664.

*An dud glazet pe dorret eun ezel-bennag
desho, deut da veza pare dre inter-
session Dom Michel.*

Ar c'hrouadur Ian Jak, euz Douarne-
nez, 1666.

Adelisen Jobic, euz parrez Elliant.

Fanch Pichon, euz Guicar.

An intron de Bellair, hag an demezell
de Kerangar.

An demezell Guillamed Garrec, euz
Lesneven.

Jann Masson, euz Conc.

Yvon Cam, euz Guiniventer, 1664.

Mari Treüt, euz a Roscanvel, ha Mari
Soutre, euz Kerlouan, eat ho spered di-
gantho, a zeuas ho diou da veza mad,
ractal ma oa gouestlet cass anezho da
japel Sant Mikeal, e Douarnenez.

Eur vaouez all, euz Plouvien, eat an
diaoul en he c'horf, a oa spontuz he
guelelet hag he c'hlevet. He zud a reas ar
memes veu evithi, ha ker buan e teuas
da veza mad.

Dom Michel en doa evit ar voraerien,

eur garantez ha ne ve ket gullet aliez he far var an douar. Bevet en deuz en ho zouez ha falvezet eo dezhan mervel en ho zouez. Trement en deuz he vuez o kentellia anezho divar benn izommou ho ene ha divar benn izommou ho c'horf. Hen eo a roe aliou mad d'ho gragez, hen eo a zeue da gonsoli ar re a ioa er boan, en anken.

Piou a lavaro pegemend a vartoloded a zo bet dleourien euz ho buez da beden-nou Dom Michel ha da beden-nou ho mammou hag ho gragez santel?

Dom Michel en deuz hirio en Env eur garantez ken tener evit ar vartoloded ha ma en doa guechal var an douar. Ouspenn, he c'halloud a zo brasoc'h, tostoc'h ma'z eo d'an Tad oll c'halloudec. Bez' e hello eta sicour ar voraerien reuzeudic a zo ken aliez e tal da goll ho buez. Bez' e hello eta rei calon d'ar gragez-se ken ne c'het pa vez fall an amzer, criz ar mor, ha dousaat ho foaniou ma zigouez gantho coll unan-bennag euz ho re.

PEDENNOU EPAD AN OFFEREN

Araog an Offeren

O va Zalver, o va Doue, setu me ama eharz oc'h aoter. Diredet oun evit caout perz en ho sacrifis santel, grit ma em bezo, o va Doue, dre an offeren-ma, an oll c'hrasou am euz izomm anezho.

Sclerijennit va spered, netait va c'halon, hag ancounac'hait va oll fec'hejou. Keuz am euz a gemend a ouffen beza great en oc'h enep. O pedi a ran d'am fardoni evel ma bardonan euz a greiz va c'halon d'an nep piou-bennag en deffe great poan dign.

**Pa ra ar beleg sin ar groaz e traon an
Aoter**

En hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.

Dont a ran da zilaou an offeren-ma evit renta deoc'h, Dreinded santel, an enor a zo dleet.

Dont a ran, o va Doue, evit anaout eo c'hui va mestr ha va Zalver, evit trugarecaat ac'hanoc'h euz ho madelezoù em c'henver, goulenn pardon euz va fec'hejou ha goulenn an oll c'hrasoù ma em euz izomm anezho. Plijit ganeoc'h, o va Doue, c'hueza em c'halon ar memes santimanchoù ma em bije bet var ar Menez-Calver, neuze pa varvec'h evidomp var ar groaz.

Confiteor

Ama daoulinet beteg an douar e anzañ vin ouzoc'h, o va Doue, hag ouz ar re a zo ganeoc'h er Baradoz, va oll fec'hejou. Ia, siouaz dign ! pec'het am euz ha pec'het braz dre zontjou, dre gomzoù, dre oberoù.

Santez Mari mamm Doue, oll zent hag oll elez euz an Enn, pedit evidon.

Kyrie eleison

O va Doue, hag e ve eun den epad he vuez o lavaret hag o aslavaret : *Kyrie eleison*, o pezit truez ouzin, o va Doue, o pezit truez ouzin, ne ve ket c'hoaz aoualc'h evit bezañ din da dostaat ouzoc'h. Bezit eta truez ouzin, pec'her braz ma'z oun.

Gloria in excelsis

« Gloar da Zoue e huedler an envou, ha peoc'h var an douar d'an dud a volentez vad. »

N'e heller ho meuli mad aoualc'h nemed er Baradoz, o va Doue ! Da c'hedal ma plijo ganeoc'h roi deomp ar c'hras da vont di, grit ma vezimp a-unan gant an iliz evit cana ama var an douar cantic an elez evit ma hellimp eun deiz da zont cana en eur vouez gantho e gloar an envou : *Gloria in excelsis Deo et in terra pax hominibus bonæ voluntatis.*

Oremus

Roit deomp, o va Doue, an oll c'hrasoù ma c'houlenn brema ho ministr evithan hag evidomp. N'e ket ac'hanomp hon-unan eo e teuomp d'ho goulenn, mes dre veritou Jezuz-Christ hon Autrou.

An Abostol

Va Doue, c'hui eo o peuz discleriet d'an Ebistel, ha d'ar brofeted santel ar peza lavaront. Ho trugarecaat a reomp

euz ar c'helou mad a zo plijet ganeoc'h digass deomp. Nag a dud a zo ha n'o deuz morse clewet hano ouzoc'h, o va Zalver ! Sclerijennit horsperejou, tommit hor c'halonou evit ma hellimp ho caret epad an eternite.

An Aviel

Comzit, Autrou, me ho servicher a zo ouz ho silaou. Ia, setu me' ama em za. Prest oun da vale da vont ganeoc'h, da zenti ouzoc'h, n'euz forz petra bennag a ouffet lavaret an dud ac'hanon.

Credo

Me a gred, ó va Doue, kement ma zo plijet ganeoc'h discleria d'an Iliz. Me a gred e Doue, an Tad oll c'halloudeg, me a gred e Jezuz-Christ he Vap unic, eur memes Doue ganthan, me a gred er Spered-Santel a zo ive Doue coulz hag an Tad hag ar Mab. Me a gred en Iliz santel catholic, apostolic ha romen.

An Offertouar

Eüruz oun pa hellan c'hoaz eur vech em buez kinnig deoc'h an hosti-ma a vo

heb dale corf ha goad hor Zalver. Evidon-me da veza eur pec'her braz, e kinnigan deoc'h a-unan gant ar beleg ar zacrisfis santel-ma evit ho trugarecaat euz an oll c'hrasou am euz bet diganeoc'h, evit caout grasou nevez dign va-unan, d'am zud, da gemend o deuz great vad dign ha d'an oll gristenien euz an douar.

Prefas

Savomp hor c'halon etrezeg an envou ha kuitaomp an draonien-ma a zaélou. Rag heb dale an Env a zeuio da c'houzia hag a skuillo var an aoter gliz ha c'huez vad ar Baradoz. Ha c'hui elez, arc'helez, oll sperejou eüruz, prestit deomp ho calonou evit ma hellimp adori hon Doue, prestit deomp ho telennou evit ma hellimp cana ganeoc'h en eun doare deread.

Sanctus

Santel, santel, santel, teir guech santel eo an Autrou Doue. Ar bed oll a zo leun euz he c'hloar. Bennoz ha meuleudi en Env d'an hini a zeu var an douar.

Araog gorre Doue pearaog an Elevasion

Setu ni ama oc'h ho pedi, o Tad oll c'halloudec, mar plijo ganeoc'h dre viri-tou Jezuz-Christ skuilla ho crasou gant largentez var hon Tad santel ar Pap, var an Autrou'n Escop, var gemend o deuz carg en Iliz catholic.

Ho pedi a reomp dreist peb tra da skuilla ho crasou var ar re ma'z eo red deomp pedi evitho, ha goude var hon tud, hor madoberourien, var oll vugale an Iliz. Kinnig a reomp deoc'h, o va Doue, hor pedennou gant pedennou ar Verc'hez Vari, ar verzerien, an oll zent hag an oll zente-zed euz ar Baradoz.

Ah! ma em bije bet eur galon ken tomm ha calonou ar batriarched, ar brofeted, gant pegemend a vall n'am bije ket guelelet hor Zalver adorabl o tisken var an aoter!

Ar Gorreou pe an Elevasion

Salver adorabl, guir Doue ha guir den, setu c'hui ama diskennet var an aoter evel guechal var ho croaz benniget. Stouet

d'an daoulin, oc'h anavezan evit va mestr, oc'h adoran gant an elez a zo en dro deoc'h, evidon n'ho guelan ket gant daoulagad ar c'horf.

Goad presiuz va Zalver a redas guechall var ar Golgotha hag a zo e guirionez ama var an aoter, deuit ni ho ped, d'am guelc'hi, d'am farea ha da lacaat va ene flamm ha caer evit mont d'an Env.

Goude ar Gorreou

Kentoc'h mervel, o va Doue, eget an-counac'haat ar pez a ziskuezit dign dre ar zacrifs-ma, ho corf dispennet, ho coad skuillet evidon....

Bezit sonj euz an eneoù a zo dalc'het e creiz tan flamm ar purgator. Bezit sonj euz ar re ma'z oun dleour dezho euz eur vad bennag. Gras ha trugare d'an ene a zo bet e A!... hag E?... Ma'z aimp oll d'ar vro ema ennhi ar sclerijen, ar frescadurez, an oll joaiou, an oll euruzded.

Pater Noster

O! na me a zo euruz pa hellan, o va Doue, ober Tad ac'hanoc'h! Pebez joa o sonjal ez ign eun devez da jom d'an Env!

Meulet ra vezo eta oc'h hano e peb lec'h!
Renit bepred var galonou an dud ma
zentint ato euz a greiz ho c'halon d'ho
polontez. Roit deomp-ni, ho pugale, ha
boed ar c'horf ha boed an ene. Pardonit
deompegiz ma pardonomp d'ar re o deuz
great eur boan bennag deomp. Na le-
zit ket ac'hanomp da veza trec'het gant
an tentasionou, pellait anezho diouzomp,
ha diouallit ac'hanomp euz peb drouc.

Agnus Dei

Oan Doue a effas pec'hejou an dud, bezit
truez ouzomp, pardonit ac'hanomp, roit
deomp ar peoc'h hag ar vir joa en ho
carantez.

Ar Gommunion

N'oun ket din, sionaz, da dostaat ou-
zoc'h. Va fec'hejou eo a zo o caëat ouzin.
Oh ! pardonit anezho dign evit m'am bezo
perz er grasou caër a zeu d'ar re a ia da
gommunia. Netaït va ene ha lakit va
c'halon e tro da gommunia ar c'henta ma
hellin.

An Oremus diveza

Beza oc'h bet adarre, o va Jezuz, var
an aoter evel guechall var ar groaz evit
savetei va ene. Mad, me ro ive deoc'h
hirio va buez evel m'o peuz roet oc'h hini
dign. Brema e c'houlennan diganeoc'h,
Tad eternal, ar grasou m'am euz izomm
en draonien-ma a zaëlou d'he veritou
hor Zalver Jezuz-Christ.

Pa ro ar beleg he venediccion

Bennigit ac'hanomp, o va Doue, abarz
ma'z aimp euz ho ti, ha grit ma chomo
ho cras hag ho carantez ganeomp da
viken.

An Aviel diveza

Verb eternal a oa o chom e kerc'hen an
Tad oll c'halloudec pa oue great an Env
hag an douar. Plijet eo ganeoc'h dont en
hon touez ha kemeret eur c'horf hag eun
ene evel hor re-ni, et VERBUM CARO FACTUM
EST. Ni oc'h ador hag oc'h anavez evit hor
Zalver hag hor C'hrouer. Sclerijen ar bed
deuit da ziskuez deomp hent ar Bara-
doz. Grit na vezo gour ac'hanomp, dall

aoualc'h evit dianaout ac'hanoc'h. Fisians
or beuz on dezo diganeoc'h, o va Zalver, an
oll c'hrasou on euz izomm evit mont ga-
neoc'h da velet ho cload epad an eternite.

Goude an offeren

Mill bennoz deoc'h, o va Doue, da veza
roet dign ar c'hras da glevet an offeren-
ma. Diskuezet o peuz dign adarre pege-
mend o peuz caret ac'hanon, pa'z e guir
oc'h maro evidon var Menez Calvar.
C'hoant am beffe d'ho trugarecaat evel
m'eo dleet ha da roi deoc'h carantez evit
carantez. Elez, arc'helez, oll zent hag oll
sperejou eñruz, prestit dign ho calo-
nou evit meuli, adori ha trugarecaat va
Doue e Sacramant an Aoter, meulet ra
vezo.

Pardon a c'houlennan diganeoc'h da
veza bet ken dievez ha ker yen dirazoc'h.
Brema ez an d'am labour, grit m'am bezo
sonj ac'hanoc'h evit na ielo ger ebed euz
va ginou, evit na rin, na zonjin an distera
tra a enep ho carantez. Evelse beza great.

KYRIE ELEISON

Kyrie, eleison.	<i>teir guezh.</i>
• Christe, eleison.	<i>teir guezh.</i>
Kyrie, eleison.	<i>teir guezh.</i>

GLORIA IN EXCELSIS

Gloria in excelsis Deo, et in terra pax
hominibus bonæ voluntatis. Laudamus
te. Benedicimus te. Adoramus te. Glori-
ficamus te. Gratias agimus tibi propter
magnam gloriam tuam. Domine Deus,
Rex cœlestis, Deus Pater omnipotens.
Domine Fili unigenite, Jesu Christe. Do-
mine Deus, Agnus Dei, Filius Patris.
Qui tollis peccata mundi, miserere nobis.
Qui tollis peccata mundi, suscipe depre-
cationem nostram. Qui sedes ad dexteram
Patris, miserere nobis. Quoniam tu solus
Sanctus; tu solus Dominus; tu solus
Altissimus Jesu Christe, cum Sancto
Spiritu, in gloria Dei Patris. Amen.

Dominus vobiscum. n. Et cum spiritu
tuo.

AR GREDO

Credo in unum Deum, Patrem omnipotentem, factorem cœli et terræ, visibilium omnium et invisibilium. Et in unum Dominum Jesum Christum, Filium Dei unigenitum, et ex Patre natum ante omnia sæcula : Deum de Deo, lumen de lumine, Deum verum de Deo vero ; genitum, non factum, consubstantialem Patri ; per quem omnia facta sunt. Qui propter nos homines et propter nostram salutem descendit de cœlis. Et incarnatus est de Spiritu Sancto ex Maria Virgine : Et Homo factus est. Crucifixus etiam pro nobis sub Pontio Pilato, passus, et sepultus est. Et resurrexit tertia die, secundum Scripturas. Et ascendit in cœlum ; sedet ad dexteram Patris. Et iterum venturus est cum gloria judicare vivos et mortuos : cujus regni non erit finis. Et in Spiritum Sanctum Dominum, et vivificantem ; qui ex Patre Filioque procedit. Qui cum Patre et Filio simul adoratur et conglorificatur ; qui locutus est per Prophetas. Et Unam, Sanctam Catholicam et Apostolicam Ecclesiam. Confiteor unum Baptisma in remissionem peccatorum. Et expecto resurrectionem mortuorum, et vitam venturi sæculi. Amen.

GOUSPEROU AR ZUL

E LATIN

Deus, in adiutorium meum intende.
Domine, ad adjuvandum me festina.
Gloria Patri, etc. *Ant.* Dixit Dominus.

SALM. 109.

Dixit Dominus Domino meo : sede a dextris meis.

Donec ponam inimicos tuos : scabellum pedum tuorum.

Virgam virtutis tuæ emittet Dominus ex Sion : dominare in medio inimicorum tuorum.

Tecum principium in die virtutis tuæ, in splendoribus Sanctorum : ex utero ante luciferum genui te.

Juravit Dominus, et non pœnitebit eum : tu es sacerdos in æternum secundum ordinem Melchisedech.

Dominus a dextris tuis : confregit in die iræ suæ reges.

Judicabit in nationibus implebit ruinas : conquassabit capita in terra multorum.

De torrente in via bibet : propterea exaltabit caput.

Gloria Patri, etc.

Ant. Dixit Dominus Domino meo : sede a dextris meis.

Ant. Fidelia.

SALM. 110.

Confitebor tibi, Domine, in toto corde meo : in concilio justorum et congregatione.

Magna opera Domini : exquisita in omnes voluntates ejus.

Confessio et magnificentia opus ejus : et justitia ejus manet in seculum seculi.

Memoriam fecit mirabilium suorum, misericor et miserator Dominus : escam dedit timentibus se.

Memor erit in seculum testamenti sui : virtutem operum suorum annuntiabit populo suo.

Ut det illis hæreditatem gentium : opera manuum ejus veritas et judicium.

Fidelia omnia mandata ejus, confirmata in seculum seculi : facta in veritate et æquitate.

Redemptionem misit populo suo : mandavit in æternum testamentum suum.

Sanctum et terribile nomen ejus : initium sapientiæ timor Domini.

Intellectus bonus omnibus facientibus eum : laudatio ejus manet in seculum seculi.

Gloria Patri, etc.

Ant. Fidelia omnia mandata ejus, confirmata in seculum seculi. *Ant.* In mandatis.

SALM. 111.

Beatus vir qui timet Dominum : in mandatis ejus volet nimis.

Potens in terra erit semen ejus : generatio rectorum benedicetur.

Gloria et divitiæ in domo ejus : et justitia ejus manet in seculum seculi.

Exortum est in tenebris lumen rectis : misericors, et miserator, et justus.

Jucundus homo qui miseretur et commodat, disponet sermones suos in judicio : quia in æternum non commovebitur.

In memoria æterna erit justus : ab auditione mala non timebit.

Paratum cor ejus sperare in Domino,

confirmatum est cor ejus : non commovebitur donec despiciat inimicos suos.

Dispersit dedit pauperibus, justitia ejus monet in seculum seculi : cornu ejus exaltabitur in gloria.

Peccator videbit, et irascetur, dentibus suis fremet, et tabescet : desiderium peccatorum peribit.

Gloria Patri, etc.

Ant. In mandatis ejus cupit nimis.

Ant. Sit nomen Domini.

SALM. 112.

Laudate, pueri, Dominum : laudate nomen Domini.

Sit nomen Domini benedictum : ex hoc nunc, et usque in sæculum.

A solis ortu usque ad occasum : laudabile nomen Domini.

Excelsus super omnes gentes Dominus : et super cœlos gloria ejus.

Quis sicut Dominus Deus noster qui in altis habitat : et humilia respicit in cœlo et in terra ?

Suscitans a terra inopem : et de stercore erigens pauperem.

Ut collocet eum cum principibus : cum principibus populi sui.

Qui habitare facit sterilem in domo : matrem filiorum lætantem.

Gloria Patri, etc.

Ant. Sit nomen Domini benedictum in secula.

Ant. Nos qui vivimus.

SALM. 113.

In exitu Israel de Ægypto : domus Jacob de populo barbaro.

Facta est Judæa sanctificatio ejus : Israel potestas ejus.

Mare vidit et fugit : Jordanis conversus est retrorsum.

Montes exultaverunt ut arietes : et colles sicut agni ovium ?

Quid est tibi mare quod fugisti : et tu Jordanis quia conversus es retrorsum ?

Montes exultastis sicut arietes : et colles sicut agni ovium ?

A facie Domini mota est terra : a facie Dei Jacob.

Qui convertit petram in stagna aquarum : et rupem in fontes aquarum.

Non nobis, Domine, non nobis : sed nomini tuo da gloriam.

Super misericordia tua et veritate tua : nequando dicant gentes ubi est Deus eorum ?

Deus autem noster in cœlo : omnia quæcumque voluit, fecit.

Simulacra gentium argentum et aurum : opera manuum hominum.

Os habent et non loquentur : oculos habent et non videbunt.

Aures habent et non audient : nares habent et non odorabunt.

Manus habent et non palpabunt ; pedes habent et non ambulabunt : non clamabunt in gutture suo.

Similes illis fiant qui facient ea : et omnes qui confidunt in eis.

Domus Israel speravit in Domino : adiutor eorum et protector eorum est.

Domus Aaron speravit in Domino : adiutor eorum et protector eorum est.

Qui timent Dominum, speraverunt in Domino : adiutor eorum et protector eorum est.

Dominus memor fuit nostri : et benedixit nobis.

Benedixit domui Israel : benedixit domui Aaron.

Benedixit omnibus qui timent Dominum : pusillis cum majoribus.

Adjiciat Dominus super vos : super vos et super filios vestros.

Benedicti vos a Domino : qui fecit cœlum et terram.

Cœlum cœli Domino : terram autem dedit filiis hominum.

Non mortui laudabunt te, Domine : neque omnes qui descendunt in infernum.

Sed nos qui vivimus, benedicimus Domino : ex hoc nunc et usque in seculum.

Gloria Patri, etc.

Ant. Nos qui vivimus benedicimus Domino.

CHABITR BIAN.

Benedictus Deus, et Pater Domini nostri Jesu-Christi, Pater misericordiarum, et Deus totius consolationis, qui consolatur nos is omni tribulatione nostra.

¶. Deo gratias.

HYMN

Lucis creator optime, Lucem dierum proferens, Primordiis lucis novæ, Mundi parans originem.

Qui mane junctum vesperi, Diem vocari
præcipis, Illabitur tetrum chaos, Audi
preces cum fletibus.

Ne mens gravata crimine, Vitæ sit exul
munere, Dum nil perenne cogitat, Sese-
que culpis illigat.

Coeleste pulset ostium, Vitale tollat
præmium, Vitemus omne noxium; Pur-
gemus omne pessimum.

Præsta, Pater piissime, Patrique compar
unice, Cum Spiritu Paraclito, Regnans
per omne seculum. Amen.

ŷ. Dirigatur, Domine, oratio mea ;

ŋ. Sicut incensum in conspectu tuo.

CANTIC AR VERC'HEZ

Magnificat : anima mea Dominum.

Et exultavit spiritus meus : in Deo
salutari meo.

Quia respexit humilitatem ancillæ suæ:
ecce enim ex hoc beatam me dicent omnes
generationes.

Quia fecit mihi magna qui potens est :
et sanctum nomen ejus.

Et misericordia ejus a progenie in pro-
genies : timentibus eum.

Fecit potentiam in brachio suo : dispersit
superbos mente cordis sui.

Deposuit potentes de sede : et exaltavit
humiles.

Esurientes implevit bonis : et divites
dimisit inanēs.

Suscepit Israel puerum suum : recor-
datus misericordiæ suæ.

Sicut locutus est ad patres nostros ;
Abraham et semini ejus in secula.

Gloria Patri.

AR MEMORARE E BREZONEC

O pezit sonj, o Guerc'hez Vari leun a garantez, o pezit sonj n'en deuz den guellet na clewet e ve bet dilezet nep pioubennag a zo deut d'ho pedi, da c'houlensicour diganeoc'h ha d'ho kemeret evit he advocadez. Gant ar memes fisians, Guerc'hez ar guerc'hezad ha va Mamm, e teuan d'en em daoler etre ho tivrec'h, da hirvoudi dirazoc'h a zindan samm va fec'hejou. O Mamm Mab Doue, ne rit ket, me ho ped, faë var va feden, mes silaouit anezhi gant madelez ha roit dign va goulennou. Evelse beza great.

Induljans a 300 devez bep tro ma vez lavaret ar beden-ma ; Induljans leun pe blenier eur vech ar miz pa vez lavaret bemdez.

TAOLEN

KENTA LEOR

	Pajen.
Eur ger divar benn buez Dom Michel Nobletz.	v
Michel Nobletz e ti he dud.....	1
Kenta studi Michel Nobletz.....	6
Dom Michel o studia e Bourdel.....	12
Eat da studia d'ar gear a Ajen en em ro da zervich Doue.....	15
Gounit a ra da Zoue an Autrou de Limbau pe Per Kintin.....	20
Per Kintin.....	26
Troi a ra he zaoulagad var zu stad ar veleien.	29
Dom Michel e Bourdel o studia an Theoloji. He garantez evit an dud paour ha dister.	39

EIL LEOR

Dom Michel oc'h en em brepari da vont da veleg. — An deg carrec didruez.....	43
Dom Michel a dec'h araog enorion ar bed. — Goal-gasset eo gant he re. — Reseo a ra an ursiou sacr.....	52

— 348 —

He istim evit stad ar veleien. — He zantelez.	61
He binijen extraordinal e Tremenac'h....	71
Dom Michel o teski al lezen gristen d'he genvroiz.....	78
Goal-gasset eo gant he gerent nessa ha gant tud he barrez.....	82
Gounit a ra da Zoue he dad hag he vamm. — Ho maro santel.....	89

TREDE LEOR

Per Kintin a zeu da guitaat compagnunez Jezuz. — Mont a ra en eun urz all er gear a Vontroulez.....	99
Dom Michel en eun urz relijiuz e Montroulez.	105
Missionnou Dom Michel hag an Tad Kintin en Escopti Treger.....	109
Missionnou Dom Michel en ezezennou Eussa ha Molenez.....	114
Mission Enez-Vaz.....	119
Missionnou e beg Loc-Maze.....	128
Aliou mad Dom Michel d'ar veleien.....	133
Meur a dra a deu da enebi outhan en he vissionnou.....	139
Prezeg a ra gant frouez e Conc-Leon, e porz Loc-Maze, ha penn-da-benn an aot.....	146
Mission Landerne.— An taolennou misteriu.	153

PEVARE LEOR

Mission Kemper Corantin.....	157
Missionnou ar Faou, Conc-Kerne, Pont-n- Abbad ha Goaien.....	161
Missionnou er parresiou var ar meaz. — Superstisionou.....	167
Mission an Enez-Sizun.....	172
Soursi Dom Michel da zeski eur pesketaer.	181

PEMPED LEOR

Dom Michel e kear Douarnenez.....	188
Examen ar re vraz e Plouare.....	194
Chenchamant e touez tud Douarnenez....	200
Dom Michel a zo tregasset gant an dud fall.	208
An Tad Kintin e Douarnenez. — He varo santel.....	212
Tamallet eo da lacaat ar freuz etre an dud..	221
Goal-gasset, e tec'h euz Escopti Kerne. — An Tad Maner.....	230

C'HUEC'HVED LEOR

Dom Michel e beg Loc-Maze. — Ar vinorez..	241
An Tad Maner a zeu da gemeret plas Dom Michel Nobletz er missionnou.....	250

Aliou Dom Michel'evit mission Douarnenez.

— Affer an taolennou hag ar c'hanaouen- nou santel.....	257
Seizet eo he gorf. — Dom Michel goal-gasset gant an drouc-sperejou.....	269
Dom Michel teir guech en he bassion....	280
Maro Dom Michel Nobletz.....	285
Burzudou Dom Michel ractal goude he varo.	292
Burzudou Dom Michel epad he vuez.....	299
Burzudou Dom Michel goude he varo	312
Pedennou epad an offeren.....	325
Gousperou ar zul.....	337
Ar memorare e brezonec.....	346

